



Ra vezo meulet Jezuz Krist !^o

Bepret :



Kenteliou

Sant Fransez

Kelaouenn vizek gant Skeudennou



TAOLENN AR MIZ

Gouelioù ar miz.....	
Bloavek mat !	1
Ano Santel Jezus	2
Sonjit ervat	4
Buhez Sant Fransez a Asis.....	5
Bleunioù Sant Fransez — XII ^{em} Pennad.....	8
Brezel d'an alkool milliget.....	11
Lourd hag hor Mamm Zantel an Iliz.....	13
Eur skouer.... eus ar Japon.....	16
Misionou	16



Rédaction et Administration

P. Théodore ROUSSEL

F.M. Capucin

28, Avenue de la Marne, LORIENT

C/c. : 46.28 NANTES

Priz : daou skoued ar bloaz.

MIZ GENVER

- 1 Sul SIRKONSIZION HOR ZALVER. — A.J. — I.P.
 2 Lun GOUEL ANO SANTEL JEZUZ. — I.P.
 3 Meurz Eizved gouel Sant Yann, abostol hag avieler.
 4 Merc'her .. Eizved an Inosanted Santel.
 PLAC'H-EÛRUS ANJELA A FOLIGNO, eus an Drede-Urz.
 5 Yaou Vijil ar Rouane.
 DEN-EÛRUS ROGER, kovez. eus Drede-Urz.
 6 Gwener Gouel ar Rouane. — A.J. — I.P. — (I.P. all o renevezi ar
 profesion.
 DEN-EÛRUS CHARL A SETIA, kovez, eus ar Genta Urz.
 7 Sadorn Diouz an eizved.
-
- 8 Sul GOUEL AR FAMILH ZANTEL.
 9 Lun Diouz an eizved.
 10 Meurz DEN-EÛRUS GREGOR, eus an Drede-Urz.
 DEN-EÛRUS EJID, kovez. us ar Genta Urz.
 11 Merc'her .. Diouz an eizved. — DEN EÛRUS THOMAS A GORA, kovez. eus ar
 Genta Urz.
 12 Yaou Diouz an eizved.
 13 Gwener ... Eizved gouel ar Rouane.
 14 Sadorn ... Sant Ier, eskob ha doktor.
-
- 15 Sul *Eilvet sul goude gouel ar Rouane.*
 16 Lun SANT BERARD HAG E COMPAGNUNEZ, merzerien eus ar Genta Urz.
 — I.P.
 17 Meurz Gouel Itron Varia Pontmain.
 18 Merc'her .. Kador Sant Per e Rom.
 19 Yaou DEN-EÛRUS BERNEZ A GORLEON, kapusin. — I.P.
 20 Gwener ... Sant Fabian ha Sant Sebastian, merzerien.
 21 Sadorn ... Santez Agnes, gwerchez ha merzerez.
-
- 22 Sul *Trivet sul goude gouel ar Rouane.*
 23 Lun Sant Raymond a Bennafort, kovezour.
 24 Meurz Sant Timothe, eskob ha merzer.
 PLAC'H EÛRUS GAMBARA, intañvez eus an Drede-Urz.
 25 Merc'her .. Sant Paol, abostol, gounezet d'ar feiz.
 26 Yaou Sant Polikarp, eskob ha merzer.
 27 Gwener ... Sant Yann Krizostom, eskob ha doktor.
 28 Sadorn ... 28 Sadorn. — DEN-EÛRUS OPORIK, kovez. eus ar Genta Urz.
 — I.P.
 Sant Gweltas, abad.
-
- 29 Sul *Pevarvet sul goude gouel ar Rouane.*
 SANT FRANSEZ A SALES, eus Breuriez Kordenn Sant Fransez
 a Asiz.
 30 Lun SANTEZ HYASINTH MARISKOTTI, gwerchez eus an Drede-Urz. —
 I.P.
 31 Meurz PLAC'H-EÛRUS LOEIZA ALBERTONI, intañvez eus an Drede-Urz.
 I.P.

105597

Kenteliou Sant Fransez

Eil bloaz — Genver 1928 — Niverenn 13

Bloavez mat !

Bloavez mat d'eoc'h, bugaligoù !
 Gras d'eoc'h d'ober joa ho mammou ;
 Kreskit en oad hag er furnez,
 Egiz Jezus, mab ar Werc'hez.

Bloavez mat d'eoc'h, yaouankizioù !
 Gras d'eoc'h da stourm ouz ho techou,
 Da jom ato dibec'h ha glan,
 Daoust d'ar bed fall ha da Satan.

Bloavez mat d'eoc'h, tud gwenn ho pleo,
 Krommet ho tal, dindan eur yeo !
 Gras d'eoc'h da ren, gant santelez,
 Ar pez a jom eus ho puhez.


Bloavez mat d'eoc'h, tud dimezet !
 Gras d'eoc'h ato d'en em garet,
 Da zibuna neud ho puhe,
 Dindan sellou lagad Doue.

Bloavez mat d'eoc'h, pec'herien baour !
 Gras d'eoc'h da gaout gwelloc'h 'vid aour,
 Da gaout pardon, digant Jezus :
 N'ez eus netra ken talvoudus.

Bloavez mat d'eoc'h, kristenien fur !
 Gras d'eoc'h da jom, war an hent sur,
 Da santelât, bemdez muioc'h,
 An ene kaer a zo ennoc'h.

Bloavez mat d'eoc'h, tud Sant Fransez !
 Gras d'eoc'h da vont, gant kalz evez,
 Evel ho Tad, war roud Jezus...
 Na c'houi neuze vo evurus !

Bloavez mat d'eoc'h, bras ha bihan !
 Mil eürusted, 'barz ar bed man,
 Peoc'h, buhez hir, yec'hed, madou,
 Ha da c'houde, gloar an nenvou !



En Sul goude gouel ar Rouane
Ano Santel Jezus

Stouomp dirag an Dreinded sakr oc'h anzav hon fec'hejou gant glac'har ha keun. Trugarekaomp Doue da veau roet d'imp da anaout ano Jezus. An ano-ze, degaset d'imp eus an nenv, a zo eur mel d'ar genou, eur c'han dudius d'ar skouarn, eul levenez d'ar galon, Jezus a zo hon Dasprener hag hon Hanterour : Drezan e teu d'imp pep mad ha Drezan ive e pign beteg an tad kement kan, kement peden a zav eus an douar bet gale'het gand e wad. O pedi en E ano, nag a c'hrasou a c'hellomp kaout ! Pa fell d'enn den kanan gloar da ano Jezus, ne c'hall e deod dezrevel nag e blien skrivan treou kaer awalc'h. An ano-ze, eme Sant Bernadin, a zo klod ha gloar an dud gwenvidik, frealz ar gristenien ha spouron an dud daonet. Kalz a zoujans a dleomp d'an ano-ze rak bean eo eun ano galloudus o lakaat ar hed-holl gronnet a sklêrijenn, hag o rei pep galloud da bedenn c'hredus an dud a fe.

I

Ano Jezus a zo eun ano bras

« Doue en deus roet d'e Vab eun ano dreist da beb ano, ma plego d'ean pep glin e barr an Nenvou, war c'horre an douar hag en islonk an iferniou. » Ano Jezus a zo tarzet eus genou an Tad ha degaset eo bet da Vari ha da Jozeb gand eun el. Ar ger Jezus a zo eur ger evit laret « Salver » unan hag a ro e vuhe evid e nesan. Ano Jezus a zo holl c'halloudek enep hon gwasan enebourien : an drouk spered, hon c'horf hag ar bed. Pa deuo an drouk-spered da stignan e lasou endro d'imp, na gemeromp ket aon ; hejomp en hon doru banniel ar silvidigez : « Neb a gred em ano, eme hon Salver, a ro lamm d'an drouk-spered. » Pa vroudo en hon c'horf ar c'hoantegeziou direiz, na grenomp ket ; laromp gant doujans ano santel Jezus hag e vefomp kennerzet. Pa fello gand ar bed lakaat da lintran dirak hon daoulagad sked touellus e blijaduriou berr, galvomp Jezus d'hon sikour hag e vefomp trec'h.

Gwechall en amzer grenn, pa save bec'h er vro, ar gouerien a veze e riskl da goll o buhe a zirede holl en eur c'hastell krenv da vezan gwarezet gand ar mogerioù didrastus. Evelse ar gristenien ac'h arruo bec'h warnê hag a vo en arvar koll buhe o ene, a gavo nerz ha gwarez en ano benniget an Otrou, herve ma lavar dimp ar Skritur Sakr : « Ano Jezus a zo eur c'hrenlec'h, an den a fe a gavo eno ar pare. »

Ano Jezus a zo galloudus ; lakaat a ra ar maro da souzan, an drouk spered da dec'hel, klenvejou ar c'horf da wellaat, gouliou an ene da barean.

II

Ano Jezus a zo eur sklêrijenn

Pa laker an ano Santel a Jezus da baran en eur vro, en eun tiegez, en eun ene, e ve skubet pep tenvalijenn. Hag ar re a fell d'ê sklêrijenni eur vro e pep doare a dlefe labourat da lakaat ano Jezus e kalon o c'henvroiz. Jezus eo sklêrijenn ar bed. Evel ma ve teuzet tenvalijenn an noz gant sklêrder an heol, e ve teuzet pep gevier ha pep fallagriez gant sked ar wirione. Pa voe embannet eun tamm dreholl ano Jezus, « ar bed, eme Sant Paol, a deuas evel eun tamm koar e kichen eun tantad gor. »

Ano Hon Salver a laka splann pep tra tenval, a ro bevans d'an eneou ezommek hag a bare pep gouli.

Sant Paol en deus meizet hen e unan, ha graet d'ar re all kompren pegen galloudus eo ano an Otrou. Dre e gomzou, e skridou hag e vuzudou e lakas an dud da zegemer ano Jezus gant doujans ha karante. « Tremenet eo an noz, emezan, ha deut mare an dihan. Pell diouzimp pep mennoz kuz ha fall ; pell diouzimp pep trabas ha pep gwarizi. Paouezomp da vale dre gwenojennou tenval ar pec'hed ; hastomp distrei war an hent splann a gas da Jezus mestr ar Sklêrder. »

Arabad d'imp gortoz ken ware'hoaz ; krogomp dioustu gand al labour ; ma vefomp ni ive sklêrijenn ar bed, touriou tan evid eneou hon breudeur.

III

Ano Jezus a ro pep galloud d'ar bedenn

« Kement tra a c'houlennfet digant ma Zad em ano, a vezo roet d'ec'h » eme Jezus. Pegen dudius d'an Tad klevout ar gristenien o larout gant fe ano e Vab Jezus. Na dleet eo d'imp eta heuilh skouer hon Mamm Santel an Iliz ha pedi en ano Jezus hon Otrou.

« Neb a zo paour, eme Sant Angroaz, n'en deus nemet pedi an Tad en ano Jezus hag e tevio pinvidik mor gant madou an nenv. » Nag a bec'herien a c'hallfe distrei ouz Doue ha kavout ar peuc'h mar teufe war o muzellou goude bean tarzet eus o c'halon, ano benniget Jezus... Allas ! Aon o deus, hag en em blijout a reont en o gouliou, en o breinadur. D'imp, kristenien strivan da lakaat en hon c'halonou hag e kalonou an dud all eur garante virvidik evid ano Jezus.

Na mad a ra ar gerent o teski d'o bugale vihan distagan ar c'hentan gwellan an ano melus-ze. Rei a reont d'ezê er giz-se ar gustumans vat da larout alies ano Jezus evit rei nerz d'o fedennou.

Danevell — E kement lec'h ma rôe eur mision, Sant Leonard a rê livan ha kizellan ano Jezus war an nozejou. E Porto-Ferrajo, eur c'hristen gredus, klevet gantan prezegenn Sant Leonard, a felle d'ean skrivan ano Jezus war dor e di. Met eur Yuzeo, hag a oa o chom e traon an ti, na c'houlle ket asanti. Ma rankas ar c'hristen, tremen gant lakaat ano e Zalver war ar prenechou. Eun nebeut deiou goude, e krogas an tan e stal ar Yuzeo hag e voe devet

pep tra, an tan a zavas betek kamb ar c'hristen, met pa zegouezas gand ano Jezus skrivet war ar prenechou, e varvas anean e unan. An holl a c'hallas gwelout ar burzud.

Peden. — O Doue, c'houi hag hoc'h eus teurvezet rei d'ar bed holl eun Dasprener anvet ganec'h Jezus, teurvezit dre ho madelez rei d'imp ni hag hon devo doujet ha karet an ano-ze war an douar, ar c'hras d'hen gwelout skrivet en Nenv.

Mennoz. — Ano Jezus a lak da baran dirak ma spered eun Den. Strivan a rin da gerzet war roudou an Den gant skoazell an Doue. Ken alies gwech ma klevin ano Jezus, e stouin ma fenn gant fe.

Boked. — An den eurus Raymond Lulle a lavar : « Mahomediz a grog o liziri dre ano Mahomet; eun dra vat e vije d'ar gristenien skrivan e penn kentan o liziri hag o oberou ano santel Jezus-Krist. »
E.R.

Sonjit ervat

Trede malloz Hor Salver

I. — Sonjit ervat e komzou Hor Salver : « Malloz d'eoc'h-hu hag a c'hoarz breman, rak, diwezatoc'h e lenvoc'h ».

Dre ar c'homzou-se, e tesk Hor Salver deomp pegen truezus eo stad an dud na glaskont war an douar-man nemet o flijadur. Spe-rejou diboell a dud na gemeront tamm soursi ebet gant deveriou ar vuhez, hag a ya en eur c'hoarzin war-du an tan peurbadus o lesko eun deiz en ifern !

Lenvit d'ar fals plijadureziou hoc'h eus ken alies tanvaet er bed, ha poagnet da drei gwelloc'h ho spered war-du Doue ha traou an nenv.

II. — Sonjit ervat : Hor Salver, goude beza lavaret : « Malloz d'eoc'h-hu hag a c'hoarz », a lavar ar ger-man : breman. Daoust ha n'eo ket evit deski d'eomp e tle ar vuhez-man beza evidomp eur buhez a boanevel tud en harlu, dalc'het pell eus o bro. Pa sellomp ouz an amzer breman, ne welomp nemet poaniou da gaout; pa sellomp ouz an amzer tremenet, ne welomp nemet poaniou gouzanvet, ha, pa sellomp ouz an amzer da zont, nemet kant tro da goll hon ene. Truezus eo stad an den na wel ket kement-se !


Goulennit digant Doue sklerijenn evit komprenn ar gwirioneziouse, ha poagnet da c'hounit an eürusted a bado da viken.

III. — Sonjit ervat : truezus eo stad an dud a gomz Hor Salver anezo, rak, evel ma lavar, eun deiz e lenvint.

Graet o deus fae war lezenn Doue; klasket o deus o baradoz war an douar-man, n'her c'havint ket er hed-all.

Er bed-man o deus klasket ar plijadureziou, er bed-all ne gavint nemet daelou; n'o deus ket gouelet er bed-man, er bed-all e raint.

Breman grit ho tibab. Ma sonjit ervat pegen bresk eo ar vuhez-man ha pegen hir buhez ar bed-all, ne vezoc'h ket nec'het evit hen ober.



Buhez Sant Fransez a Azis

PEVARE PENNAD

KENTEL 4. — Trede diskibl : ar Breur Jill. — E vantel d'eur vaouez koz. — O klask o boued. — « Ar vuhez-se a zo kalet, eme an aotrou eskop.

Eiz dervez diwezatoc'h, e teuas Jill, den a renk eus Asiz ha mignon da Vernez ha da Ber, da c'houlenn digant Fransez e reseo evelto en e gompagnunez. Fransez a lavaras d'ezan : « Doue a ra d'it eun enor hag eur c'hras kaer, p'az kemer e renk e zerviche-rien wella. Ma teufe an impalaer da glask aman eun ofiser bennak, e lavarfe pep-hini en Asiz : Gant m'am c'hemero ! Te a zo galvet gant Roue an nenv, lavar bennoz d'ezan. »

Hag hen poka d'an diskibl nevez, ha mont gantan da gaout an daou all : « Setu aman, emezan, eur breur mat roet d'eomp gant Doue. »

Goude beza debret un tammik pred, ar Zant ha Jill a zavas beteg Asiz evit klask eur gwiskamant henvel ouz hini ar re all. Epad ma kerzent, setu padal eur vaouez kaez dirazo o c'houlenn an aluzen : « Breur, eme Fransez, ro d'ezi ar vantel a zougez. » Jill a zentas dioustu hag a zonjas d'ezan gwelout e vantel o vont d'an nenv.

Pa voe gwisket ar Breur nevez, e reas Fransez d'e ziskibien, mont da glask o boued, hag ober a reas evelto. Karet a rae ar Baourentez, c'hoant en doa diazeza e urz warni, hag evid o c'hennnerza enep dispriz an dud, e reas d'ezo mont evel peorien eus an eil or d'eben. Goapaet e voent gand o c'herent dreist-holl, met kendec'hel a rejont.

Fransez a yeas da gaout an aotrou eskop ha heman lavarout d'ezan : Re galet eo, va mab, beva hep kaout netra. — Evidoun-me, a respontas ar zant, kaletoc'h e kavan kaout madou war va ano, rak poan a ranker kemerout evid o mirout, soursi ha poan benn a zo ganto; awechou zoken e sav brezel diwar-benn al leveou, hag an holl dregas-se a laz karantez an Aotrou Doue er galon. »

Mat e kavas an aotrou eskop respont Fransez, hag hen diskle-ria d'ezan e zikourfe hervez e c'halloud.

KENTEL 5. — Daou ziskibl all gand ar Judas Kapella. — Retred all an Tad : « Flamm eo da ene, en em astenn a ray da Urz. »

O welout bolontez vat e ziskibien, Fransez, evid o amprou gwelloc'h c'hoaz, o c'hasas da brezek epad dek dervez bennak. Gwall-gaset e voent gant meur a hini, goloet zoken a bri; met distrei a rejont laouen, dre m'o doa gouzanvet evid an Aotrou Doue.

War ar poaniou ha war ar groaz e vez diazezet labourou bras an Aotrou Doue. A-benn fin ar miz, e teuas tri diskibl nevez da rei o ano da Fransez : Sabbatino, Moriko ha Yann Kapella. N'ouzer koulz lavarout netra diwar-benn an daou genta, hogen lavarout e ra hiennennou eus an istoriou koz e voe Yann kapella Judas an Urz.

D'an nevez amzer, ez eas Fransez gand e vreudeur da draonienn Rieti. C'hoant en doa pellaat diouz Asiz evit gellout pedi gwelloc'h, hag evit-se, e klaskas eur roc'h kleuz demdost d'eur gêr vihan. Eno e reas eur retred, rak goude beza bet o selaou an oferenn en iliz hag o prezek e kêr, e tastume eun nebeudik aluzenou hag e teue da bedi er c'heo.

Eun dervez m'en doa sonjet a zevri e follenteziou e yaouankiz, p'edo o koll e amzer o klask tremen diouz ar bed, Doue a reas d'ezan ankounac'haat an douar hag e zougas a spered beteg an nenv, evit diskleria d'ezan daou dra : da genta, e oa bet gwalc'het e holl bec'hejou hag e oa glan e ene; d'an eil, en em astenne e Urz dre ar bed.


Diouz an abardaez, pa voent bodet holl endro d'ezan, e tisklerias kement-man d'e ziskibien : « Kemerit kalon, va mignoned, ha bezit laouen e Doue. Nebeut ez omp evit c'hoaz, met kreski a ray hon niver betek goloï an douar. Gwelet em eus eur mor tud o tont davedomp evit goulenn hor gwiskamant; holl e tostaont, holl e tiredont; eus an holl broiou ez eus tud war vale evit dont ganeomp. »

Peger kaer, pegeñ entanet e voe ar c'hantik a ganas Fransez goude an dervez-se ! Pardonet e oa e bec'hejou ! Flamm e oa e ene ! Nag eürus e oa o pedi an holl draou krouet da veuli Doue gantan !

KENTEL 6. — Filipp. — An diskibl netaet gand eur c'hlaouenn entanet. — Ar reolenn genta rôet d'ar seiz diskibl.


Epad an dervezioù ma chomas Fransez en e roc'h kleuz evel eun ermid, e teuas meur a hini d'e welout; unan anezo, anvet Filipp, a c'houlennas digantan chom en e gompagnunez. An istoriou koz a ra e veuleudi : « Filipp, emezo, a oa bet netaet e galon hag e vuzellou gand eur c'hlaouenn entanet. Leun a zousder hag a zaour e oa e gomzou. Gouziek e oa war ar Skritur zakr, hep beza bet er skol biskoaz. »

Pa zistrôas d'ar Porsionkul goude eun nebeud dervezioù tremenef e kichen Rieti, Fransez a rôas eur reolenn a vuhez d'e seiz diskibl. Desket en doa d'ezo pedi eno dirag eur groaz vras a oa bet savet dindan gwech kaer, e kichen ar chapel, pell diouz trouz ar c'hêriou; graet en doa d'ezo ober fae war ar bed, war e zisprijans hag e ourgouilh, o vont da c'houlenn an aluzen evel ar beorien, hag i bet pinvidik koulskoude araok dont davetan; breman e



lavare d'ezo : « It, hi a u'ho pezet non rak netra. Dizale e teuo an duchentil hag an dud desket en ho touez da brezek d'ar pobliou ha d'ar rouaned. Chomit izel a galon ha na glaskit ket beza meulet gand an dud. N'en deus an den ken talvoudegez nemet an hini en deus dirak Doue. Enorit an eskibien, ar veleien, ar re goz, ar beorien. Na varnit ket an dud pinvidik a vev e kreiz an danvez, Doue o barno hag a c'hell kaout tud santel en o zouez. Grit kaoz eus ar peoc'h alies; ra vezo an ano-ze atao war ho muzelloù, ha muioc'h c'hoaz en ho kalon. Na dit ket da lakaat droug e den ebet; bezit sonj atao ez oc'h galvet da unani an dud ha da zigas endro an denved dianket. Bez 'ez eus tud a zo hirio o tispenn an Aviel hag hen difenno warc'hoaz. It heb aon ebet, rak ma kavit war ho hent tud ourgouilh na blegont ket da Zoue hag a zo prest da zoui Doue, kaout a reot ive re all a vezo sentus ha mat, hag ho tigemero gant plijadur. Dalc'hit sonj atao eus kement-man : eur rouantelez hep fin ho tigollo diouz ar poaniou ho pezo da c'houlzanv. »

Setu aze eun nebeud eus an alioù a rôe Fransez d'e Vreudeur; prezek a rae d'ezo, gwech e chapel ar Porsionkul, gwech e skeud eur groaz vras savet gantan e kichenik ar chapel. Eun dudi e oa e zelaou.



Bleuniou Sant Fransez

XII^{et} Pennad

*Sed' eo porzier, Maze,
Ha Reginer, ive,
Ha war-eun-dro
Amzer c'hoaz en devo
Da rei an aluzen,
D'an holl beorien.*

*Met war gomz e vreudeur
E teu abarz nemeur,
E dad Fransez
Da larout d'e vreiñ kaez :
« Red 'eo c'hoaz chanch mecher,
« Ma mignon ker. »*

Sant Franzes d'ezan a blijje
Amprou izelded Breur Maze,
Gand acun e tennje re a c'hloar,
Eus an donezonou dispar,
Kerkouls, eus an holl grasou kaer
Bet gantan digand e Grouer.
Ha ma kavje bemdez enne,
An tu da gaerât e ine,
Dindan c'houez vat ar vertuziou
A za ouzimp sent en Nenvou.

Eun devez ma 'n em gave en eul lec'h digenyez (1),
E holl genvreudeur gantan, e lavaras Fransez ;
« O Breur Maze, o, ma mignon !
« Ar re man deus an donezon

(1) Solitaire.

« Da c'hallout, aezet, prederian
« Da bedi ive, da gentan.
« Met c'houi, nann, n'eus ket ho par,
« Eun teod hoc'h eus ken halavar !
« Evit prezek d'an holl boblou,
« Da santelât an ineou.
« Ya ! bezan hoc'h eus an enor
« Da brezek evel eun doktor.

« Dre ze 'ta, Breur Maze, ma c'hallo ho predeur
« En o aez prederian, e vefe eun dizeur (2)
« Ma ne c'houllfec'h ket c'houi, tuet da labourat,
« Kemer karg ar porzier, ha mont da geginat.
« Ha mar chomfec'h, Maze, dibreder goude-ze
« Ez afec'h da gestel, petra larit war-ze ?
« Bezit, dreist-holl, war evez, mar plij, en an' Doue,
« Betegoût, da ober trouz, an dud aman 'deufe ;
« Ho predeur a vank d'ezo kaout peoc'h da bedi
« Peoc'h da vont ha da zont, didrouz er manati.
« Gwir 'eo, n'eo ket gant kaoziou, Maze, hervez ar vrud,
« C'haller dont a-benn, aezet, da dremen diouz an dud,
« Met eun den distagellet evel doc'h, Breur Maze,
« O laouenao buan, 'n eur gomz d'e eus Doue.
« Hag evel-se, ho predeur, dalc'het gand o fedenn
« Ne renkfont ket he lezel, 'vid aveli o fenn.

« Ac'hanta, Breur Maze,
« Mat, breman, evel-se,
« It, neuze 'ta,
« Ha graet peb tra
« Evit Doue
« Hag hoc'h ine.

« An neb a oar senti, aman war an douar,
« A vlanson 'vid an Nenv, eur gurunenn dispar. » —
Breur Maze, e benn a blegas, ha kuit da droidellât
Degemeraz a-greiz kalon, 'vel ur sant, komzou e dad.
Hag hen, neuze, d'e bichourell, ken buan ha larout : ya,
Hag hen lem, dirag e vreudeur, laouen, diwar e ziouskoa.

Epad eur pennadig amzer
'Chomas Maze war e vecher ;
Ha dre ma 'oa eur paotr jurdik,
Ez eas ganti rik-ha-rik.

E genvreudeur, koulskoude, ma c'houvezent ervat,
'Oa Maze eun den akuit, hag eun den dorniet mat,
Ne oant hep gouzout ive, ez oa eun den santel
A blijje d'ezan pedi, ha pedi 'vel eun ael.
Hag ouz hen gwelout bemdez, lac'het gand al labour
'Teuas eun tamm c'hoant d'ezo, da rei d'ezan sikour.
Ha goude bezan 'n em glevet, int raktal da gaout o zad :
« Bezit, eme, ar vadelez, Fransez, d'hon selaou ervat.

(2) Malheur.

« Breur Maze, 'zo re vahonet (1),
 « Ha ni, hon deus holl poan spered.
 « Red mat eo d'ec'h peurlodenni,
 « Breman, labour ar manati.
 « Roit d'eomp hon lod d'ober,
 « Ne labourfomp ket en aner. » —
 Evit Fransez 'oa eun dudi,
 Ouz e vreudeur gallout senti.
 « It, emezan da glask Maze.
 « Ma reizin 'ta peh tra warze.

« O, Maze, ma breur ker, p'arruas 'n e gichen,
 « Al labour, a-dra-sur, a zo eur gwir bedenn :
 « Met ho preudeur 'c'hoanta rei d'ec'h eun tamm sikour
 « Ma deufet aezetoc'h a-benn diouz ho labour. » —

« Mat 'eo ze d'in
 « Ya ! pa larin.
 Ha pep-hini, a-vreman
 « A rey e damm lod, aman. » —

« Ho komzou, o ma zad ! 'lavaras Breur Maze
 « A zo evidoun-me, bepred, komzou Doue. »

Fransez, e galon a dride,
 O welout pebez karante
 A rene etre e vreudeur;
 Evel-ti ne oa ket nemeur.
 Eur vleunenn all, er manati
 Kaeroc'h eget ar bleun lili,
 A oa bleunenn an Izelded,
 Gand an holl venec'h, hi karet.

Ha Sant Fransez, neuze, 'gavas dioustu e bleg
 Da ober de vreudeur, war ze eun tamm prezek :

« Bleunenn ar garantez gwirion
 « Hag an Izelded a galon
 « Ne deus ket kaeroc'h egete
 « Da blijout d'an Aotrou Doue.

« Met seul mui 'teu d'eomp, eus lein ar Baradoz.
 « A-berz Jezus Hon Mestr, ha grasou, ha bennoz
 « Seul mui, en hon c'halon, e tle dont da skedi
 « Bleunenn an Izelded, d'he lakât da virvi.
 « Hep hi, e gwirione, an holl vertuziou all,
 « Evit lagad Doue, a vez re livet fall. »

Ne badas ket pelloc'h, prezegenn Sant Fransez.
 Neuze, e lodennas, gand ar brasan evez,
 E-tre e holl genvreudeur, labour ar manati,
 Ma 'oa eur gwir levenez, 'vit kalon pephini.

POTR JULUEN.

(1) Beza mahonet : ne savoir où donner de la tête.



Brezel d'an alkool milliget

Hor bro a zo koezet varni klenvejou spontus a gas d'ar bez eun niver bras a dud bep bloaz. Klevet ho peus hano eus klenved ar c'houasket en Afrik, eur c'hlenved digaset gant eur gelienenn, ar gelienenn *tse-tse*. Ar c'hlenved-se en deus goulonderet broiou a-bez; kement hini a vez flemmet gant ar gelienenn a grog ennan klenved ar c'houasket, hag a-benn eun nebeut miziou eman graet gantan.

N'eus ket a gelienn fall evelse en hor bro, met an dud, dre veza dievez hag hep nerz kalon, o deus digaset varno klenvejou eus ar re wasa ive hag a c'houllendero ar vro, ma ken-dalc'hont da greski : Unan eus ar c'hlenvejou-ze eo klenved an eva.

Bez ez eus tud hag o deus daoulagad, met ne welont ket; diskouarn, met ne glevont ket. Hag e kendalc'hont d'ober ar c'hiz, da eva gwin, chistr, odivi hep kaout ezomm. Kaer zo lavaret d'ezo e reont fall, ne gedont ket. Nerz o deus war o meno, skiant o deus ive hag e ouzont peur ehana, a zenj d'ezo. Siouaz ! Eur yech keme-ret eur chiz fall, ne ra nemet kreski, hag abenn eur pennad n'heller mui harpa outi.

Setu aman ar wirionez : n'heller ket niveri en hor bro an dud keiz a vez lazet gant an alkool. Tud eus pep renk ha pep stad a vez taget gantan. N'e ket hepken ar wazed, met ive ar merc'hed hag ar vugale o deus da daoler evez, rak, siouaz ! ober a reont evel ar wazed.

An holl a dlee en em unani, rei an dourn an eil d'egile evit dont a benn eus ar c'hiz fall da eva, met er renk kenta e tle beza ar gatoliked ha kenvreudeur Sant Fransez.

N'e ket hepken d'ar c'horf e ra droug an olivi, met ive d'an ene, en eur lakat an den da goll e benn ha d'hober pec'hejou. Eur c'hristen en em ro d'ar pec'hed a ra mez d'an Iliz : Hor Zalver a zo deuet var an douar da zavetei an dud. Savet en deus eun Iliz, hag en Iliz-ze an dud a dle en em zantellat evit gounit eun deiz ar Baradoz. Penaos en em zantellaat ma ne zenter ket ouz lezennou Doue ha re an Iliz, ma ne glasker ket harpa ouz an techou fall, lakat ar c'horf da blega d'ar spered ? Beva eur vuhez kristen a zo trec'hi an ioulou foll, pinvidikaet an ene bemdez dre oberou santel.

Met gwelomp petra a ra d'an den ar c'hiz fall da eva. Ha n'eo ket gwir e teu ar c'horf d'ober e vestr, da c'houleunn plijadur ha plijadur adarre ? Hag an ene a rank plega. Plega a raio muioc'h mui bep tro, hag abenn eun tached n'en dezo mui nerz ebet ken, an ioulou fall a vezo neuze digabestret, dichadennet, ha pep seurt pec'hejou a stlabezo an ene.

Eur c'hristen a dle kaout eur volontez start. Met an ever n'en deus mui bolontez ebet. Eur c'hristen a dle gouzout ober pinijenn, dioueret eun dra bennak. An ever n'eo nemet eun den sempl, dinerz, ne c'hell ket harpa ouz an dentasion.

N'eo ket awalc'h, gouzout a ran, ober bezel d'an alkool evit distrei ar Frans ouz ar relijion gristen. Met evelato, n'eus ket da c'hedal e ve adsavet ar Frans, ma ne ro ket ar gristenien skouer vat e pep giz, e kenver an eva evel en traou all. N'eus netra da c'hedal a-berz mesverien. Kement a zroug a ra d'ar relijion an tech da eva eget ma ra ar c'hazetennoù fall hag ar skolioù fall. Evel m'en em zifennomp ouz ar c'hazetennoù fall hag ar skolioù fall, e rankomp ive en em zifenn ouz an alkool.

Ar gristenien a dle ober vad d'ar re all, d'o breudeur. Doue en deus roet d'eomp eur gourc'hemenn; karet hor breudeur, ober vad d'ezo e pep giz. Penaos ober vad d'ar re all ? O sikour anezo, o wellaat stad o buhez, o rei d'ezo a pez o deus ezomm ken evit ar c'horf, ken evit ar spered, an ene. Met kaer e vezo rei arc'hant d'an dud, sevel d'ezo tiez nevez; rei d'ezo deskadurez, mia ne vez ket roet an deskadurez wirion, eo kollet an amzer. Ha petra eo an deskadurez wiion, eo kollet an amzer. Ha petra eo an deskadurez wirion ? Gouzout beva lezenn Doue, beza trec'h d'an tech da eva ha d'an holl dechou fall.


Ret eo, pa zaver ti, toulla doun evit ma vezo diazezet mat ar mogerioù. Pa glasker ober vad d'an dud, eo ret ive diazeza o buhez var furnez hag ar reiz vat. Kreski e bae d'eur mesvier a zo taoler dour en eur baner. Goulenñ nebeutoc'h a euriou labour digant ar vicherourien a zo koll an amzer, ma tremenont en ostalerioù an euriou roet d'ezo da ehana.

Dre ma kresko an tech da eva, e vihanaio an eürusted etouez an dud. Ne vezo gwenneg espernet ebet, ar yec'hed a vezo kollet, ar peoc'h ne reno ket en tiegeziou, pec'hejou bras a vezo graet.

Rak-se ta, evit ober vad d'hon nesa hag ober vad d'hor bro en hevelep amzer, n'hor beus netra talvoudusoc'h d'ober eget deski d'ar re all beza fur e kenver an eva, o distrei diouz ar vesventi dre hon alioù mat hag hor skouer. Netra aesoc'h. N'ouzoun ket pet gwech bemdez hon eus tro da gelenn evelse ar re all. Her greomp keb aon ha gant karantez. Kentelioù roet gant karantez a vez ato digemeret mat. Ha dalc'homp start hon-unan beteg ar fin, evit ma c'hellimp lavaret d'a re all. « Grit evelomp. » Na gemeromp hon-unan banne odivi ebet, var digarez ebet, ne evomp nemet nebeut a win, chistr, na gemeromp ket etre hor prejou, lezomp a goste ar c'hiz da drinka evit an distera abeg, hag e ramp vad, kalz vad.

Ni, kristenien katolik, a dle beza din eus hon hano. A dreuz ar c'hantvejou an Iliz katolik he deus graet vad d'an dud, d'ar re baour, d'ar re glanv; savet he deus skolioù, hospitalioù; kaset he deus misionerien dre ar bed holl, truez he deus bet ouz ar re holl a oa er hoan, reuzeudik o stad. Piou a zo ken truezus o stad eget an dud keiz en em goll, i hag o bugale, dre an eva ? Geomp vad d'ezo, klaskomp o farea.

J.U.



LOURD, katekiz beo

DAOUZEK VET DERVEZ

Lourd hag hor Mamm Zantel an Iliz.

Jezuz-Krist en deus lakaet e dud fidel en eun unvaniez pe en eun emgleo anvet an-Iliz. E penn an Iliz en deus lakaet evit kelenn, gouarn ha santifia an dud fidel hon *Tad Santel* ar pab hag an *eskibien*.

Ar pab eo vikel pe letanant Jezuz-Krist war an douar. Karget eo da gelenn hep gellout fazia ha da henchha war-du ar baradoz holl gristenien ar bed.

Hen eo a zalc'h plas sant Per, kenta pab choazet gant Hor Zalver Jezuz-Krist e-unan.

An *eskibien* a zalc'h plas an ebestel all : kelenn ha gouarn a reont dindan galloud ar pab an dud fidel a zo fiziet enno en eur c'horn douar anvet *eskopti*. Peb *eskopti* a zo rannet e *parreziou* hag e penn ar *parreziou* e laka an aotrou eskop eur *person* hag awechou eur *c'hure* pe kureed da zikour an aotrou person.

Evelse, er broioù kristen evel hon himi, ez eo staget pep diskibl da Jezus-Krist ouz e vestr divin gand eur chadenn ha n'eus enni nemet tri mell : e *berson*, e *eskob* hag an *Tad Santel* ar pab.

N'eus abeg ebet morse evit den da chom hep heulia an hent-se vit kaout ar pez a zo ret evid e zilvidigez abeg ebet, na santelezh, na zoken ar Werc'hez gloriüs Vari pe Hor Zalver Jezuz-Krist e-unan, ma teufent d'en em ziskouez d'eomp. Ne vezer salvet nemet e bag sant Per; er maez eus ar vag-se e vezer beuzet.

Atao ez eo bet an traou evelse en Iliz abaoe an derveziou kenta. En eur zevel d'an nenv en doa Hor Zalver lezet e Vamm Zantel gand an ebestel, evel p'en devije bet c'hoant e vije bet kenteliet gand an Iliz nevez ganet. Gand an ebestel e oa Mari, pa ziskennas ar ar Spered santel warno, evel m'hen diskouez e Lourd taolenn gaer trizekvet mister ar Rozera : war o daoulin e-harz he zreid eman sant Per ha Sant Yann... ha koulskoude Sant Per eo a zo o vont da c'houarn an Iliz a-bez, memes ar Werc'hez he-unan, ha pa falvezo gant houman digemerout he Mab divin dindan spesou ar gomunion, sant Yann eo a ginnigo sakrifis santel an oferenn, hag a roio d'ezi ar gomunion.

Gwelit breman ar pez a zo c'hoarvezet e Lourd. Ar werc'hez gloriüs Vari en em ziskouez, neket da *berson* santel ar barrez, na da unan eus ar veleien all a zo eno, met d'eur verc'h umbl ha

dister; dre ar bugel-ze eo e fell d'ez e ober eus Lourd eul lec'h a bedennou hag a vo enoret ha trugarekaet ennan he Mab divin. Daoust hag hen ober a c'hello heb an Iliz ? Daoust ha Bernadett, memes aotreet gant miraklou, a c'hello staga d'al labour ha kas anezan da benn ? Nann. Bernadett a zo hag a chom en he renk en Iliz, renk an dud fidel ! Hag ar Werc'hez glorius Vari ne ro d'ez e nemet ar gefridi-man d'ober : — It da lavarout d'ar veleien e tle beza savet aman eur chapel hag e tleo an dud dont d'ez e prose-sion.

Eur wech graet ar geefridi-ze, labour Bernadett a zo echu; henvel eo bet ouz labour ar « faktour » a zigas d'ar person eul lizer eus perz an eskob pe ar pab ha na zonj ket d'ezan, evit-se, beza kemeret perz e gouarnamant an Iliz.

Person Lourd e-unan n'en deus ket a c'halloud awalc'h evit lavarout pe e teu pe na zeul ket kefridi Bernadett eus an nenv; n'eo ket d'ezan eo da zevel eun iliz pe eun devosion nevez heb asant e eskob; ha setu e genta respont d'ar gefridi. Hag hep-dale an aotrou eskob en em emell ouz an traou : hen eo a varn ez eo gwir ar gefridi, hen eo a ro urz da zevel eun iliz el lec'h goulenet gand ar Werc'hez.

Ouspenn-ze, dreist an eskob eman lar pab. Barnedigez an eskob a zo bet barnet gand ar pab. . . . Dek vloaz ha tri ugent 'zo eman an traou evelse. Holl eskibien Tarb ha Lourd o deus labouret da staga donezonou nevez ouz ilizou an Itron Varia, holl Dadou Santel ar pabed o deus, war bedennou an eskibien, roet d'ar chapeliou, d'an taolennou, d'ar bec'herined, d'ar veleien a lavar an oferenn e Lourd, an holl donezonou goulenet evel kurunenn Itron Varia Lourd, ar chapel savet e renk an ilizou meur, eur gouel en enor d'ar Werc'hez en em ziskouezet da Vernadett da veza lidet dre ar bed holl. . . . ha traou all evelse. . . .

Dre eun taol a Brovidanz Doue an daou bab diweza a zo bet e pec'herinaj Lourd : Beneat XV pa oa arc'heskob e Bologn, er bloavez araok ma voe anvet da bab, ha Pi XI, pa oa arc'heskob Milan, eun nebeut miziou araok sevel war gador Sant Per. O daou, merket gant Doue evit gouarn e Iliz, a oa bet digaset da Lourd, hep na ouient, evit reseo bennoz an Itron Varia araok kemerout ar garg a oa o vont da veza taolet war o diouiskoaz. Er penn kenta eus an Iliz, Sant Per a rae ar memes tra, pa c'houlenne digand ar Werc'hez glorius Vari pedi evid e labour a abostol. A-dreus ar c'hantvejour ar Pabed n'o deus ket kollet o fizianz e Mari ha Mari n'he deus ket kollet he c'harantez evid Iliz he Mab. Nag he zeneridigez evid an hini a zo ouz he c'houarn.

SKOUER

Pareanz ar c'hoar Benigna, 28 vloaz, eus urz leanezed Niderbron (Alzas)

Benigna, aet da leanez d'ar bloavez 1921, ha kaset da Langr (er Marn-uhela d'an nao a viz gwengolo 1922, he deus gallet, er penn kenta, ober al labouriou a oa d'ober en dro d'ar gouent, evel gwriat ha louzaoui ar re glanv. E miz Meurz 1923, al leanez en em lakeas da basaat hep mintin, da gastiza, d'en em skuiza gand

an distera labour, ha diouz an noz, da c'houezi en he gwele. Medisin ar gouent, an aotrou Brokard, a zifennas outi al labouriou start, rak kaout a reas hep-dale er gouli en tu dehou d'he skevent.

Da viz Eost war-lerc'h, Benigna a dufas gwad evid ar wech kenta, ar pezh a c'hoarvezas ganti alies, eur wech taget he skevent a-bez. En deveziou kenta a viz Gwengolo, an dersienn vrâs a grogas enni, hag ar medisin a lavaras ne felle ket d'ezan ez aje da Lourd, gand aon na varvje hed ar hent.

En despet d'ar medisin, c'hoar Benigna en em lakeas en hent gant he zupiorez. Etre Langr ha Pariz, ar glanvourez kaez a gollas kalz a vad. E Pariz e teue fallaennou d'ez e stank ha stank. E Bourdel, e oa ken fall ma oa roet d'ez an absolvent, rak dare 'oa da vervel. Eus Bourdel da Lourd, ne oa ket ganti he zantimant vat, ha bez 'e oa evel hanter-varo pa oa kaset da ospital ar Seiz-Glac'har.

Antronoz, d'ar Zul 16 a viz Gwengolo, c'hoar Benigna, goude beza resevet he zakramanchou diweza, a voe douget dirak ar c'heo burzudus, e-lec'h ma chomas betek peder eur. Ac'hano e voe digaset neuze war blasenn ar Rozera e-touez ar glanvourien renket evit prose-sion ar Zakramant.

Eno, pa zeue ar Zakramant etrezek enni, ar paourkaez leanez a zantas eur boan ken kriz en he c'hein ma n'hellas ket mirout da glemm.

Eün hag eün, an aotrou Boutry, eskob ar Puy, a zeue en he c'hichen gand an Hosti divin. C'hoar-Benigna a glaskas neuze sevel he fenn hag he diouiskoaz evit reseo bennoz ar Zakramant meulet ra vezo. Ha setu ma c'hell hen ober hep poan hag azeza war he c'hrayaz. Er memes amzer, en eun taol, he holl foaniou a gouez; liou ar vuhez a zistro war he dremm : pare eo !

Kerkent ez eo sklerijennet he bizaj ganl ad laouenedigez hag an anaoudegez vat; en em drei a ra war-du he zupiorez : « C'hoar Ponsienn, emezi, ho pedenn a zo selaouet ! » Ha goude beza poket d'he zupiorez, c'hoar Benigna en em laka da bedi kalonek evit trugarekaat Itron Varia Lourd.

Distroet d'an ospital, al leanez eürus a zebras, goude eur banne zoubenn, daou vi, eun tamm kig ha bara.

Peder eur war 'n ugent goude ar baradigez burzudus-se hag he doa sköet spered eun niver bras a bec'herined, c'houec'h medisin, kemeret e-touez ar re en em gave er Bureo, a skrivas kement-man, goude beza lennet paperou ar glanvourez.

« C'hoar Benigna a zeblant kaout yec'hed. . . . Tenna' ra he alan hep diaezamant ebet. . . . Taget e oa gand ar c'hlenved anvet « tuberculose » e galleg; pareet eo eus ar c'hlenved-se. Ar bareanz-se, en em gavet ken buan, a zo kontrol da gement o deus desket ar vedisined. »

An deiz-se dioustu, an hini a oa hanter-varo derc'hent, he deus graet hent ar Groaz e Lourd heb en em skuiza; Antronoz, e rae ivez hent ar Groaz e Betarram.

Abaoe neuze c'hoar Benigna a zo chomet yac'h-pesk. Ober a ra he zervich er gouent hep devez diskuiz ebet, e-touez al leanezed a entent ouz ar glanvourien.

Eur skouer... eus ar Japon

Ar visionerien eus Urz Sant Fransez o deus savet nevez 'zo er Japon eur gelaouenn nevez, he ano *Komyo*, da lavarout eo *Sklerijenn*. Eun dervez e teuas d'ezhi anioù 50 lenner, digaset gand eur vaotéz hag a oa o paouez beza gounézet d'ar feiz; eun nébent goude, e figouezas adarre 45 all, hag an anioù-se a deue holl eus falmilhou pagan a oa ar gristenez nevez o klask gounit d'ar relijion gatolik.

Ha n'eus ket aze eur skouer gaer evidoc'h; bugale Sant Fransez ha lennerien « *Kenteliou* » ? En hor bro Breiz ez eus c'hoaz, a drugarez Doue, eun niver bras a dud hag a lenn brezoneg... Kalz anezo n'anavezont ket « *Kenteliou Sant Fransez* ». Roit-i d'ezo da lenn hag aliit-i da goumananti d'ezo. Ar pezh a rae ar gristenez eus ar Japon e-touez ar baganed, na kalz aesoc'h eo d'ober endro d'eoc'h e-touez ho kerent hag hoc'h amezeien ! Da labour eta, holl assambles !



Misionou

Pedit kalonek evid ar misionou prezeget gant hon Tadou, evit ma tougint frouez puilh evit gloar Doue ha silvidigez an eneou.

E **Lesconil** (Eskopti Kemper), eus an 13 d'an 29 a viz Gand an Tadou Barnabe hag Ivon.

E **Berlidy** (Eskopti Sant Brieg), eus an 13 d'an 29 a viz Gaver, gand an Tadou Tual ha Fuljans.



Pedomp evit hon anaon

Breuriezh Locquenole. — Marc'harit KERRIEN, intanvez Skouarnek (*c'hoar Marc'harit eus ar Galon Sakr*) digemeret en Drede-Urz d'an 8 a viz Kerzu 1912, maro d'ar 7 a viz Du 1927.



KANTIKOU NEVEZ.

Ar c'hantikou-man : SAKRAMANT AN AOTER, KANTIK DA JEZUS-KRIST ROUE, — an « DE PROFUNDIS, » *pedenn an anaon*, hag a zo bet lennet nevez-zo war « *Genteliou Sant Fransez* », a zo bet ken prizet gand an holl, m'hon eus sonjet o advoula evit beza gwerzet o zri assambles.

Priz : 15^l ar c'hant, dre ar post.

P.^v Th. ROUSSEL, 28, Avenue de la Marne, Lorient.



Buhez burzuduz eun douger-sammou MAZE TALBOT

RA VEZO LENNET E PEP FAMILH HAG E PEP TI
EUN DRA VAT E VEDE REI AL LEBRIG-SE DA VUGALE AR SKOLTOU
DA VUGALE AR C'HATEKIZ D'AR BARRIZONIZ GOUDE EUR RETRET DE
EUR MISION BENNAC.

Evit n'en do den ebet digarez da abont heb e lennerien a zo eus
d'ar pep levrig evit **dek gwanneg** hepken ar mizou kas ouspenn

14 levrig	dre ar Post	0 fr. 70
40		5 fr. 75
25		14 fr.
50		28 fr.

Skriva d'an Tad THEODOR ROUSSEL

28 Avenue de la Marne, LORIENT

Chèques Postaux de Nantes — C.c. 46-28



EUR C'HANTIK KAER NEVEZ

An Eured Kristen

Meur a wech hon eus klevet klemmou, abalamour ne veze kavet
kantik ebet da gana war Zakramant ar Bruedelez da genver an
eurejou. Setu perak hon eus graet moula ar c'hantik kaer a zo bet
swelet dija war *Kenteliou Sant Fransez*, miz Eost.

Ne vezo ket dies lakaat tud an eured da gemer ar c'hantik-se.
Gouennit eta kantik *An Eured Kristen*.

P. Théodore ROUSSEL, 28, Avenue de la Marne, Lorient.

Priz : 22 real ar c'hant, dre ar Post.



BLOUD et GAY, Editeurs, 3, rue Garancière, Paris-6^e

La Voie d'Amour, (Exercices sacrés de l'Amour de Jésus) par
Sévérin Ruberie, traduit par Marie-Magdeleine Saeyevs. Préface du
P. Martial Lekeux. *Collection Caritas*. — 1 volume 328 pages.
Paris 1927. 13 fr.

P. TEQUIL, libraire-éditeur, 82, rue Bonaparte, Paris (VI^e)

Chanoine DUPLESSY — **Le Catechisme en problèmes.** Cours
Moyen. Catechisme de Communion solennelle précédé d'une lettre
de son Eminence le Cardinal DUBOIS, archevêque de Paris. In-12.
Prix : 9 fr. ; franco 9 fr. 75.



Gum-neunissa Superorum

Le Gerant: G. LE BAYON

Mouliniez AR BAYON-ROGER, 13, Tachenn: Alsace-Lorraine, en Oriant

Houarn Sant Fransez, 1928



*Ra vezo merlet Jezuz Krist !
Repret.*



Kenteliou Sant Fransez

Kelaouenn vizek gant Skeudennou



TABLENN AR MIZ

Kenteliou ar miz	17
Santez Marcharit a Gontone	19
Mistonoù	20
Buhez Sant Fransez a Asiz	21
Kelou eus ar Breuniezoù	22
Poultre ha Ludu	23
Daoustha red eo mont en Dred' Euz evit heza salvet	25
Blennoù Sant Fransez — XIII ^e K'arnad	26
Sont ar vev	27
Brezel dant allkool-millegel	28
Lourd ha metkou ar gwir Euz	30

Rédaction et Administration
P. Théodore ROUSSEL
F. M. Capucin

28, Avenue de la Marne, LORIENT
C/c: 4628 NANTES

Priz: daou skoued ar bloaz

C'HOUEVRER

- 1 Merc'her ... Sant Ignas, eskob ha merzer.
PLAC'H-EÛRUS VIRIDIANA, gwerc'hez eus an Drede-Urz. — I.P.
- 2 Yaou GOUEL AR CHANDELOUR. — A.J. — I.P.
- 3 Gwener ... DEN-EÛRUS MAZE, eskob ha kovez. eus ar Genta Urz.
- 4 Sadorn ... SANT JOSEF A LEONIS, kapusin. — I.P.
-
- 5 Sul *Septuajezim.* — SANT PER BADEZOUR HAG E GOMPAGNUNEZ, merzer.
rien eus ar Genta Urz. — I.P.
- 6 Lun Sant Tit, eskob.
- 7 Meurz Sant Romuald, abad.
- 8 Merc'her .. Sant Yann a Vatha, kovez.
- 9 Yaou Sant Sirill, eskob ha doktor.
- 10 Gwener ... Santez Skolastik, gwerc'hez.
- 11 Sadorn ... Gouel Itron Varia Lourd.
-
- 12 Sul *Sexajezim.*
- 13 Lun PLAC'H-EÛRUS EUSTOCHI, gwerc'hez eus an Eil Urz.
- 14 Meurz TUD-EÛRUS ANDRE, RIZZIER HAG ANTON, kovez. eus ar Genta Urz.
- 15 Merc'her .. SS. Faustin ha Jovit, merzerien.
- 16 Yaou PLAC'H-EÛRUS FILIPPA, gwerc'hez eus an Eil Urz.
- 17 Gwener ... Ofis an deiz.
- 18 Sadorn ... Ofis ar Werc'hez.
-
- 19 Sul *Kuinkuajezim.* — SANT KONRAD, kovez. eus an Drede-Urz. — I.P.
- 20 Lun DEN-EÛRUS PER A DREJA, kovez. eus ar Genta Urz.
- 21 Meurz Ofis an deiz.
- 22 Merc'her .. *Merc'her al Iudic.* — SANTEZ MARC'HARIT A GORTONN, penitantez
eus an Drede-Urz. — I.P.
- 23 Yaou Sant Per Damian, eskob ha doktor.
- 24 Gwener ... Ofis an deiz.
- 25 Sadorn ... Sant Mathias, abostol.
-
- 26 Sul *Kenta Sul eus ar C'horaiz.*
PLAC'H-EÛRUS IZABEL, gwerc'hez eus an Eil Urz.
- 27 Lun Ofis an deiz.
- 28 Meurz Ofis an deiz.
- 29 Merc'her .. *Pevare amzer (daouzek deizioù).*
PLAC'H-EÛRUS ANTONETT, intañvez etis an Eil Urz.

Eur gwener eus ar C'horaiz, diouz choaz pep-hini : I.P.

KENTELIOU SANT FRANSEZ

Eil bloaz

C'houevrer 1928

Niverenn 14



Trivet devez war
nugent a viz C'houevrer

Santez Marc'harit a Gortone

Pec'herez distroet ouz Doue; eus
an drivet Urz — (1247+1297)

Azeulomp Jezus, hon Mestr mat, o kalonekaat Santez Marc'harit a Gortone dre ar c'homzou-man : « Graet em eus ganit mezour ar bec'herien evit ma teuo ar re vrasan anezê zoken da anaout ma zrugare; bean e vi skeul ar bec'herien, evit ma teufont d'in eveldout. Da lakaet am eus evel eur sklêrijenn e-kreiz an amc'houlou dirak daoulagad an dud dall, evel eur banniel neve en hent ar binijenn; sed 'ec'h out gwenojenn an dud reuzeudik m'eo kollet gantê pep spi.

E buhe ar Zantez man e kavan sevenet komzou an Otrou : « En gwirione ar bec'herien a dremenno en ho rôk e rouantelez an Nenv, » rak er pec'her a ra pinijenn a blij da Zoue.

Gwelet a refomp pegen diroll e voe buhe Marc'harit epad nao bla ha penôs e tistroas ouz Doue. Gwelet a refomp ive ar gelennadurez a c'heller tennan eus ar vuhe-ze.

I

Buhe diroll ha distro ouz Doue.

Kollet ganti hec'h enor da triouec'h vla, Marc'harit a guitaas ti he zud ha mont gand eun den yaouank eus Montepulcanio. Epad nao bla e rôas skouer fall er vro. Met hep koll he fe nepred. Miret a rae eun doujans vras e kenver ar Relijion ha kalz a drue e kenver ar beorien.

Ha Doue a felle d'Ean gwelet an ene-ze o tistrei outan. Eun de m' e oa o kantren dre eur c'hoad. Marc'harit a gavas eur c'horf maro ma oa ar prenev ouz e zibri. Ha hi da sellet hag anaout an den yaouank he doa heuilhet. Eur sklêrijenn neve a c'hroinas hec'h ene. Deut e oa eviti mare an distro.

Ha sed e vo breman skouer an dud a binijenn. Doue a sko awechou! tôliou a ve garo d'imp da welet. Hogen seurt tôliou a ve alies grasou dispar. Diskoue a ret d'imp, o Doue madelezes, diskoue a ret d'imp er vaouez man gwenojenn an dud m'eo kollet gantê pep goanag; diskoue a ret dimp an hent ma tle ar pec'her kemer evit kaout ar peuc'h.

Evid ober gwelloc'h he finijenn, Marc'harit en em lakaas e Trivet Urz ar binijenn. N'eo ken tamm 'bet an hevelep plac'h. Ne c'hoanta ken nemet gouzany ha gouzany c'hoaz evit paeañ dle he fec'hejou. War an douar noaz e kousk, dindan he fenn kef kalet eur wezenn. Evel boued e tremen gant eun tamm bara sec'h, ha yeotennou ar parkeier; ha n'ev nemet dour. Hag e tu-hont en em gastizan kement ma teu he c'horf da veañ blonset.

An diaoul sod gant ar gounnar o welet an ene ze diffipet diouz e gabrannou, a laka dirak daoulagad ar plac'h kêz gweledigeziou heugus. Met ar plac'h a stourm gant kalon dre en em izelaat muioc'h mui dirag an holl. « Deut 'ta, emezi, deut holl, tud Cortone, kemeret mein da stilepel ganin, ma vo argaset diouz ho kêr mezusan plac'h zo er bed, ar plac'h m' eo bet skoueriet fall ganti ar vro a-bez. »

Eun de, eur zul e oa, ec'h eas da Laviano da goulz an oferenn bred; dierc'henn e oa, eur gordenn endro d'he goug hag e c'houle gant an dud he fardoni. Kement a zaerou a skuilhe, kement a c'hlaç'har hag a geuz a ziskoueze ma kemeras an dud true outi. Meur a bec'her a zistroas diwar an hent fall, sklêrijennet ha kennerzet ma oant gant skouer Marc'harit.

Evit stumman hec'h ene Doue he lakaas da dremen er boan hag en enkrez evel ma ve lakaet an aour en tan da veañ glanoc'h. Gevier euzus a voe laret diwar he fenn. N'o doa ken an dud eviti nemet rukun ha dispriç. Souezet e oa an holl o welet Mibien Sant Fransez o teurel evez warni hag o pleal gant hec'h ene. He c'hovezour a rankas tec'hel diouz Cortone epad seiz vla. Met Marc'harit a dremene hec'h amzer o pedi dibaouez evit he heskinerien.

Ho trugarekaat a reomp o Doue ken mat, da veañ roet er Santez man eur sklêrder neve da Urz Sant-Fransez. Rouez awalc'h, marvat, an eneoù bet glan dalc'hmada; neuze 'ta nag evurus ec'h omp o welet ar bec'herez man oc'h adsevel hag o c'hounit. Ho kalon.

II

Kelennadurez evidomp

Buhe Santez Marc'harit a Gortone — evel buhe Sant Augustin — a ziskoue d'imp ne fell ket da Zoue gwelet ar pec'her o vervel en e bec'hed. Eman atao e ziouvrec'h digor frank evit stardañ war e galon ar paourkêz pec'her distroet. Eman dalc'hmada Doue oc'h astenn e zorn da neb a zo kouezet. N'eus ket ezomm ebet da goll fianz. Diskoueomp keuz ha glac'har ha neuze mont da gaout eur c'hovezour evit bean dizammet. Red eo avat anzav hep mez, sklêr ha frêz kement tra a wask an ene. Selaouomp gant evez ar c'homzou-man kouezet diouz muzellou ar C'hrist burzudus a virer c'hoaz e Cortone e kichen be Santez Marc'harit. Sed aman ar peç a glevas ar zantez :

« Lavar d'ar govezourien eo red d'ê ober goulennou digand ar pec'her, heb aon ha hep damant ken alies gwech ha ma ve red. Alies ar bec'herien n'anzavont ket an holl bec'hejou graet gantê, ken dallet ma ve o spered gant tenvalijenn ar pec'hed. Mibien Sant Fransez a laka kalz a bec'herien war hent ar silvidigez abalamour

d'an aked a lakont da govesaat an dud ha d'ar boan a gemeront gant an eneoù. »

Evit ma teuo ar bec'herien da zistrei ouz Doue, eo red ma vo embannet dre-holl karante Doue evid an dud. Setu aman komzou all klevet gant Mac'harit :

« Lavar da Vibien Sant Fransez mont da brezek dre-holl er bed, ma vo desket d'an holl dud pegement o c'haran. Ra vo diskouet d'ar bec'herien pegement em eus gouzanvet : poaniou skrijus em c'horf, enkrez c'houero em c'halon. Ra vo prezeget dre-holl ma aviel gant komzou frêz ha kunv. »

Goullomp ni kristenien, goullomp digant Doue rei d'ar brezeerien ar c'homzou a lakaio an dud da c'hoantaat bevan gwelloc'h. Labouromp ni ive dre hon fedennou, hon c'homzou hag hon skouer vat da lakaat karante Doue e kalonou hon c'henvroiz. Met araok lakaat karante Doue da vleunian endro d'imp, red-mat eo he lakaat birvidikoc'h ennomp. Evit-se mirout ervat Spered sant Fransez evel Santez Marc'harit goude he buhe diroll. Diwallomp na ve mouget tan hon c'harante gant skorn ar bed fallakr.

An dra-man a glevas c'hoaz Mac'harit digand ar c'hrist burzudus : « Kalz a eneoù a zo er Purgator o c'hortoz hag o c'houzany hag o mignoned o ankoua ! »

Peden. — « O Doue, c'houi fell d'ec'h gwelet ar pec'her o trei kein d'an drouk-spered hag o vevan, c'houi ho peüs diluiet Marc'harit diouz rouejou ar bec'herien; rôit d'imp ive ma vo torret hon chadennoù dre zellid he fedennou ma c'hellfomp ive oc'h azeuli, evelti, gant eur galon dinamm. »

Mennoz. — Evel m'en deus aliet Hon Salver, lenn hag adlenn a rin buhe ma Salver o c'houzany, ha lakaat ma buhe da gordan gant e himi; gwellan stumm a zo d'en em santelaat ha da santellaat ar re all.

Boked. — « An daerou ac'h eus skuilhet, mesket gant ma gwad da laka evel eur rozenn wenn dre mac'h out glan adarre; evel eur rozenn ru dre ar garante hag ar pinijennou. Evelse e atizi distro a bec'heien. » (*Komzou Hon Salver da Vac'harit*).

E.R.

Misionou

Pedit kalonek evid ar misionou prezeget gant hon Tadou, ma tougint frouez puilh evit gloar Doue ha silvidigez an eneoù.

ADORASION. — En **Erge-Vras**, eus an 12 d'an 18 a viz C'houevrer, gant an Tadou Barnabe hag Ivon.

MISION. — E **Roskanvel** eus ar 25 a viz C'houevrer d'an 19 a viz Meurç, gant an Tadou Barnabe hag Ivon.

Kenvreudeur an Drede-Urz, evit kement-se, livirit, mar plij, 3 *Ave Maria* hag ar bedennig : « *Hon Tad Sant Fransez, pedit evito.* »



Buhez Sant Fransez a Asiz

KENTEL 7. — Prezegerien ar peoc'h hag ar binijenn,
— Adori Jezuz-Krist. — Diskibl all.

Goude beza kelennet e vreudeur, Fransez o c'hasas daou ha daou da brezek hag a yeas e-unan gand ar seizvet. Daoulina a reas pep-hini anezo da c'houlenn e vennoz, ha da bep-hini e lavaras : Bez fizians e Doue hag hen az tiwallo. »

Na kaer e oa an dud yaouank-se hag a yê leun a fizians dre ar vro da glask dismegans ha goapaerez evit gounit da Zoue eun nebeudik tud a galon vat !

Da gement den a gavent war o hent, e rôent ar zalud a oa bet desket d'ezo gant Fransez : « Ra zeuto an Aotrou d'ober d'eoc'h e beoc'h ! »

Kerkent ha ma welent eun iliz, ez aent enni da zaoulina war an douar noaz ha da lavarout da Jezuz ar bedenn gaer-man : « Hoc'h adori a reomp, Aotrou Jezuz-Krist, aman hag en holl ilizou a zo war an douar a-bez; hag ho penniga a reomp da veza dasprenet ar bed dre ho kroaz santel. »

Pa veze goulennet diganto : « Eus a be vro ez oc'h-hu ? Eus a be urz ez oc'h ? Petra rit ? » e respontent gant douster : « Ni a zo tud a binijenn o tont eus Asiz. » Ne gredent ket kemerout an ano a venec'h, rak n'oa ket savet c'hoaz an urz gand he reolenn hag he lezennou.

Prezek a raent d'an dud, met eur goazeadenn e oa kentoc'h o c'homzou eget eur brezegenn; goulenn a raent digand ar re o selaoue mirout ar peoc'h ha servicha an Aotrou Doue gant pasianted. Ne gemerent nag acour nag arc'hant, pedi a raent evid ar re o wall-gase pe a lavare droug outo; mont a raent da loja en eul lec'h paour ha dister, pa gavent tud d'o digemerout.

Ma na gavent den d'o reseo, e kouskent er-maez, ha laouen evel kent, dre ma oant henveloc'h evelse ouz Mab Doue, n'en doa ket eur maen da harpa e benn, pa veve war an douar.

Pa voent distro eus ar bale-ze, e teuas d'ezo pevar breur nevez : Yann a Sant-Konstant, Barbaro, Bernez a Viridante ha Jilvestr a Aspis. Jilvestr evelato ne reas nemet diskleria e teufe diwezatoc'h da heul Fransez, pa c'hellje.

KENTEL 8. — Fransez a ya da Rom da c'houlenn bennoz ar pab evid, e urz. — Ael Trankred a Rieti. —
Gweledigez ar wezenn-balmez.

Kennerzet gand ar sklerijenn en doa bet digant Doue war niver bras ar vugale a dlle dont davetan, an Tad a reas e zonj d'o boda en eun urz. Lavarout a reas eta d'e vreudeur : « Gwelout

a rit e kresk bemdeiz hon niver gant sikour an Aotrou Doue. Mall eo goulenn asant an Tad Santel ar pab; rak, ma n'eman ket a-du ganeomp, ne raimp netra vat. »

Petra rae da Fransez homz evelse ? Anaout a rae komzou Hor Zalver da zant Per, evel m'emaint en Aviel : « Te a zo Per, da lavarout eo maen, ha war ar maen-ze e savin va Iliz, ha biken ne vezo galloud an ifern trec'h d'ezi. » Ha pa zonje mab Per Bernardone er c'homzou-ze, e lavare outan e-unan : « M'en em harpan war an Iliz, em bezo nerz diganti, ha neuze e pado va labour. »

Laouen e voe breudeur ar Zant o lavarout d'ezan e rae mat; setu ma skrivas eur reolenn a vuhez gand an tri le m'oar boazet d'ober en holl urziou, ken gwazed, ken merc'hed : paourentez, glanded ha sentidigez. Hogen, diskleria a rae : « Striz e vezo ar baourentez; nag ar venec'h, nag ar c'houentchou n'o devezo gwir da gaout netra war o ano. » Echu gantan skriva e reolenn, ar Zant a yeas en hent dindan gouarn ar breur Bernez a C'hentavall; rak Fransez, en e izelegez, ne felle ket d'ezan ren ar veachourien.

Pegen laouen e valeent war-du Rom, gwech o pedi, gwech o kana ! Pa oant o treuzi kêrig Rieti, Fransez a zellas ouz eur marc'heg kaer, Ael Tankred a oa dirazo : « Ael e emezan d'an den yaouank-se ha n'en doa gwelet biskoaz araok, Ael, pell awalc'h ec'h eus douget ar skoed, ar c'hlezer hag ar c'hentrou. Deus ganeomp, hag e vezi soudard en arme Jezuz-Krist. » Heb argila tamm ebet, Ael a zentas.

Eun nozvez, pa oant o tostaat ouz Rom, e welas Fransez, dre e gousk, eur wezenn balmez eus ar re gaera hag a blege he skourrou beteg ennan. Laouen e voe, pa ziskennas : « An Tad Santel ar pab hor zelaouo. » emezan d'e ziskibien.

Kelou eus ar Breuriezou *Breuriez an Drede-Urz e Gwiskriff* RETRED HA GWELADENN (visite)


Ar vreuriez-man, savet gand an Tad Ivon a Blarnel, breman 'z eus ugent vloaz, he deus bet eur retred eus an 21 da 24 Kerzu diweza.

Daoust d'an amzer griz o deus ar c'hoarezed heuliet mat ar prezegennou, ha plijadur en deus bet an Tad misioner, en eur gomz gant peb-unan, o welout peger stag int holl ouz o reolenn zantel. Goulennet en deus diganto karout gwelloc'h c'hoaz an Aotrou Doue ha rei an dourn d'an aotrounez beleien da grenvaat ar feiz muioc'h mui e parrez vat Gwiskriff.

Pa voe klozet ar retred, o deus 9 blac'h yaouank, 3 maouez ha 2 waz kemeret skapuler Sant Fransez.

Lod eus ar re a oa e karg abaoe 1920, o devoa c'hoant d'ober o dilez; setu perak ez eus bet anvet renerezed nevez gand grad vat an holl.

Pizians o deus an Aotrou Person hag an Tad ez ay kalz gwelloc'h c'hoaz ar vreuriez en dro goude an deiziou benniget-man.



POULTR ha LUDU !

Memento, homo, quia pulvis es....

Kouezet eo ar zetans, diwar teod ar C'hrouer :
« Memento, dalc'hit sonj, denig paour ha dister,
« Ne doc'h nemet poultrenn; hag er bez tenval-du,
« Ho korf, petra vezo ? — *Eun dornadig ludu !* »

Ne ouzoc'h nag an eur, na zoken an amzer,
Ma tilammo warnoc'h, en eun taol, ar Falc'her,
D'ho leda didruez, en eur bez tenval-du;
D'ober petra ganeoc'h ? — *Eun dornadig ludu !*

Dre ar pec'hed, eo deut e c'halloud d'an Ankou,
Hag abaoe, noz-deiz, e vale divoutou,
Hag e sko, hag an holl a ziskenn en toull du;
Evit beza pe seurt ? — *Eun dornadig ludu !*

C'houi, tud yaouank distur, lore'hus gand ho kened,
Hag a rod, e pep lec'h, o kas beza meulet,
Eus ho kened, eun deiz, e goueled an toull du,
Petra, petra viot ? — *Eun dornadig ludu !*

C'houi, tud skanv, hag a ev gwin ar plijaduriou,
'Vel ma sun ar gwenan, mel dous ar bokedou,
C'houi vo stlapet, d'ho fro, en eur bez tenval-du;
Eno, petra viot ? — *Eun dornadig ludu !*

C'houi, tud krenv ha nerzus, sonn dirag an avel,
E-giz ar gwez dero, e koajou Breiz-Izel,
Eus nerz hoc'h izili, 'barz ar bez tenval-du,
Petra c'hellot mirout ? — *Eun dornadig ludu !*

C'houi, tud stag ho kalon ouz madou an douar,
Dont a rei ar Falc'her, hep-dale d'ho tiskar :
Eus ho madou, neuze, pa viot en toull-du,
Petra jomo ganeoc'h ? — *Eun dornadig ludu !*

C'houi, tud savet uhel, ebarz an enoriou
Ha brudet hoc'h ijin, ebarz an holl broiou,
Eus ho kloar hag ho prud, er bez yen tenval-du,
Petra, petra jomo ? — *Eun dornadig ludu !*

Jezus en deus laret : « Bezit holl war evez :
« Evel eul laer, en noz, an Ankou didruez
« Ho sammo ! » ha neuze, pebez spont evidoc'h-hu,
Mar 'z it, gand ar pec'hed, da vreina d'an toull du !

C'houi, bugale Fransez, n'ankouit ket ar gentel :
Bevit, evel ho Tad, santel, santel, santel;
Neuze n'ho po ket aon da vonet d'an toull du :
Hoc'h ene a nijo d'ar baradoz dioustu.

BASTIEN.



Daoustha red eo mont en Drede-Urz, evit beza salvet ?

Nann : Gallout a rer mont d'ar baradoz, hep beza en Drede-Urz; panefe da ze, Doue n'en dije ket gortozet an XIII^e kantved, evid e rei da anaout d'an dud. Kement-se a zo gwir.

Met gwir eo ive ne c'heller ket beza salvet, heb ober reiz ar pez a dle eun Tersier da ober evit heuilh Reolen e Vreurie. Ar Pab Leon XIII a lavar : « **An Drede-Urz a ra gwir gristenien...** ha, pa 'z er ennan, e teuer da veza kristen mat, hag evelse e ver salvet. »

Setu perak, an Drede-Urz, a lavar c'hoaz ar memes Pab, « n'eo bet savet nemet evid eun dra : dougen an dud da garout Jezus-Krist, da garout an Iliz ha da heuilh ar vertuziou kristen. An Tersiered ha Tersierzed a glask beza henvel ouz Paour Asiz ha beva evlletan, hervez kentelioù an Aviel, oc'h ober pinijenn, o pedi, o karout Doue hag an nesa : rak, e gwirionez, an Drede-Urz a zo diazezet war ar binijenn; ar bedenn eo a zalc'h enni ar vuhez, hag ar garantez kristen a deu d'he c'haeraat ha d'he zantelaat maoc'h-mui.

« O sevel an Drede-Urz, Sant Fransez oa e zonz ober ganti, evel eun holen, da virout an dud, an tiegeziou, ar broiou diouz hudrinez ha breinadurez ar bed; hag an Iliz he deus ar memes sonj. Met penaos e vo graet eul labour ken talvoudus ? — Graet e vo kement-se, mar teu peb Tersier da zantella e oberou pemdeziek, memes ur re distera, o lakaat anezo, gwella ma c'hell da veza henvel ouz de Hor Zalver Jezus-Krist. » N'eo ket red eta ober traou bras, traou burzudus, evit beza diskib da Zant Fransez; n'eus nemet ober mat ar pez a vo d'ober bemdez, peb hini en e stad.

« Ar Reolen eta ne c'hourc'hemenn nemet ar pez a zo gourc'hemennet gant lezennou Doue, an Aviel hag an Iliz, ha ne zifenn, nemet ar pez a zo difennet ganto. » (Leon XIII).

Ober ar vad, ha pellaat diouz an droug : An Aviel, lezenn Doue hag hini an Iliz ne c'houlennont netra ken.

Brezellaat, e peb amzer hag e pep lec'h, enep ar fall, klask atas an-tu da rei an trec'h d'ar vad, setu holl Reolen an Drede-Urz

Gwir eo en em gav er Reolen-ze meur a dra ha na zeblantout ket beza e lezenn Doue, rak n'ini ket gourc'hemennet grons, hag e c'heller, hep pec'hed ho lezel a gostez. Goulskoude, oc'h ober anezo, e ver suroc'h da heuilh al lezenn ha da ziwall diouz ar pec'hed.

C'houi zo eta diskiant o chom hep mont en Drede-Urz : rak, evid en em zavetei, c'houi rank ober ar pez a ra an Tersiered, hep kaout ar memes grasou hag ar memes meritou.

Diâsoc'h vezo d'eoc'h kas ho silvidigez da benn, o chom heb eur Reolen da harpa ho polontez atao ken bresk, ken dinerz. Dre he lec'h eo an esa mont d'eur gêr ? dre an hent bras, pe a dreuz bro, dreist ar c'hleuziou ? — Dre an hent bras, a dra zur. Ma, bugale Sant Fransez, en eur heuilh o Reolen, a ya d'ar baradoz, dre an hent bras, ha c'houi, o chom hep Reolen, a fell d'eoc'h mont, dreist ar c'hleuziou ; piou a zo diskiant ?

Petra c'hoaz ? — Ar Pab^o a lavar : « **Me garfe gwelet an holl gristenien o vont en Drede-Urz.** » Lennet mat ho peus : **an holl gristenien !** Petra c'hortozit 'ta, evit senti ouz ar Pab ? Daoust ha n'ho peus mui sonj eus komzou Hor Yalver d'an Ebestel, hag, er memes amzer, d'ar Pabed ha d'an Eskebien : « *Ar re ho selaou, am zelaou ; ar re ho tispriz, am dispriz me !* »

Sonjit mat ive e c'hour'chemenn d'eoc'h Jezus-Krist karout ho nesa, evel ma karit Doue ; ha ne viot ket salvet hoc'h-unan, ma ne boagnit ket da zikour an nesa d'en em zavetei. An dra-ze zo bet gwir, e peb amzer, hag a zo bepred gwir en amzer-man, marteze muioc'h c'hoaz eged en amzeriou tremenet. Gwelet a reomp kalz a dud hag a vroïou a-bez o vont d'en em goll, dre ma kerzont eneb an Aviel hag enep lezenn Doue.

Penaos o zenna diwar an hent fall-ze ?

Selaouit c'hoaz Leon XIII : « *Kredi a ran start, emezan, e vezo saveteet ar bed, dre an Drede-Urz hag a had e peb tu kenteliou an Aviel. En amzer ma vev ar Zant, ar boblou oa kouezet an dizurz ; an Drede-Urz ho digasas, en-dro, da Zoue. Evelse, en hon amzer-ni, an Drede-Urz a denno d'he heul betek Doue ar broadou tud hag o deus, siouaz ! trôet kein d'ezan.* »

Ha neket eur wech hepken en-deus ar memes Pab komzet egise, met alies : « *Kerkent own bet savet, emezan, war Gador Sant Per, em eus sonjet pedi Sant Fransez, evit kaout e skoazel, en amzer druezus a vevomp ennan, hag em eus sonjet ive diskouez d'an holl ema, en Drede-Urz, al louzou, evit rei peoc'h ha silvidigez d'ar broïou ha d'an dud.* »

Evit echui, setu eur gomz lavaret gant Sant Bonavantur : « *Ha pa ne vije nemet eun den hepken, emezan, hag a vije barnet d'an ifern, em bije lec'h da grenn, epad va holl buhez, gand aon e vijen me an den-ze.* » Ma-ne glaskit ober nemet ar pez a da-jom berr gand ho silvidigez. Ne vez graet morse re, evit diskouez karantez d'an Aotrou Doue, ha savetei an ene : rak-se, arabad kaout diegi o vont e Trede-Urz Sant Fransez.



Bleuniou Sant Fransez

XIII^{et} Pennad

Oc'h ober eur bale,
Sant Fransez ha Maze,
E-kichen eur stivell,
En eul lec'h diavel,
A laka, war eur maen
Bara o aluzenn.
Ha Sant Fransez,
Gant 'tevenez,

A veul, dirak Maze,
Kaerder ar baoutrente.
Hag hen ha pedi Doue
Sant Per ha Sant Paol ive
Da rei d'ezan 'vel donezon,
He c'harout a-greiz e galon.
Ha setu an daou abostol
O en em diskouez a-greiz-holl.

O klask ober peb tra, 'vel Jezus Hon Salver,
Evid an ineou, e galon ken tener,
Ma kase daou-ha-daou, hervez an-Aviel,
Elec'h ma tlee mont, dalc'hmat, e ebestel,
Sant Fransez, dibabet e zaouzek abostol,
O c'hasas daou-ha-daou, ive, eun tamm dre-holl.
'Vit rei d'eze skouer vat, war ar sentidigez,
Er penn araok, bepred, 'veze kavet Fransez.
Evel-se 'rae Jezus, eur skouer e oberou,
Araok mont da brezek, d'ar bobl dre e gomzou.
Roet gantan d'e ziskibien, o zachenn da bigosat,
Evit mad an holl eneo, e liorz Doue an Tad,
E kemeras gantan Maze, ha kuit da chom da c'hedail,
Hag int en hent. 'n ano Doue, o daou e-trezek Bro-C'hall.
Eur wech ma 'oant o daou, o tiskenn en eur gêr,
Skuiz, brevet o zamm korf, hep tamm, d'eze naon kaer,

Hervez o reolenn, hag int ha mont dioustu,
 Da glask an aluzenn, pephini diouz e du.
 Sant Fransez, d'an holl da welout, ne oa ket, nann, eur pôtr brao,
 Hag evid eun tamm koz laouek 'veze keimeret atao.
 'Lec'h ma veze disanavet, an dud a selle outan,
 Gand eun daoulagad ker skoelfet, ma vefe bec'h warnezan.

Hag en de-se, ar paour-kaez, tro vat na reas ket,
 Ne gavas ken da chaokat, 'met tammou bara louet.
 Breur Maze, o vezan eun den bras, eun den kaer,
 A veze arru mat, gand an holl e peb kêr.
 En de-se e visac'h, a oe leun-chouk e gôf;
 Fele ket da gêriz bezan strik war o frof.

Tammou mat a vara gwenn, choanenhou en o fez,
 A roe d'ezan an dud, ha pephini gant prez.

Graet gante o zammig tro, setu int adarre,
 En em gavout er-maez kêr, an eil gand egile,
 En eun tammig lec'h distro, war ribl eur feunteun sklêr
 Kalz sklêroc'h an dour enni, eget lagad an naer,
 Eur roc'hell en he c'hichen, henvel ouz eun daol-yaen,
 Hag int da lakat warni bara o aluzenn.

A-dal ma welas Fransez, aluzenn Breur Maze,
 E dammou bara kaeroc'h, brasoc'h eget e re,
 Gand eul levenez dispar, e tridas e galon,
 Ma lavaras, stad ennân, evel-hen d'e vignon :

« O, Breur Maze, o, ma breur ker !
 « Dellezomp ket-kaout prof ker kaer. » —
 Ha diou, taer gwech, 'adlavaras
 Sant Fransez ar c'homzou-ze c'hoaz,
 Ma oa nec'het kaer, Breur Maze.
 Ma lavaras d'e dad neuze.

« Penôs e kaofec'h c'houi, an tenzor ar c'haeran,
 « E-lec'h ma ren hemdez ar baourentez vrasan.

« N'hon deus netra war hon ano,
 « Na tud paouroc'h ne deus war dro.
 « N'hon deus na taol, na kontel, na plad, nag asied,
 « N'hon deus na ti, na mevel, na matez n'hon deus ket.

« Hag e-kreiz hon dienez
 « E vefe pinvidigez ! »
 « Hag ar sant 'lavaras
 Da Vaze nec'het bras :
 « An dienez, ar baourente
 « Setu ar gwir denzor, aze.

« Vit bevan war an douar ne deo ket red 'ijin,
 « Gantan ez a alies, en treou war an tu-gin.

Mar hon deus paeadra, ez eo a-berz Doue,
 E zorn, ouz hon harpan, noz-ha-deiz ha bemde,

« Ar bara hon deus bet, hirie en aluzenn,
 « An daol-yaen man ker kaer, savet war ar c'hlazenn,
 « Hag ar stivel dour fresk da derri hon sec'hed,
 « Gant madelez Doue, d'eomp 'zo pourvezet.

« Pedomp eta breman,
 « Pedomp, diouz hon gwellan

« Ma teuy eta, Doue.
 « Hed-ha-hed hon buhe,
 « Da lakat 'n hon c'halon,
 « Da ziwan, ma mignon,
 « Eur garantez didon,
 « E-kenver eun tenzor
 « Evel ar baourente,
 « Eman lagad Doue,
 « Oc'h evesât outi,
 « Ma ne gouezo warni,
 « Na melg d'he labezan,
 « Na laer d'he c'has gantan. » —

Hag int da daoulinan, evit lavarout gras,
 E-kichen ar stivel, war an doubier geot glaz.

« N'eo ket awalc'h pedi,
 Eun tamm 'renker dibri.

Ha gant dour sklêr ha bara sec'h
 E c'haller bevan e pep lec'h.

Torret gante o naon, ha peur debret o fred
 'Trezek douar Bro-C'hall ha kerzout ar bôtred.

(da genderc'hel).

Sonjit ervat

Pevare malloz Hor Zalver

I.— Sonjit ervat e komzou Hor Zalver : « Malloz d'eoc'h c'houi
 hag a zo meulet gand an dud. Perak ar c'homzou-ze ? Aes int
 da gompren : kaout meuleudi digand an dud a zo laerez ; rak dre
 berz Doue hepken e tigouez kement vad a zigouez, ha da Zoue
 hepken eo dleet ar meuleudiou.

Pa vezoc'h meulet ha trugarekaet, kinniget da Zoue an holl meuleudiou
 ha bennoziou rôet d'eo, hag ho pet truez eus an dud-se
 ho-meul el lec'h meuli Doue, tad an holl madeleziou.

II. — Sonjit ervat : Hor Zalver a daol e valloz war an dud a zo
 meulet gand ar bed. Perak ? Abalamour ez eo peurvuia an dud-se
 mignoned d'ar bed ; ne garont nemet tud ha traou ar bed, tud ha
 traou ha n'helle ket Hor Zalver o gouzanv.

El lec'h kaout plijadur o selaou meuleudiou ar bed, ho pet
 aon kentoc'h, hag aon bras. Mar doc'h meulet gant tud ar bed,
 eo dre ma kavont ennoc'h eun dra hennak da zisplijout da Zoue.

III. — Sonjit ervat : meuleudiou ar bed a zo touellus. M'o
 c'hredit, ha douget omp d'o c'hredi, ho-taoulagad a deuio da vru-
 menni ; ne weloc'h mui ho techou fall, ha ne glaskoc'h mui o
 zrec'hi ; eman disonjet ganeoc'h, neuze, hent ar baradoz.

En em ziwallit mat eur ar stad truezus-se, hag evid en em
 ziwall gwelloc'h, sonjit alies e malloz Hor Zalver war meuleudiou
 ar bed. Truezus e vefe ho stad, ma kredfec'h e seurd komzou, ha
 koll a rafec'h peoc'h hag eürusted hoc'h ene.



Brezel d'an alkool milliget

Penaos ober brezel d'an alkool ? Lavaret hon eus : dre hor c'henteliou hag hor skoueriou. Met eun den hepken a zo nebeut a dra : kollet eo etouez ar re all ; ne vez gwelet ha klevet nemet gant eun nebeudig tud.

Abalamour da-ze ez eus bet savet Breurieziou d'ober brezel d'an alkool, breurieziou a deu d'ezo tud eus a bep lec'h, hag evelse e c'hellont rei da glevet a bell o c'henteliou hag o aliou mat. Bez ez eus Breurieziou neutr, da lavaret eo a ro digemer da gement hini a c'hoanta lakat e hano, pe hen a zo kristen, pe hen n'eo ket. N'int ket da veza tamallet ar Breurieziou-ze, ha ne c'houlennomp diganto nemet distrei an dud muia ma c'hellint diouz an alkool.

Ar brotestanted a ra brezel ive d'an odivi, hag en eur geriadennig eus ar Finister, enni protestanted, ec'h en em gavas kement-man, n'eus ket pell. Eur beac'hour, aet en eun ti eus ar geriadenn-ze, a voe kinniget d'ezan eur banne odivi : « Nann, emezan, ho trugarekaat a ran ; ne gemeran morse. » — « Marteze neuze c'houi a zo protestant, a lavaras unan eus tud an ti, rak dre aman n'eus nemet ar brotestanted o lezel a gostez an odivi. » — « Mat, eme ar beachour, kiviziken e c'hellot lavaret ez eus ive katoliked o tilezel an alkool, rak me a zo kristen katolik. »

Ya, er bloaz 1899 eo bet savet Breuriez ar Groaz Wenn gant ar gatoliked hag evit ar gatoliked, hag a drugare Doue, skignet eo dre ar Frans, ha kalz o deus roet o hano : gwazed, merc'hed, bugale, dreist-holl bugale ar skoliou kristen. Evelato, ret eo lavaret, n'eus ket awalc'h er Vreuriez evit c'hoaz, hag e c'houlennomp digant an dud yaouank kalonek dont d'hor zikour.

Petra c'houlenn ar Groaz-Wenn ? Lezel a gostez an odivi ha pep boesoun graet gant alkool. Met aotre a ro da eva gwinn, chistr, bier, gant ne vo ket evet re.

Ar Groaz Aour a c'houlenn dilezel pep boesoun gouest da vesvi, da lavaret eo dilezel zoken ar gwinn, chistr, bier.

Gwelloc'h eo c'hoaz ar Groaz Aour eget ar Groaz Wenn, skler eo. Met komzomp kepken eus ar Groaz Wenn. Lezomp ar Groaz Aour gant ar re o deus nerz-kalon awalc'h. Meulomp anezo, rak dleet eo-o meuli. Ar re-ze, bezit sur, a vezo skiant en o fenn, nerz en o izili ; ne glevot ket var o muzellou a gomzou diskiant, o buhez a vezo reizet mat. Na glaskomp ket c'hoarzin goap outo, evel ma ra lod... Ma ne vije e Breiz nemet everien dour, bro all ebet ne vije par d'ezi ; a galz e vije ar vro genta eus ar bed.

Komzomp 'ta eus ar Groaz-Wenn. Den ebet, a gav d'in, ne c'hell lavaret : « Me n'oun ket gouest da jom heb odivi. » Gouzout a ran eo dies en em zizober eus eur c'hiz koz. An hini a zo boazet abaoe 10, 20 vloaz hag ouspenn da eva e vanne odivi bemdez ha meur a vech bemdez, hennez en dezo poan o-tiskregi eus ar c'hiz-ze, skler eo. Met n'en deus ken nemet ober eun esa, hag e welo n'eo

ket re zies, ha ne vo tamm falloc'h ebet, ne raio droug ebet d'e yec'hed, ne raio nemet vad.

Ha d'ar re n'int ket boazet c'hoaz da eva odivi, evel ar vugale, ar merc'hed, n'eo tamm poan eus ebet kenderc'hel. Setu aze bugale, tud yaouank er skoliou. Er skol ne vez ket roet d'ezo a odivi da eva, n'o deus ket ezomm, an alkool ne rafe d'ezo nemet droug. Pa jomint er gear eus ar skol, perak ez afent da eva ?

Setu aze piou a zo da lakat er Groz-Wenn : ar vugale, an dud yaouank, Ma talc'hont mat, ha kalz a zalc'ho mat ma vezont sikouret, deuet da veza gwazed, e raint kalz vad endro-d'ezo hag e torrunt a-nebeudou ar c'hiz fall da eva odivi. N'o dezo ket a vez o tiskouez int tud fur.

N'eo ket ret beza en eur Vreuriez evit beza fur var boent an eva. Gouzout a ran. Evelato e vezer krenvoc'h pa vez roet an hano, pa ouezer emer o rei an dourn d'eur Vreuriez bemiget gant an Tad santel ar Pab hag an Eskibien, eur Vreuriez a zo o poania da zise'hrizienna eun tech fall nozus bras d'ar relijion ha d'ar vro. Neuze e c'heller lavaret : « N'emaomp ket hon-unan, Re all zo e pep korn eus ar Frans hag ar bed katolik. Poaniomp, hag e raimp kalz vad. »

« Ne deuoc'h morse a-benn da barea an dud eus ar c'hlenved-ze ! » Setu komzou hag a vez klevet alies. — Siouaz ! Dies eo dont a-benn eus mesverien hoz. Met evelato meur a hini a zo bet pareet, a drugarez Doue, ha meur a hini a vezo c'hoaz. Ha dreist-holl, eun dra aes eo boaza bugale, tud yaouank da veza fur, da drei kein d'an odivi. N'eus ket nemet rei d'ezo abred kenteliou mat ha skoueriou mat.

Ha d'ar re a gomz evelse, d'ar re a glask ober goap ouzoc'h, n'ho peus nemet lavaret : « Deuit d'hor zikour, roit d'eomp an dourn, hag e vezo unan muic'h en hor Breuriez. » Ma lavaront : « Me n'am eus ket ezomm a Vreurieziou. Me a oar betek pegeit mont », respontit : « Taolit evez ! Nag a hini am eus anavezet a gomze ive evel doc'h, hag a nebeudou a zo aet dreist ar roudenn. N'eus ket da c'hoari gant an odivi. »

Ober enor d'an Iliz katolik, setu petra dle eur c'hristen katolik. O veza m'omp kristenien, e rankomp kredi holl wironeziou ar relijion ha senti ouz gourc'hemennou Doue ha re an Iliz. Eur c'hristen hag en em rofe d'ar pec'hed evel ar bayaned a rafe mez d'e hano.

Petra zo kaeroc'h eget gwelet kristenien o poania da veza dire-bec'h e pep giz. — Ar re all a vezo gwisket en eun doare divergont ha diskiant ; i n'o d'ezo nemet dilhad dereat... Ar re all a glasko plijadureziou ar bed, an dansou, ar c'hoariou ; i ne lakint morse o zreiz er zaliou dans... Ar re all a lenno pep seurt kasetennoù ha levriou ; i ne lennint nemet leoriou mat. Ar re all a garo an debri, an eva ; i a daolo evez, a zalc'ho var o ioulou, ha dreist-holl a vezo fur bras e kenver an eva. Lavaret a raint : « Morse banne odivi ebet », hag an dra-ze evit rei skouer vat endro d'ezo, evit enebi ouz ar c'hiz fall a zo en em skignet e pep lec'h. Oc'h ober evelse, e raint ar pezh a zere ouz kristenien.



LOURD, katekiz beo

Lourd ha merkou ar gwir Iliz

« *Me a gred en Iliz unan, santel, katolik hag apostolik.* »

En eur gana ar c'homzou-ze eus ar « *Gredo* », ar milherou a bec'herined bodet e Lourd, war blasenn ar Rozera, a zav uhel o goulaouennou, evel evit kemeret an nenv da dest eus o feiz, eus o zentidigez hag eus o c'harantez e kenver an Iliz savet gant Jezuz-Krist evit kas da benn al labour boule'het gantan war an douar.

Perak ez eus bet laket er « *Gredo* » ez eo unan, santel, katolik hag apostolik an Iliz ? Abalamour, d'ar penn kenta, eretiked a zo en em zistaget diouti evel ma kouez diouz eur wezenn he skourrou maro. An eretiked-se, koulskoude, o doa war o meno, gwir gelennadurez Jezuz-Krist; an dud fidel a c'helle eta beza tromplet; poent e oa diskouez d'ezo dre verkou sklêr penaos ober an disparti etre ar wirionez hag ar gevier, ha penaos anavezout ar gwir Iliz e-touez an ilizou faos. Hogen, awalc'h e oa lenn an aviel ha selaou mcuez Tadou an Iliz evit gwelout na oa falvezet gant Jezuz sevel nemet eun Iliz, bodet en dro d'eur mestr hepken, diazezet war an ebestel kaset gantan dre ar bed holl goude beza fiziet enno an doareou da zantifia ar dud fidel.

Rak-se, ret e oa e vije gwir Iliz Jezuz *unan, santel*, skignet dre ar bed pe *gatomik*, hag *apostolik* pe staget ouz an ebestel hep douetanz ebet. Setu ar pezh o deus laket Tadou an Iliz er « *Gredo* », setu ar pezh a gan an dud fidel... ha pec'herined Lourd.

Lec'h o deus ar re-man, da youc'hal evelse o feiz. Rak gwelet o deus e Lourd epad o fec'herinaj pevar merk ar gwir Iliz !

An *unaniez* da genta... Nag a gemmesk e-touez ar bec'herined-se ! Nag a gemmesk e-touez ar bec'herined-se !!! Lod a zo deuet eus kement korn a zo e Franz, lod all eus ar Spagn, eus Bro Zaoz, eus ar Portugal, eus eur vro bennak eus an Europ, an Azi pe an Amerik. Komz a reont an holl yezeu anavezet dre ar bed. N'o deus ket ar memes mestr nag ar memes gouarnamant : bez' o deus en o fenn, lod eun impalaer, lod all eur presidant, lod all eur roue. N'o deus nag ar memes kiziou nag ar memes stummou, nag ar memes gwiskamanchou. En eur ger, dishenvel int e pep doare... nemet evid ar pezh a zell ouz ar relijion : holl e reont sin ar groaz, holl e kemeront perz er memes lidou, er memes oferenn, er memes kommunion. Holl ez int mibien sentus ar Pab, o zad d'ezo holl, bez' ez int eus ar gwir Iliz, bez' emaint en unaniez.

Bez' ez int ivez *katolik*. Gwelet hon eus ez eo pec'herined Lourd dishenvel an eil diouz egile nemet dre o relijion. Petra 'zo kaoz ez int dishenvel nemet abalamour ma 'z eo katolik an Iliz ? Ma

teu ar bec'herined-se a bep bro, daoust ha n'eo ket abalamour m'en em astenn an Iliz war ar bed holl ? Ma komzont an holl yezou, m'emaint o chom en holl broiou, daoust ha n'eo ket abalamour n'eo bet morse harpet an Iliz kaset gant Jezuz-Krist da c'hounit ar bed na gand ar yezou diaes, na gand ar broiou kalet, na gand netra ? Ma 'z eus e-touez ar bec'herined-se meur a hini nevez gounezet da sklérjenn an Aviel, daoust ha n'eo ket abalamour m'en deus an Iliz, a dreus an amzeriou, kendalc'het heb ehan gand al labour rôet d'ezi d'ober gand ar C'hrist, pa lavare ar chomzouman : « It da brezek d'an holl boblou ha da rei d'ezo ar vadiziant. » Ya, pec'herined Lourd a zo mibien eun Iliz e gwirionez *katolik*.

Santel ez eo ivez an Iliz a gont pec'herined Lourd e-touez he bugale ! Galvet int bet di gant Rouanez an holl zent, c'hoant ganti araok pep tra o gwelout santelaet eno. Rak petra c'houlenn ar Werc'hez ? Eun iliz ha prosesionou. Eun iliz, da lavaret eo, eul lec'h santel hag a deuo ennan an dud fidel d'ober ar pezh a vez graet en ilizou : da glevet sakrifiz santel an oferenn, d'ober ar gommunion zantel, da zelaou komzou santel an Aotrou Doue, evid en em denn santelaet ha tostoc'h d'ar baradoz. Prosesionou, da lavaret eo, lidou sakr, kantikou devot, en eur ger, pedennou hag, ar pezh a zo gwelloc'h, pedennou graet e kevret hag, abalamour daze, kalz talvoudusoc'h, hervez promesa ar Mestr divin : « El lec'h ma vezo daou pa dri bodet em ano, me a vezo en o zouez. »

Ar zin sklaera eus ar zantelez eo ar mirakl. Dre viraklou eo en deus Jezuz-Krist diazezet zantelez divin e Iliz. Pa zav eur c'hristen dreist ar re all dre e zantelez, Doue, evit rei muioc'h a sked d'ar zantelez-se, a ro d'ezan an donezon a viraklou. Ha diwezatoc'h, pa vez c'hoant da lakaat ar c'hristen vertuzus-se war roll ar zent, an Iliz a c'houlenn adarre miraklou evel testeni eus e zantelez.

Hogen, hel lavaret hon eus hag ar bed holl ker goar, Lourd a zo ker-benn ar mirakl. Lourd a zo ivez eta ker ar zantelez.

En diwez, an Iliz a zo *apostolik* hag ar merk-se a lugern e Lourd evel an tri all. An holl eskibien-ze hag a zo eno e penn o fec'herined a zo stag ouz an ebestel. Ar gelennadurez rôet eno a zo kelennadurez an ebestel. An holl bec'herined-se, her gouzout a reont, a zo a-dreuz ar c'hantvejou hag eus an eil rumm dud d'egile, diskibien an ebestel. War blasenn ar Rozera, e traon an deleziou a zav d'an Iliz-Veur, e weler skeudennou an daou abostol sant Per ha sant Paol. Er porched a zo dindan an iliz-se eur skeudenn all a zant Per a resev merkou a resped digand ar bec'herined hag, evel e iliz sant Per e Rom, an troad anezi a zo uzet gand ar pokou. Dounoc'h en iliz, eun aoter a zo gwestlet da zant Per, evel en Iliz-Veur. Pep tra 'e Lourd a zo apostolik hag ar bec'herined a embann eno o feiz, ar feiz anavezet gand ar Werc'hez glorius Vari er bloaveziou diweza eus he buhez : He saludi a reont *unan, santel, katolik hag apostolik*.

SKOUER

Pareanz Rene Klemant, eus Anglet (*Pyrene-Izela*)

Rene Klemant, archer, a oa taget e fas nao vloaz a oa gand ar c'hriagn-beo (cancer). Ar gor, ken bras hag eur vi yar, a oa en

tu dehou etre e fri hag e jod. Ar gor-ze a oa ken bras ma stanke an toull dehou eus e fri, ar pezh a rae d'an daelou redek heb ehan en diavaez. Kroc'henenn e lagad a oa distronset war-du an traon hag e vuzel krignet ivez gand ar c'hlenved, a oa chachet war-du an treac'h. Dremm ar paour-kaez koz a oa eta euzus da welet, e genvroiz a zo test a gement-se.

Er bloavezh 1906 ar gor a oa bet faoutet gand an aotrou Moynak, medisin e Bayonn. Siouaz ! daou vloaz goude-ze, e 1908, ar gor a oa distrôet war e gement-all. E miz Here 1912, medisin Rene Klemant, an aotrou Gentilh, spontet o welet ar c'hriñ-beo o vont atao war gresk, a alias e glanvour da lezel faouta d'ezan adarre e c'hor. Met heman ne falvezas ket gantan, kement a boan m'en doa bet en taol kenta.

Erfin, ar bloavezh warlerc'h, Klemant a yeas adarre da gaout medisin Bayonn. Met heman o welet pegen doun e oa aet an droug, a alias ar c'hlanvour da c'hortoz eun nebeut miziou evit ma c'hellje kemeret eun tammik nerz.

Klemant a gomprenas e oa echu gantan. E familh a oa ken nec'het hag hen. Neuze e ziou verc'h, unan anezo leanez e urz sant Dominik, eben er ger gant he zad, a c'houlennas digand Itron Varia Lourd ar pezh n'helle ket skiant ar vedisined da rei.

Ar c'hlanvour n'en doa ket muiac'h a fizianz en Itron Varia eget er vedisined. Chom a reas eta dizeblant, pa oa laket d'ezan war e c'houlenn eul-liennenn bet soubet e dour Lourd.

Daou zvezz goude, hep her gouzout, hag o kredi e oa peg ar c'hriñ-beo ennan beteg ar maro, Klemant a zav eus e wele evel kustum hag a zisken diouz e gambr. Eün hag eün, e verc'h a oa o tont eus an oferenn seblantout a ra d'ezhi n'eus gor ebet ken dindan al liennenn. Aoun he deus da fazia, Tostaat a ra en eur grenad ouz he zad ha lemmel a ra al liennenn. — « Oh ! tad, n'ho peus mui netra bemezi. Estlammet holl, an tad, en eur grenad d'e dro, a gas e zorn beteg e jod . . . O burzud ! n'eus mui netra ; eo, ar gleizenn chomet warlerc'h ar faout kenta. Ar c'hroc'hen a zo yac'h ha tener. E fri a zo distank. E zaelou ne redont mui. Kroc'henenn e lagad dehou a zo pare. En e vuzel uhela e chom eun takad kalet, evel sinatur ar mirakl ; met a benn antronoz, heman e-unan a zo aet kuit. Hag an tad Klemant a voe ken sabatuet ma chomas daou zvezz hep debri na kousket.

An devez warlerc'h, ar medisin Gentilh a wele e oa pare mat e glanvour hag eun nebeut sizunvezioù goude-ze, an aotrou Moynak, medisin Bayonn, a chome sabatuet d'e dro dirag an hini en doa kondaonet. Erfin, an holl amezeien, kement hini a anaveze Klemant hag o doa gwelet e c'hor, a c'helle embann e bareanz. Abaoe, n'eus chomet merk ebet eus ar c'hlenved war zremm an archer koz.

Eun hevelep paredigez, deuet en eun taol, deuet mat, deuet evit mat, deuet hep louzou, deuet epad ar c'houisk, eun hevelep paredigez ne vez ket kavet en natur. Na dindan daouarn ar vedisined. Feiz bero diou verc'h devot Rene Klemant en hor Zalver Jezuz-Krist hag o fedennou birvidik da Itron Varia Lourd a oa ret evit kaout eur bareanz hag a c'heller da lavaret dreist-natur.

Buhez burzuduz eun douger-sammou MAZE TALBOT

RA VEZO LENNET E PEP FAMILH HAG E PEP TI
EUN DRA VAT E VETE RET AL LEVRIG-SE DA YUGATE AR SKOLIOU,
DA YUGATE AR C'HATEKIZ, D'AR BARRIZIONIZ GOUDE EUR RETRET PE
EUR MISION BENNAG.

Evit n'en do den ebet digarez da chom heb e lenn, m'a zo eurus
da rei pep levrig evit **dek gwenneg** hepken, ar mizou-kas ousspenn

1 levrig	dre ar Post	0 fr. 70
40 —	—	5 fr. 75
25 —	—	14 fr.
50 —	—	28 fr.

Skriva d'an Tad THEODOR ROUSSEL
28, Avenue de la Marne, LORIENT

Cheques Postaux de Nantes, — C.c. 46.28.

EUR C'HANTIK KAER NEVEZ !

An Eured Kristen

Meur a wech hon eus klevet Klemant, abalamour ne veze kavet
kantik ebet da gana, war Zakramant ar Briedelez, da genver an
eurejou. Setu perak hon eus graet moula ar c'hantik kaer a zo bei
gwelet dija war *Kentelhou Sant Fransez*, miz Eost.

Ne vezo ket dies lakaat tud an eured da gemer ar c'hantik-se.
Goulennit eta kantik *An Eured Kristen*.
P. Théodore Roussel, 28, Avenue de la Marne, Lorient.
Priz : 22 real ar c'hañf, dre ar Post.

Levriou nevez e galleg

- P. TEOUI, libraire-éditeur, 82, rue Bonaparte, Paris-VI
- LANIER (Chan. H.), docteur en droit canonique, vice-official de Paris — **Guide pratique de la Procédure matrimoniale en Droit canonique.** — Prix : 8 fr. ; franco 8 fr. 75.
- Henri MAZEAU — **L'heroine du Pé-Tang : Helene de Jaurias, Sœur de Charité.** — 1 vol. in-12 de 307 p., 40 fr. franco 44 fr.
- HERBINIERE (R.P.) — **Un Apôtre de quinze ans, Charles Henri de La Bouillerie, élève au Séminaire Français de Rome.** — In-12, 3 fr. 50 ; franco 3 fr. 75.
- GASTON PLASTRE (J.-E.) — **L'Eternel Féminin.** — 1 vol. 160 pages — Prix : 6 fr. ; franco 6 fr. 50.

MEURZ

- 1 Yaou Ofis an deiz.
 2 Gwener ... *Pevare amzer (daouzek deziou).* — Plac'h-eürus Agnez a Brag, gwerc'hez eus an eil Urz.
 3 Sadorn ... *Pevare amzer (daouzek deziou).* — Ofis an deiz.

- 4 Sul *Eüvet sul ar C'horaiñ.*
 5 Lun **SANT YANN-JOZEB EUS AR GROAZ**, kovez, eus ar genta Urz. — **I.P.**
 6 Meurz **SANTEZ KOLETA**, gwerc'hez eus an eil Urz. — **I.P.**
 7 Merc'her ... Sant Tomaz a Akin, doktor.
 8 Yaou **SANT YANN A ZOUE**, kovez eus an Drede-Urz.
 9 Gwener **SANTEZ KATEL A VOLOGN**, gwerc'hez eus an eil Urz. — **I.P.**
 10 Sadorn ... An daou-ugent merzer eus Sebast.

- 11 Sul *Trede sul ar C'horaiñ.* — **DEN-EÜRUS KRISTOL**, kovez. eus ar genta Urz.
 12 Lun Sant Gregoir I, pab ha doktor.
 13 Meurz **DEN-EÜRUS AGNELLO**, kovez. eus ar genta Urz.
 14 Merc'her ... Ofis an deiz.
 15 Yaou Ofis an deiz.
 16 Gwener ... Ofis an deiz.
 17 Sadorn ... Sant Patrig, eskob.

- 18 Sul *Pevare sul ar C'horaiñ.*
 19 Lun **SANT JOZEF, PRIED AR WERC'KEZ GLORIUS VARI.** — **A.J.** — **I.P.**
 20 Meurz **Tud-eürus Yann a Barm ha Mark**, kovez. eus ar genta Urz.
 Den-eürus Hippolyt, kovez. eus an Drede-Urz.
 21 Merc'her ... Sant Beneat, abad.
 22 Yaou **SANT BENVENU**, eskob eus ar genta Urz. — **I.P.**
 23 Gwener ... Ofis an deiz.
 24 Sadorn ... Sant Gabriel, arc'hael.

- 25 Sul Sul ar Basion.
 Den-eürus Jeremi, kovez. eus an Drede-Urz.
 26 Lun **GOUEL MARIA-VEURZ.** — **A.J.** — **I.P.**
 Den-eürus Didaz-Joieb a Gadix, kapusin. — **I.P.**
 27 Meurz Sant Yann Damaskan, doktor.
 28 Merc'her ... **SANT YANN KAPISTRAN**, kov. eus ar genta Urz. — **I.P.**
 29 Yaou **PLAC'H-EÜRUS JANED-MARI A VAILHE**, intañvez eus an Drede-Urz.
 30 Gwener ... **SANT PER REGALAT**, kovez. eus ar genta Urz. — **I.P.**
 31 Sadorn ... Ofis an deiz.


— 0 —

KENTELIOU SANT FRANSEZ

Eil bloaz

Meurz 1928

Niverenn 15



C'houec'hvet devez
a viz Meurz.

Santez Koletta a Gorbi eus Urz Santez Klara (1381 + 1447)

Azeulomp Doue ha selaouomp Jezus o laret d'E zisbibien : « Ho tibabet am eus evit ma kerzfet eün, evit ma toug-fet frouez, hag evit ma vo peurbadus frouez-se. »

Doue en deus dibabet santez Koletta evid adnevezaat hag adbevaat Urz sant Fransez. He labour a zoug frouez c'hoaz goude meur a gantved. Galvet e oa gant Doue ha gouzout a reas seveni ar gefridi fiziet epni. Chom a reas da gentan heb ober hervez c'hoant Doue; met dont a reas hepdale da anavezout an hent ma tlee pleustri evit pourchas gwel-lan mad hec'h ene. Stagan a reas gant nerz-kalon da rei da Urz sant Fransez eul lufr nevez.

I. — Skouarn vouzar.

Robert Moilet, kalvez eus e vicher, hag e bried, Marc'harid Mignon, a veve evel kristenien vat e Korbi, kêrig vihan eus ar Pikardi. Aet e oant pell war an oad, ha n'o doa bugel ebet. Pedi a raent heb ehan ha goulenn digant Doue rei d'ezê eur bugel. Daoust d'ezî da gaout tri-ugent vloaz, Marc'harid a iakaas er bed, d'an 13 a viz Genver eür verc'hig vihan, Koletta. Da driouec'h vloaz, Koletta, kollet ganti he zad hag he mamm, a werzas raktal kement a deue d'ezî diouz he zud, nemet eur c'hru-sifi a viras hag a voe he zenzor.

Aet en eil Urz sant Fransez, bet renet gant santez Klara, Koletta a glevas digant Doue e tle pevezaat Urz sant Fransez. Ne gave ket d'ezî hezan evid ober eur seurt labour. Doue a zalc'h da gomz hag evit lakaat al leanez da zenti, he laka da vezan mut, ha goude dall epad tri devez.

Alies a wech hon eus klevet ni ivez mouez Doue ouz hon atizan da gerzout pelloc'h er zantelez. Ha selaouet em eus gant doujans ha sentidigez ? Ha pare oun bet da labourat dioustru gant nerz ? Allas, skouarn vouzar am eus graet meur a wech ha n'em eus ket kerzet divrall. Kavout a raen em leziregez meur a zigarez. Arabat gortoz ken ma teüio Doue d'am lakaat dall ha mut evel Koletta. Komzit, Aotrou; ho pugel a zelaou, digor e galon ha gredus.

II. — O senti ouz Doue.

Meizan ha kompren a reas Koletta e oa bet dibabet gant Doue dre ma oa dister, evit ma vefe lâret na oa nemet Doue o kas al labour waraok. Gouzout a rae ivez e vefe skoazellet gant Doue mar he defe disfizians anezi hec'h unan. Mont a reas eta d'ar penn all ar Frans da gaout ar Pab, da zegemer e vennoz. Ha labourat dioustu.

Pa vez ennomp eur c'hoant start, ne vez skoilh ebet kap d'hon diarbenn. Na skuiznez na yenion na tommder na sec'hed na naon.

III. — Adstumman ha nevezaat

Gand aotre an Tad Santel ar Pab, ha war ali tud santel, Koletta a adstummas hag a savas meur a gouent. Oc'h ergerzout dre ar bed, e tastumm endro d'ezi eneo hag o deus c'hoant da wellaat stad an Iliz rannet er mare-ze gand an drailhadeg.

Evit Doue hepken e labour, ha hervez c'hoant ar Mestr. Gwallgaset e voe koulskoude. Dismegans ha goaperez he devoe eleis. Lavaret e voe na oa na reiz nag eun he labour. Met Koletta, e kement a rae, ne glaske nemet gloar Doue, hag abalamour da ze, netra n'helle mirout outi da vont endro, ha Doue ivez a ziskoueze, beb an amzer, e oa a-du ganti. Ar glanvourien a gav ar pare, tud varo a zasore'h ha meur a bec'her a zistro ouz Doue.

Doue a ziskouez d'imp galloud an ene a oar en em ankounaat. Kas en deus an drouk-spered ouz neb a zo izel a galon. Ha ne baoueze tamm da heskinan Koletta. Gweledigeziou niverus evit he strafuilhan en he fedennou; loened lous, naered hag amprevaned punet endro d'ezi. An diaoul o lazant ar goulou hep taol ma veze enaouet ganti; o tibradan he c'hador evit he lakaat da gouezan. Kreski a ra kounnar an Ifern bep mac'h eo adstummet ha nevezet Urz sant-Fransez.

Hep fallgaloni nepred Koletta a drec'h an enebour dre yun ha pedi. Eun tammig bara bemdeiz a zo awalc'h eviti evel bevans. Aliet gant Hon Salver ha gant sant Fransze, e tremen lies koareiz hep ken bevans nemet Sakramant an Aoter. He c'hoavezour a ra d'ezi lemel he gouriz c'houarn a oa warnez toullan he c'hrôc'henn.

Eur c'houez d'udius a nij diouz he c'horf hag a bare ar glanvourien; an dour m'he deus gwalc'het gantan he daouarn en deus an hevelep galloud. An evned a dostae outi heb aon.

Chom a rae lajadou-mat o pedi. D'ar gwener e prederie beteg epad unnek eur war gouzanvidigez Hon Salver. Kalz a boan he devoe, enkrez c'houero a c'houzanvas o spurmantan drailhadeg an Iliz. Dre he fedennou gredus e labouras d'hen skuban.

An ebestel en em ziskouezas d'ezi eun devez hag he c'hasas d'an nenv 'vit eur predig amzer. Sant Yann a rôas d'ezi e koun eun tammig eus ar groaz wirion en eur sternig aour.

Goude 40 vloaz a labour start e kouezas klanv e Gand, e miz C'houevrer 1447 hag eno e varvas, d'ar 6 a viz meurz warlerc'h. Eno ivez e voe sebetiet. War he bez eo bet skrivet ar gomz-man :

« Mignonez tener an Aotrou Doue, rozern digor, steredenn lugernus, dalc'h sonj ac'hanomp en eur ar maro. »

Goude he maro, en em ziskouezas e meur a leandi gwisket a glod hag a c'hloar.

Na disterat eur vuhez ma hini-me lakaet e skeud buhez santez Koletta !

« Sed an dud diouizieq o c'hounid ar baradoz, eme sant Augustin, tra m'eman an dud desket islonket en o gouiziegez. »

Ar ouiziegez n'eo netra d'in me, nemet en em anavezout a rafen hag Hoc'h anavezout, ma Doue !

Pedenn. — Salver Jezus, c'houi hag hoc'h eus rôet da Goletta donêzonou burzudus, teurvezit ivez rei d'imp ma vo adstummet ha nevezet hon spered hervez spered sant Fransez.

Menez. — Heuilh a rin skouer santez Koletta o vevan em renk evel m'eo dleet, o senti hep damant.

Boked. — Hirie n' em eus diwasket poan ebet, kollet em eus ma amzer. E.R.



Sonjit ervat

Pempet malloz Hor Salver.

I.— Sonjit ervat : Hor Salver en deus taolet e valloz war gerioù Korozaïm, Betzaïd ha Kafarnaüm, abalamour n'oant ket dirzôet ouz Doue, goude beza klevet ar presegennou ha gwelet ar miraklou graet dirazo. Fae o doa graet war grasou an Aotrou Doue, talvoudusa tra a zo koulskoude er bed. N'eo ket eta hep gwir en deus Hor Salver o milliget.

Ha c'houi n'oc'h eus ket aon e kouesfe ivez warnoc'h malloz an Aotrou Doue ? Daoust ha ken alies ha bemdez ne rit ket a fae war grasou a ginnig Doue d'eoc'h ? Klevet a rit e vouez en ho kalon; dirak ho taoulagad, kant tra a zigas d'eoc'h da sonj anezan, hag alies ne rit van. Sellit mat en ho koustians, hag e weloc'h ha n'eo ket gwir.

II.— Sonjit ervat : perak eo en deus Doue taolet e valloz war an teir gêr fall-se ? Abalamour n'o deus graet van ebet eus ar grasou kinniget d'ezo, grasou ha ma vijent bet rôet da galz tud zo, a vije bet krenv a-walc'h evit o hentcha betek ar baradoz. Gwelit ha didamall ez oc'h-hu war an tu-se ?

Daoust hag an drederenn hepken eus ar grasou a zo bet kinniget d'eoc'h, n'o divije ket dirzôet ouz Doue meur a barreziad tud ?

Hag ho kalon kaledet er pec'hed he deus lezet da vont da goll an holl grasou-se ! Daoust ha n'eo ket gwir ?

III.— Sonjit ervat e gourdrouzou souezus Hor Salver : gwasoc'h a vezo graet d'an teir gêr digalon-se eget n'eo bet graet da dud Sodom ha Gomorrh. Perak ? gwelloc'h kelennet int bet, brasoc'h eo eta o fec'hed.

C'houi ivez ho peus bet digant Doue sklerijenn ha grasou, lakit-i da dalvezout, pe diwallit eus eur varnedigez pounner. Diwallit na deufe grasou rôet d'eoc'h evit kreski ho santelez d'ho lakaat da goueza dounoc'h en ifern !



Buhez Sant Fransez a Asiz

KENTEL 9. — An Tad e Rom gand e eskob hag ar c'hardinal Yann a Sant Paol. — N'eo ket selaouet da genta.

Dre ma tostae ouz Rom, e oa nec'het ar Zant, rak ne ouie ket ouz piou en em erbedi evit kaout asant an Tad Santel ar pab. Met Doue a oa gantan; kenta den a welas e kêr e voe aotrou eskob Asiz, an Aotrou Guido, hag a oa bet atao mat evitan.

Nec'het e voe an eskob, pa welas Fransez hag e vreudeur; aon en devoe na vijent er zonz da glask eur vro all evit diazeza o urz, met, pa glevas ar Zant o tisleuga e vennad, e lavaras d'ezan : « Ho sikour a rin hervez va galloud; bez' em eus aman eur mignon mat, ar c'hardinal Yann a Sant Paol. » Mont a reas e gwirionez da gaout ar c'hardinal-ze evit diskleria d'ezan e oa deut Fransez a Asiz da Rom gand e ziskibien da c'houlenn asant ar pab evid an urz nevez en doa c'hoant da zével.

Ar c'hardinal a lavaras da Fransez : « N'heller ket mirout ar baourentez en eun doare ker striz ha m'hoc'h eus c'hoant, diouz m'en deus diskleriet d'in hoc'h aotrou eskob. Eun dervez bennak e varvo ho preudeur ha c'houi gand an naon. Bez 'ez eus dija meur a urz menec'h; perak ne gemerit-hu ket reolenn unan pe unan anezo ? — Nann, eme Fransez, sklerijenn Doue a lavar d'in mirout ar baourentez penn-da-benn. »

Ha kaer en doe ar c'hardinal poania, ar Zant a zalc'has mat, hag a zeuas epad meur a zervez dirazan da ziskleria ar c'hoant

en doa. Eur wech, e c'hellas tostaat ouz an Tad Santel ar pab, e lez Latran. Pa welas Fransez hag e unnek diskibl — Jilvestr, dre ma oa beleg ha karget eus eul labour, n'oa ket deut gand ar re all — p'o gwelas eta o tont dirazan hep beza renet na gand eur c'hardinal, na gand eun eskob, ar pab Innosant III en doe aon da veza touellet gand eur gaouiad bennak, hag a reas buan awalc'h d'an dud-se mont war o c'hiz.

Ar Zant a yeas gand e ziskibien da lavarout e boan hag e c'hlac'har da Zoue en eun iliz, hag a gomzas e-unan kaer da c'houde gand ar c'hardinal a Sant Paol. O veva ma talc'he start atao d'e vennad, ar c'hardinal a lavaras d'ezan en taol-man : « Me ho sikouro, hag ho tifenno hervez va galloud. »

Ar c'homzou-ze a reas ar brasa mad d'ar Zant ha d'e vreudeur, rak aon o doa da chom heb aotré goude an digemer kenta en doa graet d'ezo Innosant III.

KENTEL 10. — Leveou an ilizou hag o c'hargou en amzer ar Sant. — Ar fals-doktored : Valdoiz hag Albijiz.


En amzer-se e oa ar galloud etre daouarn eun nebeudig tud, savet uhel dre o renk. Ar roue a c'houarne e hobl; met sikouret e oa gant an duchentil vras, duked ha komted, hag o doa da welout pep-hini anezo war eur rann-dud eus ar vro.

An ilizou o doa kalz a leve, rak bez' e oa mat an dud disher da destamanti d'ar beorien ha d'ar sent eun nebeud eus o danvez. An dud a Iliz eta a oa aes a-walc'h d'ezo beva. Evelato, daoust m'o doa danvez etre o daouarn, an eskibien hag ar veleien a chome distag o c'halon diouz madou ar bed; int eo a save ospitaliou evit an dud ezommek, evit ar re goz, a zigore skoliou evit netra da vugale ar re baour, a c'houarne leveou an Iliz evit brasa mad an holl gristenien. Kaer o do kouskoude ober vad, hiniennou a glemme.

Re drôet e oa an dud pinvidik gant aezamanchou ar vuhez; kalz ne felle ket d'ezo ober pinijenn, ha ne sellent ket a-walc'h ouz ar beorien.

Abalamour m'eo ket Hor Salver paour en e vuhez penn-da-benn, o deus meur a hini e-touez ar gristenien, hag e pep amzer, karet ar baourentez, hag a-raog amzer Fransez a Asiz, e oa bet klevet tud o prézek ar binijenn hag ar baourentez d'ar bed. Hogen, kalz eus ar renerien-se, war zigarez beza paour, a oa c'houezet gant ar ourgouilh : c'hoant o doa da veza enoret dreist ar re all. E-lec'h henchha o diskibien war-du ar baradoz dre veza izel a galon, o renet war hent an ifern. Striz e veze an urz ganto war eun nebeudig traou, met a-hend-all e rôent kabestr d'o diskibien da heulia o youlou fall dre guz. Setu ma rae an dud-se kalz muioc'h a zroug eget a vad d'an Iliz ha d'ar gristenien wirion.

Ar re vrudeta eus ar fals peorien-se, anvet Valdoiz, o doa touellet kalz tud. War o lerc'h e teuas eur rumm all, anved Albijiz, hag a reas ivez droug bras. Setu perak, pa zeuas Fransez gand e ziskibien, e voe nec'het ar pab hag e guzulieren : « Hag izel a galon eo e gwirionez, pe ourgouilhus ? » emezo.



ILIZ-VEUR SANT-PER A ROM

Bleuniou Sant Fransez

XIII^{et} Pennad (*Kandalch*)

'N em gavet evel-se, e-kichen eun iliz
Fransez, da Vreur Maze, a lavaras kentis :

« Alo ! deomp ! ma breur Maze,

« Eur pennad, da bedi Doue.

A-dreg an aoter-vas, daoulinet e-unan,
Fransez en em laka, raktal, da brederjan.

Ma teuas an Aotrou Doue

Eur pennadig amzer goude,

Da lakât kement d'e vignon,

Da virvi, 'n e greiz, e galon

'Vid ar vertuz a baourentez.

Ma tiskoueze bezan, gand e dal o skedi,

Diwar e vuzellou, 'vel an tan anezi,

O strinkan a bep tu, henvel ouz al luc'hed,

Da noz, e kreiz an hanv, an amzer peure'horet.

Hag e teuas Fransez, entanet evel-se,

Da gichen e genvreur, gand e bedenn ive :

« Ha ! Ha ! Ha ! Breur Maze !

« 'Nem ro a-grenn d'in-me !

« Ha ! Ha ! Ha ! Breur Maze,

« 'N em ro a-grenn d'in-me ! »

Fransez ker buan all, a c'houezas warnezan,

En eun doare ker krenv, ma tibradas heman,

'Vit monet da gouezan, pemp, chouec'h troatad pelloc'h.

Ne oa ket bet, Maze, biskoaz, nann, nec'hoc'h.

Eun dro bennak goude, lavaras koulskoude,

En e estlamm marzus, e teuas en de-se,

Doue ar Spered-Glan, eus palez an Nenvou,

Da skuilhan wanezou kement all a c'hrasou,

Grasou a levenez, hag a dudi dispar,

'Vel ne vez ket kavet, bemdez war an douar ;

Grasou d'hen frealzi, ma ne oa bet biskoaz,

Nann, muioc'h evurus, hervez ma lavaras.

« Deomp breman, 'me Fransez da St Per ha St Paol,
« Da bedi, ha da welout bez an daou abostol,
« Ma rofont d'eomp ar c'hras, da c'hallout kompren mat,
« Ha n'allfemp ket, Breur Maze, gounit kaeroc'h mennad,
« Pebez tenzor prizius ez eo ar baourente,
« Eun tenzor ken burzudus, a den a-berz Doue,
« Ma ne delles ket bezan laket e kalonou
« Ken mastaret hag hon re, gant ker bras pec'hejou ;
« Eun vertuz euz an Nenvou, a dle ganti an-den,
« Disprizout treou ar bed-man, na reont nemet tremen.
« O machan dindan e dreid, ma c'hallo e ine,
« Dishuel ha digabestr, en em rei da Zoue ;
« Eur vertuz 'ra d'an ine, zoken war an douar,
« Traounienn leun a hirvoudou, traounienn leun a c'hlac'har,
« Nijal a-denn askell da Varadoz Doue
« Evit kanan e c'hloar gand ar sent, an aele ;
« Eur vertuz, hi, dalc'hmat, war seuliou Hon Salver
« Dre-holl hag a pep lec'h er-maez evel e kêr,
« Adalek Bethléem, betek war ar C'halvar ;
« Gantan voe sebeliet, ha lakêt e douar ;
« Gantan advevas, ha pa bignas d'an Nenv,
« War e lerc'h ez eas, ne chomas ket a-drenv.
« Ya, ganti eur wech c'hoaz, adaleg ar bed-man,
« C'haller, a-denn askell, mont d'an Nenv da vevan.

« En he c'hichen, e gwirionez

« E kave hepken an danvez,

« A zav diwarnan en ine,

« An Izelded, ar Garante.

« Pedomp eta Sant Per, Sant Paol,

« Pedomp start an daou abostol

« O deus karet, a-greiz kalon.

« Gant karantez ar gwir vignon,

« Ar berlezenn gaer ha santel

« Ken lintrus all en Aviel.

« Pedomp 'ta, gant karantez, daou abostol Jezuz,

« Mignoned ar baourentez, hag e Nenv evurus,

« Ma plijo gant Hon Aotrou, an Tad leun a druez

« Lakât en hon c'halonou noz-ha-de ha bemdez,

« Ar baourentez da vleunian, ha da zougen freuz kaer,

« 'Vel ma touge e kalon Jezuz-Krist Hon Salver. »

Hag evel-se, dre forz bale,

Sant Fransez hag e vreur Maze

A erruas, o-daou laouen,

E Rom, kêr-benn ar gristenien.

Hag int lavarout o fater

War-eeun, en Iliz-Veur Sant Per.

En eun tu, Sant Fransez, hag en tu-all Maze,

Epad ma oa ar Sant o pedi evel-se,

Beuzet e zaoulagad en eur mor a zaerou,

Entanet e galon gant gred (1) e vertuziou,

(1) Gred : chaleur, ardeur, ferveur.

Sed an daou abostol, Sant Per gantan Sant Paol
 En em diskouez d'ezan, war-eun-dro, a-greiz-holl.
 O zal a lugerne, 'vel e bolz an nenvou,
 Pa vez skeltr an amzer, da noz, ar sterennou.
 « Hag hoc'h eus c'hoant, emeze, mirout ar baourente
 « Evel Jezuz Hon Aotrou, an ebestel ive,
 « Ac'hanta, eus an Nenvou, e tiskennomp breman,
 « Degaset a-berz Doue, beteg an iliz-man,
 « Vit degemenn d'eoc'h, Fransez, ez eo bet selaouet,
 « Ho pedenn ker birvidik, e palez an Drinded.
 « Jezuz Hon Mestr, Hon Salver, ouzoc'h 'n deus bet truez,
 « Hag a ro gant plijadur, tenzor ar baourentez,
 D'eoc'h, da gentan, Sant Fransez, d'ar re 'lezo ar bed,
 « 'Vit heuilhan ar reolenn 'zo bet ganeoc'h savet,
 « 'Nep he miro eveldoc'h, eur vertuz ker kristen
 « Er Baradoz, evurus, a vezo, da viken.
 « Ha breman, bennoz Doue da zont d'ho frealzi,
 « C'houi, hag ho c'holl diskibien. Bezit laouen ganti.

Hag a-vec'h d'o c'hrefridi bezan peurechuet,
 An ebestel o tec'hout evel ma oant deuet.
 Ha frealzet e galon, Sant Fransez a savas,
 Ha da gaout e vreur Maze kerkent neuze 'yeas,
 Evit goulenn digantan, hag hen 'oa bet, ive,
 E spered sklêrijennet gand an Aotrou Doue.
 « Na deus ket bet kement-se, nann, nann, a sklêrijenn,
 « Ma ine paour a bec'her, pa oa gant he fedenn. » —
 Hag e tisklêrias Fransez da Vaze herr-ha-herr
 Petra a voe tremenet, pa oa gand e bater :
 Gweladenn an daou abostol,
 Gweladenn Sant Per ha Sant Paol ;
 Ar pezh o devoa disklêriet
 Evitan hag e genseurted.
 Ha Fransez ha Maze
 Ken dudiet gant se.
 A, lakas en o fenn
 War o c'hiz dont a-grenn
 Da draounienn Spoleta,
 Eun tamm da ziskuiza.
 Graet o devoa o sonj da vonet da Vro-C'hall
 Ha sklêrijenn Doue o c'hase elec'h all.



« NETRA NE C'HELL OBER D'IN MUIOC'H A BLIJADUR EGET LABOURAT
 DA GRESKI NIVER BREZELLERIEH SAKR AN DREDE URZ. »

(Leon XIII, Prezegenn, 28 Here 1882).



Oc'h heulia Reolenn an Drede-Urz, e teuer da veza gwir gristen

(LÉON XIII)

Ar c'homzou-se a zo tennet eus lizer H.T.S. ar Pab Leon XIII diwar-benn Trede-Urz sant Fransez. Rak-se n'eus ket da lavaret nann : piou bennak en em lak en Drede-Urz hag a heuilh mat ar Reolenn, a zeu da veza gwir gristen, ha, ma kendalc'h atao, e teu da veza eur sant.

Ar Reolenn-se, kouskoude, ne c'houlenn ket kalz a dra en tu all d'ar pezh a zo gourc'hemennet gant lezenn Doue hag an Iliz, hag a dle pep kristen da ober, hep beza en Drede-Urz nag e breuriez ebet : yun diou wech ar bloaz, lavarout ar pedennou merket, en em voda gant ar breudeur pe ar c'hoarezed all, eur wech ar miz, netra ken. Penaos e c'hell eta beza gwir komzou Leon XIII : « *Dre an Drede-Urz e teuer da veza gwir gristen !* »

Aes e vezo d'eoc'h kompren kement-se, mar sellit penaos e labour Doue dre ar bed. Sant Paol a skrive da gristenien Korint : « *Doue a zibab an dud dic'halloud, emezan, evit trec'hi an dud galloudus; an dud dinerz, evit diskar an dud nerzus; ar pezh a zo didalvez ha disprizus hervez ar bed, evit kas da netra ar pezh a zo kaer ha talvoudus. Ober a ra kement-se, evit na zevno den ebet d'en em veulsi.* »

Eur micherour hag a oar reiz e vicher, a c'hell ober traou kaer gant benviou dister ha danvez divalo. Met petra eo ar micherour gouizieka dirak an Aotrou Doue ? Sonjit en deus Doue *krouet*, da lavaret eo graet a netra, ar bed. Sonjit en deus *diaxezet* e relijion, ar wir relijion, war draou hag a seblant follentez da dud ar bed. Sellit : an hini en deus he frezeget da genta, e Vab Jezuz-Krist, a zo bet tachet da vervel war eur groaz, hag an daouzek den galvet gantan d'he hada dre ar bed, ne oant nemet pesketourien kalz anezo, da lavaret eo tud paour, hep galloud na gouiziegezh. Daoust ha n'eo ket ivez dre venvioù dister, dre dud izel o deus an Itron-Varia, e Lourd, hag he Mamm, e Santez-Anna-Wened, graet traou bras ha burzudus ?

Trede-Urz sant Fransez, savet a-berz Doue evit santelaat tud ar bed, a zoug ar memes merkou : dister ha dinerz eo da welout, hag he deus, e gwirionezh, eun nerz dispar evit rei santelezh d'an eneoù.

Perak beza souezet gant an dra-se ? Selaouit Hor Salver o lavaret eo « *henvel rouantelezh an nenv ouz eun tamm gouell lakaet gant eur vaouez e tri muzuliad bleud, ma teuint holl da c'hovi.* » Eun tamm gouell a zo nebeudik a dra, hag evelato en deus nerz a-walc'h da lakaat kalz a vleud da vont e go ha da sevel e berr-amzer. Evel-se eo kresket « *rouantelezh an nenv* », da lavaret eo relijion pe Iliz Jezuz-Krist war an douar a-bez, gant nebeut a dra Trede-Urz sant Fransez a c'hell ober kemend-all en eun ene a

volontez vat. Lakit en e greiz, en e vuhez, evel eun tamm gouell ebarz an toaz, hag e c'houezo, hag e savo hep-dale betek ar santelez.

Marteze oc'h aet en Drede-Urz, hep sonjal kalz er pezh emoun o lavaret. Dija a-raok e oac'h trôet d'an devosion : eur blijadur e oa evidoc'h mont d'an iliz da bedi, da glevout an oferenn, da adori ar Sakramant meulet ra vezo; kristen e oa ho puhez ha ne gouezec'h ket e pec'hejou bras. Eur mignon, pe eur vignonez, pe ho tad kovesour, pe gras Doue hepken o doa ho kaset betek an Drede-Urz, ha kemeret ho poa gwiskamant ar Binijenn gant ar sonj da veva eun tammig santeloc'h eget a-raok, netra ken !



Sant Fransez a ro reolenn an eil Urz ha hini an Drede-Urz.

Ha c'houi a lavaro : « N'em eus santet tamm ebet va c'halon o tomm gant eur garantez birvidikoc'h e-kenvêr an Aotrou Doue, goude m'oun deus da veza bugel da sant Fransez; an Drede-Urz n'eo ket bet evidoun an tamm gouell a gomzec'h anezan bremaik. Evit ma tigouezo kement-se ganin, petra 'm eus eta da ober ? »

Petra ? — Lakaat eur volontez krenvoc'h da veva hervez lezenn ha spered ar Vreuriezh, Ma rit an dra-se kalonek hag hep paouez,

e teuoc'h buan da veza eun den nevez; gwelloc'h e komprenoc'h traou an Nenv, hag e santoc'h ho kalon o virvi gant eur garantez vrasoc'h evit Doue hag evit ho nesa, abalamour da Zoue, hag e klaskoc'h renta gloar da Zoue dre santelaat ho puhez, dre ober vad d'ho nesa en e ene hag en e gorf; en em staga a reoc'h muioc'h-mui ouz an Drede-Urz hag e tiskouezoc'h muioc'h a garantez d'ar vreudeur ha d'ar c'hoarezed a zo evelloc'h bugale sant Fransez.

Ma na vevit ket hervez ar c'homzou-se, daoust ha n'eus ket unan bennak en ho kichen hag a reiz e vuhez warno ? N'ho peus ket gwelet darn e-touez ho Preudeur pe ho C'hoarezed o sevel buan hag uhel e skeul ar santelez ? Perak ? Abalamour ma vevont rik-ha-rik hervez o Reolenn.

Evel-se e savas uhel-uhel e skeul ar santelez, en amzer genta an Drede-Urz, sant Loiz, Roue ar Frans, santez Elizabet a Hongri ha kant all a bep stad hag a bep oad. Hogen, ar memes Reolenn a c'hell ober hag a ra c'hoaz hirio ar pezh he deus graet gwechall, ma vefe heuliet piz : lakaat tud dibarfet da veza sent. A dra-sur, n'int ket anavezet evel sent gant an dud; met an dra-se ne ra netra. Anavezet int gant Doue. Oc'h heulia penn-da-benn o Reolenn, int gwir sent war an douar, da c'hortoz ma lugerno o santelez er baradoz.

Ha n'eus ket lec'h da veza souezet gant kement-se. Dre ar pezh a zifenn, (ha ne zifenn nemet ar pezh a zo difennet dija gant lezenn an Aziel), Reolenn Trede-Urz S. Fransez a laka egiz eur c'harz spenn en-dro d'an ene evit e ziwall diouz ardou an diaoul ha follentez ar bed. Diwallt evel-se diouz an droug, ez eo aesoc'h d'an Tredurziad (tertiaire) ober ar vad, en em rei d'an oberou a zevosion hag a garantez, kennezet ma'z eo a-hend-all, neket hepken gant an aliou fur hag ar skouerieu mat a glev hag a wel en-dro d'ezan, met ouspenn gant ar grasou dispar a fell da Zoue rei hag a ro e gwirionez da vugale S. Fransez.

Setu penaos e teu da veza gwir, evit an Tredurziad hag an Dre-durziadez, komzou Leon XIII : « **Beza Tredurziad a zo beza gwir gristen.** »

Aluzenou da Genteliou Sant Fransez

26 l. : Enez Sun. — 16 l. Gouezeg. — 11 l. 50 Kraon. — 10 l. : Plougonver. — 8 l. : Gwiskriff. — 6 l. : Kraon. — 4 l. : Kemper. — Pederneg. — Kraon. — Gwiskriff. — Landudal. — Sant-Brieg. — Ponnabad. — Leskouil. — Plovan. — Pouldreuzig. — Sant-Paul-a-Leon.

3 l. : Lokunole. — Bodilis.

2 l. : Plouezeg.

Trugarez a-greiz kalon d'hor madoberourien; trugarez d'al lennerien o deus digaset d'eomp dija priz koumanant ar bloavezh 1928, ha d'ar re o deus kavet d'eomp lennerien nevez.

Bez 'ez eus hiniennou hag o deus ankounac'haet da baea evit 1928. Fizians hon eus na zaleint ket d'hen ober.



Eun emgann etre Doue hag an diaoul

Eun emgann etre Doue hag an diaoul, setu aze ar pezh eo bet mision vras Leskonil. — Leskonil a zo eur porz bihan pesketerez eus kanton Ponnabad hag a zo nevez savet ennan eur barrez gant ar bobl tud bodet en-dro da chapel Itron-Varia-ar-Mor, distaget breman z'eus war-dro tri bloaz diouz parrez Plobannalek.

An darn vrasa eus ar 1400 den a zo eno, abaoe pemp bloaz war-nugent o doa, siouaz ! ankounac'haet hent an Iliz ha dilezet a-grenn an Aotrou Doue. Touellet ouspenn gant kenteliou dispac'hus ar Brotestanted, ar Sosialisted hag ar C'hommunisted, Leskonil'z a oa goret o c'halonou gant eur gasoni birvidik ouz ar relijion hag ar veleien.

Setu aze ar c'hrenvlec'h (forteresse) eo bet karget da ziskar an Tad Barnabe hag an Tad Ivon, kapusined eus kouent an Oriant.

N'eo ket aet an traou o-unan. Mevelien an diaoul, ar blienieren protestanted, sosialisted ha kommunisted a oa war sav, o lakaat pennadou en dud, gant aliou, kelc'hiziri (tracts), skridou leun a c'hevier hag a damallou, o klask harpa outo, dre spont, da vont d'an iliz.

Dirak kement-se, petra o doa an Tadou d'ober ? E gwirionez, n'eo ket chom evel chast mut da sellout ouz ar bleizi o kroga en denved, met ar pezh o doa graet gwechall Jezuz-Krist ha sant Fransez, skoueriou ar visionerien : mont betek ar bobl d'hen tenna diouz skilfou ar fals-brofeted, bleizi kuzet dindan kroc'hen-denved. Aet int eta war ar c'hae, dispont, da stourm ouz ebestel an diaoul ha d'ober d'ezo an tec'h gant komzou flemmus ha strakus. Ebestel an diaoul o deus diskouezet o dent hag o zeod lous, met hep dale o deus kemeret an tec'h, en eur vlejal evel chast fustet hag entanet o fenn-adrenv.

Azalek neuze e teuas an dud d'an iliz ken niverus m'eo bet ret d'an Tadou keiner plañch solier an ti-skol gristen, evit ober skoueriou d'azeza; gwelloc'h c'hoaz, ret eo bet lakaat an dud er sekreteri, er c'hor, dindan daol-sakr an aoter, ha meur a hini a zo chomet er-maez.

An holl, kouls lavarout, a zo deut da selaou ar prezegennou, ha war-dro 410 o deus tostet ouz ar sakramanchou.

« An den a stourm, a lavare santez Janed a Ark, ha Doue a ro an trec'h ». An Tadou o deus stourmet kalonek ha Doue, dre ho pedennou, Bugale sant Fransez, en deus rôet an trec'h d'ezo. Bennoz Doue d'eoc'h, ha kendalc'hit da bedi evito.

TAD IVON.



LOURD, katekiz beo

Lourd hag ar vuhez eternal.

Pa weler ospitaliou Lourd leun a dud klanv deuet da c'houlenn ar pare, pa vezer harpet e ruiou kêr gant prosesion o grivizi, pa weler ar glanvourien-se astennet war blasenn ar Rozera da c'hor-toz prosesion ar Sakramant, neuze e vezer techet da gredi n'eo talvoudek perc'herinaj Lourd nemet evit ar vuhez-man, ha n'eo graet nemet evit kaout didor e poaniou ar glanvourien ar gwella deut da Vari.

Barn evel-se a vefe fazia. Hor Salver, e-pad an tri bloaz diweza eus e vuhez, en deus graet e-leiz a viraklou. Ha koulskoude, piou ac'hanomp a gredfe lavarout, evit roi da gompren perak eo diskennet Mab Doue war an douar, piou a gredfe lavarout ez eo deuet evit para eun neubeud klanvourien beñnak ?

A dra-sur, hez' ez eus bet ha bez' ez eus c'hoaz dre ar bed kalz a dud hag a zo bet pareet e Lourd gant an Itron Varia. Ha koulskoude, ne c'heller ket lavaret he deus ar Werc'hez Vari savet ar perc'herinaj-se dreist-holl evit para hiniennou eus he bugale. Mari he deus savet he daoulagad da sellet pelloc'h hag uheloc'h. Her gwelet a reomp, pa sonjomp er pezh a zo c'hoarvezet gant an hini eo en em ziskouezet d'ezi ar Werc'hez, gant Bernadet Soubirous. Ma vije ket menoz kenta ar Werc'hez gloriou Vari para tud mac'hagnet an douar-man, Bernadet a vije bet pareet da genta... Hogen buhez Bernadet n'eo ket, kouls lavaret, nemet eur c'hlenved hir hag eur boan hep ehan : kement-man a zo ken gwir ma 'z eo maro, yaouank c'hoaz, goude beza resevet peder gwech sakramant an Nouenn !...

Setu aman ar wirionez : en eur zont d'en em ziskouez e Lourd, Mari a zo falvezet ganti labourat evit silvidigez an eneo, en eur lakaat an dud da sonjal er *vuhez eternal*, en eur lakaat he bugale da gaout ar santimanchou ha d'ober ar pezh a zo ret evit pourchas ar vuhez-se, en eur lakaat an dud difeiz o-unan dirak o finveziou diweza.

Aslavaret a reomp eta eur wech muioc'h ar c'homzou-man lavaret gant an Itron-Varia da Vernadet : — « Deuit aman, mar plij, e-pad pemzek deiz. » Hag evel ma promete Bernadet senti, ar Werc'hez a lavaraz d'ezi — : « Bez' e vezi eürus, neket er bed-man, met er bed all. »

Ar *vuhez da zont*; setu hi embannet eur wech muioc'h gant

Mari. War he lerc'h, milierou ha milierou a dud fidel, bodet war blasenn ar Rozera, o deus embannet ar memes gwirionez en eur gana, a bouez penn, ar c'homzou diweza eus ar « *Gredo* ». « Gortoz a ran rezureksion ar re varo ha buhez an amzer da zont. Evel-se bezet graet ! »

Ar gredenn ez eus evidomp eur vuhez all ha n'he devezo fin ebet, n'eo ket hepken kredenn an dud fidel : an holl dud a skiant vat, divaez ar relijion gristen, o deus kredet n'oa ket echu gant an dud er vuhez-man. Al lealded a c'houlenn e vefe rekompanset ar mad ha kastizet an droug ; hogen ni a zo krouadurien eun Doue meurbet leal, ha koulskoude hon oberou mat n'int ket rekompanset nag hon oberou fall kastizet er bed-man : *ret eo eta e vefe eur bed all* ha netra nemet ar santimant a lealded a zo en hor c'halon, a zo awalc'h evit lakat ac'hanomp da c'hortoz « *buhez an amzer da zont !* »

Ouspenn an ezomm-se hon eus eus eur vuhez all, ar feiz harpet war gonzou Doue ha war gelednadedez an Iliz a lavar d'eomp ouspenn, — ar pezh ne c'hellomp ket gouzout a-hend-all, — e kemero ar c'horf perz e planedenn an ene. Gwelet a reomp ar c'horf war an douar-man, pa 'z eo dilezet gant an ene, o koueza hep buhez hag o koreza nebeut ha nebeut e poultrenn ; seblantout e ra d'eomp ez eo echu gantan da viken, evel ma vez echu gant an anevaled pa varvont ; rak evit ar re-man, ne vezo ket a rezureksion, ha padal, evit korf an den n'eo ket echu gant ar maro.

Sellet ho peus, e iliz ar Rozera, ouz an unnekvet taolenn, an hini a ziskouez Hor Salver Jezuz-Krist o sevel eus a varo da veo : Jezuz laket d'ar maro tri devez araok, a sav eus ar bez leun a vuhez. Kement-se a zo eun errez eus ar pezh a c'hoarvezo ganeomp da fin an amzeriou. A dra-sur, ni ne savimp ket eus a varo da veo, evel Jezuz, dre hor galloud hon-unan, met dre volontez an Aotrou Doue. A dra-sur, hor c'horf ne vezo ket bet diwallet, evel hini hor Mestr divin, diouz breinadurez ar bez. A dra-sur, n'eo ket dre zevezioù, met dre gantvejou eo e vezo ret konta an amzer a dremenno etre hor maro hag hor rezureksion. *Met sevel a raomp eus a varo da veo*. Ya, eun devez a deui, ha Doue a zastumo poultrenn hor c'horf stranet dre ar bed, hag a raio gantan skeudenn eun den evel ma reas evit korf Adam er penn kenta eus ar bed, hag a lakaio en hor c'horf renevezet an ene a ro buhez d'ezan breman, an ene a vezo bet dirazan d'ar varn bartikulier hag a vezo prest neuze da vont adarre dirazan evit ar varn jeneral.

Oh ! na mat ha frealzo eo sonjal er wirionez-se eus hor feiz !... Na mat eo sonjal enni dreist-holl e Lourd, pa weler e Lourd muioc'h eget e lec'h all trubuilhou paour-kaez korf an den !... Ya, an holl gorfou-se douget leun a boan d'ar pisinou, an holl vemprouse kammet, brevet, mac'hagnet, an tammou pilhou-se eus gouenn an Jud, an holl draou-se a dle sevel glorius eun devez eus a varo da veo !... An holl draou-se a zo galvet da veza, eun devez, karget a sklerijenn ha beuzet a levezet !...

O va Doue, grit, en ho madelez divent, ma na vankimp ket ar blanedenn hor galvit d'ezi !... Ha c'houi, o Mari, hor sikourit, en ho teneredigez a vamm, da dizout ar blanedenn-se ! Dirak hoc'h ilizou e Lourd hon eus embannet e c'hortozomp hor rezureksion glo-

rius : hor sikourit d'he meritout ha d'he c'haout !... Evel-se bezet graet !

SKOUER

Klenved, konversion, pareanz an aotrou Fonsales, er relijion an tad Mari-Josef, eus urz Sistersianed Senank.

An aotrou Fonsales a zo ganet er bloavezh 1851. Mab e oa d'eur maltouter, ha maltouter e oa e-unan e Sant-Gaudens. Da viz Gwen-golo 1884, Fonsales a santas kenta poaniou eur c'hlenved hir ha kriz, atao grevus ha goest d'e varc'hagna. Bez' en doa en e zorn dehou ar pezh a vez anvet e galleg eur « syonovite sentineuse. »

E-pad eiz vloaz, azalek 1885 betek 1892, ar c'hlenved a greskas nebeut ha nebeut en despet d'an holl louzeier rôet gant ouspenn ugent medisin, ar rejant Potain unan anezo. Douriou Dax, Luchon, Salies de Béarn ne raent ket muioc'h, ha hervez an holl, ar c'hlenved n'oa pareanz ebet da esperout outan.

Eun devez, en eur zistroi diouz Salies, d'an 8 a viz Here 1886, an aotrou Fonsales a dremenas dre Lourd evit gwelet eur giniterv hag a oa leanez e kouent ar Werc'hez konsevet kep pec'hed. Ar giniterv-se, ha n'en doa ket gwelet pevarzek pe bemzek vloaz a oa, a c'houlennas digant he c'henderv ha n'en doa ket sonj da lakaat da dalvezout an amzer e dremene e Lourd evit ober e zeverioù a relijion. An aotrou Fonsales ne reas nemet c'hoarzin o klevet eun hevelep gouenn : n'oa ket bet unnek vloaz a oa war-dro iliz ebet. Droug en doa ouspenn ouz Doue, dre m'en doa kement-all a boan ! A dra-sur, stad e ene a oa fall ; dalc'het en doa koulskoude, en despet da hep tra, eur santimant vat bennak e-kenver ar Werc'hez gloriou Vari ha lavaret a rae a-wechou ar bedenn : « bezit sonj... » Al leanez a c'hellas erfin digas he c'henderv ganti d'ar chapel da eur bennoz ar Sakramant ; met goude-se an den yaouank en em dennas hep beza chanchet. Koulskoude, antronoz vintin, goude ar sonjou en doa debret e-pad an noz, e spered a oa gwelloc'h trôet. Mont a reas d'ar c'heo da c'houlenn sklerijenn digant ar Werc'hez, ha goude beza chomet eur pennad da zigarezi, e kemeras warnan mont da govez. Distroët d'ar gêr, ne c'helle mui tenna diouz e benn ar sonj-man : « Evit eun tammig plijadur... poaniou hag a bado da viken ! » Hag hep dale, da heul sonj ar vuhez eternal sanket en e spered, e teuas en e galon ar c'hoant d'ober pinijenn ha da vont d'ar gouent.

Azalek ar mare-se, ar c'hras a reas buanoc'h labour en e ene, met n'oa ket hep poan : Fonsales a yeas diou wech d'ar gouent ha diou wech e teuas er-maez. D'an drede gwech e chomas. Bep taol sonj an eternite a yê dounoc'h-douna en e spered. Skoazellet gant Itron Varia Lourd, mont a reas erfin, d'an 21 a viz Here 1893 da vanati Senank e-kichen Avignon, hag eno, d'an oad a zaou vloaz ha daou-ugent, e plegas, laouen, da binijennou kalet ar venec'h ; eno eo'h en em lakeas da zeski a-nevez, evel pa oa bugel, eno e c'houzanyas poaniou nevez ha rust.

Tri miz goude-se, ar manac'h a welas e glenved o wasaat. E zorn a oa leun a c'horioù hag a daole lin hag a oa dare da faouta. Kaer e oa ober, e vrec'h penn-da-benn a oa tapet ha tapet ken mat ma oa sonjet troc'hi anezi d'ezan e ospital Breudeur

Sant-Yann-Doue, da viz C'houevrer 1896. D'an 31 a viz Meurz warlerc'h, ar manac'h a zistrôas d'e leandi, e vrec'h atao ken tal hag araok, hag e zorn dehou seizet.

D'ar 25 a viz Mae 1896, an abad a voe lezet da vont da Lourd gant e superior. Digouezout a reas d'ar 26 e kêr Mari, ha diskenn a reas peder gwech er pisinou; pedi hag aspedi a reas gant kalon an Itron Varia da roi nerz a-walc'h d'e zorn evit gellout beza beleget.

E bedenn a dlee beza selaouet; nebeutoc'h eget eur miz goude, ne oa gor ebet mui nag en e vrec'h nag en e zorn, ha reseo a reas sakramant an Urz d'ar 17 a viz Kerzu 1898. Anvet e voe neuze an tad Mari-Jozef.

Ar bloavezh war-lerc'h, an tad Mari-Jozef a rae adarre beach Lourd evit trugarekaat an Hini he doa rôet d'ezan ar yec'hed hag ar feiz en doa kollet.

Pedomp evit hon anaon

AN AOTROU CONAN. — Ar « *C'henteliou* » a c'houlenn eur bedenn evid ar beleg yaouank-se, unan eus o lennerien, hag en deus bet eur maro ken truezus.

Mestr-skol e Boulvriak, an Aotrou Conan a oa o tistrei d'ar gêr, diouz an noz, d'an 22 a viz Kerzu.

Heda a rae al linenn, pa voe taolet dindan an trêñ gand eur c'houad avel kreny. Eno, e voe kavet e gorf dispennet. Pebez darvoud ! — Sebeliet eo bet e Trogeri, a barrez.

An aotrou Connan a labourer kalz evit mirout ar brezoneg er vro; skigna a rae, eus e vella, e-touez an dud, Breiz, kazetenn vrezonerk eskopti Sant-Brieg.

D'e vamm glac'haret, d'e holl gerent, d'an aotrounez beleien Boulvriak, hor gwella gourc'hmennoù a genganv.

F.

Plonevez-a-Faou. — LOEIZA FRANSEZ (*Choar sant Per*), maro goude 17 bloavezh profesion.

ANNA NEDELEG (*Choar Sant Josef*) maro goude 28 bloavezh profesion.

MARI-JANED HERVE (*Choar sant Josef*) maro goude 21 bloavezh profesion.

Misionou

Pedit kalonek evi ar misionou prezeget gant hon Tadou, evit ma tougint frouez puilh evit gloar Doue ha silvidigez an eneou.

E **Roskanvel**, eus ar 25 a viz C'houevrer d'an 19 a viz Meurz, gant an Tadou Barnabe hag Ivon.

E **Mahalon** (Eskopti Kemper), eus an 22 a viz Meurz d'an 8 a viz Ebrel, gant an Tadou Barnabe, Fuljans, Ivon hag Eujen.

Buhez burzuduz eun douger-sammou MAZE TALBOT

RA VEZO LENNET E PEP FAMILH HAG E PEP TI !
EUN DRA VAT E VEFE REI AL LEVRIG-SE DA VUGALE AR SKOLIOU,
DA VUGALE AR C'HATEKIZ, D'AR BARRIZIONIZ GOUDE EUR RETRET PE
EUR MISION BENNAG.

Evit n'en do den ebet digarez da chom heb e lenn, ni a zo eurus da rei pep levrig evit **dek gwenneg** hepken, ar mizou-kas ouspenn

1 levrig	dre ar Post	0 fr. 70
10 —	—	5 fr. 75
25 —	—	14 fr.
50 —	—	28 fr.

Skriva d'an Tad THEODOR ROUSSEL
28, Avenue de la Marne, LORIENT.

Chèques Postaux de Nantes, — C.c. 46:28.

*

EUR C'HANTIK KAER NEVEZ !

An Eured Kristen

Meur a wech hon eus klevet klemmou, abalamour ne veze kavet kantik ebet da gana, war Zakramant ar Briedelez, da genvr an eurejou. Setu perak hon eus graet moula ar c'hantik kaer a zo bet gwelet dija war *Kenteliou Sant Fransez*, miz Eost.

Ne vezo ket dies lakaat tud an eured da gemer ar c'hantik-se. Goulennit eta kantik *An Eured Kristen* :

P. Théodore ROUSSEL, 28, Avenue de la Marne, Lorient.
Priz : 22 real ar c'hant, dre ar Post.

*

KANTIKOU NEVEZ.

Ar c'hantikou-man : SAKRAMANT AN AOTER. — KANTIK DA JEZUZ-KRIST-ROUE, — an « DE PROFUNDIS, » *pedenn an anaon*, hag a zo bet lennet nevez-zo war « *Genteliou Sant Fransez* », a zo bet ken prizet gand an holl, m'hon eus sonjet o advoula evit beza gwerzet o zri assambles.

Priz : 15' ar c'hant, dre ar post.

P. Th. ROUSSEL, 28, Avenue de la Marne, Lorient.

*

Ra vezo meulet Jezuz Krist !

Bepret.



Kenteliou Sant Fransez

Kelaouenn vizièk gant Skeudennou



TAOLENN AR MIZ

Goueliou ar miz.....	49
Sonjit' ervat.....	50
Kelou' eus ar Breuriezou.....	51
Buhez sant Fransez a Asiz.....	53
Asiz : Sacro Convento.....	54
Brezel d'an alkool milliget.....	56
Bleuniou sant Fransez. — XIV th pennad.....	57
Mexig I.....	58
Sant Benead Jozeb Labre.....	60
Du-man ha du-hont.....	61
Lourd ha gloar ar Werc'hez gloriüs Vari en Nenv.....	64
Pedomp evit hon anaon.....	

Rédaction et Administration
P. Théodore ROUSSEL
F.M. Capucin
28, Avenue de la Marne, LORIENT
C/c. : 46.28 NANTES

Priz : daou skoued ar bloaz



EBREL

- 1 Sul *Sul ar Bleuniou.* — A.J.
 2 Lun Lun santel. — A.J.
 TAD-EÛRUS YANN A BINNA HA GONDULF, kovez. eus ar genta Urz.
 3 Meurz ... Meurz santel. — A.J.
 4 Merc'her.. Merc'her santel. — A.J.
 SANT BENEAD A FILADEFI, kovez. eus ar genta Urz. — I.P.
 DEN-EÛRUS GWILHERM, eus an Drede-Urz.
 5 Yaou Yaou Gamblit. — A.J. — I.P.
 6 Gwener .. Gwener ar Groaz. — A.J.
 7 Sadorn .. Sadorn santel. — A.J.

- 8 Sul PASK. — A.J. — I.P.
 9 Lun Lun Fask.
 10 Meurz ... Meurz Fask.
 11 Merc'her.. Ofis an eizved.
 12 Yaou Ofis an eizved.
 13 Gwener .. Ofis an eizved.
 14 Sadorn .. Ofis an eizved.

- 15 Sul *Sul ar C'hwastmodo.*
 16 Lun Sant Padern, eskob Gwened. — (I.P. o renevezi ar profesion :
 d'an deiz-man en doe Sant Fransez graet profesion er genta
 Urz).
 17 Meurz ... *Sant Aniset*, pab ha merzer.
 18 Merc'her .. Ofis an deiz.
 19 Yaou DEN-EÛRUS KONRAD, kovez. eus ar genta Urz.
 20 Gwener .. Ofis an deiz.
 21 Sadorn .. Gouel ar Werchez Vari, mamm ar Pastor mat.

- 22 Sul *Eilvet sul goude Pask.*
 DEN-EÛRUS FRANSEZ A FABRIANO, kovez. eus ar genta Urz.
 23 Lun DEN-EÛRUS EJID A ASIZ, kovez. eus ar genta Urz.
 24 Meurz ... SANT FIDEL A SIGMARINGEN, merzer, kapusin. — I.P.
 25 Merc'her.. GOUEL BRAS SANT JOZEB, patrom an Iliz katolik. — I.P.
 26 Yaou Sant Mark, avieler.
 27 Gwener .. Sant Per Kanizius, doktor.
 28 Sadorn .. Sant Paol eus ar Groaz. — I.P.
 DEN-EÛRUS LUCHESIUS, kovez, kenta hini a voe en Drede-
 Urz. — I.P.

- 29 Sul *Trede sul goude Pask.*
 30 Lun DEN-EÛRUS BENEAD A URBINO, kapusin. — I.P.
 DEN-EÛRUS BENEAD-JOZEB KOTTOLENGO, kovez. eus an Drede-Urz.



III. — Sonjit ervat, hag anzavit na ra Hor Salver nemet ar peñ a dlie da ober. Hor Salver a gas d'an dud dre ar bed aelez mat d'o sikour war hent ar baradoz. Met an den a vuhez-fall, unan hepken, a zo a-walc'h evit kas da netra an holl sonjezonou mat hadet e spered an dud gant an holl aelez. Mevel an diaoul eo an den a skouer-fall; just eo e ve mallozet gant Doue !

Mar kredit ervat er wirionez-se, ker skeduz, labourit da zizoher labour ho skoueriou-fall, e kount ebet na roñt mui skouer-fall, na pedit evit ar re ho peus, dre o skoueriou, douget d'ar pec'hed.



Kelou eus ar Breuriezou

Breuriezou Goudilin, Ploezal, Tredarzeg, Planiel ha Moelan.

Netra nevez da lavarout diwar-benn ar Breuriezou-man : an Trede-Urziadezed (*Tertiaires*) a heuilh mat ar reolenn. C'hoant gwirion o deus da servicha an Aotrou Doue dindan banniel sant Fransez. Lod anezo a labour kalz evit rei skoazell d'ar skoliou kristen; lod all a ro dorn d'o beleien evit kas war-raok breuriezou all evel hini Bugale Mari.

Digemeret o deus holl gant doujans an Tad deut d'o gwelout ha goulennet o deus ma teuje aliesoc'h daveto eun Tad bennak eus an Oriant.

Ar Breuriezou-se n'int ket kousket evel meur a hini. Fiziens hon eus e kreskint muioc'h-mui, daoust ma entent kalz re nebeut ar gristenien peger kaer ha pegen talvoudus eo an Drede-Urz.

Goulenn a reer digant ar re a zo e karg teurel evez da c'hounit c'hoarezed yaouank dreist-holl d'o Breuriezou.

Gwipavaz. — RETRED AR VREURIEZ. Savet c'houec'h vloaz 'zo, Breuriez an Drede-Urz e Gwipavaz a zo, a gredan, unan eus ar re niverusa e Breiz-Izel a-bez, 97 c'hoar o deus graet profesion ha 9 o deus kemeret ar skapular nevez 'zo.

C'hoantaet o doa kaout evito eur retred evit anaout ha heulia gwelloc'h o reolenn hag en em startaat muioc'h e karantez Hor Salver. Bet o deus ar c'hras-se eus an 9 d'an 12 a viz C'houevrer.


Henvel e voe urz ar retred ouz hini ar misionou : da 7 eur $\frac{1}{2}$, an oferen, diou brezegenn er vintinvez; da 1 eur $\frac{1}{2}$, ar chapeled ha hent ar groaz, diou brezegenn all diouz an abardaez, hag evit kloza, bennoz ar Sakramant meulet ra vezo !

A-raok ha goude ar prezegennou e veze kanet kantigou, ha me a lavar d'eooc'h ez eus moueziou kaer e bro Leon !

A-benn eun nebeut amzer he devezo ar Vreuriez eur banniel kaer. 25 koumanant he deus da Genteliou sant Fransez.

Meuleudi eta da Vreuriez Gwipavaz ! Doue ha sant Fransez da rei c'hoaz hir vuhez d'ar beleg santel a gemer kement a breder outi hag he c'has ker mat endro !

TAD FULJANS.



Buhez Sant Fransez a Asiz

PEVARE PENNAD

KENTEL 11. — Gweledigez ar pab. — Nec'hamant ar gardinaled.
— « Pedit, » eme ar pab da Fransez.

Goude m'en doe graet da Fransez mont war e giz, en noz war-lerc'h e welas ar pab, dre e gousk, eur wezennig o tiouana; hag ar wezennig-se a greskas buan hag a savas da wezenn vras ha kaer. Pa zihumas, e reas e sonj : « Hag ar wezennig-se e vefe an den am eus gwelet dec'h gant eun nebeud diskibien ? » Ha nec'het e chomas.

Ar c'hardinal a Sant-Paol a zeuas en dervez-se da gaout ar pab. « Tad Santel, emezan, kavet em eus eun den a fell d'ezan kerzout war hent ar santelez; galvet eo marteze gant Doue da lakaat an urz vat da ren e-touez an dud. — Grit d'ezan dont d'am gwelout warc'hoaz. » a respontas ar pab.

Antronoz e teuas ar Sant da ziskleria d'an Tad Santel ar c'hoant en doa da heulia a-unan gant e ziskibien lezenn ar baourenitez penn-da-benn. Innosant a selaouas gant evez hag a lavaras : « Va bugale, diaes ha kalet eo ar vuhez hoc'h eus c'hoant da ren. C'houi a zo leun a galon hag a yelo war-raok; met ar re a zeuio war ho lerc'h en urz, ne vezint ket, am eus aon, ker kalonek ha c'houi. Arabat eo teurel d'ezo war o diouskoaz eur samm re bounner. Distroñt d'am c'haout diwezatoc'h; ac'han di e rin kaoz d'ar gardinaled. »


Fransez a yeas kuit; neuze e c'houlennas ar pab ouz e gusulerien : « Ha mat eo aotrea eun urz menec'h hag a vevo er baourenitez strisa ? » Evel m'eo bet diskleriet uheloc'h, an eretiked, o anñ Albijiz, o doa prezeget eun nebeud bloaveziou a-raok enep an danvez, hag o doa graet freuz ha reuz e-touez ar gristenien. Hiniennou eus ar gardinaled a lavare : « Fransez hag e dud a zispenno marteze roudou an eretiked. » Re-all a zisklerie : « Ar venec'h a c'hell chom hep m'en defe pep-hini anezo netra, met eul leandi a dle kaout gwir d'eun nebeudig madou evit an holl; anez-se ne chom ket eur gouent en he sav. Re galet eo ar baourenitez striz. »

Ar c'hardinal Yann a savas neuze e vouez : « Ma n'eo ket aotreet reolenn Fransez a Asiz, emezan, ez aimp enep an Aviel, rak eus an Aviel eo tennet ar reolenn a c'houlenn heulia. Enep Doue e komz an nep a lavar ez eo re ziaes ober diouz kenteliou an Aviel. »

Goude ar c'homzou fur-se, Innosant, nec'het evelato, a lavaras

d'ar Sant : « Pedit, va mab, ha p'ho pezo klevet mouez Doue, deuit d'hen diskleria d'eomp; ober a ramp diouti. »

Fransez hag e vreudeur a bedas a-greiz kalon; n'o doa ket gounezet c'hoaz.



KENTEL 12. — Komzou Doue d'ar Sant. — Ar pab Innosant a wel an Tad o harpa iliz Latran. — Aotre rôet. — Fransez avieler.

Eun nebeud derveziou diwezatoc'h, ar Sant a zistroas da gaout an Tad Santel ar Pab Innosant. Nag a bedennoù birvidik o doa graet an dud santel-se !

Fransez a lavaras d'an Tad Santel : « Doue en deus diskleriet d'in : Va mab, bez fizians ennoun. Pourvei a rin da ezommoù da holl vugale. Rei a ran da gement hini am eus krouet ar vagadurez en deus ezomm anezi; ober a ran d'an heol para evit ar bec'herien kouls hag evit an dud santel, penaos ne vagfen ket bugale va Aviel ? » Ar Sant a gomze gant eur fizians ker start ma voe gounezet ar pab en taol-man : « E gwirionez, emezan, an den-man eo a zo galvet gant Doue da harpa e Iliz. »

Innosant a zisklerias neuze d'an holl an hunvre en doa graet en noz a-raok. Gwelet en doa dre e gousk iliz Sant-Yann a Latran o horjella ha gwaskou o tigeri er mogerioù. Eun den bihan a zeuas neuze da-gichen ar mogerioù; an den-se a greskas, a savas ken uhel hag an iliz, hag he harpas mat. Pa voe yac'h ha sounn ar


mogerioù, e teuas da veza bihan adarre. Fransez eo e oa, en den en doa dirazan.

Innosant a bokas neuze d'ar Sant, e vennigas hag e lakeas dre e holl c'halloud a bab e penn an urz nevez. Da-c'houde ec'h aotreas dre c'her e reolenn, o lavarout : « Gwir a rôan d'eoc'h da brezek an Aviel. It atao war gresk gant sikour an Holl-C'halloudek, ha deuit adarre d'am c'haout; rei a rin d'eoc'h grasou kaeroc'h c'hoaz. »

Fransez a stouas dirak an Tad Santel hag a zisklerias-e vije atao sentus outan.

Ar c'hardinael Yann a Sant-Paol a gentelias neuze ar Sant war meur a dra evit e sikour da veza santeloc'h hag a rôas kurunenn ar gloareged d'e ziskibien. Kredi a reer e savas neuze Fransez e-unan e renk an avielerien, evit rei d'ezan muioc'h a wir da brezek d'an dud.

Goude beza bet ar grasou kaer-se, mestr ha diskibien a zistrôas d'ar gêr en eur bedi hag en eur gana.



ASIZ. — SACRO-CONVENTO

Mussolini a ro a-nevez d'ar Vreudeur-Vihan ar Sacro-Convento a Asiz.


D'an 3 a viz Here diweza e rôe a-nevez Mussolini da Vugale sant Fransez ar manati anvet ar Sacro Convento, enman teir iliz an eil a-us d'eben.

Ar manati-se laeret, evel meur a hini-all, er bloaz 1871, a oa deut da veza eur c'helenndi evit bugale ar vistri-skol.

Gouzout a ra an holl penaos e voe bet sebeliet sant Fransez el lec'h-se. Ebarz an iliz uhela ez eus taolennou eus an dibab graet gant an daou benter (peintre) brudet Giotto ha Simabue.

Evit enori c'hoaz sant Fransez en deus rôet ivez Mussolini urz da lakaat bugale ar Sant da berc'henn da zaou kouent all bet laeret : manati en Ara-Cœli, e kêr Rom, ha manati santez Klara, e kêr Napl.

Pegoulz e vo gwelet mistri hor bro Frans, restaol an holl vanaoioù, an holl seminarioù hag an holl vadou bet laeret war an iliz gant ar Franmasoned ?



Brezel d'an alkool milliget

Aes eo kaout abeg er pez a ra ar re all, ober d'ezo rebechou. Aesoc'h eo ober rebechou eget labourat. D'ar Groaz-Wenn, ar Vreuriez eneb an alkool e vez graet ive pep seurt rebechou. Gant piou ? Gant ar re a gar an alkool, skler eo, met ive gant re all avechou. « Koll a rit ho liberte, emezo. Pa vezo eur gouel bras bennak, eun dra nevez, pa vo kinniget eur banne Cognac, hini koz, pe Chartreuse, Benedictine, c'houi a jomo da zellet ouz ar re all. Daoust ha fall a reont o kemeret eun diveradenn eus traou ker mat hag a goust ken ker ? » — Ne lavaromp ket eo eur pec'hed eva-er banneig evelse, ne lavaromp ket zoken e rafemp droug d'hor ye-c'hed o kemeret evelse, da fin ar pred, eun diveradennig eus an hini *krenv* pe eus an *hini dous*, eur vech an amzer.

Met pegement eo gwelloc'h chom hep kemeret ! Rak, o chom-hep tanva, ne deu ket d'eomp ar choant da eva. Eur c'halz eus an dud a jomfe fur anez an dentasion. *D'an eil* : hor c'homzou o deus da c'houde muioc'h a bouez. Pa vezimp gwelet o lezel a gostez eur banne odivi hag a gouste marteze 50 lur ar voutailhad, e c'hellimp komz uhel eneb an odivi. *D'an trede* : e c'hellomp diskouez d'ar re a zo en dro d'eomp ez eus eur c'hlenved en hor bro a zo poent klask e barea. *D'ar pevarer* : e reomp eun tamm pinijenn. Dilezel eun dra hag a blijfe d'ar c'henou a zo ober pinijenn. *D'ar pempvet* : e teskomp d'ar re all an doare d'ober nebeutoc'h a zispignou. Ma n'eo ket spontus lakat 50 lur hag ouspenn en eur voutailhad odivi ! Setu aze dispignou foll, diskiant. *D'ar c'houec'hvet* : e tiskouezomp kaout nerz, beza tud a benn, hag en deiz a hirio ez eus ezomm eus hevelep tud. Hag evit gounit nerz, n'eus netra gwelloc'h eget senti ouz eur reolenn a vuhez ato hag e pep lec'h.

Ar re a zo gouest da harpa ouz an tech da eva a harpo ive-ouz techou all. Klevet am eus, en eur vodadeg eneb an alkool, eur beleg eus ar Beljik o komz evelhen : « Pa welomp, emezan, hor baotred yaouank o vont da studia er c'heriou bras, e lavaromp d'ezo beza var evez, tec'het diouz an droug, ren eur vuhez dereat ha santel. Pa gomzomp ouz tud yaouank o deus lakeet o hano er Vreuriez eneb an alkool, tud yaouank n'ez eont morse d'an ostaleriou, e c'hellomp beza heb aon. Ar re-ze a labourou mat, ne gollint ket o amzer o c'hoari, hag o buhez a vezo direbech. »

Koll al liberte ! Piou eo a goll e liberte nemet an hini n'eo ket evit harpa ouz ar c'hoant da eva eur banne ? Ar re n'int ket gouest da drec'hi an dentasion, n'int ket gouest da jom heb o banne

odivi bemdez ha marteze meur a vech bemdez, ar re-ze eo ar sklavourien, ar re o deus kollet o liberte.


Re all, katoliked, a gomz evelhen : « Ne fell ket d'eomp ha ne c'hellomp ket gouenn digant an dud muioc'h eget na c'houlenn gourc'hemennou Doue ha re an Iliz. » Hag e komzont evel doktor-red, evel pa ve aet ganto holl zonezonou ar Spered Santel, ha leun a lore'h evel ar Pharizianed gwechall, e sellont gant truez ouz an dud paour a zo o klask sevel Breurieziou n'eus ezomm ebet anezo.

Ma lavaromp eo ret, dindan boan da veza daonet, lakat an hano er Groaz-Wenn, neuze e c'hellfent komz evelse. Met ne lavaromp ket eo ret lakat an hano er Groaz-Wenn. Lavaret a reomp eo eun dra vat ha fur. — N'eo ket ret, evit beza salvet, mont e Trede Urz Sant Fransez. Ha goulkoude eo eun dra vat ha talvoudus. — N'eo ket ret, evit beza salvet, gwerza kement hon eus ha ranna an arc'hant gant ar beorien evit mont da c'houde varlerc'h Hor Zalver. Ha goulkoude eo eun dra vat, eun dra a gavomp kaer, a veulomp hag a dleomp da veuli; rak ma lavaromp n'eo ket eun dra vat, e rankfemp regi an Aviel, en em zével enep komzou Jesus e-unan.

Ar zent, petra o deus graet ? N'eo ket hepken senti ouz gourc'hemennou Doue ha re an Iliz, met mont kalz uheloc'h, ober pinijennou, pedennou, oberou n'int ket goulennet gant gourc'hemennou Doue na re an Iliz. Hag e veulomp ar zent o veza m'o deus graet pinijennou kalet, pedennou hir, labourou poanius, ha dre ze, dre an hent-se eo o deus gounezet eur gurunenn gaer er Baradoz.

An Iliz, bep gwech ma vez ezomm, a zav Breurieziou nevez; ato, pa wel eun droug bennak, e klask an tu d'e barea. Dall eo an hini ne wel ket, en deiz a hirio, ez eus ezomm da barea an dud diouz klenved ar vesventi. Ar Pabed, en amzeriou diveza-man, o deus savet o mouez da c'hervel ar gristenien d'ar stourmad ha da veuli ar Breurieziou savet eneb an alkool. Ar Pab Pi IX a lavare evelhen : « Evit brasa mad ar gristenien, e c'houlennomp diganeoc'h skigna, etouez ar re a zo en eur renk uhel en Iliz, ar c'hiz da zilezel pep boesoun gouest da vesvi. » Leon XIII a skrive : « Meuli a reomp ar Breurieziou a glask distrei an dud dioc'h ar vesventi. Netra gwelloc'h, evit dont a-benn eus an alkool, eget dilezel pep boesoun gouest da vesvi. » Pi X en deus, evel Leon XIII, staget induljansou bras ouz ar Veuriez eneb an alkool ha skrivet kement-man : « Fiziens hon eus, goude beza kinniget kement a induljansou da c'hounit, e welimp nann hepken an eskibien, ar veleien hag al leaned, met ive ar gristebien fidel, o veuli ar Breurieziou-ze hag o rei o hano d'ezo. » Beneat XV, d'an 30 a viz here 1919, a vennige d'e dro ar Vreuriez hag a hede ar re a oa enni, da boania ha da zikour, dre o skouer vat, ar gristenien all. »

En Iliz e tle beza santelez. Ar gristenien, varlerc'h o Mestr, a dle klask ato ar pez a zo gwella, sevel uhela ma c'hellint e skeul ar zantelez. En em ziwall a dleont ive diouz kement a c'hell o dougenn d'ar pec'hed. Hogen, pell zo sant Paol en deus skrivet : « *In vino luxuria*, da heul ar gwin, ar vesventi, e teu ar pec'hed hudur. » Var evez e vezint eta o-unan; skouer vat a roint var ar poent-se evel var ar re all, hag oc'h en em zerc'hel o-unan var an hent mat, e sikourint o breudeur da veza fur.



Bleuniou Sant Fransez

XIVth PENNAD

*Gand e genvreudeur, sant Fransez
'Oa o prederiam, eun devez
Ha sede Jezus Hon Salver
'N em diskouez d'ezo 'n e gaerder.*

Urz Fransez a oa c'hoaz, en e zerou kentan,
P'en em gavas ar sant, e genvreudeur gantan,
Eun devez unanet evit komz eus Doue,
Eus kaerder an Nenvou, ezommou an ine;
Ha sede a-greiz-holl, entanet e galon,
Lavar Fransez d'unan : « Glevit ket, ma mignon,
« 'N ano Doue, sede aman
« Ma gourc'hemenn, sentit outan :
« Komzit d'eomp eus an Nenvou,
« Selaouit ar Spered-Santel
« A vezo ho kwellan skoazell. »
Ar manac'h kaez a sentas, kuit da chom da dortan.
Biskoaz kaeroc'h prezegenn ne oa bet, pa laran.
Ma laras d'ezan Fransez, bamet ouz e glevout :
« Awalc'h eo 'vel-se, ma breur, dispar 'eo ho kal'oud,
« Lezit breman, unan all da vont pelloc'h ganti,
« D'eomp, da gaout marteze an hevelep dudi. » —
Heman a gomzas ker kaer, eus an Aotrou Doue
Ma renkas lezel e dro, abred gand eun drede.
Na Fransez, nag e vreudeur, en eur predig ker berr,
N'o devoa ket c'hoaz klevet, pezegennou ker kaer.

Ar Sant a renkas anzav, ha ze, gant gwirione
Ez oa ar Spered Santel, sur, o sklêrijenne.
Ha difazi ez oa, hep mar, e dro-spered
'Vel ma welas ar Sant, anat mat, gant reizded.

Ez oant holl, war-eun-dro, peurvanet o selaou
Pa gouezas war Jezus, en eun taol, o sellou.
Evel eur paotr yaouank kaer-dremmet a c'hened
Hon Salver en o zouez, a oa en em gavet.
Warnezo strafuilhet, e skuilhas e vennoz
Ma taveent ganti douster ar Baradoz;
Ha kement, ma ledjont o c'horf war-an douar,
O daoulagad difinv, hag o zeod dilavar.
'Us d'ezo o c'houezan diroll ar gourventenn
N'o dije ket gallet ober eur finvadenn.

En ennan e unan Sant Fransez 'n em gavet,
A laras evel-hen dioustu d'e geneiled (1)
« Breudeur, ma breudeur ker, da Zoue trugarez
« Diskouezet 'n deus d'eomp, tenzoriou e Furnez;
« Hag evid o ledan dindan hon daoulagad.
« Doue, e-kerz an den, a zo ken hegarat !
« Tudigou a netra, ar benveg ar fallan,
« En e zorn galloudus, ar benvez ar gwellan.
« Divarc'han 'ra o zeod, 'n eur c'hoari, d'ar re vut,
« Ha diouz ma tro 'n e benn, an diskiantan tud,
« A sav 'us d'o spered, kel lintrus sklêrijenn,
Ma seblant eus an Nenv, war an douar diskenn.

PAOTR JULIEN.

(1) Compagnons.



MEXIG.- Itronezed eus an Drede-Urz a ra gouel sant Fransez er prizon.

Gouzout a ra an holl peger gwasket ez eo ar gristenien er Mexig
gant ar Frammasoned. Milierou ha milierou anezo : beleien, misione-
rien, yaouankiziu, priejou ha zoken bugale, a zo bet merzerlet ker
gwaz hag ar gristenien genta. Tra spontus ! ne lavar grik renerien
vras ar broiou all. Met ma vez kondaonet d'ar maro eun torfetour
sasiolist pe gomunist, e vez kevet trouz an ifern er gazetennou dizoue,
ha goulenn a ra pennou-vras ar broiou ma vezo lezet e vuhez gant
ar muntren-se.

Er Mezig ez eo serret an ilizou, argaset an eskibien hag er veleien;
n'eus mui na gouel nag oferenn. Met evel en amzeriou kenta eus an
Iliz, e chom ar gristenien start en o feiz; ne greñont na dirak ar
poaniou na dirak ar maro.

D'ar 4 a viz Here diweza, e kêr Sant Loeiz a Botozi, o doa en
em vodet evit enori sant Fransez ouspenn 40 itrôn eus an Drede-Urz
en eun ti bennak, dre ma n'hellent ket hen ober en ilizou.

Diskuilhet e voent d'an archerien ha taolet ebarz ar prizon. E-lec'h
beza glac'haret, e trugarekjont an Aotrou Doue da veza graet d'ezo
an enor da c'houzanv evit o feiz.

Pedi ha kana a rejont er prizon meuleudi hon Tad sant Fransez.


Nag a nerz a ro reolenn an Drede-Urz da nep a gemer poan d'he
studia !

Tad F.

C'houezekvet devez
a viz Ebrel

Sant Benead Jozeb Labre

1748-1782



Azeulomp Jezus, hon mestr, a zo en em c'hraet den evit gallout gouzanv, dig'haoui Doue hag hon dasprenan.

O heuilh skouer ar Salver, ar zent o deus kastizet ha mestroniet o c'horf.

Sellit Sant Fransez oc'h evan gant levezek kalur c'houero ar boan; hag e ziskibien a gerz dre an hevelep hent.

An Iliz a laka hirio dirak hon daoulagad buhez souezus Benead Jozeb Labre. Ne oa bet degemeret e manati ebet ha koulskoude nag a binijennou en e vuhez !

Daou dra a weler sklaer e buhez ar zant-man : e baourantez hag e garantez evit Sakramant an Aoter.

I

Sant Benead Labre distak a grenn diouz madou an douar.

Neb n'eman ket a galon gant madou ar bed man, a zo diwallet eneb an drouk-spered. Gallout a ra tremen e vuhez e kreiz ar bed; ar bed n'en deus krog ebet warnan. E galon n'eman ket aman... Kaerát frankiz !

Adaleg e yaouankiz Benead a gimiad diouz e gerent, hep kemer al lod danve a deue d'ezan, hag a ya da c'houlenn degemer digant ar Chartreuzed. Re yaouank e voe kavet. Skei a reas war dor manati Neuville : digor ebet evitan; ne oa ket desket awalc'h. Skei a reas goude war dor Trapisted Mortagn. Met ar vedesined a gavas ne oa ket krenv awalc'h. Doue na felle ket d'ezan marvad, gwelout ar zant serret kloz en eur gouent; fellout a rae d'ezan hen lakaat da dremen dirag an holl evel eun daolenn veo eus hon Salver, Den a boan.

Benead a vo eta eur manac'h haleer. Mont a rei war e droad dre an hentchou dizro; pa gavo lec'hiou santelaet gant devosion ar gristenien e rei eno eun diskuiz.

Kalz a lec'hiou santel en deus darempredet. Mont a reas teir gwech da zaoulinan e-harz bez Sant Fransez en Asiz. Dilhad paour ha roget a vo war e gein, eur c'hrusifi war e zae, war e skoaz eun tammig sac'h gand e holl beadra, da lavarout eo an Testamant nevez, Imitasion Jezus-Krist, eul levr devot bennak hag e vrevial a lavaro bemdez.

Ne vir kammed netra evitan. An tammig arc'hant en devo di-

gand an dud a vo rôet gantan d'ar beorien all. En em lakaat a ra a-grenn etre daouarn Doue. Eur vaz gantan en e zorn, mont a ra dre ar menezioù ha dre ar saonennou. Alies a wech e tremen an noz war diri (degrés) eun iliz. Goude e tremen e nozvezioù dindan eur volz izel harp ouz eun ti eus Monte Cavallo e Rom. Gwelloc'h e vije bet al lec'h-se d'eul loen eget d'an den.

« E oan o tremen beure mat dre Vonte-Cavallo, e lavar eur beleg, pa welis eun dra bennak dindan eur volz vihan. Ne oa ket gweli sklaer an deiz hag e kredis da gentañ merzout (apervevoir) eur c'hi bras. Hogen eun den yaouank a oa eno daoubleget eu toull enk-se. Gwisket paour e oa. Met e zremm na gorde ket gand an dilhad. E zremm a oa mezellour e ene. Ugent vloaz pe wardro a c'halle kaoqt. Sevel a reas e zaoulagad war du an nenv, ober sin ar groaz, soublan e benn ha pedi. »

Kalz a dud, goude bezan gwelet ar zant a lâre : « Benead, n'eo ket eun den eo met eun ael.

Evurus, mil gwech evurus, eme Sant Bonavantur, neb en em zistag diouz ar bed-man da glask tizout ar bed all....

II

Sant Benead Jozeb Labre ha Sakramant an Aoter.

Bara an Aele, eme Sant Fransez, a laka an den da vezan krenvoc'h d'al labour kunvoc'h (dousoc'h), gredusoc'h en e garante, primoc'h da senti.

Sant Benead na veve nemet evit Jezus e Sakramant an Aoter. Dalc'hmad e veze kavet en ilizou oc'h azuli dibaouez. Klevet a rae kement oferenn a veze lavaret, dreist-holl en Iliz Itron Varia ar menezioù. Tost e chome d'an aspled (balustrade), hag eno, daoulinet, e zaouarn kroazet war e vruched, e zaoulagad damzerret, e valvennou definv, e seblante bezan aet en eur bed all.

Betek dek hag unnek eur ez eo bet gwelet o chom evelse, daoulinet war ar marhr hep harp ebet ha hep finval tamm.

Pa veze stouet dirag ar Sakramant, e huanade gant karantez. Pa deued da serri dorejou an iliz e ranked hen dibradan evel ma vijed bet o tframman eur bugel diouz divrec'h e vamm. Hag alies e chome en diavaez war an diri.

Awechou e zremm a deue kaer kenan da welout, sklaerijennet dreist ma veze gand eur sklaerder estlammus.

Souezet e chom an-nen dirag eur seurt buhez.

Trugarekaomp Doue da vezan rôet d'imp eur skouer evel heman. Sellomp ivez pesort stad a reomp eus Sakramant an Aoter...

« Mar tegemerfen Jezus evel m'eo dleet, na prim e kerzfen war hent ar zantelez, an hent a gas d'an nenv. »

Pedenn. — « O Doue c'houi hag hoc'h eus lakaet Benead Jozeb Labre da vezan izel a galon ha da garout ar baourantez, roit d'imp, en abeg d'e zellidou (mérites), a c'hras da zisprizout madou an douar evit gallout stagan hon c'halon ouz madou an nenv. »

Menez. — « Mar n' omp ket galvet da dizout ar pal m'en deus

tizet Sant Benead, dalc'homp sonj ez eo red d'imp derc'hel hon spered izel ha kastizan korf ha kalon. »

Boked. — « Evit karout Doue evel m'eo dleet, eo red kaout teir galon en unan : Eur galon dan evit karout Doue; eur galon gig evit karout an nesan, eur galon dir evid en em garout an nen e-unan, evit kastizan ar c'horf dre ar yun hag evit plegan ar c'hig. Seul vui a gas ho po evit ho korf seul kaeroc'h a-ze e vo ho kurunenn er bed all. »

(Komzou Sant Benead Labre).

E.R.

Du-man ha du-hont

Eus ar misionou. — Kelou mat eus hor mignon, an Tad Hipolit a Lezardreo, misioner gant 6 Tregeriad all, abaoe 27 vloaz, er Radpoutana (Indez).

An Tad Modez, eus Kerity-Pempoul, breman e Konstantinopl n'en deus ket ankounac'haet Breiz-Izel. Eürus e vez, pa zigouez « *Kenteliou Sant Fransez* ». Ker plijadurus eo evitan kaout ke-leier eus ar vro ma karfe o c'haout diou ha teir gwech pep miz.

Buhez sant Fransez diskouezet e sinema. — En hon amzer e vez graet kalz droug dre ar sinema; drezan e vez goapaet kement tra santel, kement tra fur, kement tra glan ha leal; met evel ar gontell hag a droc'h diouz an daou du, e c'hell ober ivez kalz vad.

Gwelet e vez breman er sinema an Istor santel, Buhez Hor Salver Jezuz-Krist, buhez ar Sent, labouriou ar visionerien er broiou gouez, lidou an Iliz, etc... etc...

E Pariz ez eo bet ivez diskouezet nevez 'zo er sinema Buhez Hon Tad sant Fransez, ha kaer meurbet eo da welout.

Gouel en enor da santez Marc'harid a Gorton. — Daou-c'hant vloaz 'zo tremenet, e voe diskleriet santez ar Plac'h-ëtirus Marc'harid a Gorton, lesanvet Madalen an Drede-Urz. Evit envori he santelez e vezo graet goueliou kaer en he bro eus ar 22 a viz C'houevrer d'ar 4 a viz Du.

Penaos e tremen ar pab Pi XI e zervez? — Kement-man a lenner en eur gelaouenn eus Rom :

« Savet abret diouz ar mintin, an Tad santel ar Pab a lavar e oferenn hag a chom goude pell-amzer da bedi. Dijuni a ra buan ha da 9 eur e tigemer ar C'hardinal Gasparri, e sekretour bras; war-lerc'h e teui ar Gardinaled all, an Eskibien ha Renerien an Urziou menec'h.

Da ziou eur e tebr e lein, bepred e-unan. Ober a ra neuze eun eur vale el liorz ar Vatikan. Ha d'al labour betek 9 eur, 10 eur hag ouspenn a-wechou.

Neuze e tebr eur goan verr. En em denn a ra c'hoaz eur pen-nad amzer en e gambr pe en e leordi, hag evit kloza an dervez e skriv an diverra eus al labouriou graet a-hed an deiz.

Ne da da gousket ken n'en deus graet pedennou hir da Zoue. »



LOURD, katekiz beo

Lourd ha gloar ar Werc'hez gloriüs Vari en Nenv.

Sonjet hort doa er wech diweza er rezureksion hag er vuhez hon c'hortoz er bed all, hag a vezo evidomp, m'her meritomp, eurus-ted ar baradoz. Met ne c'hellomp ket, en eur miz konsakret da Vari, kuitaat an diou wirionez-se hep sonjal ez eo anvet ar Werc'hez Vari gant an Iliz : « Rouanez en Nenv, *Regina caeli* » ha « Rouanez an holl Sent, *Regina sanctorum omnium*. » A dra-sur, en Nenv, ar pezh a raio ar pep gwella eus hon eurus-ted e vezo gwel-tet ha kaout Doue. Met goude-se e c'hellomp lavaret e vezimp eürus ivez o welet Mari gant hon daoulagad, o saludi anezi evel hor Rouanez hag o karet anezi evel hor mamm.

Deomp a spered betek Lourd da iliz ar Rozera, ha sellomp ouz an taolennou a ziskouez ar pevare hag ar pempet mister a c'hloar : an taolenn er deus röt da Vari douget d'an Nenv hag azezet e-harz an Dreinded Santel, ar wiskamant a oa ganti p'en em ziskouezas da Vernadet.

En diou daolenn-se e weler traou eus an douar ha traou eus an Nenv. War an douar e welomp bez ar Werc'hez Vari digoret gant an ebetel evit enori eur wech c'hoaz he relegou santel. Met tri devez a zo tremenet abaoe m'eo bet lakaet ennan korf ar Werc'hez venniget; an ebetel en em gav re ziwezat : ar bez a zo gullo : ne chom ennan nemet bokedou roz, evit diskouez eo bet ebarz an hini a vezo « Rouanez ar Rozera »... Ha setu aman ar pezh a welomp en Nenv : Mari savet eus a varo da veo ha douget gant an aelez, a zo resevet gant an Dreinded Santel : gant an Tad evel e Werc'h gant ar Mab evel e Vamm, gant ar Spered-Santel evel e bried.

Ha war an daolenn all, Mari n'eman ket hepken o chom er baradoz; azezet eo e-harz he Mab, war eun tron, aelez ha sent en-dro d'ezi, o kana he meuleudi. Erfin, e traon an daolenn, Iliz an douar a unan he mouez gant Iliz an Nenv evit glorifia ar Werc'hez. Iliz an douar a zo livet dindan furm ar c'henta pabed o deus enoret Itron-Varia-Lourd : Pi IX, Leon XIII ha Pi X; dindan furm an eskibien o deus labourer da sevel ha da gaeraat ar perc'herinaj, azalek an aotrou Laurenz betek an aotrou Schoepfer, hag erfin, dindan furm Bernadet, e renk an dud fidel.

**

Netra war an douar ne c'hell rei eur skeud eus gloar ar Werc'hez Vari e-touez ar sent hag ar sentezed. E Lourd, koulskoude, Mari he deus diskouezet ar c'hloar-se da Vernadet, met disteraet

hag amguzet, rak m'he dije diskouezet he holl gened d'udius, Bernadet he dije gallet mervel gant re a levez.

Netra nemet o welet Mari evel ma oa, ar plac'hig e gemere eun dremm skedus hag a oa dic'halloud da-c'houde da rei eur skeud eus ar pezh he doa gwelet.

Pa veze goulnnet diganti : — Daoust ha kaer e oa ar Werc'hez ? hi a responte : « Kaeroc'h eget pep tra er bed. »

— « Ker kaer hag an itronezed-man ?... » Hag e anved d'ezi ar merc'hed ar muia brudet e Lourd evit o gened.

— « Oh ! emezi en eur vouse'hoarzin, an itronezed-man ne oufent ket beza ker kaer. Pa vez bet gwelet an Itron an eus-me gwelet, e karfer mervel dioustu evit he gwelet a-nevez en Nenv.

Hag ar goulnnou a deue war-lerc'h ar goulnnou. C'hoant e oa, dre gomzou Bernadet, da gaout eur sonj bennak eus gened an Itron-Varia, da vihana eus koantiri ar sklerijenn a lugerne endro d'he fenn hag eus kaerder he dilhad... Ha Bernadet a anza-ve n'oa ket goest da gaout komzou din a-walc'h evit rei d'an dud ar sonj-se : « Evel-se, penaos e lintre ar sklerijenn a oa en-dro da Vari : evel sked dous al loar, evel bannou an heol ? »

— « Nann, a responte ar bugel, ar sklerijenn-se n'eo henvel ouz sklerijenn all ebet eus an douar; kaeroc'h ez eo, kalz kaeroc'h ! »

— « Met ar vroz ?... Hag e tiskouezed d'ar plac'hig ar pinvidika satin, ar c'haera dantelez, ar skedusa moar... »

— « Nann, emezi, n'eo ket henvel ouz an traou-se, kaeroc'h ez eo kalz, kaeroc'h !... Hag ar bugel a sarre he daoulagar, evel evit asgwelet en he fenn ar Werc'hez venniget.

*
**

Evel-se, istor Lourd he deus rôet d'eomp evel eun diswel eus gloar ar Werc'hez Vari, Rouanez an Nenvou. Met pegwir hon eus sonjet dija e buhez an amzer-da-zont, n'ankounacheomp ket e vezo ret d'an darn vuia eus an dud fidel genel d'ar vuhez-se dre ar purkator. Daoust ha Mari, Rouanez Ilizou an Nenv hag an douar, n'en em emell ket ouz an Iliz a boan ?

Eu; netra suroc'h. A dra-sur, Mari hag he deus gwelet Iliz an douar o c'henel, Mari hag a zo Rouanez Iliz an Nenv, Mari n'he deus biskôaz tremenet dre ar purkator : n'he doa netra da gem-penn enni, a-raok sevel d'ar baradoz. N'eus forz, holl vemprou an Iliz a boan a zo bugale d'ezi : he c'haret o deus holl war an douar, marvet int holl, skoazellet ganti, mont a rint holl, a-bred pe ziwezat, d'ar baradoz; he saludi a rint holl evel o Rouanez, ha kana a rint he meuleudi da viken : penaos e c'hellfe-hi chom diseblant en o c'henver, p'emaint er boan ? Mari he deus kalon dener eur vam ! Aliès eta pedomp hi evit enecou ar purkator. « Dor an Nenvou, pedit evidomp ! »

An demezell Mari Bailly, eus Lion.

Istor buhez Mari Bailly a c'hell beza kontet en eur ger : ar boan. Klanv eo bet atao azalek 1892, d'ar mare m'he doa trizek vloaz.

Savet e disheol Iliz-Veur Fourvières, Mari Bailly he deus bet

atao eun devosion vras evit Rouanez an Nenv. Pedit a ra, e-kreiz he foaniou padus, Itron-Varia Fourvières. Tapout a ra d'he seitek vloaz eur fleureuji hag he lak da vont fall en ospital sant Josef, e Lion. Eur vetalenn virakulus taolet en-dro d'he gouzoug he lak da wellaat... Louzaouet eo diwezatac'h, d'hec'h ugent vloaz, en ospital Saintefoy, ouz klenved ar skevent. E-pad ar bloavezh 1901, ar c'hlenved a ziskenn en he bouzellou ha pep fizians d'he gwe-lout a parea, a zo kollet. Hep dale, eur c'hlenved all, anvet e galleg « mningite bacillaire » he zaol war he zremenvan. Met ar glanvourez a ev eur banne dour deuet eus Lourd, hag ar c'hlenved a dorr. Ar Werc'hez dinamm he deus evel-se lakaet meur a wech merk he galloud war Vari Bailly, war an hini a yelo, da viz Du 1902, e urz leanezed ar Garantez, evit beza ankouet gant an dud.

Da viz Du 1901 eo e teuas ar glanvourez, evit an eil gwech d'an ospital e oa bet louzaouet ennan, daou vloaz a-raok. Bez 'he doa neuze daou glenved : unan hag a vezo pareet gant dour Lourd evel m'am eus lavaret, hag egile anvet e galleg « peritonite tuberculeuse » hag a lak he c'hof da c'houeza, he skevent da doulla hag an dersienn da sevel. — « N'eus netra d'ober », eme ar medisin.

Ar paour kaez plac'h yaouank a glev evel-se he setans a varo. Ober a ra a-greizkalon ar sakrifiz eus he buhez, ha sonjal a ra er memes amzer e Lourd. En desped d'he familh ha d'al leanezed a oa war he zro ha na felle ket d'ezo he gwelout o vont keit-se, Mari Bailly a c'houlenn beza digemeret e perc'herinaj Lion, ha lakaet eo en hent war eur c'hole'hed.

Ar glanvourez a zo gwal-livet ha treut; he c'hof a ra d'ezi eur boan kriz, pa 'z eo ret finval; he divisker a zo c'houezet, he alan berr ha tenn. Ar gwad a sav d'he ginou hag an dersienn a gresk.

Digouezet e Lourd, d'ar meurzh 27 a viz Mae 1902, ar glanvou-rez a zo lezet da ziskuiza eun devez. Antronoz, Mari a zo kaset d'ar c'heo, hanter-varo, he fenn gwintet adrenv, liou an astu war he dioujod, hag he daoulagad hep buhez. Pa 'z eo digaset d'ar pisinou, eur vaouez a zoug adrenv he c'hrevaz eul linser evit he sebella, hag an dougerien a lavar pedennou an angōni. Itronezed ar pisinou ne fell ket d'ezo he diskenn en dour, ha ne reont nemet he glebia gant eul lien.

Mari Bailly a sav atao he spered war-du ar Werc'hez Santel : « Rouanez an Nenv, emezi gousdadig, mar ho peus c'hoant, c'houi a c'hell va farea evel-se kerkouls ha pa ziskennfen en dour ! »

Neuze he foan a deu da veza skrijusoc'h eget biskoaz. Hag en eun taol ar boan-se a gouez. « Setu me pare », eme ar plac'h yaouank. Ar vaouez a zo ganti a gred he deus-hi kollet he fenn.

E gwirionez, ar glanvourez a zo pare : tenna a ra mat hec'h alan, lammat a ra mat he c'halon; dont a ra eul liou fresk ha roz war he diou-jod; digeri a ra he daoulagad; mousc'hoarzin a ra ouz ar re a zo war he zro hag eva a ra eur banne laez hep heugl na distaol.

Antronaz, d'an 29 a viz Mae, Mari Bailly a zo ker yac'h ha n'eus forz piou; sevel ha debri a ra. En em wiska a ra hec'h unan, mont a ra da bourmen, pignat a ra an deleziou peder eur


war-ugent goude. He nerz a zo deuet en-dro, hag evit distroï d'ar ger, eur « bank » trede klas » n'eo ket re' skuizus eviti.

An holl vedisined a zo e Lourd, an holl vedisined a zo bet war he zro e-pad he c'hlenvejou niverus, a gouez ar zabatu warno, hag a lavar ez eo burzudus he faredigez. « Eun hevelep kleved, emezo, n'eo bet, biskoaz pareet e ker berr amzer ha ma' z eo bet graet e Lourd. »

Erfin, war-lerc'h ar mirakl-se, d'an 8 a viz Eost, goude heza gounezet daouzek lur bouez oc'h ober pemzek deiz, Mari Bailly a zo bet digemeret e kouent leanezed sant Visant-a-Baol, ru du Bak, e Pariz... Bennoz da It'ron Varia Lourd !



Pedomp evit hon anaon



Gwipavaz. — 1) Tereza KOLIN (*C'hoar santez Filomena*), maro d'ar 17 a viz Ebrel goude 2 vloaz profesion.

2) Franseza PIRIOU (*C'hoar Franseza Roman*), maro d'an 18 a viz Du.

An diou c'hoar-man o deus bepred heuliet o reolenn gant evez ha skoueriou mat meurbet o deus rôet atao d'o c'hoarezed en Drede-Urz. Ar re-man n'ankounac'haint ket da bedi evit o eneou.

Plouhineg. — 1) Janed KABON, intanvez Kolin, (*e relijion choar sant Yann an Avieler*), 28 vloaz a brofesion.

Ar c'hoar-man a zo bet eur skouer gaer evit he breuriez hag he farrez. E-pad ar seiz vloaz m'eo bet war he gwele, seizet, he deus gouzanvet he foaniou gant habaster (patience); bemdez a rae hent ar groaz, ha lavarout a rae ar chapeled, kurunenn sant Fransez, ha pedennoù stank evit eneou ar purkator.

N'eus forz peger paour e oa, ec'h esperne kement ma c'helle evit rei aluzenou da Vreuriez ar Feiz.

2) Marc'harid MOALIG, intanvez ar Lay, (*e relijion c'hoar Elizabeth*), 15 vloaz a brofesion; maro gant eur c'hlenved hir ha poaniou gouzanvet gant kalz a bazianted.

Plabenneg. — Mari-Anna ABIVEN, (*e relijion c'hoar Mari-Madalen*), digemeret en Drede-Urz d'an 3 a viz Here 1891, maro d'ar 26 a viz C'houevrer 1928 d'an oad a 74 bloaz, — a zo bet renevez (supérieure) ar Vreuriez abaoe m'eo bet savet (1901). — Hor gwel-la gourc'hemennoù a genganv d'he c'hoarezed en Drede-Urz ha d'he breur misioner a zo o prezek an Aviel (Dakar) abaoe 45 bloaz, e Breuriez ar Spered Santel (Congrégation du Saint Esprit).




Buhez burzudus eun douger-sammou MAZE TALBOT

4 levrig	dre ar post	0 fr. 65
10 —	—	5 fr. 75
25 —	—	14 fr.
50 —	—	28 fr.



AN EURED KRISTEN (kantig.)

Priz : 22 real ar c'hant, dre ar post.



Kantigou NEVEZ :

SAKRAMANT AN AOTER,

KANTIG DA JEZUZ-KRIST ROUE

an « DE PROFUNDIS », *pedenn an anaon.*

Priz : 15 lur ar c'hant, dre ar post.

Goulennit al leor hag ar c'hantigou-man digant

an Tad Theodor ROUSSEL, 28, Avenue de la Marne, Lorient.

Chèques Postaux de Nantes : c/cⁿ 46.28.



Levriou nevez e galleg

P. TÉQUI, libraire-éditeur, 82, rue Bonaparte, Paris (VI^e).

Mgr TISSIER, évêque de Chalons. — **Grands Sanctuaires Français, HISTOIRE ET DOCTRINE.** — Chartres, Mont-Saint-Michel, Vezelay, Paray-le-Monial, Bourges, Domremy, Lourdes, Chartres. — Ouvrage orné de gravures. — Prix : 10 fr.

Chanoine E. DUPLESSY. — **Le Catéchisme en problèmes. COURS MOYEN :** catéchisme de communion solennelle. **LIVRE DU MAÎTRE.** — Prix : 9 fr.

Chanoine E. DUPLESSY : **Résumés de catéchismes. Extraits du Catéchisme en Problèmes.** — Prix : 1 fr. 50.

Abbé Ch. PERRAUD. — **Méditations sur les Sept paroles de N.S. Jésus-Christ en Croix,** avec une introduction et un épilogue du Cardinal Perraud, évêque d'Autun. Septième édition. Volume de 268 pages.



Cum permissu Superiorum. Le Gerant : G. LE BAYON

Moulerez AR BAYON-ROGER, 13, Tachenn Alsace-Lorraine, en Oriant.



Ra vezo mentet Jezuz-Krist !

Bepred.



Kenteliou Sant Fransez

Kelaouenn viziek gant Skeudennou



TAOLENN AR MIZ

Gouelioù ar miz	65
Sonjit ervat	66
Brezel d'an alkool milliget	68
Anna ar Sant	70
Buhez sant Fransez a Asiz	72
Lizer hon Tad Santel ar Pab Pi XI	74
Bleunioù sant Fransez	77
Lourd ha servich Doue	80
Braourez Trede-Urz savet e Ploare	80
Misionoù	80

Rédaction et Administration

P. Théodore ROUSSEL

F.M. Capucin

28, Avenue de la Marne, LORIENT

C/c. : 46.28 NANTES

Priz : d'ann skoued ar bloaz

- 1 Meurz S. Filip ha S. Jakez, Ebestel.
DEN EÜRUS VIVALD, eus an Drede-Urz.
SANT BRIEG, kenta eskob Sant-Brieg.
- 2 Merc'her .. Eizvet deiz goude gouel bras S. Josef.
- 3 Yaou Gouel ar Groaz kavet.
- 4 Gwener ... Santez Monika, intañvez.
- 5 Sadorn ... S. VISANT FERRIER, eil patrom eskopti Gwened.
S. PI V, Pab.
-
- 6 Sul *Pevare sul goude Pask.*
- 7 Lun S. Stanislas, eskob ha merzer.
- 8 Meurz S. Mikael Arc'hael war ar menez Gargan.
- 9 Merc'her .. S. Gregor a Nazians, eskob ha doktor.
- 10 Yaou S. Antonin, eskob.
- 11 Gwener ... TUD-EÜRUS JULIAN, LADISLAS HA JAKEZ, kovez. eus ar genta Urz.
- 12 Sadorn ... S. Nere hag e' genseurded, merzerien.
-
- 13 Sul *Pempet sul goude Pask.*
PLAC'H-EÜRUS PETRONIL A DROYES, gwerc'hez eus an eil Urz.
- 14 Lun *Rogasionou.* — TUD-EÜRUS BERTHELE ha BENVENU, kovez eus ar genta Urz.
- 15 Meurz *Rogasionou.* — S. Yann-Badezour eur ar Sall, kovez.
- 16 Merc'her .. *Rogasionou.* — S. Ubalde, eskob.
- 17 Yaou YAOU-BASK. — A.J. — I.P.
S. PASKAL BAYLON, kovez. eus ar genta Urz. — I.P.
- 18 Gwener ... S. FELIX A GANTALIZ, kapusin. — I.P.
- 19 Sadorn ... S. ERWAN (pe YOÛEN), beleg eus an Drede-Urz.
PLAC'H-EÜRUS UMILIANA, intañvez eus an Drede-Urz.
-
- 20 Sul *Sul goude ar Yaou-Bask.*
S. BERNADIN A SIENN, kovez. eus ar genta Urz. — I.P.
- 21 Lun DEN-EÜRUS KRISPIN A VITERB, kapusin. — I.P.
- 22 Meurz TUD-EÜRUS YANN HA PER, merzerien eus ar genta Urz.
- 23 Merc'her .. S. YANN-BADEZOUR ROSSI, kovez. eus an Drede-Urz.
- 24 Yaou Eizved ar Yaou Bask.
- 25 Gwener ... Gouel Dedi Iliz-veur Asiz.
- 26 Sasorn ... Vijil ar Pantekost.
-
- 27 Sul SUL AR PANTEKOST. — A.J.
- 28 Lun Lun ar Pantekost.
TUD-EÜRUS PER HA REMOND, merzerien eus ar genta Urz.
- 29 Meurz Meurz ar Pantekost.
- 30 Merc'her .. *Pevare amzer (Daouzek deizou).* — S. PERDINAND, roue, eus an Drede-Urz. — I.P.
- 31 Yaou SANTEZ ANJELA MERISI, gwerc'hez eus an Drede-Urz. — I.P.



MAE 1928

Sonjit ervat

Seizvet malloz Hor Salver

I.— Sonjit ervat : Hor Sälver en deus taolet e valloz war ar bilpoused (hypocrites). Alies-alies en deus o mallozet, evit diskouéz n'eus netra hag a zisplijfe d'ezan kement hag ar bilpou-serez (hypocrisie), rak Doue a zo Doue ar wirionez, ha ne c'hell ket gouzanv e ve goapaet ar wirionez.


Na glaskit ket beza, war eun dro du ha gwen. Mar doc'h e tu an droug-spered, bezit e tu an droug-spered; mar doc'h e tu an Aotrou Doue, bezit e tu an Aotrou Doue, korf hag ene. Doue a c'houlenn holl pe netra.

II.— Sonjit ervat : perak eo ar bilpoused mallozet gant Doue ? Abalamour ma reont goap Anezan. E-lec'h adori Doue int o-unan eo a adoront. Kement a reont, evito eo her greont. Ma reont an neuz da adori Doue, n'eo nemet evit beza gwelet gant an dud, beza deuet mat d'ezo ha gellout aesoc'h pe sevel en enoriou, pe zastum madou. Ne daint war-dro iliz ha ne lavarint pedenn nemet sellou an dud a ve warno. Ha karet a ra an dud-se Doue ? Nann, int o-unan eo a garont, ha Doue, nemet e choapaat ne reont.

III. — Sonjit ervat : p'en deus Hor Salver mallozet ar bilpoused, en deus diskleriet e oant henvel ouz beziou gwen skedus en dia-vaez ha leun a vreinadurez en diabarz. Perak ar c'homzou-se ? Evit diskouez peger bras hag euzus eo pec'hed an dud-se a ro da

gredi int tud santel, pa na dint nemet pec'herien. O lakaat an dud da gaout doujans hag enor evito, o lakeont da gaout doujans evit ar pec'hed e-unan.

Diwallit : ra vezo atao hoc'h oberou henvel ouz ho sonjezonou ! Bezit en diavaez ar pezh ez oc'h en diabarz. Na roit ket da gredi d'an dud ez oc'h eur sant, p'eman ar pec'hed en ho kalon.




Brezel d'an alkool milliget

- 1.— N'ouzoun ket a belec'h, met deuet eo en hor bro;
Kalz tud en deus lazet, re all c'hoaz a lazo;
Ne esperno hini, dijentil na bourc'hiz,
Labourer, micherour, nann, na den a Iliz.
- 2.— Gwechall ar gwin-ardant, hanvet dour a vuhez,
An dud e implije gand ar brasa, evez,
A gemere nebeut hag a veradennou,
'Vel eun dra talvoudus da derri terziennou.
- 3.— Hirio e vez evet gant bolenn ha skudell;
Ar mesvier zo lontek, ha toull eo e rastell.
Rak siouaz ! An alkool ne ro nemet sec'hed,
Laza ra korf an den, e nerz hag e yec'hed.
- 4.— Bihan eo ar familh, ma ne gaver enni
Tud devet ha lazet gant tan an odivi.
Lod a varv, o truez ! e foz doun an hentchou,
Re all a goll o nerz bemdez a nebeudou.
- 5.— Kerzit dre Vreiz-Izel ha sellit endro d'eoc'h,
Mesverien divalo e pep lec'h a gavoc'h,
Hanter-zevet o dremm ha ruz-tan beg o fri,
Dre m'o deus an tech fall da lonka odivi.
- 6.— Hag hennez zo eun den ? Ober 'ra mil arvez,
Diskramailh, randoner, glaourennek ha divez;
Zudal, krial a ra, hag e ve lavaret
E welit dirazoc'h eul loen kriz kounnaret.
- 7.— Gwech e kousko 'vel maen; lopit, lopit varnan,
Ne deuoc'h ket a benn morse d'hen dihunan;
Gwech ne gousko berad, ha dihun 'pad an noz
Gand e drouz e viro ouz e dud da repoz.
- 8.— Arc'hant en deus, sur eo, ha n'eus forz pegement;
Eur banne ho pezo, hag eun taol doarn kerkent;
En em ganna a rank, hen ober a raio;
Ma n'eus den dirazan, var ar gwez e skoio.

- 9.— E glevit o veuli an dilhad a zougenn,
E dok kaer, e roched, dreist-oll e gravatenn;
Ne laro ger, avat, eus e dreid leun stlabez,
Bet er fank, er vouilhenn hag e kreiz pep lastez.
- 10.— Eman 'kichen ar ster a ranko da dreuzi;
Ledan awale'h ar pont evit daou, evit tri;
Va den a zo aonik, ha var e grabanou
Gant poan ha gand amzer e tremen a ruzou.
- 11.— Er vourc'h, er gear ive odivi a evo;
Gwerza ray evit-se n'eus forz petra gavo,
Ar c'hig hag an amann, al laez hag an holl viou,
Evit n'eus forz pe briz ha ne ra forz da biou.
- 12.— Gwechall en tiegez oa brao ar parkeier,
Kezeg mat en devoa, chatal leun ar c'hreier,
Berniou plouz, berniou foen uhel 'vel menezioù;
N'oa ket dre ar barrez eur gear 'vel ar Reuniou.
- 13.— Breman n'eus mui netra, ar c'hreier zo goullou;
E penn al leur hepken eun tammig bern kolo;
Ar c'hignol ne glemm mui dindan pouez bras en ed,
Hag abenn miz gouere e vez skort ar boued.
- 14.— E c'hwreg, ker koant gwechall d'ezan pa zimezas,
N'he deus nemet anken ha trubuilh ha tregas;
Eun ifern eo an ti, mezus beva ennan,
Hag ar c'hwreg kêz alies a weler o lenvan.
- 15.— Gwechall e ti he zad oa evurus meurbet,
E kreiz ar peoc'h, an urz, gand he c'herent karet.
Breman, mintin ha noz n'he deus nemet safar,
Enkrez heb ehana, rann-galon ha glac'har.
- 16.— Drouklivet, truezus, ha tenval du he fenn,
E c'hell, ken dinerz eo, a vec'h en em zougenn.
Graet eo gand he buhez, gedal 'ra ar maro,
Rak n'heller ket beva en eur stad ker garo.
- 17.— Met siouaz ! var he lerc'h e chomo bugale.
Ar yaouanka, Perig, a vec'h ma c'hell bale.
Gant piou 'vezint maget, piou evesay outo,
Piou c'hello kentelia ha karet anezo ?
- 18.— Oh ! an tech divalo, tech lous an odivi !
Prim gantan pep kalon a deu da galedi.
Ne glever mui netra, ne zenter mui ouz den,
Ar mesvier zo eul loen, eul loen vil, netra ken.
- 19.— Gounit a rer hep poan ha trei ouz o Doue
Muntrerien ha laeron, tud kriz ha tud goue;
Met goude kalz poania n'hellot ket, a dra sur,
Lakat ar mesvier fall da ren eur vuhez fur.
- 20.— Breudeur, taolomp evez ! Meur a hini, siouaz !
Alies, heb her gouzout, a zo kouezet el las,
Hag oc'h heulia ar c'hiz, o klask plijout d'an holl,
A zeiz da zeiz semploc'h, ez int deuet d'en em goll.

- 21.— Eur marc'had zo d'ober, keuneud zo da brena,
Eul loen da gas d'ar foar, eur mevel da c'hopra,
Kinniget da eva, rak eva vez ranket;
Heb eva, kalz eva ne vo marc'had ebet.
- 22.— Petra larin breman eus dervez ar voti ?
Adaleg ar mintin e ruilh an odivi.
Gand ar boesoun dallet, d'ho kouarn e tibabot,
E lec'h eun den onest, ar falla lakipot.
- 23.— Ha n'ho peus ket a vez, lavarit, gwazed keiz,
O trinka evelse, oc'h eva 'pad an deiz,
O kemeret siouaz ! falla den zo er vro
Evit ren ar gommun ha kas an traou en dro ?
- 24.— Ha kredi a c'heller e vije benniget
Eur votadeg mezus evelse tremenet ?
N'ho peus graet, klevit mat, netra nemet pec'hi,
Ha renet gant Satan ez oc'h aet da voti.
- 25.— Awalc'h am eus laret, ehana ran aman,
En han 'Doue, breudeur, klevit ar bedenn-man :
'Vit dere'hell yac'h ho korf, dere'hell yac'h ho spered,
Kaout joa ha levenez, beza eürus er bed,
- 26.— Lezit ar gwin-ardant, rak n'eus ket falloc'h tra;
Diskiant e vent ato ar re a gar eva.
Diwallit ouz ar c'hiz, ouz an digareziou,
Ha bannit an alkool eus ho tiegeziou.



ANNA AR SANT
eus an Drede-Urz, dibennet e Kemper (1794)

Anna ar Sant a voe ganet e Ploenan, e bro-Leon, d'an 9 a viz Kerzu 1748, e maner Penn-an-Nec'h.

D'he daouzek vloaz e voe kaset da skol Leanezed Santez Ursul, e Sant-Paol.

Diströet d'ar gêr, ne zaleas ket da rei hec'h ano da Vreuriez an Drede-Urz a yê ker mat endro en he farrez.

He c'hoar-gaer, Anna Kadiou, o veza kollet he gwaz, Anna a roas dorn d'ezi da sevel he fevar bugel

Beva a raent eno o-diou sioul ha didrouz, pa zeuas an dispac'h bras (Révolution) d'ober e reuz war ar vro.

Repu ebet evit ar veleien vat, evit ar venec'h, al leanezed chomet stag ouz o reolennoù, met an harlu pe ar maro.

Anna ar Sant a sonjas er gentel eus Reolenn an Drede-Urz a c'houre'hemenn an oberou mat.

Daoust d'an difenn graet gant ar forbanned a rene ar Frans, e tigoras frank dor he zi d'ar veleien, d'ar gloer ha d'al leanezed ha n'o doa ket pleget d'al lezennoù fallakr.

Diskuilhet gant eun traitour eus ar barrez, Anna a oa tapet gant ar « re c'hlas », ha ganti daou veleg all hag eul leanez kuzet en he zi. Evel m'o doa c'hoant ar soudarded da gas ganto he c'hoar-gaer : « Nann, emezi, Anna Kadiou he deus bugale vihan da sevel, hag ouspenn me eo an hini a zo mestrez aman; me a zo bêt ganet ha savet e Penn-an-nec'h. Me va-unan a guze ar veleien, me eta a tle mervel. »

Asanti a reas an archerien; lakaet e voe en eur c'harr, gant an daou veleg hag al leanez Ursulez, ha kaset e voent o fevar da Gemper.

D'ar mare-se ne bade ket pell-amzer ar varnedigez. Al leanez, o veza en em zouget evel matez e ti Anna, a voe laosket da vont da Bloenan; met an tri-all a voe kondaonet d'ar maro. N'ouzomp perak, ar barner a gemeras truez ouz Anna : « C'houi e c'hell, emezan, distrei d'ar gêr gant ma touefec'h chom hiviziken hep kuza beleien dizentus ouz lezennoù a vro. — Va c'houstians, a respontas, a lavare d'in kuzat ar veleien vat; n'em eus keuz ebet, ha ma c'hellfen c'hoaz, ne rafen ket en eur c'hiz all. — Ac'hanta, eme ar barner, neuze e varvoc'h ivez ! »

Na laouen e oa Anna o vervel evit he feiz !

Dilhad he Salver a voe bet rannet etre e vourrevien; hi a c'houlenias ivez ma vefe rannet he re etre peorien Ploenan.

Dibennet e voe, e Kemper d'ar 15 a viz Gwengolo, gant an daou veleg he doa kuzet. N'eo ket bet kavet o c'horfou, rak sebeliet e voent en toull-bez boutin e-mesk ar c'horfou all.

Parrezianiz Ploenan o deus sellet Anna ar Sant evel eur santez ha fizians hon eus e vezo rôet d'ezi eun dervez an ano-se gant an Iliz. Pebez enor neuze evit ar barréz ha Breuriezou Trede-Urz Breiz-Izel !

Niverus eo, an deiz hirio, tud Ploenan a zeu eus kerentiez Anna; en o zouez, ez eus daou veleg c'hoaz beo.

Setu aman eur poz-kan eus ar werz kaer savet, a greder, er bloaz 1807, diwar buhez ha maro Anna ar Sant :

O C'houi Plouenaniz

Goulennit he relegou

D'o flas en hoc'h iliz,

E maen sakr an Aoteriou.

Na lezit ket er bez


Ho skouer a zevosion,

Korf hoc'h advokadez,

Enor ho relijion.

Tad F.





Buhez Sant Fransez a Asiz

PEMPET PENNAD

Vertuzion an diskibien genta

Fr. D. J.

KENTEL 1. — Bro goant Orte. — « Prezegit », eme an Aotrou Doue. — Distro da Asiz. — Lochenn enk. — Meulit Doue. — Aes gounit ar baradoz.

Eun testeni a garantez a-berz an Aotrou Doue a verkas hent an distro. Eun dervez n'o doa ar veachourien tamm da zebri da vare ar pred. Eun den yaouank kaer a roas d'ezo neuze eur bara bras hag a yeas kuit.

Pa zigouezjont e-kichen Orte, en eul lec'h dudius, e tiskreizjont e-pad pemzek deiz. Tud ker a oa brokus ouz ar vreudeur a save betek eno da c'houlenn an aluzen, hag ar vro a oa ker koant, an draonienn ker glas ha ker kaer gant he bokedou, m'o doe ar veachourien evel c'hoant da chom eno da veva didrous. Er menez a oa e-kichen, e kaved eur maread reier kleuz hag a ginnige ar gwasked d'an ermited nevez.

Fransez a bedas gant e vignoned, ha Doue a zisklerias d'ezan : « Ne dleez ket beva evidout da-unan ; galvet out da ziframma eneou digant Satan evit o rei d'o C'hrouer. »

Distrei a rejont eta da Asiz evit mont da chom e lochenn Rivo-Torto, eul lochenn savet e-kichen eur wazenn zour kamm ha froudennus. Al lec'h a oa ken enk ma rankas an Tad skriva ano pep-hini war an treustou hag ar mogeriou, evit ma vije aes renka an holl. N'o doa ket c'hoaz a leor pedennou evel m'o deus ar veleien ; setu neuze en em

vodent en-dro d'eur groaz goad savet en o c'hichen, ha goude beza selaouet komzou entanet ar Sant war garantez Jezuz-Krist evidomp, e pedent gant dudi.

Deski a rae Fransez alies d'e ziskibien lenn e leor bras ar bed, kaera ha brasa hini a zo. « Pa zigorit ho taoulagad da sellout ouz an traoniennou glas, ouz ar bokedou koant, ouz ar menezioù uhel, ouz an oabl steredennet e-pad an noz, e fleit sonjal : « Evidoun-me eo en deus krouet Doue an traou kaer-se. Pa welit ar marc'h o tebri evit gellout sikour an den, ar vioc'h o peuri evit rei d'ezan he laez, pa glevit al laboused o kana lirzin, e fleit meuli Doue hag anzavout e c'halloud, e furnez, e vadelez evidomp. »

« Pa sonjit ez oc'h galvet d'e servicha er baourentez, meulit-hen c'hoaz : mont a reer buanoc'h d'ar baradoz eus eun ti-soul eget eus eur maner pinvidik. »

En doare-se eo e kentelie Fransez e ziskibien.

KENTEL 2. — Gweledigez ar c'harr tan. — An impalaer Othon. — Ar beleg Jilvestr en Urz. — Eur c'houeriad gant e azen e lochenn Rivo-Torto. — Ar Sant a ya d'ar Borsionkul. — Gwelout a ra ar Werc'hez.

Doue, evit kennerza an diskibien en o fizians en o mestr, a reas eun nozvez eur burzud evito. Fransez a oa aet da gousket e ker, ha rannet e oa e dud e daou rumm : an hanter anezo a bede, an hanter all a oa en em roet d'ar c'housked. War-dro hanter-noz e reas eur c'harr tan, doare eun heol skedus warnan, teir gwech tro al lochen en diabarz. Ouspenn-se, e c'hellas ar Vreudeur lenn, ken aes ha tra, an eil e koustians egile, ar sonjezonou ar muia kuzet, keit ha ma padas ar burzud.

Entent a rejont dre eno peger mignon, e oa o zad d'an Aotrou Doue.


Impalaer an Almagn, Othon, a dremenas dre Asiz, en derveziouse, evit mont da Rom ; met na Fransez nag e vreudeur ne dejont d'e welout. War urz an Tad e tisklerias d'ezan unan eus an diskibien : « Mont a rez da glask gloar hag enor, met ne badi ket pell. » An impalaer-se en doa graet laza an hini en doa douget ar gurunenn a-raozan. Bloaz da-c'houde e rankas ar pab teurel warnan an eskumunugenn ha pevar bloaz diwezatoc'h e voe skôet gant ar maro. An diskibien a anzavas etrezo : « Ne guz Doue netra out hon Tad. »

D'ar mare-se e tisklerias ar beleg Jilvestr evit an eil gwech da Fransez ez aje d'e heul. Gwerzet en doa mein d'ar Sant, pa oa oc'h adsevel iliz Sant-Damian, met pa welas Bernez o ranna e beadra etre ar re baour, Jilvestr a lavaras da Fransez : « N'ho poa ket paet a-walc'h va mein d'in en deiz all. » Ar Sant a roas d'ezan eun dornad eus arc'hant Bernez en eur c'houlenn : « A-walc'h ec'h eus breman ? — Ya, eme ar beleg, breman oun paet mat. »

Eur wech distro d'ar gêr, Jilvestr en doe keuz ha mez. En noz war-lerc'h e welas dre e gousk eur groaz aour o sevel diouz genou Fransez hag oc'h astenn he divrec'h war ar bed holl ; setu

ma teuas da gaout an Tad evit goulenñ beza digemeret e-touez e vugale. Ar Sant a reas d'ezan eun digemer laouen, ha Jilvestr a c'hellas rei an dilez eus e garg eun nebeud miziou diwezatoc'h ha mont da heul Fransez.

Eun den diwar ar mæz, hag a yeas gant e azen e lochenn Rivo-Torto hep gwir-ebet, a reas da Fransez ha d'e vreudeur distrei d'al lochennou o doa e-kichen chapel ar Borsionkul. An nozvez kenta a dremenas Fransez eno a voe implijet er chapel o kana meuleudi d'ar Were'hez hag o pedi a-greiz kalon. An Itron-Varia, leun a garantez evit he servicher feal, en em ziskouezas dirazan gant eur gurunenn aelez skedus en-dro d'ezi, hag e sklerijennas war an traou burzudus a dlie c'hoarvezout er chapel venniget-se an-amzer-dazont. Pegen laouen e voe Fransez eus ar weledigez-se !



ASIZ. — SACRO-CONVENTO.

Lizer hon Tad Santel ar Pab Pi XI

diwarbenn ar 700^{vet} bloavez goude maro Sant Fransez

(Kendalc'h)

E c'hlanded hag e binijenn

N'hellomp ket chom hep komz d'eoc'h eus ar vertuz ker kaer ha ken dinam karet dreist ar re-all gant ar Sant : dre binijennou rust e tiwalle hag e tifenne diouz an droug gwerc'hded e ene ha gwerc'hded e gorf. Her gwelet hon eus den yaouank gwisket flour ha douget d'ar blijadur o chom evelato direbech, zoken en e gomzou. Met kerkent ha m'hen doa trôet kein d'ar bed, e veze soursius bras da lakaat dalc'h war e skianchou, betek en em ruilha e-touez an drez hag ar spern hag en em deurel en dour skornet e-kreiz ar goanv, pa sante ar blijadur fall o likat e gorf. A-hent-all an holl a oar e klaske dougen an dud da veva hervez an Aviel, dre e skoueriou ha dre e gomzou; o lakaat da garout Doue ha d'ober pinijenn evit o fec'hejou.

War e gorf e touge eur roched reun; n'hen doa ken gwiskamant nemet eur sae mezer kalet ha paour; bepred e kerze diarc'hen; evit kousket, e harpe e benn ouz eur maen pe eun tamm koad; ne zebre nemet ar pezh a oa ret evit chom beo, ha c'hoaz e veske dour pe ludu gant e voued, evit rei d'ezan blaz fall; tremen a rae zoken al lodenn vrasa eus ar bloaz hep dibri netra. E gorf a oa evitan eul loen direiz, hag atao e veze rust outan, n'eus fors pe

yac'h pe glanv e veze, ha pa na felle ket d'ezan plega, e veze c'hoaz krisoc'h en e genver. Er bloaveriou diweza eus e vuhez, p'en em gave henveloc'h ouz Hor Salver, dre ma oa evel stag ouz ar groaz gantan ha ma touge merkou ar Basion en e izili, ha ma oa brevet gant hep seurt klenvejou, neuze memes ne rôe d'e gorf na diskuiz na didorr ebet.

Ar memes soursi a gemere da voaza e venec'h da ren eur vuhez kalet ha pinijennus. Koulskoude gourc'hemenn a reas d'ezo di-wall da vont re-bell gant ar yun hag ar pinijennou korf : war ar poent-se hepken, ne felle ket d'ezan gwelet e vugale o kemer skouer rik-ha-rik warnan.

E garantez.

An holl vertuziou-se a save diwar ar memes keff : karantez Doue. An dra-se n'eo ket diës da welout. Evel ma skriv Thomas Selano, Sant Fransez, « tomm-bero gant karantez Doue, a glaske atao ober traou brasoc'h; en eur vale kalonek war hent gourc'hemennou Doue, n'hen doa nemet eur c'hoant : tizout lein menez ar santelez. » Hervez testiñ Sant Bonavantur, Fransez « a oa henvel ouz eur c'hlaouenn veo beuzet holl e tan karantez Doue » : ha meur a hini a skuilhas daelou druz o welout en doa kavet ker buan an doare d'en em goll e karantez e Grouer. Ar garantez-se a ziskenne puilh war an nesa. An dud poaniet ha dreist-holl an dud lor ha n'helle ket da c'houzant, pa oa yaouank, a zeuas da veza e vrasa mignoned. En em drec'hi a reas e-unan, betek en em lakaat d'o servicha ha d'o louzaoui, hen hag e vugale. Ar memes karantez hirvidik a felle d'ezan gwelout ivez etre e ziskibien, eur garantez a vreudeur; setu perak e Urz « a savas evel eun ti kaer a garantez, eun ti graet gant mein beo dastumet e pevar c'horn ar bed, evit rei lojeiz d'ar Spered-Santel. » (Selano).

Chomet omp pell, Breudeur muia karet, da sellet ouz ar vertuziou-se ken dudius, abalamour en hon amzer e vez kavet kalz tud, trenket a spered gant kenteliou faoz ar bed, ha na glaskont nemet tenna digant ar Sent ar gwir splander hag ar gloar o deus gounezet o veva evit Doue. Evito, ar Sent a zo tud trôet dre natur da zibuna pedennou, tud savet, dre natur atao; uheloc'h eget ar re-all, hag o deus graet marteze muioc'h a vad d'o nesa, d'o bro, d'ar bed a bez, ha netra ken. Setu penaos e komz meur a hini breman diwarbenn Sant Fransez : ober 'reont dioutan eur sant mac'hagnet ha digurunet hag e lavaront koulskoude o deus istim ha karantez evitan. Souezet omp gant kement-all : rak da betra dalvezo d'an dud-se enori Sant Fransez p'emaint o-unan o redek warlerc'h an arc'hant hag al leinou bras; o taremprêdi an tachen-nou-kêr, ar c'hoariou, an dansou, gant gwiskamanchou mezus; o teila o ene hag o c'horf e bouilhen ar plijaduriou hudur, hag o stlupal a gostez lezenn Hor Salver hag e Iliz ?

Ar c'homzou a zo aman war-lerc'h a ro harp d'ar pezh emamp o paouez lavaret : « An hini a gav kaer gloar eur sant a dle kaout kaer ivez skoueriou e vuhez. Ma veulit anezan, grit eveltan; n'her meulit ket, ma na fell ket d'eoc'h bale war e roudou. An nep a gav enorus buhez ar sant a dle poania da veza enorus e-unan, dre santelez e vuhez. » (Ofis ar 7 a viz Du).



Bleuniou Sant Fransez

XV^o PENNAD

*Da gear Maria-an-Aelez
Santez Klara deut, eun devez,
A chom gant Fransez da bredan,
E vreudeur war-eun-dro gantan.*

Pa oa e kear Asiz oc'h ober e annez,
Santez Klea 'wele, gwech ha gwechall Fransez
O tont d'he leandi, eun dudi eviti,
Klevout hep tro gantan eun ali pe ali.
Met ar pez a glaske, d'ober vad d'he c'halon,
Ez oa c'hoaz, e-tu-hont, predan gand he mignon.
Pet kwech n'hen devoa ket digantan goulennet !
Met ganti Fransez na asante kammed.

E genvreudeur, poaniet gant trubuilh ar santez,
A lavaras d'o Zad evel-hen, eun devez :

« Lavarit, tad, vit petra
« Poanian kement kalon Klara ?
« N'eo ket diouz ar gwiz garantez,
« Bezan ker garo ouz eur santez,
« 'Zo erru ker mat gant Doue,
« Ker glan ha ma 'z eo hec'h ene.
« Hag evid eun netra !
« Dibri eun tamm bara,
« 'N ho kichen, eviti
« A vefe eun dudi.

« Evit senti ouzoc'h, o ! tad, gouzout a ret.
« He deus troet he c'hein d'he madou ha d'ar bed.

« 'Vit lavarout ar wirionez
« Ma c'hoantafe c'hoaz ar santez,
« Kaout diganeoc'h, eun donezon
« Priziusoc'h 'vid he c'halon,
« Biken n'oulfec'h diservijan,
« Na tremen hep, ho merc'h henan.
« Rôet eo bet d'eoc'h gant Doue,
« Da gaerât d'ezi hec'h ine. »

« Hag e kredet, eme Fransez,
« Ez eo mat d'in, dre garantez
« Selaou he mouez hag asanti
« War he lavar, dioustu, ganti ? » —

« O, ya, tad ker, hon c'hoar Klara
« 'Deufe he c'halon da ranna
« Mar ne selaouet he fedenn;
« Roit d'ezi 'ta he goulemn. » —

« Ac'hanta neuze, 'me Fransez,
« Pa gomzet hervez ar furnez,

« Hoc'h ali,
« Ma hini.
« Mat eo ze d'in;
« Senti a rin.

« Ha 'vid ober d'hon c'hoar,
« Me lavar d'eoc'h, hep mar,
« Plijadur ar muian,
« E teuy, pa lavaran,
« Da bredan, 'kreiz al levenez,
« Da gear Maria-an-Aelez,
« Eman Klara 'vel prizoniet,
« An or dalc'hmat warni serret.

« He c'halon, en he c'hreiz, a vezo laouen bras,
« E deiz ma adwelo ar gouent, ma laras
« Kenavezo enni, d'eur bed kel lubaner,
« Evit 'n em rei a-grenn da Jezus Hon Salver.

« E kear Maria-an-Aelez
« En ano Hon Salver Doue,
« E tebrimp holl a-gevret
« Ar pred d'eomp peuraozet. »

Lakaet an deiz da bredan, sede Klara, ar santez,
Ha dont er-maez he leandi, ha ganti eul leanez,
Ouz o ren eun nebeut breudeur, a-dreuz ar gwennojennoù
E kear Maria-an-Aelez en em gavont, hep ardou.
A-vec'h peurbrennet an or-dal, warnezo er manati,
Klara ha mont eeun d'ar chapel war he daoulin da bedi.
Da bedi dirak an aoter, ma kollas he bleo melen,
Ma lakas, 'vid ar wech kentan, gouel an Eil-Urz war he fenn.
Hag hi, da c'hortoz an eur, da vonet da zibri,
Da ober eur weladenn, eur gentel eviti.

Er c'heit-se Sant Fransez na oa ket dibreder;
An traeou, diouz e wellan, e lake peurober;
Ha 'vel ma oa e c'hiz, war leurenn an douar
E voe an holl meuziou, renket holl, hep emc'hloar.
Ha da sevel ouz taol pan erruas an eur,
Fransez, evit keneilez, al leanez he c'hoar,
Ez azejont neuze war leurenn an douar,
E-dro d'ezo, anat, a-reng, an holl venec'h
Divalc'h e peb doare, pephini 'n e bred-lec'h.
Adalek ar meuz kentan, ha sede Sant Fransez
Da ganmeuli eun Doue kel leun a vadelez,
En eun doare ker kaer-dreist ouspenn, ken helavar,
Ma teuas d'ar gouvidi kaout grasou ken dispar,
Ma ne oant ket ken henvel, nann, ouz tud ar bed-man,
Eur sklêrijenn ar c'haeran, war o zal o lintran,
E-trezek ar Baradoz, digor bras o sellou,
Hag o diouvrec'h astennet, da ninjal d'an Nenvou.

Er c'heit-se, e Betona hag e kearig Asiz,
Ha war ar maeziou tro-zro, na pebez tra iskiz !
An dud a zo 'vel manet... Petra 'zo a-nevez ?...
An tan-gwall krog en iliz Maria-an-Aelez ! . . .
Ar c'hoad, kouls, e-dro d'ezi, 'zo ive entanet,
Mar ne da den d'hel lazan, e vezint peurlosket.
Ha klariz ha mont d'ar red, evel gand an avel,
E-trezek ar manati, da ginnig o skoazell.

An tan-gwall ! . . . O ! ne oa ket ! . . . Eun tan marzus dispar
Evel ne vez ket gwelet kammed war an douar.
En eur dostaat, Asiziz a wele breman sklear
Ez oant holl het touellet, bihan ha bras e kear,
Hag int ha monet raktal tre 'barz ar manati,
Ma kavjont ennan neuze, war-eun-dro, o pedi
Gant Fransez, Santez Klara e-touez o c'henseurted
En eun estlamm burzudus gant Doue holl troet,
Aezet war an douar, ha dirazo meuziou,
Pell diouz bezan, me lar d'eoc'h, evel mel d'ar genou.

An tan a deue kement ar flammou anezan,
Koad, iliz ha manati, seblante, da wallan,
E komprenjont, ne oa ket eun tan, e gwirionez,
Evel ma vez enaouet, war an oaled bemdez,
Kentoc'h eun tan burzudus, enaouet gant Doue,
Evit tomman ar galon, ha devi an ine.
Eur skeudenn hep he far, euz ar gwir garantez,
A-verve e kalon ha Klara ha Fransez.
E kalon o breudeur, evel o c'hoarezed,
Hag a deu da vervel pell diouz an izelded.

Hag Asiziz d'ar gear dinec'h ha dispouron,
Eurus gant ker kaer skouer, frealzet o c'halon.

(da genderc'hel.)



LOURD, katekiz beo

Lourd ha servich Doue.

E-pad al lodenn genta a viz Mari hon eus kanet ar « Gredo » a-unan gant perc'herined Lourd ha pleustret war vrasa gwirioneziou hor feiz. Kredi er gwirioneziou-se, setu ar pezh a zo ret da genta evit meritout ar baradoz. Met kredi n'eo ket a-walc'h. Selaouomp ar c'hatekiz . . . pegwir e-pad ar miz benniget-man hen deskomp e Lourd. « N'eo ket a-walc'h, evit beza' salvet, kredi er gwirioneziou merket er Gredo : ar re o deus an oad a skiant a dle ouspenn miret gour-c'hemennou Doue ha re an Iliz. »

Tadou ar relijion protestant o deus faziet aman. Hervez Luter ha Kalvin, ar feiz hep an oberou a oa a-walc'h evit ober ar silvidigez. Hervez an Iliz katolik, harpet war an ebistel, er c'hontrol, ar feiz hep an oberou a zo maro. « Malloz, a lavare Bosuet, malloz, a lavaromp ivez d'an nep a oar ha na gar ket » ha na servich ket Doue.

Abalamour da-se ar c'hatekiz katolik ne gav ket d'ezan en deus peur-echuet e labour, p'en deus niveret ha displeget ar gwirioneziou da gredi. Pell ac'hano ! Digori a ra pajennoù nevez evit merka warno an deveriou hon eus d'ober.

Ni a raio evel ar c'hatekiz : ni a echuo miz Mari en eur sonjal e brasa deveriou ar c'hristen, en eur lakaat e-kichen an deveriou-se skouerioù tennet eus buhez ar Werc'hez ha taolennou kemeret e perc'herinaj Itron-Varia-Lourd.

* *

Sonjomp hirio er wirionez-man : ret eo d'eomp servicha Doue. Ha pegwir eo Lourd lec'h santel an « Ave Maria », distrômp adarre dirak an daolenn a ziskouez an arc'hael Gabriel o tont da lavarout d'ar Werc'hez-Vari e vije Mamm da Zoue.

Perak eman aze an arc'hael Gabriel ? Abalamour ma 'z eo bet digaset gant Doue : karget eo bet d'ober eur gefridi; hen ober a

ra; servicha a ra Doue. Meuli Doue hag ober e volontez, setu labour an aelez.

Ha Mari, petra 'ra ? Klevet he deus o tont diouz ginou Gabriel holontez an Nenvou : Doue en deus taolet e venoz warni, goulenn a ra diganti servicha. Petra a respont Mari ? « Fiat ! » Ho polontez bezet graet, ya, sevicha a rin. »

Evel-se, setu aze daou grouadur nobl, ar Werc'hez Vari, graet enni gant Doue eun dra burzudus, hag an arc'hael Gabriel, unan eus prised armeou an Nenv : servicha a reont Doue o-daou... Ha ni, paourkaez tud, ni ne vefe ket dao d'eomp hen ober ? Ah ! eo !... Pa grouas Adam, Doue e lakeas e baradoz an dduar hag a lavaras d'ezan : « Kemenn a ran d'it labourat er jardin-man, difenn a ran ouzit debri eus frouez gwezenn skiant ar mad hag an droug; ret e oa eta d'an den selaou Doue ha senti outan, en eur ger, e servicha. Arabat eta dont da lavarout d'eomp n'eus ezomm ebet a oberou evit hor silvidigez, p'o gwelomp kemennet da Adam e kenta pajenn an Testamant koz ha da Vari e kenta pajenn an Testamant nevez !

E-kenver an deveriou hon eus d'ober evit servicha Doue, an dud a c'hell kaout tri seurd santimanchou. Evit her gwelet, eomp eus taolenn genta ar Rozera betek ar c'houec'hvet, an hini a ziskouez Hor Salver en angoni. Bep seurd tud a zo livet war an daolenn-man.

E-kichen Hor Salver e welomp an tri abostol muia-karet, Per, Jakez ha Yann. Kousket int o-zri. Uheloc'h e welomp o tont etrezek jardin an Olived eun ael... ha Judaz, an abostol trubart. D'ober petra e teuont ? Dont a reont d'ober labouriou dishenvel, unan a deu da servicha, egile da drubardi; hag e-pad an amzer-se an tri abostol a gousk hep sonjal nag e Judaz nag en ael.

Setu aze an tri doare a c'hell an dud da gemerout e-kenver Hor Salver : lod a servich, lod all a ra brezel d'ezan ha lod all a chom etre daou, dizeblant pe gousket.

Penaos barn an tri rumm dud-se ? Ar re a servich a ra o dever hag a gemer hent ar baradoz. Ar re a ra brezel da Zoue, ne reont ket o dever, n'ach a reont o fromesa, ha mont a reont, nemet keuz o defe, d'an tan a bado da-viken.

— « Met, a lavaro d'in eur c'hristen bennak, me n'oun ket enebour Jezuz-Krist. A dra-sur, n'e servichan ket evel ma vefe dleet d'in hen ober, ne santelean ket ar sul, ne ran ket va fask; met, e gwirionez, me a gred e Doue, me a gred e Jezuz-Krist, me a gred en Iliz ha c'hoant am eus d'ober va deveriou diwezatoc'h, p'am bezo muioe'h a amzer, ha pa welin o tostaat va eur diweza. »

— « Da lavaret eo, a respontimp-ni d'ar c'hristen-se, c'houi a gred, met ne servichit ket; ne stourmit ket enep Doue, met ne stourmit ket kennebeut evitan; c'houi a zo dizeblant. Met diwallit ! Chom dizeblant a zo a-wechou eun forfed. Daoust ha gouzant a rafec'h e vefe ho mab dizeblant en ho kenver, e-kenver e vamm, e-kenver e vro ? Ar mab dizeblant-se ne gar nemetan e-unan; bez' ez eo dianaoudek ha trubart. Ar memes tra e-kenver Doue. « An nep, eme Hor Salver, n'eman ket a-du ganin, a zo enep d'in. »

Evit ehan da veza dizeblant, en em erbedit ouz Mari. Entent a ra ouzimp, pegwir ez eo hor mamm; servicha a ra menoziou

Doue warnomp, en em ziskouezet ez eo e Lourd evit skuilha warnomp madoherou nevez. Prezek a ra d'eomp servich Doue : selaouomp-hi !... ha kemeromp skoter warni !...

SKOUER

Kersbilk, eus Lill.

Kersbilk, e-giz relijion, a c'helle beza laket e-touez an dud dizeblant. Ma krede ez eus eun Doue, ne ouie ket gwall vat petra eo Doue. Ankounac'haet en doa an nebeut a gatekiz a oa bet desket d'ezan en e vugaleach ha dilezet en doa e zeveriou a gristen.

Pa reas eta perc'herinaj Lourd, d'ar 16 a viz Gwengolo 1901, ne c'heller ket lavaret e oa hentchet gant ar feiz : souezet e oa gant pep tra e kêr ar Werc'hez glorijs Vari. Ne gomprens ket ar pez a dremene en-dro d'ar pisinou. Ne c'helle ket kompren labour ar gristenien karantezus-se a ro d'ar glanvourien evit petra o foan hag o amzer, evit plijout da Zoue ha skoazella o nesa.

En eur zont da Lourd, Kersbilk a oa gantan daou desteni bet, unan anezo digant ar rejant Desjardins eus Lill, egile digant ar rejant Lapersonne eus Skol-Veur Medisineréz Pariz. An daou vedisin brudet-se a lavare e oa dall ar paour kaez den, dall dre ma oa distrujet nervennoù e zaoulagad ha dall, siouaz ! evit atao; rak eun hevelep klenved n'eus louzou ebet outan.

E gwirionez, Kersbilk a oa dall pevar pe bemp bloaz a oa; den ebet e Lill n'en doa douetans war gement-se. An darn-vuia eus an dud e Lill e anaveze mat, dre m'e gavent alies, eur skritell war e heultrin, o klask e vara dre ruiou kêr. Unan eus e vugale, oajet a eiz vloaz, e hentehe. Ma tigoueze gant heman pellaat eun tam-mig dioutan, Kenbilk a chome a sav er memes plas, ken na vije distrôet e baotrig d'e gaout.

Al leanez a zo e Lill e penn ar Bureo anvet e galleg « bureau de bienfaisance » a rõe bara d'ezan pep sizun. — « Atao, emezi, em eus e welet kaset dre an dorn dehou hag e zorn kleiz astennet gantan evit miret da steki ouz an traou. »

Ar c'hoar Paskal, eus leanezed Hor Salver meurbed santel, he doa graet gantan beaj Lourd hag a ranke chom krog en e zorn.

D'ar 17 a viz Gwengolo 1901, Kersbilk a oa soubet diou wech er pisin : eur boan benn skrijus a deuas d'ezan goude an eil gwech. Eun abadenn goude, eur medisin a c'hlebe an daoulagad klanv gant dour eus ar feunteun, hag, en eun taol, an den dall a welas ar groaz ruz a oa war vrec'h ar medisin-se. Kregi a ra start er vrec'h-se en eul lavaret : « eur groaz !!!... me a wel eur groaz ! » Dont a ra er maez eus ar pisin, mont a ra e-unan d'ar c'heo e-kreiz eur bobl a berc'herined. Al leanez e c'hortoze e toull dor ar pisinou, e gav war blasenn ar Rozera. Kaozeal a ra outan hag ouz he anavezout diouz he mouez, Kersbilk a lavar d'ezi : « Ah ! c'houi eo ? Ho kwelout a ran breman ! »


Er bureo, ar vedisined a wel e c'hell lenn lizerennoù bras eur gazetenn. Diwezatoc'h kalz a vedisined o deus gwelet e zaoulagad o para e nebeut ha nebeut : c'houec'h miz goude perc'herinaj Lourd Kersbilk a wele kouls hag eun all.

Chanchet en deus buhez abaoe e baredigez. An hini a oa dize-

blant a zo deuet da veza eur servicher feal d'an Doué en deus rôet d'ezan ar gweled hag ar feiz : mont a ra pep sul d'an oferenn ha kas a ra gantan e vugale. Labourat a ra e ti eur guya-der kristen.

D'an 21 a viz Gwengolò 1901, pa zigouezas « train » perc'herinaj eskopti Kambrai e gar Lill, e oa eno ouspenn mil micherour o c'hortoz Kersbilk. Ret e oa gwelet ar wirionez ! An hini a oa dall a zistrôe pare d'ar gêr hag a rôe an dorn d'e vignoned koz. Santimanchoù ar bobl a oa rannet koulskoude : ar re n'anavezent ket Kersbilk, ar re n'e anavezent ket mat hag ar re na felle ket d'ezô gwelet, a-lavare en doa tromplet an dud dre urz pe dre c'hoant da c'hounit arc'hant. Met dishenvel e oa santimant ar re o doa e welet alies a-raok ar perc'herinaj hag o doa klevet eur medisin eus an Amerig o lavaret e chomje dall da-viken.

Eun hevelep pareans ne c'hell ket beza komprenet divaez galloud Doue.



Breuriez Trede-Urz savet e Ploare

14 a viz Meurtz 1928

E-pad ar vision prezeget e Ploare e miz Genver 1927, e c'houlennas meur a gristenez a volentez vat rei o ano da Drede-Urz sant Fransez.

Al lodenn vrasa anezo o deus heuliet bep fall-galoni, a-hed ar bloaz, an holl asambleou miziek.

Diskouez a ra kement-se n'en deus kollet nag e amzer nag e boan ar beleg kalonek karget da zisplega d'an neveziadezed (novices) goure'hemennou ar reolenn.

Deut e oa ar mare da ober profesion. Met a-raok o deus c'hoantaet ar c'hoarezed kaout eur retred a zri dervez. Daoust d'al labour ha d'an amzer griz, ez eo bet heuliet ar retred eus ar gwella.

Kent kloza en deus an Tad prezeget degemeret 43 brofesion ha rôet ar skapular da unan.

Da-c'houde ez eo bet lavaret ar pedennou evit sevel ar vreuriez, hag anvet, hervez m'eo goure'hemennet er reolenn, ar re a vo karget a-unan gant an Aotrou rener da gas endro ar vreuriez nevez.

Ra blijo gant santez Anna, Patronez ar vreuriez, ha gant sant Youen, ken enoret er barrez, skuilha o bennoz war Drede-Urz Ploare.

Tad F.

Misionou

Pedit kalonek evit ar misionou prezeget gant hon Tadou. Goulennit ma tougint frouez puilh evit gloar Doue ha silvidigez an eneou :

E **skrignag**, eus ar 19 a viz Ebrel d'ar 6 a viz Mae gant an Tadou Barnabe, Fulgans, Tudual hag Ivon.

E **Sant-Hernin**, eus ar 17 a viz Mae d'an 3 a viz Even gant an Tadou Barnabe, Fuljans, hag Ivon.

Buhez burzudus eun douger-sammou MAZE TALBOT

1 levrig	dre ar post	0 fr. 65
10 —	—	5 fr. 75
25 —	—	14 fr.
50 —	—	28 fr.



AN EURED KRISTEN (kantig.)

Priz : 22 real ar c'hant, dre ar post.



Kantigou NEVEZ :

SAKRAMANT AN AOTER,

KANTIG DA JEZUZ-KRIST ROUE

an « DE PROFUNDIS », *pedenn an anaon.*

Priz : 15 lur ar c'hant, dre ar post.

Goulennit al leor hag ar c'hantigou-man digant

an Tad Theodor ROUSSEL, 28, Avenue de la Marne, Lorient

Chèques Postaux de Nantes : c/c° 46.28.



Levriou e galleg

LIBRAIRIE SAINT FRANÇOIS, 4, rue Cassette, PARIS (VI^e)

Manuel du Tiers-Ordre, par le P. EUGÈNE. — 1 volume relié, tranche rouge 40 fr.

Petit Manuel du Tiers-Ordre, par le P. EUGÈNE. — 1 volume relié, tranche rouge 4 fr.

Saint François d'Assise, par le P. LÉOPOLD 42 fr.

Histoire de la Fondation et de l'Évolution de l'Ordre des Frères Mineurs au XIII^e siècle, par le P. GRATIEN, F.M. Capucin. — 1 volume de 700 pages in-8°. Illustrations hors texte 40 fr.

Vie du P. Marie-Antoine, capucin, par le P. ERNEST, capucin, nouvelle édition 17 fr. 50

POUR LES MISSIONS :

Le Tract-Mission illustré. 32 sujets variés, *le cent* 6 fr.



Cum permissu Superiorum.

Le Gerant A. G. LE BAYON

Moulez AR BAYON-Roger, 13, Tachenn Alsace-Lorraine, en Oriant.

Ra vezo meulet Jezuz-Krist!

Bepred.



Kenteliou Sant Fransez

Kelaouenn vizek gant Skeudennou



TAOLENN AR MIZ

Gouelioù ar miz	81
Sonjit ervat	82
Bleunioù Sant Fransez. — XV ^o Pennad (Kendalc'h)	83
Sant Anton a Badou	85
Salud, Mari	86
Buhez sant Fransez	87
Santez Elisabet a Hongri	88
Lizer hon Tad Santel ar Pab Pi XI	90
Breuniez Pont-Kroaz	91
War sao Breiziz	92
An Tad Eujen a Oisy	93
Da vugale Vreiz	96
Lourd hag ar vertuz a Feiz	99
Du-man ha du-hont	100
Eur pezh-labour dispar kinniget d'an Tad-Santel ar Pab	100

Rédaction et Administration

P. Théodore ROUSSEL

F. M. Capucin

28, Avenue de la Marne, LORIENT

C/c 46 28 NANTES

Priz : daou skoued ar Blaz

EVEN

- 1 Gwener .. *Pevare amzer (Daouzek deziou.)* — DEN-EÛRUS FELIX A NICOSI, kapusin. — I.P.
DEN-EÛRUS YANN PELINGOTTO, eus an Drede-Urz.
- 2 Sadorn ... *Pevare amzer (Daouzek deziou.)* — DEN-EÛRUS ERKOLAN, eus ar genta Urz.
-
- 3 Sul GOUEL AN DREINDED SANTEL. — A.J. — I.P.
DEN-EÛRUS ANDRE A SPELLO, eus ar genta Urz. — I.P.
- 4 Lun SANTEZ JANED A ARK, gwerc'hez, eus an Drede-Urz.
- 5 Meurz S. Bonifas, eskob ha merzer.
- 6 Merc'her.. S. Norbert, eskob.
- 7 Yaou GOUEL BRAS AR SAKRAMANT. — A.J. — I.P.
- 8 Gwener ... DEN-EÛRUS PASIFIK, kovez. eus ar genta Urz.
- 9 Sadorn ... Ofis ar Sakramant.
-
- 10 Sul *Ar Sul en eizved ar Sakramant.*
- 11 Lun Ofis ar Sakramant.
- 12 Meurz Ofis ar Sakramant.
- 13 Merc'her . Ofis ar Sakramant. — S. Anton a Badou. — I.P.
- 14 Yaou Eizved ar Sakramant.
- 15 Gwener ... GOUEL AR GALON-SAKR. — A.J. — I.P.
PLAC'H-EÛRUS IOLAND, eus an eil Urz.
- 16 Sadorn ... S. ANTON A BADOU, kovez, eus ar genta Urz.
DEN-EÛRUS GUI, eus ar genta Urz.
-
- 17 Sul *Trede sul goude ar Pantekost.*
- 18 Lun S. Efrein, Doktor.
- 19 Meurz Santez Julien Falkoneri, gwerc'hez.
- 20 Merc'her . Eizvet deiz goude gouel S. Anton. — I.P.
PLAC'H-EÛRUS MIKELINA, intanvez, eus an Drede-Urz.
- 21 Yaou S. Loeiz a Gonzag, kovez.
- 22 Gwener .. S. Paolin, eskob.
- 23 Sadorn ... Vijil S. Yann-Badezour.
-
- 24 Sul *Pevare sul goude ar Pantekost.*
S. YANN-BADEZOUR. — I.P.
- 25 Lun S. Guilherm, abad .
- 26 Meurz S. Yann ha S. Paol, merzerien.
- 27 Merc'her . DEN-EÛRUS BENYENU A EUGUBBIO, kovez. eus ar genta Urz.
- 28 Yaou S. Irene, eskob ha merzer.
- 29 Gwener .. S. PER HA S. PAOL, ebestel.
DEN-EÛRUS RAIMOND LULLI, merzér, eus an Drede-Urz.
- 30 Sadorn ... S. PAOL, abostol.



EVEN 1928

Sonjit ervat

Eisvet malloz Hor Salver

I.— Sonjit ervat : Hor Salver en deus taolet e valloz war Doktoret al-Lezenn, abalamour na virent nikun eus ar bern lezennou ha gourc'hemennou a daolent war an dud dister. War digarez salvi ar re-all, e lezent a-gostez o silvidigez o-unan.

C'houi ivez hag a boagn da lakaat ar re-all war an hent mat hep hen heulia hoc'h-unan, c'houi a denñ warnoc'h an hevelep malloz.

II.— Sonjit ervat : Mab Doue en deus mallozet an Doktored, abalamour i hag a anaveze an hent mat, n'o deus ket hen heuilhet. I hag o doa eun deskadurez vat war wirioneziou ha gourc'hemennou Doue, e-lec'h en em lakaat d'e garet ha d'e servicha, n'o deus graet netra nemet kentelia re-all.

Pa ro Doue d'eoc'h sklerijenn ha grasou, n'eo ket a-walc'h d'eoc'h Hen trugarekaat en ho kalon, ret eo trei ho polontez d'ober ar pez a ziskouez d'eoc'h a zo mat da ober; a-hend-all ar sklerijenn-se ne ray nemet tenna warnoc'h malloz Doue.

III. — Sonjit ervat evel ma lavare sant Augustin, evit kaout digant Doue donezon ar furnez eo ret beza umbl. Doktoret an Aviel a zo bet mallozet gant Doue, abalamour m'o doa disprijet an umilite ha, dre o skoueriou, douget ar re-all d'ober fae war ar vertuz-se ret da gement hini a gar Doue.

Doue en em ro da anaout d'an dud izel a galon. Evit kaout ar gwir furnez, bezit umbl ha Doue dizamant a skuilho warnoc'h e c'hrasou.



Bleuniou Sant Fransez

XVth PENNAD (*Kendalc'h*)

Sant Fransez, santez Klara, hag o holl gouvidi,
 Beuzet-dreist o c'halonou en eur mor a dudi,
 Diskennet war an douar oa o naon torret,
 Ha né raent seblant ebet eus ar boued darevet.
 Doue en devoa roet d'ezo eur meuz dispar
 Evel ne vez ket kavet, neblec'h war an douar.

Evel-se e echuas, ganto ar pred santel,
 Ouz hini ar baradoz, e gwirionez henvel.
 Santez Klara neuze d'he c'heul he c'hoar ganti
 Lavaras kenavo : hag hi d'he leandi,
 Ouz he gwelout distro he c'hoarezed laouen.
 Betek hen, evit gwir 'z oa bras o anken,

Gand aoun c'hoarveje ganti 'vel gand he c'hoar Agnès
 Kaset eus Sant Damian, kaset vel abadez
 Da vlenian e kear Florans, kouent Montiselli;
 Eur merk a enor dispar, eur gaer a gefridi.
 Ne oant ket, e gwirionez, ne oant ket hep priz
 Ar c'homzou a lavare Fransez d'o mamm Klara :

- « Klara, ma c'hoar, 'n ano Doue
- « Bezit dalc'hmat, prest da vale,
- « Rak, diouz red, e renkfen, siouaz !
- « Eus al lec'h-man, pelloc'h ho kas. »

Hag ar santez a-bell-zo, evit mat, 'n em westlet,
 Rik, d'ar gwir sentidigez, he devoa lavaret :

- « O, ma zad ker,
- « Setu ma gér :
- « Lavarit, ha dalc'hmat
- « 'Vezo pare ma zroad,
- « Da vont, en ano Doue,
- « 'Lec'h 'vezo ho polonte. » —

E kouent Sant Damian, o mamm distro d'ar gear
 Ez oa al leanezed, kredit, evurus kaer;
 Santez Klara hec'h unan abaoe ar banvez
 'N eun doare ker burzudus pourvezet gant Fransez
 A veze hed an amzer, frealzet he c'halon,
 O sonjal, e madelez Doue he gwir mignon.

P.J.



*Trizekvet devez a
 viz Mezeven*

Sant Anton a Badou

oberour burzudou; Breur bihan
 eus a Urz sant Fransez
 1195 — 1231

Nag a vurzudou en deus hadet
 Jezus endro d'Ezan epad ma oa war
 an douar ! Hogen nep a gredo En-
 nan, emezan, a ray burzudou henvel
 ouz e re ha kaeroc'h c'hoaz. War
 a lavar d'imp hon mamm santel an
 Iliz, Sant Anton a Badou a zo unan
 eus an dud estlammus-se a ra bur-
 zudou niverus o lakaat souezet an
 enebourien hag an dud difeiz zoken.
 Bet eo evel eun hader o skign burzu-
 dou, evel eur morzol o flastra an
 eretiked.

Trugarekaomp Doue da vezan
 roët d'an Iliz eur sant evel heman,
 ha da vezan diskouezet d'imp dre
 vuhez Sant Anton penaos e skuilh
 e vennoz war nep a glev e vouez
 hag a sent outi.

I. — Galv Doue

Red eo d'an den bezan gwall izel a galon evit dere'hel kuzet an
 traou mat lakaët gant Doue ennan. Douget omp kentoc'h gant
 samm ar pec'hed d'en em ziskouez re abred.

Sellomp ouz Sant Anton ha kemeromp skouer diwarnan.

Deut er bed en kêr Lisbon er bloaz 1195, Anton a fellas d'ezan,
 d'an oad a bemzek vloaz, mont da c'houlenn digor digant cha-
 lonied sant Augustin e Koimbr. Dek vloaz a dremenas en o zouez,
 ha n'o devoa holl nemet meulodi da rei d'ezan, evit e aked d'ar
 bedenn ha d'ar studi. Eun devez, e voe degaset da Goimbr korfou
 pemp manac'h eus a Urz Sant Fransez, bet merzeriet en Afrik

gant ar Vuzulmaned. An den yaouank, ouz o gwelout, a c'hoantaas bezan degemeret en o Urz.

Daou vloaz goude, e voe lezet, war e c'houlenn, da vont da bresek ar feiz d'an Afrik. Leun a levez, o sonjal e c'hallfe skuithe e wad evit Jezus-Krist, Anton a gemeras hent ar Marok. A vec'h degouezet eno, ma kouezas klanv. A greiz ma oa o tistrei d'ar Portugal, eur gorventenn a zrollas warnan hag e gasas d'ar Sisil. Degemeret eno gant menec'h Messin, Anton a skbas, prestig goude etresek Asiz, da welout an tad Sant-Fransez. Goulenn a reas outan mont da Monte-Paolo e kichen Bologn.

Eno, Anton a reas peb tra evit kuz e ouiziegezh. Met Doue ne zaleas ket da rei da anavezout an tontour a oa kuzet ennau. Eunn devez, e rener a gemennas d'ezan larout eur gomz bennak d'e vreurdeur; senti a reas, hag ar venec'h all, a gave d'ezê ne oa mat nemet d'ober labouriou ar gegin, a voe estlammet o klevout ar brezegenn gaer a reas d'ezê.

Karget diwar neuze da gelem ar venec'h yaouank, Anton a reas skol e meur a lec'h.

A-bean nebeut, avat, en em lakaas a-grenn da gelem ar bobl. Ha Doue a vinnigas e labour.

Bezan uvel (humble), da larout eo, en em blijout el labouriou distéran, ha bezan sentus a grenn, setu ar pezh a ra d'eun den bezan barrek da labourat evit Doue gant skoazell Doue.

II. — Bennoz Doue

Prezegennou Anton a veze evel elfennou tan oc'h atizan an eneoù.

Dal ma veze klevet kelou anezan e veze dilezet al labouriou, ha leun a dud war an hentchou.

Poania a reas dreist-holl, da zigeri o daoulagad d'an eretiked. Alies e klaskent difenn o falskredennou, met Anton a ouie an tu da lakaat ar wirionez da baran, ken sklaer hag an deiz, dirak o daoulagad.

N'helled ket herzel ouz eun hevelep prezezer, rak pa wele ne zigemeret ket prim awal e veze gomzou, e rae burzudou d'o c'hennerzi.

E Toulouz, e oa eun den ha ne felle ket d'ezan kredi eman Jezuz e sakramant an Aoter. Anton a lâras d'ezan : « Ma teu hoc'h azen d'adon Jezus-Krist kuzet dindan doareou ar bara, ha kredi a relet (reot) e sakramant an Aoter ? » — « Ya ! emezan. »

Al loen a zo degaset war leurenn kêr. En eun tu, e laker eul laouennad ker e lec'h hag en tu all, Anton a zalc'h en e zorn ar Sakramant merlet ra vezo. Al loen, lec'h mont wardu e voed, a ya war eun da stou dirak an osti santel hag a chom er c'hiz-seken ma lavar ar sant d'ezan sevel.

Burzud ar pesked a zo anavezet gant an holl.

Komzou ar sant a zouge bepred ar brasa frouez; ar bec'herien a zileze o buhe fall, hag ar re vat a startae en o feiz hag en em roe d'an oberou a drugarez. Jezus evit diskouez e kare e labour, a deuas eun devez d'o gambr, dindan stumm eur bugel, hag a gomzas outan evel ouz e vrasan mignon.

A belec'h e teue da Sant Anton ober labour ken frouezus ? Kement e kastize e gorf ma ranke daou eus e vreurdeur e hompan ha rei d'ezan skoazell de gerzout.

Dalc'hmad e veze e spered o prederian war e houzanvidigezh (passion) Hon Salver, ha karout a rae « Paourante » d'inez Sant-Fransez gant e-holl galon.

Brevet e gorf gant al labour hag ar binienn, kentoc'h eget gant an oad, (rak n'en doa c'hoaz nemet e bouez vloaz ha me-gont), Anton a yeas, d'an 13 a Vezeven 1234, da gerzout an gurunenn an-nenv. E deod a virer c'hoar en Padou, bresk ha m' evel hini eun den beo.

Ar pezh a lufir ar muian e buhez ar sant-man, eo ar c'hoant en doa da c'houit eneoù da Jezus. Evit distrei eur pech'er war an hent mat n'en dije souzet nepred dirak ar boan. Laromp da Sant Anton goulenn digant Doue m'hon devo ni ivez c'hoant bras da rei eneoù da Jezus hon Mestr.

Peden. — Ra deuto gouel bras sant Anton da laouennaat hoc'h ilhez, Aotrou Doue, ha grit, ni ho ped, ma he devo bepred skoazell ho krasou, ma teuo dre eno da danvaat al levez peurbadus.

Mennoz (ratoz). — Pedi a rin Sant Anton, evit adkavout eun dra dianket, met e bedi a rin dreist-holl pa m'ho kollet tampe pe damm ar pezh a ra buhez ma ene.

Boked. — Mar goulennit burzudou, o goulennit digant Sant Anton, eme Sant Bonaventura.

Dazorc'hi a ra an dud varo, kas a ra da get ar falskredennou, pellaat a ra an holl drougou, bountan a ra an diaoul ermaez, ha gantan e vezer gwarezet (protege) enep al lorgnez. Ha drezan ivez ar glanvourien a gav ar pare.

E. B.



Salud, Mari !

Salud, Mari, o merc'h skedus
D'an Tad krouer holl galloudus !
'Vit ho meuli, ni 'gan joanus
Alleluia !

Salud, Mari, o mamm dener
D'ar Mab a zo 'vidomp Salver !
'Vit ho meuli, ni 'gan seder
Alleluia !

Salud, Mari, o pried glan,
D'ar Spered-Sakr tomm 'vel an tan !
'Vit ho meuli, eurus ni 'gan

BASTIEN

Buhez Sant Fransez a Asiz

PEMPET PENNAD

Vertuziou an diskibien genta
(KENDALC'H)

KENTEL 3.— Bernez a C'hentavall mignon da Zoue. — Breur Jill, sant Bonavantur ha karantez Doue. — Burzud an teir lilienn. — Rufin, ar sant beo.

Ar c'henta eus diskibien Fransez e voe Bernez a C'hentavall, eun den santel bras. Douget e veze alies a spered betek an Nenv. Fransez a zisklerias d'ezan : « Gwall-gaset ha tentet e vezi, met war da dremenvan e kavi ar peoc'h. » Komzou ar Sant a deuas da wir.


Jill, unan all eus diskibien genta Fransez, a voe ivez douget a spered betek an Nenv. Goulenn a reas eun dervéz ouz sant Bonavantur, eun doktor brudet hag eur sant bras eus an Urz : « Livirit d'in, Tad, hag eun den dizesk a c'hell karet Doue kement hag eun den gouizieik ? — Sur eo kement-se, eme ar Sant; eur vaouez koz hep gouiziegez a c'hell kaout evit Doue kement a garantez hag eun doktor speredek. » Ar breur a redas neuze d'al liorz da lavarout krenv ha fraez : « Merc'hed dizesk ha paour, karit Doue, hag e vezot ker bras dirazan ha breur Bonavantur. »

Meur a hini o deus klevet komz eus burzud an teir lilienn. Eun doktor eus urz sant Dominig, tentet gant an diaoul, n'helle ket kredi start-start e oa gwerc'hez an Itron-Varia. Breur Jill, sklerijennet gant Doue, a yeas d'e ziambroug : « Breur, emezan, Mari a


oa gwerc'hez a-raok beza ganet Jezuz-Krist. » Breur Jill a skoas gant e vaz war an douar, ha kerkent e savas eno eul lilienn gaer. Ar breur a skoas eun eil gwech en eul lavarout : « Breur, Mari a zo chomet gwerc'hez, p'he deus ganet Jezuz. » Ha dioustu e ziouanas eul lilienn all. Jill a rôas eun taol c'hoaz d'an douar : « Breur, emezan, Mari a zo chomet gwerc'hez goude beza laket he Mab er bed. » Ha raktal e tigoras dirazo eun drede lilienn he boked arc'hantet. An doktor a yeas kuit en eur veuli Doue gant ar peoc'h en e galon.

Rufin, kenderv santez Klara, a voe unan eus ar bokedou koanta e liorz sant Fransez : « Doue en deus diskleriet d'in, eme ar Sant, eman Rufin e-touez an eneo kaera ha devota dirazan en amzer-man; ober a rafen eur sant anezan hep aon ebet, pegwir eo skrivet e ano war roll ar sent er baradoz. »

Pegen dudiuz e oa an eneo-se ! Gwir eo, o rener a oa eur sant ker bras !



Santez Elisabet a Hongri Patronez ha skouer C'hoarezed an Drede-Urz



Santez Elisabet a lenn
al Leoriou Santel

Adalek an oad tenera, santez Elisabet a blijed d'ez selout al leoriou skeudennet kaer hag a ziskoueze buhez ha maro Hor Salver. Deut da veza desket, e lakae he holl blijadur da lenn leor an Aviel hag ar Skritur sakr ha da selaou ar prezegennou.

**

Va c'hoarezed, grit evel santez Elisabet.


Evit maga ha startaat ho feiz :

1°) Sonjit alies ha gant poell er c'hredennou gristen.

2°) Selaouit ar prezegennou gant evez-ha doujans, ha klaskit anaout muioc'h mui an Aotrou Doue.

3°) Heuilhit, mar gellit, kenteliou ar c'hatekiz graet

en ho parrez; eno e kavoc'h, atao eur frouez bennak evit hoc'h ene.
4°) Lennit leor an Aviel, Imitasion Jezuz-Krist, Buhez ar Sent hag an holl leoriou fur kavet mat gant an Iliz.



ASIZ. — ILIZ SANT FRANSEZ

Lizer hon Tad Santel ar Pab Pi XI diwarbenn ar 700^{vet} bloavez goude maro Sant Fransez (Kendalc'h)

Labour Sant Fransez evit brasa mad an Iliz hag ar broiou.

Gant an holl vertuziou kaer-se Fransez a oa e stad da labourat evit silvidigez an nesa ha da rei skor d'an Iliz a-bez. Galvet e oa gant Doue d'ober kement-se. Boazet e oa da bedi alies gant kalz hirvoudu e iliz sant Damian, hag eun deiz e klevas eno teir gwech eur vouez deut eus an Nenv. « Kerz, Fransez, sav adarre va zi hag a gouez en e boull. » Ne gomprenas ket ar c'homzou-se, war an taol : re vihan, re zister en em sante, evit sonjal beza galvet d'ober traou bras; met Innosant III, epad eun huvre, a welas Fransez o harpa gant e ziouskoaz iliz vras Latran dare da goueza, ha dre ar weledigez-se ec'h anavezaz sklêr awalc'h menoz madelezus an Aotrou Doue.

Goude beza savet diou Urz, ar genta evit ar baotred, an eil evit ar merc'hed, d'o c'has betek santelez an Aviel, e redas dre gêriou an Itali, oc'h embann d'an dud lezenn ar binijenn, dre brezen-nou berr leun a dan graet gantan e-unan, pe gant e venec'h kenta N'hellfe den lavarout pegement a eneou a c'hounezaz da Zoue dre e gomzou ha dre e skoueriou.

E kement lec'h ma teue Fransez da brezeg, e veze gwelet ar veleien hag ar bobl o vont d'e zigemer, bodou olivez en o dorn, hag e tregerne ar vro gant kantikou an Iliz ha son ar c'hleier. An dud, a hep oad hag a bep renk, paotred ha merc'hed, en em vode en dro d'ezan; en noz kouls hag en deiz eur bobl niverus a gelc'he an ti e lec'h ma chome ar Sant evit e welout, evit touch outan, evit komz gantañ hag e glevout, pa zeue er maez; an holl, zoken ar re ar muia nasket gant o zechou fall, a veze trec'het gant e brezen-nou. Setu perak, eleiz a dud, memes tud e kreiz o nerz hag o brud, a drôe kein da vadou an douar, evit ren eur vuhez santel reizet war genteliou an Aviel; poblou an Itali a-bez a gemere an hent-mat, leun a fizians e Fransez, o blenier; kaeroc'h c'hoaz ! Niver bugale Sant Fransez a greskas dreist kont; kement a c'hoant o doa an dud da vont d'e heul, ma klaske ar priejou dilezel ar briedelez hag en em zispartia, evit mont d'ar gouent. Alies a vech e ranke ar Sant mirout outo da gwitaat o stad a vuhez er bed.

Embannerien nevez ar binijenn a glaske dreist-holl lakaat adarre

ar peoc'h etre an dud, ar familhou, ar c'hêriou, ar rann-vroioù gouliet truezus, en amzer-se, gant brezeliou hep paouez. Dre ar c'homzou helavar lakaet gant Doue war muzellou prezegeerien dister; e tistrôas ar peoc'h gwirion sinet awechou gant lidou bras, e Asiz, Arezzo, Bologn, e kerioù all c'hoaz hag e kalz bourc'hadennou.

An Drede-Urz, savet ive gant Sant Fransez, a reas kalz evit digas peoc'h ha reiz dre holl. Eun Urz e oa e gwirionez, met eun c'urz hep le (voeu). Graet e oa evit lakaat tud ar bed, paotred ha merc'hed, da heulia piz lezenn Doue ha da vont betek ar santelez kristen.

Setu aman an traou pouezusa merket e Reolenn an Urz nevez : Digemer hepken ar gristenien o deus eur gwir feiz katolik hag e sent ouz an Iliz gant ar brasa respet; an doare ma tle an Dredeidi mont en Urz, ha, goude eur bloavez novisiat, ober profesion da heulia ar Reolenn, ar priejou o kaout aotre en eil digant egile, evit kement-se; dougen dilhad hervez ar furnez hag ar baourentez kristen; lakaat ar merc'hed dreist-holl d'en em wiska deread; chom hep kemer perz er prejou hag er c'hoariou a zizurz; chom hep mont d'an dansou; yun hag ober vijil en deizioù goure'hemen-net; kovez ha komunia teir gwech ar bloaz, goude beza sinet ar peoc'h gant an enebourien ha rentet d'o ferc'henn ar madou kemeret pe miret diwar e goust; Chomj hep brezelli, nemet evit difenn an Iliz, pe ar feiz kristen, pe ar vro; a hent all, brezel ebet, hep aotre renerien an Urz; lavarout an ofis hag ar pedennoù all; ober o zestamant en tri miz kenta goude m'int bet resevet en Urz; digas buhan ar peoc'h, ma 'z eus bet savet trouz etouez Tredeidi pe tud all; ar pezh o doa d'ober, evit difenn o gwirioù, ma vije klasket o bihanaat pe o zenna diganto; chom hep toui gant lid ha dirak testou, nemet diskleriet en dije an T.S. ar Pab e oa lec'h d'hen ober.

Setu aze lezennou brasa an Drede-Urz. Met ar Reolenn a lavare c'hoaz d'an Dredeidi klevout na oferenn alies; darempredi as-sambleou an Urz; rei, pep himi hervez e zanzev, an aluzen, evit sikour ar re baour dreist-holl ar re glanv ha lakaat servichou evit ar re varo; mont da welet ar breudeur hag ar c'hoarezed klanv; rei kenteliou mat d'an Dredeidi a raje skouer fall; kemer gant doujans ar c'hargou lakeet war o diouскоаз hag ober deverioù ar c'hargou-se, hep leziregez; ar pezh a oa d'ober evit echui ar prose zou.

Chomet omp da sellet ouz ar reolennoù-se penn da benn, evit diskouez en deus sant Fransez, dre e brezen-nou dispar, dre brezen-nou e Vreudeur, hag ive, dre an Drede-Urz, taolet en douar maen diazez eur bed nevez, eur bed chenchet tu d'ezan ha trôet adarre da heulia lezenn an Aviel. Lezomp a gostez, petra bennak ma 'z int traou talvoudus, ar pezh en deus graet evit kaeraat an ofisou, evit santelaat an eneou; sellomp hepken ouz al lezennou en deus savet evit reiz a buhez an dud en tiegeziou hag er broiou. Gwelet a reomp splann e klaske sant Fransez lakaat en dud d'en em garout etrezo, evel breudeur ha da veza bepred leal an eil e kenver egile; e klaske ousspenn difenn ar re vihan ha paour enep ar re vras ha pinvidik, hep noazout tamm ebet na d'an

urz vat na d'al lealded. An Dredeidi a voe lakeet e renk an dud a iliz hag o doa ar memes gwiriou, ar memes frankiziu hag ar c'hloareged. Evelse ne douent ket doujans leun d'o mestr ha, pa vezent galvet da vont d'an arme pe d'ar brezel, ne sentent ket. Gant lezenn an Drede-Urz, e talc'hent penn da lezenn galet an amzer-se : pa veze lavaret d'ezo e oant tud a renk izel hag e thient douja d'o mistri, e respontent o doa gounezet o frankiz en eur vont en Drede-Urz. Kalz tud galloudus a savas enep d'ezo evit o gwaska; met ar Pabed Honorius III ha Gregor IX o difennas kalonek hag a vrevas, dizamant zoken, konnar o enebourien. Egise ar bed a gemeras kiziu mat dishenvel ouz ar re en doa araok. Trede-Urz Sant Fransez en em astennas a bep tu er broiou kristen, oc'h ober da galz a dud karout ar binijenn ha beva didamall; ha neket hepken tud izel ha dister, met eskibien, kardinaled, pabed, ha memes rouaned a veze gwelet o wiska dilhad ar binijenn en Drede-Urz, evit heulia gwelloc'h lezenn ha spered an Aviel. Meur a hini en o zouez a zo deut da veza sent bras. Dre an Drede-Urz e vleunias ar vertuziou kaera war an douar : ar bed a-bez a ziskoueze kaout eun dremm nevez.

Met Fransez, evel « gwir gatolik ha gwir abostol », a selle pelloc'h eget ar broiou kristen; ma labour e d'ober vat d'ar gristenien, e poanie ive da zigas ar baianed da feiz ha lezenn Jezus-Krist, hag e c'hourc'hennas d'e ziskibien ober kement ha ma c'helljent evit-se. N'eo ket red lavarout kalz a gomzou evit diskleria eun dra anavezet mat : Fransez en doa c'hoant bras da hada greun an Aviel ha da c'houzanv ar verzerenti; mont a reas d'an Ejipt gant eun nebeudig eus e Vreudeur, hag hep aon ebet en em ziskouezas dirak roue paian ar vro-se. Ped ha ped misioner eus e Urz a zo bet merzeriet, an amzer genta, ar Siri hag er Marog ? Eman skrivet o haniou e leor enorus an Iliz. Bugale niverus ar Sant o deus kendalc'het gant ar memes labour santel, a-hed ar c'hantvejou, hep krena dirak bourrevien gris, hag ar Pab a Rom en deus fiziet enno, evel eun testen eus e garantez, meur a vro paian da c'hounit d'ar gwir feiz.

Breuriez Pont-Kroaz

Ar Vreuriez-man, savet e-kerz ar mision rôtet er bloaz 1925, a ya atao war gresk. Bez' ez eus enni breman 43 ezel : 5 gwaz ha 38 plac'h.


Eus ar gwella ez eo heuliet ar reolenn; pep miz e vez graet ar bodadeg, evel m'eo gourc'hennet.

Ar re a zo enni ne glaskont ket hepken en em santelaat o-unan, met rei a reont c'hoaz dorn d'o beleien evit oberou mat ar barrez.

Deut e oant evit al lodenn vrasa da selaou an Tad en doa o galvet da lun Fask diweza. Digas a reas sonj d'ezo eus talvoudegez an Drede-Urz hag eus an deveriou merket er reolenn. Evit kloza, e rôas ar skapular da deir neveziadez (*novices*).

Eürus ar breuriezou a gav evit o ren beleien kalonek a gemeraked da greski er c'halonou karantez an Aotrou Doue hag ar vertuziou kristen war-lerc'h ar skouer dispar m'eo sant Fransez.

T. F.



War sao Breiziz !


Ton : *Sainte Relijion.*

War sao ! Breiziz, war sao !
 N'ema mui an amzer
 Da gousket dibreder.
 War sao ! Breiziz, war sao !
 Da stourm a greiz-kalon
 'Vit ar Relijion.
 Relijion santel,
 Biken ho tilezel !
 Kentoc'h mil gwech mervel ! (*teir gwech*).

1. — Keit ha ma lugerno e bolz uhel an nenvou
 Ar stered hag al loar hag an heol benniget,
 Ni a gerzo divrall gant hent ar gourc'hennennou
 Hag a vevo dalc'hat 'vel gwir gatoliked.
2. — Keit ha ma vezo mor da luskellat Breiz-Izel,
 Da floura he aochou, da bokat d'e reier.
 Kristenien e chomimp, en despet d'an holl vrezel
 A ray d'comp an dud fall, marc'hadourien geier.
3. — Keit ha ma redo dour en hor steriou dudius
 Ha ma kano er harz al labousedigou,
 Ni 'redo kalonek war roudou santel Jezus
 Hag a gano d'ezan hor c'haera kantikou.
4. — Keit ha ma savo brug war gribenn hor menezioù
 Ha ma tougo al lann bokedou alaouret,
 Morse ne drôimp kein da feiz karet hon Tadou :
 Ni 'zo eus ar ouenn dud o deus pennou kalet !
5. — An dero bras o stourm ouz an avel konnaret
 A dorr kent 'vit plega, hep aon ouz ar maro ;
 'Velse ni 'zalc'ho penn d'ar bed ha dan drouk-spered
 Ha ne blegimp biken, kentoch ni a dorro !
6. — An ilio rodellet en dro da c'har ar wezenn
 Daoust d'an amzer diroll a jom stag mat ato ;
 'Velse ouzoc'h, Jezus, en em stardomp da viken
 Ha diouz ho karantez netra n'hon distago.
7. — Ni a vo kristenien neket hepken dre gomzou,
 Met dre an oberou a skuilhimp 'n hor buhez :
 Pedenn hag oferenn, vijil ha sakramanchou....
 Ni 'heulio penn da benn gwenojenn ar furnez.

- 8.— Kenavo evit mat d'an holl c'hoariou noazus,
D'an dansou milliget a zaon mil ha mil den !
Na glaskomp ket plijout da Satan ha da Jezus :
Ne c'hellomp servicha nemet eur mestr hepken.
- 9.— Ni 'zo gwir Vretoned dispont egiz hon Tadou ;
Ne vo morse 'n hon touez na krener na trubard.
Eur Breizad hag a dro da heul ar fals-kredennou
N'eo ken eur gwir Vreizad, n'eo nemet eur bastard !
- 10.— Mez eta d'ar c'hrener, d'an trubard ha d'an nac'her !
N'ez eus war an douar netra ken divalo.
Ni a jomo bodet dindan baniel Hor Salver,
Atao a du gantan, er vuhez, er maro !

BASTIEN.



An Tad Eujen a Oisy-le-Verger (Eskopti Arras)

Ganet er bloaz 1856, an Tad Eujen a zeuas en Urz ar Gapusined er miz Here 1875, hag a varvas e kouent Bry demdost da Paris d'an 29 a viz Kerzu 1927.

Nebeut a dud en hon amzer o deus bet eur garantez, teneroc'h evit sant Fransez a Asiz. Tremenet en deus e vuhez oc'h envori komzou hag oberou ar Sant hag o skriva diwarnan.

Prezeget en deus misioniou er parrezioù ha zoken er c'hèriou brasa ; rôet en deus e-leiz a retrejou d'ar venec'h ha d'al leanezed. Met trôet e voe kentoc'h e spered da studia eget da brezek.

Renet en deus e-pad meur a vloaz ar gelaouenn c'hallek anvet « *Annales-Franciscaines* ». Hen en deus savet ar c'helaouennou « *Les Etudes Franciscaines, La Revue Sacerdotale du Tiers-Ordre* » ha Leordi Sant Fransez (*Librairie Saint François*), a vez kavet ennan an holl leoriou a sell ouz an teir Urz.

Skrivet en deus eul « *Levr-dorn war an Drede-Urz* », gwerzet anezan ouspenn 40.000 e Frans hepken, ha bet trôet e meur a yez estren.

Embannet en deus c'hoaz Katekiz bras an Drede-Urz, *Almanak Sant Fransez, Etrennes Séraphiques, Miz sant Josef*, hag eur leor e latin *Bullarium Tertii Ordinis*.

Dastumet en deus e kouent Bry mil ha mil skrid-dorn eus an amzer goz, eus a bep yez hag eus a bep bro, diwar-benn an Drede-Urz.

An holl labouriou-se ne virent ket outan d'en em rei d'ar bedenn ha d'e zeveriou a vanac'h.


Lavarout a c'heller en deus bevet an Tad Eujen eus buhez e Dad sant Fransez.

Netra souezus mar doe bet dibabet da ren e Urz e rann-vro Paris (Province de Paris) e-pad meur a vloavez.

Skôet gant eur c'hlenved garo, n'hellas mui lavarout e oferenn gouel bras sant Fransez, 4 a viz Here diweza.

Eur bedenn, mar plij, evit an Tad-se, en deus labourer kement evit an Drede-Urz.

Tad FULJANS.



Da vugale Vreiz

Selaou, va mab ; c'hoant ez peus beza beleg ? Marteze out souezet, o klevet hevelep komzou, ha n'ez peus morse sonjet e kement-se. Perak ne zonjfes ket eur wech ? Re all o deus graet en da raok. Ar veleien a welez endro d'it er parrezioù, al leaned a glevez o prezeg misionou pe retrejou, a zo bet bihan evel-dot, hag eun deiz, sklerijennet, douget gant gras Doue, o deus lavaret enno o-unan : « Me a vo beleg Karet am ije kemeret micher va zad, met gwelet a ran eo ret kaout tud da zifenn an Iliz, da brezeg an Avel d'ar bed, da drei an eneou wardu ar Baradoz Me a vo eus ar re-ze, ha fizians am eus, gant gras Doue, d'ober eun tammig vad war an douar-man. »

Hag o deus lavaret eur ger d'o mamm pe d'o zad pe da unan all bennak, marteze da veleien o farrez, hag int bet kaset d'ar c'hloerdi. Poaniet o deus gwella ma c'hellent ; mat oant da bed, beva a raent santel, digemeret int bet er c'hloerdi bras, hag an Aotrou 'n Eskob en deus o galvet ha roet d'ezo sakramant an Urz, ha setu int graet beleien, hag eo fiziet enno ar garg uhela, talvoudusa a zo er bed, labourat evit gloar Doue ha silvidigez an eneou.

Marteze e sonj d'it n'ez peus ket d'en em mellout eus ar peñ a lavaran d'it aman. Marteze te a gred e teu eur beleg warlerc'h eun all, evel ma teu eun deiz goude eun all, eur vloaz warlerc'h eur bloaz all, hag e vo ato beleien awalc'h evit ar parrezioù.

— Ya kredi a ran e vo ato, gant gras Doue ; met ne vefe ket, ma chanfe hor bro da rei bugale, tud yaouank, gouest da zilezel pep tra evit beza holl da Zoue. Ar veleien a welez, a zo deuet eus familhou diwar ar maez pe familhou eus kêr, hag, evel a lavaren bremaik, ma karfent, o dije kemeret micher o zad pe eur vicher all ; met, evel gwechall an Ebestel galvet gant Hor Zalver, dilezet o deus traou an douar-man, evit beza da Zoue, labourat evit Doue.

Klevet ez peus marteze, ha klevet a ri tud diskiant ha tud fallakr, o lavaret eneb ar beleg pep seurt traou divalo. Na zelaou ket an dud-se, na gred ket ar peñ a lavaront ; an diaoul eo a gomz dre o genou. N'ouzont ket petra lavaront, ha n'eus nemet fallagriez en o c'halon. Hor Zalver en deus diskouezet pegen talvoudus eo karg ar veleien, pa lavaras d'e Ebestel : « C'houi eo hollen an douar. » An hollen a zalc'h yac'h an traou, o difenn eneb ar vreinañdrez. Ar beleg ive, karget da lavaret d'an dud ober ar mad, tec'het diouz an droug, a zalc'h er bed-man an urz vat, ar garantez, ar zantelez. Anez sklerijenn an Avel, dalc'het wat elum gant

ar beleg, ne vije war an douar nemet fallagriez, krizder, breina-
durez : an dud, henvel ouz bleizi, ne rafent nemet laerez ha
laza, hag an douar a vefe eun dachenn a vrezel.

Arabat kredi eo troet an dud d'ober ar mad dreizo o-unan. Dou-
getoc'h int d'an droug eget d'ar mad, ha ma sentont ouz o youlou
fall, e raint pep seurt traou mezus, hag awechou, alies zoken,
torfejou spontus.

En hor Breiz, eur vro vat goulskoude, n'ez a ket an traou evel
ma vefe dleet. Marteze ez peus gwelet tadou a familh oc'h en
em rei d'ar vezventi, o koll o fenn, o lavaret dirag o bugale traou
diskiant ha traou divalo. Marteze ez peus gwelet bugale na zentent
ket ouz o zad hag o mamm, tud yaouank na glaskent nemet pli-
jadureziou touellus ar bed, a dremene ar zul oc'h ober pec'hejou,
elec'h beza en deiz-ze o pedi hag o veuli Doue en e ilizou.

Dre ma kreski en oad, e weli muioc'h-mui an droug, an dizurz
a zo er bed etouez an dud.

Gwelet mat a rez ez eus ezomm da sklerijenna an dud-se, da
rei d'ezo da anaout o deveriou, d'o distrei diouz an droug, ar
pec'hed, d'o lakaat war an fent eun, hent ar zantelez. Piou a
c'hell kement-se ? Ar beleg, hag ar beleg hepken. An dud all a dle
ive ober vad d'o nesa dre o aliou hag o skoueriou, met n'hellont
ket ober ar pez a ra ar beleg; n'eman ket en o daouarn alc'houe-
ziou an nenv, n'hellont ket rei ar zakramanchou, a zired anezo ar
c'hras hag an nerz. Ar beleg en deus eur c'halloud dreist-natur;
derc'hel a ra war an douar plas Hor Zalver, ha karget eo da skuilh
war an dud ar grasou gounezet gant Jezus-Krist.

Evit anaout galloud ar beleg, selaou petra lavare person santel
Ars da vugale ar c'hatekiz : « Setu ni, emezan, gant sakramant
an Urz. Ar zakramant-man a ve lavaret na zell ouz hini ac'hanoc'h,
ha goulskoude e sell ouzoc'h holl. Petra eo ar beleg ? Eün den a
zalc'h plas Doue, a zo roet d'ezan holl c'halloud Doue. « It, eme
Hor Zalver, d'ar beleg. Evel m'oun bet digaset gant va Zad,
me ho kas d'am zro. It, kelennit ar poblou. Neb ho selaou, am
zelaou; neb a ra fae warnoc'h, a ra fae warnon-me. »

« Ar beleg, pa zistôl ar pec'hejou, ne lavar ket : « Doue ho par-
dono », met : « me ho pardon » Sant Bernez a lavar eo deuet
d'omp pep tra dre ar Werc'hez, met lavaret a c'heller ive eo deuet
pep tra dre ar beleg; an holl eürusted, holl c'hrasou hag holl vadou
an Nenv... Madoherou an Aotrou Doue ne dalvezfent netra
anez ar beleg.

Anez sakramant an Urz, ar pez en deus graet evidomp Hor
Zalver, a vije kollet. Ne vije ket ganeomp en tabernakl... Piou
en deus digemeret hoc'h ene, p'oc'h deut er bed ? Piou a ro d'hoc'h
ene nerz, magadurez evit tremen ar vuhez-man ? Piou ho lakaio e
stad vat da vont dirak Doue ? Piou a ro d'eoc'h eur vuhez nevez,
mar doc'h kcuezet dre ar pec'hed ? Atao ar beleg... Lezit eur
barréz ugent vloaz hep beleg, al loened a vezo adoret enni. »

Marteze te lavaro : me zo re zister, n'oun ket santel awalc'h.
Ar garg-ze a zo re vras, re gaer, evit ma c'helfen sonjal enni. »
Den ebet n'eo santel awalc'h. Kement hini a zo bet fiziet ennan
ar garg-ze, e lec'h en em veuli, a dle trugarekaat Doue da veza

bet ker madelezes en e genver, da veza hen digemeret e renk e
ebestel.

Gwelet ez peus, o lenn an Aviel, penaos a reas gwechall Hor
Zalver. Gervel a reas pesketerien, Per hag Andre, Jakez ha Yann,
eur publikan, Maze, ha re all, holl tud dister, paour, hep deska-
durez; ha gant an dud-se eo e c'hounezaz ar bed. D'ezo e roas
e nerz, e c'hrasou, hag an Ebestel, sklerijenn; ha kelennet gant
Spered Doue, a yeas, war urz o Mestr, da brezeg, da vadezi. N'o
doa aon rak netra, ha skuilh a rajont o gwad evit rei testi d'o
Mestr ha d'an Aviel a brezegen. Dibab a rajont re all evit derc'hel
o flas ha kenderc'hel o labour, ha buan ar bed a glevas mouez
Doue; ar gristenien a greskas o niver en eun doare souezus, daoust
d'ar brezel graet d'ezo, hag, e lec'h ar falz doueou, Jezus-Krist a
voe meulet ha karet el lodenn vrasa eus an douar.

N'out ket santel awalc'h. Met bez ez peus kalon vat ? Gouest out
da labourat, da c'houzanv evit Jezus-Krist ? Setu aze petra c'hou-
lenner diganez. Bez mat, en em ziwall diouz ar pec'hed, kar ar
bedenn, laka da ene e stad da gaout grasou an Nenv, ha bez leun
a fizians e Doue. En deiz ma vezo roet d'it gant an Aotrou 'n Es-
kob sakramant an Urz, e tiskenno en da ene ar grasou ez pezo
ezomm anezo, hag e c'helli beza dinec'h. Da c'houde te a labouro,
te a boanio, te a ouezo beva eur vuhez santel, eur vuhez a bini-
jenn, ha Doue a raio dre da zaouarn kalz vad.

Da c'hedal, bez sentus ouz da gerent, leun a zoujans hag a
garantez evito. An hini na oar ket senti ez vihan, ne ouezo ket ko-
mandi diwezatoc'h. Ra vo hepred en da galon kasont ouz ar
pec'hed, hag e vezo ennot danvez eur beleg.

Ma c'houlenfes diganen : « Peseurt pae am ezo ? », me a lavarfe
d'it : « Selaou : eun deiz, en Afrik, eun den du, gounezet d'ar
feiz kristen, a ginnigas e labour d'eur misioner evit e zikour d'ober
katekiz. — Me garfe da gemeret, a respontas ar misioner, rak
ezomm bras am eus da veza sikouret; met n'hellan ket da gemeret,
n'em eus chet arc'hant d'az paea. — « Gant piou oc'h c'houi
paet ? », a c'houlennas an den du. — Gant an Aotrou Doue. —
Hag e kavit oc'h paet awalc'h. Mat, me ive a c'hedo va fae
digant an Aotrou Doue, ha fizians am eus da veza digollet mat
gant an en e varadoz. »

*
PEDOMP EVIT HON ANAON

Enez Sun. — Mari-Nedeleg MILINER (*C'hoar Klara*), maro e
miz Meurz, bet digemeret en Drede-Urz d'ar 24 a viz Kerzu 1922.

Plabenneg. — Janed L'HOSTIS (*C'hoar santez Veronig*), maro
d'an 20 a viz Ebrel 1928 d'an oad a 71 bloaz, goude 25 bloaz a
profesion en Drede-Urz.

*
Aluzenou da Genteliou Sant Fransez

44 l. : Enez Sun. — 44 l. : Keraez. — 10 l. : Plouaret. —
4 l. : Kerfeunteun, F. ha D. — Brieg. — Caen. — 4 l. : Plouezet.
Trugarez.



LOURD, katekiz bo

Lourd hag ar vertuz a Feiz

Er chapel a zo dindan iliz-veur Lourd, aoter sant Per a zo sklérjennet gant eur verenn hag a zo skrivet warni ar ger man : *Fides*, « AR FEIZ ». Dirazi, a drev aoter sant Yann Avieler, ez eus eur verenn all hag a zo warni ar ger all-man : « *Caritas* » « AR GARANTEZ ». Etre an diou verenn-se ez eus eun all a-drev an aoter vras hag a dle beza warni ar ger « *Spes* », « AN ESPERANS » demguzet gant skeudenn an Itron-Varia.

An teir vertuz-se, — FEIZ, ESPERANS, KARANTEZ, — eo an teir vertuz kristen a zo dreist ar re-all, rak bez 'ez int divin : divin dre ma sellont ouz Doue hag ouz hon deveriou en e genver; divin ivez dre ma teuont a Zoue evel diouz a eienenn, dre ma na c'hellomp o c'haout nemet rôet e vefent d'eomp gant Doue. Bez 'ez int vertuziou dreist natur ar paourkaez den lezet e-unan.

Kement-se koulksoude ne vir ket e ve ret d'eomp labourat ha poania d'o c'haout evit ober hor silvidigez; o lakat en hon ene eo hor c'henta dever e-kenver Doue. Hogen, ma na c'hellomp ket en em savetei hep Doue, Doue n'hor saveteio ket en desped d'eomp.

Sonjomp eta en teir vertuz-se, a lak eur c'hristen da veza dishenvel ouz an dud, all ha komzomp hirio diwar-benn AR FEIZ.

*
**

Bez 'ez eus e Lourd eun daolenn hag he deus dalc'het meur a berc'herin da sonjal eun abadenn dirazi, pa sellent ouz an taolennou gouestlet da visteriou ar Rozera.

An daolenn-se eo ar bedervet, an hini a ziskouez hor Salver kinniget en Templ. Er re-all, peurvuia, a-us penn an dud a zo war an douar, al liver en deus laket en oabl, aeled oc'h adori hini pe hini eus tri ferson an Dreinded. Aman ez eus ivez kalz aeled, met en adorasion emaint dirak eur piled war elum.

Petra 'ziniñ kement-se ?

N'eo ket diaes her c'hompren. P'en devezo beleien an Templ kinniget da Zoue ar bugel nevez-ganet, an den koz Simeon, digaset eur sonj d'ezan gant Doue, a gemero ar bugel-se etre e zivrec'h hag e saludo evel sklérjenn ar poblou, ar poblou-se diskouezet, eun nebeut miziou a-raok gant Zakari, tad sant Yann-Vadezour, « evel azezet e tenvalijenn ar maro. »

Jezuz a dlee eta beza *sklérjenn*, ar bed dre e gelennadurez, abalamour da-se ez eo diskouezet dindan furm eur c'houlouenn war elum; abalamour da-se ivez gouel Jezuz kinniget en Templ a zo anvet *gouel Maria ar goulou* pe gouel ar goulaou, rak benniget e vez ennan goulou koar hag a servicho en tiez d'an euriou grevus

eus ar vuhez, da ziskouez eman Doue en em c'hraet den e-kichen e dud fidel.

Daoust hag ezomm ez eus da lavaret eus ar sklérjenn-se digaset gant Jezuz-Krist d'ar bed ez eo e gelennadurez hag eus ar gelennadurez-se ez int ar gwirioneziou a dleomp da gredi ? Sellit ouz ar verenn a gomzemp outi, n'eus ket pell, hag a zo skrivet warni : « *Fides* », « AR FEIZ ». Diskouez a ra sant Per, ar groaz hag an alc'houeziou gantan en e zaouarn. An alc'houeziou a zigas da sonj en deus resevet Per, hag an eskibien hag ar veleien war e lerc'h, ar c'halloud da staga ha da zistaga... da benaska hor spered en eur rei d'ezan gwirioneziou da gredi. Met ar *groaz* a zigas d'eomp ivez da sonj ez eo bet embannet ar gwirioneziou-se gant an Hini a zo maro warni, gant Hor Salver Jezuz-Krist : ar pezh a ro tro d'eomp da lavaret : ar gwirioneziou kinniget d'hor Feiz gant an Iliz a zo muioc'h eget komzou an Iliz; bez' ez int komzou Doue e-unan.

*
**

Ar miraklou c'hoarvezet e Lourd a zo evel eun eienenn a feiz evit hon amzer...

Kalz a sperejou a oa toc'hor o feiz, marteze dre ma na welent mui a viraklou, rak ar Feiz a zo harpet war ar mirakl. An dud a veve en amzer hag e bro Hor Salver, n'o dije ket kredet e oa Doue, ma n'en dije graet nemet hel lavaret; ret e voe d'ezan hen diskouez dre viraklou ha respont d'ar goulenn a rae outan an dud : « Mar doc'h Doue, diskouezit kement-se oc'h ober traou divin. » Jezuz en deus graet an traou-se, hag an dud a-volontez vat o deus kredet ennan; ar re-all o deus atao kavet an tu da chom hep kredi.

Hirio c'hoaz miraklou Jezuz o deus ar memes talvoudegez; bez' o deus ivez eta ar memes nerz da ziskouez ez eo Doue: ma tlee tud e amzer kredi ennan, abalamour m'en doa pareet an den ganet dall ha resuset Lazar, ni ivez a dle rei d'ezan hor Feiz, abalamour d'ar memes oberou. N'eo ket ret eta e vefe miraklou en devez hirio evit ma vezo ret d'eomp kredi e Jezuz-Krist. Met ac'hano hon enebourien a gemer tro da lavaret : « Ma n'eus ket a viraklou hirio, n'eus ket bet anezo morse. » Ar pezh a zo diot, rak lavaret a dlefant : « Pegwir ez eus bet miraklou gwechall, e c'hellfe c'hoaz beza anezo. »

Met an dud difeiz ne fell ket d'ezo anzav kement-se.... Hag aman eo e teu Doue d'en em ziskouez dre e vamm santel : bez 'ez eus adarre miraklou en hon amzer; evit o gwelet n'eo ket ret klask ha gwirion eo levriou ar skritur-Sakr, n'eus nemet sellet, selaou ha touch. Nag a eneo; abaoe ma 'z eo en em ziskouezet ar Werc'hez e Lourd, nag a eneo distrôet ouz Doue, nag a eneo salvet dre ar miraklou graet eno !

Perc'herinaj Lourd a sikour c'hoaz ar Feiz en eun doare all. E-touez enebourien ar Feiz ez eus unan hag a hanver ar « *respect humain* » : ar vez d'en em ziskouez kristen dirak an dud, an aon, dre eno, da veza disprizet ha goapaet. — Ruzia ouz Jezuz-Krist, da lavaret eo, ouz ar pezh a zo bet biskoaz a gaera, a wella hag a santela war an douar : pebez sotoni !... Hag ivez pebez

danjer ! . . . rak Jezuz en deus lavaret : « An nep en devezo ruziet ouzin dirak an dud, d'am zro me a ruziq outan dirak va zad eus an Nenv.

Ret eo eta stourm ouz an « *respect humain* », ha an dra-se a vez graet e Lourd en eun doare dispar. N'eus ket a « *respect humain* » e Lourd : eno a vez pedet an divrec'h e kroaz, eno e vez poket d'an douar dirak milierou a destou, e-giz pa na vefe den o sellet . . . o Mari, ar berc'herined-se ne ruziont ket ouzoc'h ; ra viro Doue lakjent biken ac'hanoc'h da ruzia outo ; setu ar c'hras a reoc'h d'ezo dre ho pedennou !

SKOUER

Joachime Dehant. — Pareans trumm eur gouli.

Eur plac'h yaouank eus a Belgij, oajet a nao vloaz war-nugent, Joachime Dehant, ganet e Gesves, tost da Namur, a oa dalc'het war he gwele daouzek vloaz a oa gant eun dersienn domm ha gant eur gouli euzus hag a c'holôe he gar dehou azalek penn ar glin betek an ufern. Ar gouli-se, eun troatad 'hed d'ezan, n'oa nemet kig porbolennet ruz ha du. An askorn e-unan a oa krignet gant ar c'hlenved ; an troad a oa kildrôet, ar glin seizet . . . Al lienaj laket war ar gouli a veze saotret dioustu gant al lin flierius. Kompren a c'hellit dre eno ar boan skrijus a c'houzanve ar paourkaez plac'h-yaouank abaoe keit all'zo ; umilite a oa ret d'ezi da gaout, o c'houzout e oa deuet da veza euzus ha donjerus evit kement-hini a dostae outi.

En desped d'an holl louzeier klasket war e dro, ar c'hlenved, hervez ar vedisined, n'oa pareans ebet outan.

Joachime Dehant he doa eur feiz krenv. Meur a vloavez a oa e krede d'ezi e vije pareet e Lourd, ma c'heilje mont betek eno. Gant pebez levenez eta ne zigemeraz-hi ket, da viz Eost 1878, ar c'helou e oa eur plas eviti e perc'herinaj Liej !

Pignat a reas en « trêñ » e « gar » Namur d'an 10 a viz Gwengolo 1878, eun testeni ganti skrivet gant he medisin, an aotrou Froidebise, testeni hag a lavare natur, oad ha grevusted ar c'hlenved . . . He foaniou kriz hag he gouli atao o tirenta o doa kement he dinerzet ma krede d'an dud e oa prest da vont outi.

En em gavet e Pariz, ar beleg a zo en he c'hichen a lavar d'ezi e rafe mat chom hep mont pelloc'h : « Merc'h kaez, emezan, mervel a reoc'h en hent ! »

Met Joachime a chom start en he sonj ; goulenn a ra gant eur vouez klemmus kenderc'hel gant he hent. He daelou a deu a-benn da deneraat kalon ar beleg ; derc'hel a ra eta he flas, hag ar re a zo ganti, hanter vouget gant ar flier a sav diouti, a zo ret d'ezo dislonka. Antronoz, e Ajen, er paourkaez klanvourez, diskennet diouz an « trêñ » a daol eur banne dour war lienaj he gouli, mes ret eo d'ezi o lezel war he lerc'h gant tammou kig brein kouezet diouz he gar. Ar berc'herined a zo en-dro d'ezi a zo spontet hag a sav o mouez da lavaret o deus aon rak ar « c'holera ».

En em gaout a reer erfin e Lourd, d'an 12 a viz Gwengolo, war dro seiz eur diouz an noz. Kerkent Joachime en em stleuj, e-giz ma

c'hell, betek ar Grott ; lakat a ra dour ar sturel da goneza war he gar glanv, ha mont a ra da gousket war-dro unnek eur goude beza kempennet mat he gouli.

Antronoz, mintin mat, eman-hi e-kichen ar pisinou. He feiz a deu a-benn ouz he foaniou hag ouz he skuisher. En em deurel a ra e dour an eienenn, ha neuze, pa douch an dour burzudus ouz he gouli, a-dreus al lienaj, he foan a zo ken yut ma tap eur fallaenn. Ret eo tenna anezi diouz ar pisin ha lakat d'ezi he dilhad. Pa zistro enni hec'h-unan ha pe wel n'eo ket pareet, he feiz ne ra nemet kreski : « Ar bedenn, emezi, ne vez ket atao selaotet ar wech kenta ; me a zistroio. »

Ha da nao eur Joachime a zistro d'an dour. Muioc'h a boan eget ar wech kenta he deus c'hoaz an taol-man. Met, an taol-man, he foaniou a zo aet kuit. Pa seller ouz he gar, golôet a-raok a vreinadurez, e weler n'eus mui gouli ebet warni ; en e blas ez eus eur groc'henenn yac'h, al lienaj saotret gant al lin, hag ar pastellou kig brein a chom war leurenn ar pisinou evel eun testeni eus ar burzud.

« Brevet Itron-Varia-Lourd ! » eme neuze ar plac'h yaouank a bouez penn ; « Gwelit peger mat e ra an traou ! Laket he deus ouz va gar eun tamm kig yac'h ha kroc'hen nevez ! »

Abaoe an devez-se, Joachime Dehant a zo chomet pare. Bet eo diou wech ar bloaz e Lourd, o trugarekaat ar Werc'hez, e-pad ugent vloaz. D'ar 27 a viz Ebrel 1908, Aotrou 'n Eskob Namur, goude eun enklask graet hervez al lezenn, en deus embannet e oa bet graet eur mirakl gant Itron-Varia-Lourd e-kenver Joachime Dehant.



Du-man ha du-hont

Den yaouank souezus

An den yaouank-man, lesanvet Fra Ginepr a Bompejana, a zo war ar studi, e skol-veur Jen, en Itali.

Eun dervez, n'eus ket c'hoaz daou vloaz, en em lakeas da brezek war leur-gêr e barrez Pompejana. Petra a lavare ? « Ret eo, emezan, distrei ouz Doue, ret eo heulia an Aviel, hag evit ober kement-se, n'eus ket berroc'h hent eget reolenn Trede-Urz sant Fransez. — Paourkaez den, a lavaraz e genvroiz, skôet eo gant ar morzoll ! Kollet en deus e benn ! »

Met ar paotr yaouank ne gollas ket kalon. Setu hen adarre war leur-gêr ; komz a ra gant kement a nerz ma tenera an holl galonou. Dre strolladou a ugent ha daou-ugent en eun taol e ro an dud o ano d'an Drede-Urz.

Da genta war êvez, an Aotrou Person e-unan a reas evel e barrezianiz.

O veza bet digant eskob a Vintimil aotreadur da zougen gwiskamant bras an Drede-Urz, an den yaouank a yeas neuze da brezeg eus an eil barrez d'eben eus an eskopti, hag ar gristenien, dre ganchou, a gemere skapular sant Fransez.

Tra estlammus ! An Aotrou 'n Eskob, gounezet gant komzou birvidik Fra Ginepr, a rôas frankiz d'ezan zoken da brezeg ebarz an ilizou war sant Fransez, an distro ouz Doue hag an Drede-Urz.

Evit startaat gwelloc'h ouz ar reolenn an holl dud nevez-se deuet en Drede-Urz, an den yaouank o c'halvas d'eur vodadeg vras. E oa eno, er penn kenta; an Eskob ha Gouarner ar vro, endro d'ezo beleien, renerien an tier-kêr hag eur bobl niverus.

A-raok kloza ar vodadeg, Fra Ginepr a zisklerias penaos e oa e sell da zilezel ar bed hag a lavaras kenavo d'an holl.

An Aotrou 'n Eskob, an daërou en e zaoulagad, a drugarekeas ar prezeger yaouank, a bokas d'ezan hag a vinnigas an hini a selle evel ar gwella eus e vugale.

Er mare-man eman Fra Ginepr a Bompejana o studia evit beza doktor e filosofi, da c'horthoz mont da vanac'h e kouent Tadou kapusined Jen.



Eur pez-labour dispar kinniget d'an Tad Santel ar Pab

Evit dere'hel sonj eus ar 700^o bloavez goude maro sant Fransez hag eus ar 400^o bloavez abaoe m'eo savet o Urz. Tadou kapusined ar Frans o deus graet ober aournamanchou oferenn d'an Tad santel ar Pab Pi XI; Kazul (chasuble), stol, vouel, pal, kamps (aube) kordenn hag an holl lienajou sakr.

Biskoaz, a greder, n'eus bet gwelet labour ken ijinus ha ker brao.

Kavet ez eus tu da lakaat war an danvez buhez hon Tad sant Fransez ha skeudennou a vilierou eus e vrudeta bugale eus an teir Urz : sant Anton a Badou, sant Bernardin a Sienn, sant Paskal Baylon, sant Laurans a Vrind, sant Leonard, santez Elizabet a Hongri, santez Klara, sant Loeiz, roue, etc..., etc...

Ouspenn e kaver war ar c'hazul skeudenn ar pab Pi XI ha hini an Tad Melkior a Benisa, rener bras Urz ar Gapusined.

Al labour-se, hag en deus padet daou vloaz leun, a zo bet graet evit ar pez a sell ouz an aournamanchou gant Leanezed santez Klara eus kêr Mazamet (Tarn) hag evit ar pez a sell ouz al lienajou sakr gant Leanezed sant Bernez eus kêr Anglet (Basses-Pyrénées).

Seblantout a ra beza pentet (peint), daoust m'eo bet gwriet hed-ha-hed gant an nadoz.

Aour, voulouz, lien flour, setu azê an danvez, ha koulskoude n'eo ket ponneroc'h an dilhad-oferenn-se eget ar re-all.

Ijin ha karantez o deus graet eul labour ken talvoudus.

Sant Fransez, a gare kement ar Pab, a vennigo ar re o deus diskouezet eun hevelep enor da Bastor kenta an Iliz.

Tad FULJANS.



Gouentel digant an Tad Theodor ROUSSET, 28, Avenue de la Mare, l'orient
G/c 46,28. Nantes.

Buhez hirzudus eun douger-sammou MAZE TALBOT
0 fr. 50 — 0 fr. 65 dre ar post.

An **Bured Kristen (Kantig)** : 22 real ar c'hant, dre ar post
Kantigou nevez : SAKRAMANT AN AOTER. — JEZUZ-KRIST ROUE
An « DE PROFUNDIS », pedenn an Anaon. — Priz an tri asambles : 45 lur ar c'hant, dre ar post.

LEVRIOU NEVEZ E GALLEG

P. TEQUÉ, libraire-éditeur, 82, rue Bonaparte, Paris-VI.

Mgr TISSIER, évêque de Châlons. — **LA DOCTRINE DE NOS FÊTES. — Les Fêtes des Saints.** — Volume I. — LES GRANDS MAÎTRES :

1. La méthode évangélique de S. Paul. — 2. Le cœur de S. Thomas d'Aquin. — 3. La figure de S. François d'Assise. — 4. La sainteté de Bellarmin. — 5. La langue de S. François de Sales. — 6. L'Esprit de S. Vincent de Paul. — 7. Le 70^e anniversaire de l'Eo'e d'Orient. — 8. Le cinquantenaire de l'Institut Catholique. — 258 pages.

Volume II. — LES GRANDS EXEMPLES :


1. La Pérennité sociale de S. Pierre. — 2. La Prédication séculaire de S. Julien. — 3. Les Vertus rédemptrices de S. Antoine de Padoue. — 4. La Victoire angélique de Sainte Jeanne d'Arc. — 5. Les Martyrs éucharistiques d'Aubenas. — 6. La mission de S. Eudes, un rude saint. — 7. La tragique et sainte histoire des prêtres déportés à l'île Madame. — 8. Les Idées apostoliques du Bienheureux Pierre Chanel. — 9. Le Centenaire de l'abbé Roussel. — 10. Les morts des armées de Champagne. — 11. La Beauté des « Gueules cassées. » — 12. La Relève. — 258 pages.

Mgr BOURCHAM, auxiliaire de Lyon. — **Entretiens sur la Vie Religieuse.** — Conférences données à la Maison-Mère des Sœurs de Saint-Joseph de Lyon. — 1 volume : 218 pages.

Mgr LOUIS PRUNEL. — **Pour l'Eglise et pour la Patrie.** Discours à des jeunes gens.


Etre un homme. — Les écoles libres, écoles de liberté. — Ozanam modèle des étudiants catholiques. — La vocation à l'apostolat. — L'art et la foi. — Soyez apôtres. — Le rôle national des Petits Séminaires, etc... — 1 volume 276 pages.

Abbé ARNAUD D'AGNEL. — **Méditations sur Sainte Thérèse de l'Enfant-Jésus dans sa famille.**
1 volume in-12, 472 pages.



Ra vezo meulet Jezuz-Krist !

Bepred.



Kenteliou Sant Fransez

Kelaouenn vizek gant Skeudennou



TAOLENN AR MIZ

Goueliou ar miz.....	101
Sonjit ervat.....	102
Penaos rnevezi ar vuhez kristen en eur barrez.....	104
Santez Elisabeth a Hongri.....	105
Buhez Sant Fransez a Asiz.....	107
Sant Bonaventura.....	109
Lourd hag ar vertuz a Esperans.....	113
Bleuniou Sant Fransez (XVI ^e peñnad).....	116
Da gerent kristen Breiz.....	118
Al Laoulanig hag ar Bleiz.....	119
Lizer hon Tad Santel ar Pab Pi XI.....	
XXX Perc'herinaj Trede-Urz e Santez Arna Wened... <i>(war ar golo 4st pajenn).</i>	



Rédaction et Administration

P. Théodore ROUSSEL

F.M. Capucin

28, Avenue de la Marne, LORIENT

C/c. : 46.28 NANTES

Priz : daou skoued ar bloaz

GOUERE

- 1 Sul *Pemped sul goude ar Pantekost.*
GWAD PRIZIUS HOR SALVER JEZUZ-KRIST.
- 2 Lun GOUEL VISITACION AR WERC'HEZ GLORIUS VARL. — A.J.
- 3 Meurz S. Leon II, Pab.
- 4 Merc'her. Ofis eizved S. Per ha S. Paol.
- 5 Yaou S. Anton Mâri Zakaria, kovez.
- 6 Gwener.. Eizved an Ebestel S. Per ha S. Paol.
- 7 Sadorn ... S. Siril-ha S. Methodius, Eskibien ha kovez.
DEN-EÛRUS DAVANZAT, eus an Drede-Urz.
-
- 8 Sul *C'houec'hvet sul goude ar Pantekost.*
SANTEZ ELISABET A BORTUGAL, eus an Drede-Urz. — I.P.
- 9 Lun SANTEZ VERONIKA JULIANI, gwerc'hez eus an eil Urz.
- 10 Meurz Ar Seiz Breun Merzerien.
- 11 Merc'her . S. NIKOLAS HAG E GENSEURDED, merzerien eus ar genta Urz. — I.P.
- 12 Yaou S. Yann Guibert, kovez.
- 13 Gwener .. S. Anaklet, pab ha merzer.
- 14 Sadorn ... S. BONAVANTUR, doktor eus ar genta Urz. — I.P.
-
- 15 Sul *Seizvet sul goude ar Pantekost.*
- 16 Lun Santez Mari Menez-Karmel.
SANTEZ MARI MADALEN POSTEL, gwerc'hez eus an Drede Urz.
- 17 Meurz S. Alexi, kovez.
- 18 Merc'her . S. KAMILH LELIS, kovez. eus an Drede-Urz.
- 19 Yaou S. VISANT A BAULE, eus an Drede-Urz.
- 20 Gwener .. S. Jerom Emilian, kovez.
- 21 Sadorn ... S. FRANSEZ SOLANO, kovez. eus ar genta Urz. — I.P.
Pardon Santez Anna-Wened evit ar re a zo en Drede-Urz.
-
- 22 Sul *Eizvet sul goude ar Pantekost.*
- 23 Lun S. Laurans a Vridd, kapusin. — I.P.
- 24 Meurz PLAC'H-EÛRUS KUNEGOND, gwerc'hez eus an eil Urz.
- 25 Merc'her . S. Jakez, abostol.
- 26 Yaou SANTEZ ANNA, Patronez ar Vretoned.
- 27 Gwener ... PLAC'H-EÛRUS MARI MADALEN MARTINENGO, eus an eil Urz. — I.P.
- 28 Sadorn ... S. Nazer hag e Genseurded, merzerien.
-
- 29 Sul *Navet sul goude ar Pantekost.*
- 30 Lun TUD-EÛRUS SIMON, PER A VOLEAN HAG ARCH'HAEL, kovez. eus ar genta Urz.
- 31 Meurz S. IGNAS A LOYOLA, kovez. eus an Drede-Urz.



GOUERE 1928

Sonjit ervat

Di-warbenn kenta gouenn ar Bater :
Hoc'h ano bezet santifiet

I. — Sonjit ervat : kenta tra a dleomp da glask war an douar-man eo ma vezo ano Doue meulet ha karet gant an holl. Klaskomp eta bepred kement a c'hell kreski an enor dleet da Zoue.


Eno eo e kavomp ar gwir merk evit anaout ha mat ha yac'h eo hor menozioù. Ma klaskomp e gwirionez gloar Doue da genta, e reomp nemeur a van eus eur bern traou hag a ra poan spered da eur c'halz a dud.

II. — Sonjit ervat : petra eo gloar Doue ? Gloar Doue eo da genta e santelez. Roit eta da anaout endro d'eoc'h santelez an Aotrou Doue, rak ne ro netra d'ezan kement a enor hag a c'hloar evel e santelez, hag e santelez, skedi a ra dreist-holl pa deu da santifia an eneoù.


Ra vezo hoc'h oberou hag o komzou santel, rak o veza hoc'h-unan eun den santel eo ec'h enoroc'h ar gwella santelez Doue.

III. — Sonjit ervat : dre genta gouenn ar Bater, eme sant Fransez, e pedomp Doue da rei d'eomp sklerijenn evit e anaout, evit anaout e vadelez, e garantez, e justiz, hag a zo madelez, karantez, justiz eun Doue, da lavaret eo hep muzul.

Gwir eürusted ar sent hag an aelez er baradoz eo anaout ha gwelet Doue evel m'eman. War an douar-man seul-welloc'h ec'h anavezomp Doue, seul-eürusoc'h e vezomp ivez.



Penaos renevezi ar vuhez kristen en eur barrez...



'AR veleien a deue da c'houlenn kuzul digantan diwar-benn an doare da grenvaat ar feiz e-touez o farrezioniz, sant Yann-Mari Vianney a responte atao : « Savit en ho parrez eur Vreuriezh eus an Drede-Urz, kemerit soursi anezi hag hep-dale e weloc'h ar vuhez kristen renevezet holl. An Drede-Urz a zo bet choazet gant an Aotrou Doue evit ober adarre eus hor bro eur vro a relijion hag a urz vat. »

Renevezi ar feiz er parrezioù, setu aze e gwirionez ar pezh he deus graet an Drede-Urz meur a wech, ha setu aze ar pezh a ra c'hoaz hirio, pa vez komprenet mat ar spered anezi ha pa vez kemeret poan da lakaat an dredeidi (*tertiaires*) da vev hervez ar spered-se. Ha kement-se n'eo ket souezus : evit ober d'ar relijion kreski en eur barrez, petra 'zo ret ? Pemp tra. Ret eo :

- 1°) Ma vezo bodet ar re-holl o deus c'hoant da vev hervez an Aviel,
 - 2°) Ma vezo eun devosion wirion e kalon an dud a dosta alies ouz ar Sakramanchou,
 - 3°) Ma heuilhint mat an ofisou,
 - 4°) Ma vezint doujus ha sentus ouz an Iliz,
 - 5°) Ma vezint aketus d'en em rei d'an oberou mat.
- Kement-se holl a vez kavet dre an Drede-Urz :

1°) Unvaniezh etre ar re a fell d'ezo beva hervez an Aviel-

En amzer vremen, a drugarez Doue, ez eus e pep parrez eun unvaniezh katolik; ret eo en em unani evit derc'hel penn d'ar fran-masoned; met kement-se n'eo ket a-walc'h. A-raok boda ar re a fell d'ezo difenn o relijion, ez eus eun dra d'ober : unani ar re a fell d'ezo *beva hervez o relijion*. Neuze e vezo kavet atao er barrez eun nebeut kristenien eus an dibab hag en em sikouro da chom war an hent mat da d'ober skouer vat en-dro d'ezo. Unani ar gristenien vat, setu aze ar penn kenta eus al labour, ha setu aze ar pezh a ra eur Vreuriezh eus an Drede-Urz en eur barrez.

2°) **Eun devosion wirion** — Kenvreudeur an Drede-Urz, o rei o ano d'ar Vreuriezh, a dro kein d'ar bed evit heulia Kroaz Hor Salver. O reolenn a c'houlenn diganto ren A) *eur vuhez a bini-jenn* : dilezel an ebatou hag an dansou noazus, ar skridoù difeiz, en em wiska gant modesti; evit ar priegoù, an tadou hag ar mammou : mirout gant evez ar gourc'hemennou diwar-benn o stad; B) *eur vuhez a bedenn* : beza aketus d'o fedennou diouz ar mintin ha diouz an noz, d'o fedennou a-raok ar prejoù, ober ar pezh a zo

en o c'halloud evit ma vo lavaret assambles da vibana ar pedennou diouz an noz, lavaret bemdez an ofiz (12 Pater, Ave, Gloria); C) *eur vuhez a garantez* : beza hervez spered sant Fransez tud a beoc'h hag ober vat en-dro d'ezo dre o oberou a drugarez, o-aliou ha dreist-holl o skouerioù mat.

3°) **An ofisou heuliet** — Setu aze eur poent bras eus reolenn an Drede-Urz. An dredeidi a rank selaou an oferenn, neket hepken da sul ha d'ar gouelioù bras, met zoken bemdez, ma c'hellent, ha da sul eman o flas en iliz e-pad ar gousperou evit santelaat dervez an Aotrou Doue penn-da-benn. Ouspenn-se e c'heller lavarout na vez kavet muioc'h a zevosion a nep lec'h e-kenver Sakramant an Aoter eget na vez kavet en Drede-Urz. An devosion-se a zo bet unan eus devosionoù brasa sant Fransez; n'eo ket souezus eta e vefe pouezet kalz e-touez e vugale war an dever da vont alies da adori Hor Salver Jezuz-Krist o chom en Tabernacl dindan spesou ar bara.

4°) **An doujans hag ar sentidigez ouz ar veleien**. — Den ebet n'en deus bet brasoc'h doujans eget sant Fransez e-kenver an Iliz hag ar veleien. Hen eo a lavare : « Ma kavfen war va hent eun ael hag eur beleg, e lavarfen d'an ael : ael santel, c'houi a zo kaer dirak an Aotrou Doue, va lezit koulskoude da saludi ar beleg da genta, abalamour m'en deus ar galloud da gonsakri Korf ha Gwad Hor Salver; me ho saludo da-c'houde. » An diweza eus ar veleien a oa evitan eur skeudenn eus Mab Doue, hag e rae anezan e « aotrou ». Spered sant Fransez war ar poent-se eo ivez hini kenvreudeur an Drede-Urz a vev hervez o reolenn; bez 'emaint e-kichen ar beleg evit e sikour hag e zifenn, pa 'z eo ret, enep e enebourien.

5°) **Poania war-dro an oberou mat**. — An Drede-Urz a c'hell digemerout an den adalek e yaouankiz, d'an oad a 14 vloaz, kerkent ma 'z eo echuet e gommunionou gantan, sikour anezan da gaout ha da virout ar spered kristen gwirion. Bleinet evel-se hervez an Aviel, ne zaleo ket, evel sant Fransez, da veza eun abostol ha d'ober vad d'e nesa. Kavet e vo atao prest da rei skoazell d'ar veleien evit ober eur mision, eur retred, sevel eur c'hele'h-studi, eur vreuriezh, kemerout perz en eur vodadeg gatolik, klask lenne-rien d'ar c'hazetennoù katolik etc. etc. Neb en deus spered sant Fransez ne chom ket kroazet e ziwrec'h gantan da sellout ouz ar bleizi oc'h ober reuz e-touez e vreudeur !

Oc'h unani etrezó ar gristenien o deus c'hoant da vev hervez an Aviel, o teski d'ezo kaout eun devosion wirion, beza aketus d'an ofisou ha doujus e-kenver ar veleien, ha poania war-dro an oberou mat, an Drede-Urz a ra eta en eur barrez ar gwella labour ma c'heller ober enni. Setu perak o deus an Tadou santel ar Pabed lakaet o fizians enni evit savetei ar parrezioù :


« Me a garfe, eme Benead XV, e vefe e pep parrez eur Vreuriezh eus an Drede-Urz; me a garfe e vefe e pep korn eus pep parrez eun tredead hag a glaskfe en em santelaat ha gounit eneoù all da Zoue.

— An Drede-Urz he deus savetaet gwechall ar bobl kristen, a

lavare Leon XIII, galloud en deus c'hoaz d'hen savetei en hon amzer.


— Savit dre-holl breuriezoù eus an Drede-Urz », a skrive ar pab Pi X.

Komzou H.T.S. ar Pabed, her gwelout a reer, n'int ket dishenvel tamm ebet diouz re sant Yann-Mari Vianney. Penaos e vez miret ha renevezet ar feiz en eur barrez ? Dre an Drede-Urz, rak « hen eo a zo choazet gant an Ao. Doue evit ober adarre eus hor bro eur vro a relijion hag a urz vat. »



Santez Elisabet a Hongri

Patronez ha skouer C'hoarezed an Drede-Urz



Santez Elisabet a laka he c'hurunenn a Dukez ouz treid ar Groaz.

Eun dervez ma oa eur gouel bras, he doa ar santez gwisket he dilhad kerra. Merc'h d'eur roue, dimezet d'eun den pinvidik, ret e oa d'ezi en em ficha

Deut en iliz, setu hi da zaoulina ouz troad ar Groaz.

Ne zaleas ket da sevel ha da lemel diwar he fenn he c'hurunenn aour ha d'en em strinka war leurenn an iliz.

Evel ma kave an dud abeg war gement-se : « Penaos e c'hellin-me, emezi, dirak va Salver kurunet gant spenn, mirout war va fenn eur gurunenn aour ha perlez ! »

**

Jezuz eo hor Skouer.

Va C'hoarezed, heuilhit ho Salver : « *Grit, emezan, evel m'am, eus graet-me va-unan.* »

1°) Bezomp izel a galon, ni pec'herien, dirak ar Mestr-se en deus en em izelaet betek mervel evidomp war ar Groaz.

2°) Bezomp habask (doux) ha kemeromp skouer war an Hini en deus en em lezet da vont d'ar maro evel eun oan a vez kaset d'ar c'higeri.

3°) Bezomp sentus evel Jezus, en deus sentet evidomp betek ar maro hag ar maro war ar Groaz.

4°) Greomp pinijenn evel Jezuz, kement gouzanvet gantan hag en deus lavaret : « Ma na rit pinijenn, e vezoc'h holl kollet. »

Buhez Sant Fransez a Asiz

PEMPET PENNAD

Vertuziou an diskibien genta

(KENDALC'H)

KENTEL 4. — Maro glac'harus ar Judaz. — Diskibien all : breur Umbl hag Eli. — Korreiz ar Sant kouls lavarout hep tamm. — Jilvestr, war urz Fransez, a gas an diaoulou diouz Arezzo. — Yann Parenti, ar barner.

Daoust ha bez 'eo bet holl diskibien ar Sant sent o-unan ? Nann, hiniennou a zo bet dibarfet, met rouez bras int bet, a drugarez Doue.

Unan anezo, Yann Kapello (Yann an Tog), c'houec'hvet diskibl Fransez, a dec'has diouz hent an onestiz. Hen a dlie ranna etre ar Vreudeur, an aluzenou o deveze bet, hag e kollas a nebeudou ar spered a bedenn hag a binijenn. Mirout a rae evitan an tammou gwella. Ar Sant e klerijennas dre gaer, hag e c'hourdrouzas; poan gollet ! Yann a voe skôet gant dorn Doue : paka a reas klenved an dud lor, teurel a reas a gostez e zilhad manac'h, ha pa voe er bed, e voe gounezet gant an desesper, hag en em grougas, Nag a zaelou a skuilhas Fransez war e vab kollet !

Er bloaz 1210, pa welas Fransez en doa eur maread diskibien, e reas d'ezo mont da brezek ar peoc'h, ar binijenn hag ar baourentez. Mont a reas e-unan gant Jilvestr d'ar vro anvet an Toskan, ha kalz vad a reas d'an dud dre e brezegennou.

E Perouz, e wiskas sae an Urz d'eun dijentil yaouank a voe graet anezan breur Umbl; kenteliet e oa bet gant Hor Salver Jezuz-Krist e-unan. E Korton, e voe digemeret ar breur Eli, den desket bras, hag unanik all bennak.

Pa deuas ar c'horaiz, e lavaras ar Sant da Jilvestr : « Sav aze eun nebeud lochennoù evidout hag an disbibien nevez, reni e-pad ar c'horaiz; me a zistroio aman da-c'houde. » Mont a reas e-unan neuze da lenn vras Trasimen; ober a reas d'eun treizer kas anezan e bag betek eun enezenn, da zeiz Merc'her al Ludu, daou vara gantan; hag eno e-chomas a-hed ar c'horaiz. Aelez ar baradoz hepken a c'hell lavarout peger birvidik e voe e bedennou en enezenn-se, e-unan gant Doue. Maget e voe gant karantez Hor Salver Jezuz-Krist, rak ne zebras nemet eun hañter eus eur bara. « Debrì a reas eun nebeudig, eme eur sant, gant aon na vije deut an diaoul da c'houeza al lorc'h ennan dre lavarout : Te a zo ker santel ha Jezuz a Nazareth, pegwir ez out chomet eveltan daou ugent dervez hep debri eur vruzunenn. Debrì a reas nebeut evit ober pinijenn. »

Derc'hent ar Yaou-Gamblid ez eas an treizer d'e gere'hat en-dro; setu ma c'hellas kommunia gant e vugale en deiz-se kouls hag e goueliou Pask.

Prestik goude ez eas ar Sant da Arezzo, met eno an dud, rannet e diou gostezenn, a oa warnes en em zrailha. Fransez a lavaras



SANT FRANSEZ A BREZEK D'AR BOBL

da Jilvestr : « Gra d'an holl ziaoulou tec'hout diouz kêr. » Leun a feiz hag a fizians, Jilvestr a bignas war mogerioù kêr hag a savas e vouez : « C'houi holl a zo aman, drouk-sperejou an ifern, it pell ac'hann, m'her gourc'hemenn d'eoc'h en ano an Doue Holl-Challoudek hag en ano Fransez, e servicher ». An diaoulou, hag a oa o c'houeza kasoni etre an dud, a dec'has kuit, hag ar peoc'h, eur peoc'h gwirion, a renas e kêr : « En em garit holl ! » a lavare ar Sant d'ezo.

Eus Arezzo ez eas Fransez da Florans ; eno e wiskas ar sae a vanac'h d'eur barner brudet eus kêr. Ar barner-se, Yann Parenti e ano, a oa eun devez war ar pourmen, pa welas eur den oc'h ober d'eur vandenn moc'h mont d'o c'hraou. Ar re-man o oc'he, a zoroc'he hag a enebe : « Allo ta !, eme an den, it d'ho kraou, evel ma 'z a ar varnerien d'an ifern ! » Ar ger pounner-se, lavaret gant eun den hag a oa mechans nevez varnet, a reas da Yann trei kein d'ar bed.

N.-B. — Lod eus hol lennerien o deus goulennet ma vije dastumet en eul leor ar pennadoù eus « Buhez sant Fransez », a zo bet gwelet betek-hen war « Gentelioù sant Fransez ». Graet e vo evel-se. Hiviziken eta ne vo ket embannet mui « Buhez sant Fransez » aman. Eul leor a vo graet amez, unan kaer meurbet, skrivet en eun doare reiz, skeudennet brao, gant 300 pajenn pe war-dro. Ha ne gousto ket ker evelato, met an nebeuta ma c'hellimp.

Fizians hon eus e vo prest a-benn fin ar bloaz. Pebez leor kaer da ginnig d'an amezeien evit gouel Nedeleg !



Pevarzek devez a
viz Gouere

Sant Bonaventura

Kardinal, Eskob Albano ha
Doktor eus an Iliz,
erzvet mestr bras ar Breudeur Bihan
(1221 + 1274)

Azeulomp Doue mestr bras ar sklaerijenn o hadan gouiziegez e spered an doktored. Azeulomp Doue mammenn ar garantez o c'houezan an tan santel en ene ar sent. E buhez sant Bonaventura, e kavomp gouiziegez eleiz ha karantez virvidik.

Dre e oberou hag e skridou e kelenn an dud en eur deneraat o c'halonou.

Setu eur skouer dispar, n'eo ket hepken evit pep beleg, hogen ivez evit pep kristen. Rak pep den a anzav Jezus evel mestr, a dle lakaat ar sklaerijenn da baran endro d'ezan, hag ober d'e vreudeur karout gwelloc'h an hini a zo karantez. O sant Bonaventura, grit ma vimp henvel ouzoc'h, ma vo splannder en hon buhez. *Sit splendor Domini nostri super nos !*

Greomp eur sell war vuhez Sant Bonaventura da welout penaos e kelennas ar gristenien ha penaos e renas e venec'h.

I

An Doktor

Sant Fransez, hon tad santel, a lavare eun devez, en eur huanadi : « Ma c'hellfen, da vihanan, kaout eun ene evit kompren ma hini. » Ar pezh a glaske, en em gavas. Er bloaz 1221, e Bagnarea, Yann Fidenza ha Mari Ritelli o devoe eur mab anvet Yann, evel e dad. D'e bevar bloaz, e voe dare d'ezan mervel. E vamm vat a redas, en eur ouelan, da gaout sant Fransez a Asiz, hag e bedas da rei ar pare d'he c'hrouadur : « Mar teurvez Doue selaou ma fedenn, emezi da Fransez, e kafen e welout o vont en hoc'h Urz. »

Ar bugel a bareas hag ar sant a deuas d'e welout da Vagnarea. 'Dal m'en em gavas dirakan, Fransez a rôas eur pok d'ezan, hag ouz e sevel etrezek an nenv, e lavaras : « **O buona ventura : o ! pebez kavadenn vat.** »

Evel ma lavare eun doktor : « *An eil Eli en doa kavet e Elize* ». Diwar neuze, Yann ne voe graet mui nemet Bonaventura anezan.

Dre ma kreske en oad, e teske, en eur c'hoari, holl skianchou ar bed. Ma oa kaer e zremm, e ene dinamm a oa kaeroc'h c'hoaz. Da zaou vloaz war-nugent, a c'houlenne bezan degemeret en Urz Sant Fransez. Hepdale e voe kaset d' Beris da studian an teoloji hag an holl skianchou sakr dindan eun den brudet ha desket, Alexandre de Halès. Heman o welout spered lemm ha santelez e skoliad, a lavare eun devez : « Setu dirak hon daoulagad eur skeudenn veo eus Adam araok e bec'hed. »

Spered lemm Bonaventura a reas buhan e hent, e-touez kenteliou kaer an teoloji, ha hepdale ar skoliad a voe beleget ha lakaet da gelenner. Daoust d'ezan da dec'hout pell diouz meuleudiou an dud, brud e ouiezegez a redas dre ar vro.

Skrivan a reas buhez Sant Fransez. Eun devez, sant Thomas o vezan deut d'e welout, a gavas anezan gant al labour-ze.

En em denn a reas hep e zistrei, en eur lavarout d'ar re a oa gantan : « Lezomp ar sant da labourat evit ar sant. »

Eun dro all, sant Thomas a c'houlennas outan pelec'h e tastume ar c'homzou a lavare hag a yae ken doun e kalonou an holl.

— « Setu, eme Vonaventura, en eur ziskouez ar groaz, setu al levr hag en deus desket d'in an nebeut a c'houzon. »

Daoulinan alies dirak aoter Jezus, pleustri war E boonioù hag E yaro, sed' a oa e evurusted. Mont da louzaoui an dud lór er c'hlanvdiou, a oa evitan eur yec'hed.

Sant Bonaventura a skrivas kalz, rak fellout a rae d'ezan klask astenn rouantelez Jezus. Birvidik tre e oa e garantez evit Jezus, setu perak e lakae en e skridoù mennoziou sklaer e spered ha trivliadennou gredus (*sentiments ardents*) e galon.

Hag e gwirionez « e skrivoù, en eur silan sklaerder er spered a entan ivez ar galon; a laka an nen da dostaat ha d'en em stagan Outan gant liamm ar garantez. »

II

Ar Renner

Da bemp bloaz ha tregont, Bonaventura a voe dibabet da benn-ruener e Urz. Ren a reas e Urz epad triouec'h vloaz, gant nerz ha kumvelez (*clémence*). Dindan eur mestr ken santel, a gastize e gorf en eun doare ken spontus, hag en em blije el labourioù diaesan, an holl venec'h a oa laouen o heuilh, penn da benn lezenn striz o urz. Pleal a rae da vat gant e venec'h ha skrivan a reas levrioù evito : « *Mellezour an nevezidi* » (novices), « *Bibl ar beorien* » hag all.

Bez 'e voe e gwir « eur c'houlaoüenn skedus ha splann e ti an Aotrou ». Ambroug a ra ar re a zo war vranskell, rei a ra harp d'ar venec'h deut war an oad, ha skoazell d'ar re goz....

Tapet en devoa an tu da lakaat ar reolenn da blijout d'e vibien, goude ma rankent he heulian penn-da-benn.

N'eo ket en em ziskouez a-us d'e venec'h a rae, hogen dont davedo evit rei nerz d'ezo da vont waraok.

Ne gave ket e oa awalc'h d'ezan pleal gant e vanatioù. Kovez ha prezek a rae e kement lec'h ma tremene.


Anvet e voe da eskob ha da gardinal gant Gregor X. O walc'hi listri ar gegin e oa, pa deujod da rei kelou d'ezan eus an nevezenti-ze. Ar pab, goude bezan e zakret, e zegasas gantan da gonsil-meur Lyon. Bonaventura a voe ene ar c'honsil-ze.

Goude ar bedervet bodadeg e kouezas klanv ha d'ar 14 a viz gouere e tremenas, ha beleien ar bed holl a voe gourc'hemennet d'ezo gant ar Pab lavarout an oferenn evit e ene.

Pedenn. — « O Doue leun a vadelez, c'houi hag hoc'h eus roët sant Bonaventura d'hoc'h Iliz, evit bezan eun Doktor hag eur sklaerijenn dispar, grit ma vimp sklaerijennet ha gwarezet gantan. »

Mennad. — Studian a rin evit karout Doue. Studian a rin « gant ma c'halon. » Studian a rin hep klask gourc'hemennou an dud.

Boked. — « Setu eun den fur ha poellek, d'ezan gwir ouiezegez ar sent. » E.R.



LOURD, katekiz beo

Lourd hag ar vertuz a Esperans.

D'ar Yaou Gamblid diouz an abardaez e oa, e Jeruzalem, daou dorfetour, unan er prizon, egile e liberte. E prizonioù kêr e oa Dismaz, eul laër bras, tapet erfin goude kalz a daolioù fall, kondaonet d'ar maro; mervel a dlie, antronoz, staget ouz ar groaz. Egile a oa eun abostol da Jezuz, maget gantan e-pad tri bloaz gant bara ar wirionez. Met krignet e oa gant an avi hag an avaristed; e ano e oa Judaz.

Hirio, eus an daou dorfetour-se, unan a zo war an aoterioù : n'eo ket an abostol met al laer; digorit leor ar verzerenti kristen, hag e lennoc'h ennan ano sant Dismaz. Hag an abostol, an abostol a zo dindan ar setans douget en e enep gant Jezuz-Krist : « Gwelloc'h e vije bet d'ezan na vije biskoaz ganet, » setans hag a denn d'eur setans a zaonasion.



Perak eur blanedenn ken dishenvel etre daou zen maro er memes

devez hag a oa sammet a bec'hejou o-daou derc'hent o barnedigez gant Doue.

Na glaskit penn abeg all ebet nemet heman : Judaz a zo bet kollet gant an dizesper, Dismaz a zo bet salvet gant an esperans.

An Esperans : bez 'ez eo an eil vertuz teologal, ker ret hag ar feiz evit ar silvidigez, hen diskouezet hon eus dre eur skouer. Anezi eo emomp o vont da gaozeal en eur c'houlenn digant Lourd eur gentel bennak diwar he fenn.

*
**

Komzet hon doa dec'h eus an teir gwerenn a zo gwestlet, dindan an Iliz-veur, d'an teir vertuz teologal. An hini greiz a zo gwestlet d'an esperans : diskouez a ra an arc'hael sant Mikael o rei lamm d'an diaoul.

Ret e voe bet d'an ael-se kaout eur mell *fizians* e Doue evit en em sevel enep froudenn ourgouilhus Lusifer en em savet enep ar Mestr. Lusifer a oa, hervez an istor, ar c'haera hag ar galloudusa eus an arc'haelez... kalz galloudusoc'h marteze eget Mikael. Ha neuze, pegement a aelez ne oa ket o vont da chacha d'e heul en e zizentidigez ?... Kalz marteze....

Da biou e vije eta ar viktor en emgann a groge en Nenvou etre ar sperejou feal hag ar sperejou trubart ?... Mikael ne chomas ket da varc'hata : troi a reas e sellou war-du Doue ; lakat a reas e *fizians* e Doue evel p'en dije lennet ar c'homzou a vezo skrivet diwezatac'h er Skritur-Sakr : « *Spes autem non confundit* », « an nep a esper ne vezo ket tromplet. » Entanet gant an Esperans, e lakeas neuze an Nenvou da dregerni gant ar gomz a zo deuet da veza e ano : « *Mikael ?* » piou eta a zo henvel ouz Doue ? » Ar gomz-se a zastumas an aelez mat, hag ar re-man, bodet en-dro da Vikael, a sailhas war an aelez fall, ha Doue, hag o doa esperet ennan, Doue a rôas d'ezo ar viktor hag ar baradoz evit an eternite.

N'omp ket souezet eta o defe taolennerien Lourd prezeget d'eomp an esperans e sant Mikael.

*
**

Met n'eo ket dre daolennou kaer hepken eo en deus Lourd meulet an esperans : rei a ra d'eomp kenteliou beo diwar he fenn. An esperans, her gouzout a reomp, eo ar *fizians* start hon eus e talc'ho Doue d'ar promesaou en deus graet d'an dud, promesaou hag a sell ouz ar vuhez-man hag ouz buhez an amzer-dazont : — evit buhez an amzer-da-zont Doue en deus prometet rekompans ar baradoz, ma veritomp anezan war an douar, — evit ar vuhez-man en deus prometet d'eomp hor skoazel!a atao, eun bag eun evit hor sikour da veritout eürusted ar vuhez peurbadus.

Hogen, evit ar pezh a sell ouz an eil promesa hag eben ouz an douar hag ouz an Nenv, Lourd a brezek d'eomp ar *fizians* e Doue hag ar vertuz a esperans.

Gwelit ar glanvourien niverus-se hag o deus graet o dougen betek Lourd eus ar pennou pella eus ar Frans, en desped da vil drubuilh hag alies da vil boan. Petra en deus o c'haset, hentchet

ha skoazellet betek eno ? Peseurt santimant dreist-natur a garg o c'halonou betek tarza en o daoulagad ha war o dremm ? *Ar fizians* e Doue. Ar vertuz-se eo a zo en o c'halon er Grott, er pisinou, war blasenn ar Rozera, pa dremen ar Sakramant-meulet ra vezo !, e pep lec'h... memes war an hent o digas endro d'an ospital hep beza het pareet, dre m'o deus esperans da veza pareet antronoz... memes en tren a zigas anezo d'ar gêr gant o c'hlenved, dre ma talc'hont an esperans e kouezo ar c'hlenved a-benn ar bloavez war-lerc'h. Bez 'ez eus klanvourien hag o deus bet erfin, goude meur a vloavez, abalamour d'o esperans start, eur bareans ha na seblante ket da genta beza skrivet e menozioù ar Brovidans. Bez 'ez eus re-all hag a zigase ganto d'ar gêr, evito da chom klanv, eun esperans ker c'houek ma kavent ar pare, en eun taol, en tren pe en o zi.

Pebez skoueriou kaer a *fizians* e Doue ! Ha c'hoaz n'eus kaoz aman nemet eus a c'hrasou rôet d'ar c'horf, grasou ha na c'hellomp ket atao konta warno, dre ma na vezont ket atao talvoudek evit hor silvidigez. Met pa vez kaoz eus a c'hrasou rôet d'an ene, pebez *fizians* divrall ne dleomp-ni ket da gaout e promesaou an Aotrou Doue !

Ar bromesa graet d'eomp gant Doue eus e varadoz, ma lakeomp e c'hras da dalvezout war an douar-man, ar bromesa-se a c'houlenn diganeomp eun akt a esperans hag a zo bet goulennet digant Bernadett gant ar Werc'hez gloriüs Vari hec'h-unan. An Itron Varia he doa goulennet digant ar plac'h yaouank dont d'ar c'heo pomezek devez lec'h-a-lec'h : houman a reas ar bromesa hag ar Werc'hez a lavaras d'ezi : « Me a bromet ho lakat da veza eürus, n'eo ket er bed-man, *met er bed all.* »

Arabat d'eomp kaout avi ouz ar bromesa graet gant Mari da Vernadett ; graet eo bet d'eomp-ni ivez... ya, met gant ma vezomp bet fidel da volonteiz an Nenv. Promesa Mari da Vernadett a oa ar memes tra. Mari a c'houlenne diganti dont pomezek devez lec'h-ha-lec'h da bedi d'ar Grott. Hag e kav d'eooc'h na c'houlenne nemet an dra-se ? Eo, goulen, a-rae ma talc'hje Bernardet an ene glan en doa tennet warni he grasou. Rei evit kaout : Bernardet a westlje he buhez da Vari ha dre Vari da Zoue : hag en distro, Doue ha Mari a roje d'ezi ar baradoz.

An dra-se a c'hell hag a dle beza gwir evit pep-hini ac'hanomp. Itron Varia Lourd, hor sikourit da servicha Doue war an douar-man evit ma c'helloc'h rei d'eomp an eürusted er bed all ! Evel-se bezet graet !

SKOUER

An dimezel Mac'harit Deschamps, eus Perigeu

Ret e oa da Vac'harit Deschamps, oajet a zaou vloaz ha tre-gant, eur feiz bero hag eun nerz-kalon dispar evit dont a-benn da lakat he zad d'he lezel da vont da Lourd. He medesined o-unan a lavare e oa diot he lezel d'ober eun hevelep beaj. Met Mac'harit a bedas hag a aspedas kement ma teuas he zad da selaou he fedenn evel ma selaouer menozioù diweza eun den war e drem envan. Ar verc'h a zigente ouz he zad evit ar wech kenta, hag an

tad, en eur vriata e verc'h, a grede d'ezan lakat war he zal e bok diweza.

Ar c'himiad e gar Perigeu, gant perc'herined Lourd, d'ar 7 a viz Eost 1922, a voe mantrus : o welet o lakat en trêñ ar vaouez-se prest da vervel, an dud a sonje hag a lavare na daje biken ez-veo betek penn an hent. Hag evit gwir kerkent ha ma voe diblaset an trêñ, ar glanvourez kaez a dape eur fallaënn. E gar Ajen, medisin ar perc'herinaj a gredas e voe-hi maro hag a reas he diskenn war he c'hraevaz. Ar maro koulskoude n'en doa ket peur-c'hraet e labour. O klevet urz ar medisin, ar glanvourez a zigor he daoulagad, a zastum an nebeut a nerz a chom c'hoaz ganti hag a ro da gompren e fell d'ezi mont betek ar penn en desped da bep tra. He fizians a zo ker bras ma senter outi. Pebez estlamm daou zevez goude-se e gar Perigeu, pa welas ar bobl diredet a bep tu o tiskenn diouz an trêñ, seder ha laouen, an hini en doa gwelet o sevel ennan, hanter-varo, daou zevez a-raok.

**

C'houec'h vloaz a oa, an dimezel Deschamps a oa dalc'het war he gwele a boan gant daou glenved ha na c'helle finval ganto, daou glenved ha na oa pareans ebet da esperout outo... Dizec'het ha dinerzet evel ma oa, Mac'harit ne c'helle mui padout gwall-bell. Seitek medisin o doa kavet enni merkou eus ar c'hlenved anvet a galleg « péritonite tuberculeuse » hag eus eur c'hlenved hag a grigne he livenn gein. He foltred, tennet gant ar bannou X, eo en doa diskleriet kement-se.


En eur erruout e Lourd, ar paour-kaez plac'h yaouank a oa evel aet da netra. Ne ouie mui petra 'dremene en-dro d'ezi; pep huanad a seblante beza an diweza; ker fall e oa ma n'oa ket kredet he souba er pisinou ar vintinvez kenta. Gortozet e voe ar pardaez evit-se.

E-pad m'edo en dour, ar glanvourez ne santas nemet ar grenienn a deu diwar an dour yen. Ar grenienn-se he lakeas da vont falloc'h-falla, ar pezh a reas aon d'ar merc'hed a oa war he zro. Met e-pad ma oa ar re-man o tenna anezi er-maez eus an dour, Mac'harit a santas n'he doa poan ebet mui e nep lec'h.

Antronoz vintin, ar vedisined a embanne en o bureo e oa-hi pare, ha pare mat, ha pare, hep gellout lavaret penaos, eus an daou glenved he doa.

Ar baredigez-se a reas kalz a drouz e Perigeu ha tro-war-dro. Ret e oa d'an dud diskredik o-unan digeri o daoulagad dirak ar burzud, en desped da c'hevier an dud difeiz.

Abaoe ma 'z eo bet pareet e Lourd, Mac'harit Deschamps a zo yac'h-pesk. Labourat a ra, en-dra c'hell, da gennerzi ene ar re o deus, evelti, laket o esperans e Providans Doue.



Bleuniou Sant Fransez

XVIth PENNAD

*Breur Jelvestr, Santez Klara, 'lavar a-berz Doue,
Da Fransez, o zad karet, penaos, e gwirione,
E tlee gand e vreudeur, dre brezek d'ar boblou,
Ober d'an dud dilezet, terri o gwall zechou.
An Drivet Urz, d'hen sikour, neuze a zo savet.
Hag ar sant ha mont, eun deiz, da brezek d'en evned,
Ouz hen klevout dirichan 'chom ar gweniled.*

Sant Fransez prestik goude
Ma 'n em roas da Zoue,
Ha gantan dastumet
Eun nebeut keneiled.
En e izilded a galon,
Evit Jezus e wir vignon,

En em gavas, eun devez, eun tammig kaer nec'het :
Petra ober ouz an Urz gantan nevez savet ?
E vreudeur kouls hag hen, 'vit tremen o amzer,
Petra 'oa ar gwellan evito da ober ?
En em rei d'ar bedenn, hag hepken d'ar bedenn,
Pe monet da brezek d'an dud ar gwir Lezenn ?

Sant Fransez, e gwirione
Petra ober na ouie.

Ha war eun dra d'ezi ker bras talvoudegez,
E felle d'ezan goût, a-du gand ar Furnez,

Petra 'sonje Doue,
 'Vit gwir, a gement-se.
 Sant Fransez 'oa koulskoude, a galon ken diher (1)
 Ma tiskrede war e nerz hag hini e bater,
 Ha ma felle d'ezan' ,vid anaout Youl Doue,
 Kaout ali e Vreudeur, o fedennou ive.

Hag e c'halv Breur Maze :
 « It, m'ho ped, dizale;
 Da gaout Santez Klara;
 « Ha kuit d'en em jala,
 « Eus ma ferz mat, kuita, e lavarot d'ezi :
 « Bezit ar vadelez, 'vit Fransez da bedi,
 « Ho c'hoarezed ganeoc'h, hag ar re santellan
 « Ma teurvezo Doue, ha dre druez outan,
 « Lavarout berr-ha-berr,
 « Petra a die ober,
 « Evid ar gwellan,
 « Da blijout d'ezan.
 « Pe a ray gand e Urz, eun urz prezegerien,
 « Pe a vo e vreudeur hepken tud a bedenn.
 « Da Jelvestr, hon breur santel, e reot c'hoaz neuze.
 « An hevelep kefridi, dre gomzou a-zere. » —
 Jelvestr 'oa an den-se a welas, eun devez,
 Pa oa c'hoaz a vevan e-kreiz eur bed divez,
 Eus genou Sant Fransez, eur groaz aour o tarzan,
 Skedus evel an heol, pa vez en e domman.
 He fenn a oa harpet war dreuziou an Nenvou,
 He diouvrec'h, astennet a-us d'an holl boblou.
 Lezet gantan ar bed, 'vit dont d'eur manati,
 E santelez 'deuas ker buan da skedi,
 M'en doa netra d'ober nemet e zorn astenn,
 Evit kaout eus an Nenv, grasou en aluzenn.

Ha gand e servijer,
 Meur a wech an amzer,
 D'ober kaozeadennou,
 Doue, eus lein an Nenvou
 A ziskenne war an douar;
 An dra-ze a zo diarvar.

Ma en doa Sant Fransez, evit Jelvestr e vreur,
 Doujans ha karantez, 'vel ne vez ket nemeur.
 Ha war lavar e dad, en hent ec'h a Maze,
 D'ober e gifridi, laouen a gement-se.

Hag hen mont da genta
 Da gaout Santez Klara.
 Hag en eur ober eur bale,
 Da gaout e vreur Jelvestr goude.
 A-boan d'heman bezan klevet
 Ar gefridi degemennet.
 En em lakas, gant dudi,
 En e gamprig da bedi.

(1) Humble.


Bet e vennad digant Doue
 E lavaras d'e vreur Maze :
 « It, timat, da gaout Breur Fransez,
 « Lavarit d'ezan hep enkreuz :
 « M'hoc'h eus kuitaet ar bed, hepken e gwirione,
 « Evit 'n em santelaat ha selvel hoc'h ine,
 « Petra 'deuy da vezan hepdoc'h an ineou ?
 « Hep skoazell e kerzint e-trezek an Nenvou ? » —

Ha sede Breur Maze
 O tistrei, adarre,
 Prez kaer warnan d'al leandi,
 'Lec'h ma oa Klara o pedi
 A-dal m'hen gweleas, ar santez
 A lavaras gant levenez :
 « Doue en deus d'in disklériet
 « Ha war-eun-dro, d'am c'hoarezed,
 « Ar pez en deus lavaret
 « Da Jelvestr ho preur karet. » —
 Ha Maze da guitaat ha mont da gaout e dad;
 Pa 'n em gavas er gêr 'voe degemeret mat.
 Fransez da guitaat e dreid 'walc'has,
 Hag e voued d'ezan a fichas.
 Debret e lein gant Maze
 Fransez 'lavaras neuze :


« Deus, ma mignon, deus ganin-me
 « D'ar c'hoad da ober eur bale. » —
 Ha 'n em gavet, eno,
 En eul lec'hig distro,
 Laket e bichourell, ar sant a zaoulinas
 Dirak e vreur Maze. Hag e ziouvrec'h e kroaz :
 « Lavar d'in 'ta, ma breur Maze.
 « Petra 'fell d'an Aotrou Doue ? » —
 « Setu aman, o ma breur ker.
 « Reiz ha sklêr mat, ha berr-ha-berr,
 « Ar pez en deus Jezus, war-eun-dro disklériet
 « Da Jelvestr, da Glara, kouls all d'he c'hoarezed :
 « Fellout a ra d'ezan, ez afec'h da gelem
 « An holl dud, ho preudeur, war al lezenn gristen.
 « N'oc'h ket bet gantan dilennet,
 « Evel m'en deus d'imp disklériet,
 « 'Vit klask hepken mad hoc'h ine,
 « Lezel ar re-all a goste. » —

(Da genderc'hel).

PAOTR JULUEN.



Da gerent kristen Breiz



Kerent kristen, an Iliz a c'houenn diganeoc'h he zikour d'ober he labour war an douar, o rei d'ezi beleien.

Sikour a rit an Iliz o pedi eviti, o senti ouz he lezennou, o veva eur vuhez kristen, o rei d'ezi hoc'h aluzenn, pa gavit tro. It pelloc'h c'hoaz, ha roit unan bennak eus ho pugale evit beza beleg.

Roet ho peus soudarded evit difenn ar vro, hag an holl o deus meulet soudarded ha martolodet Breiz-Izel epad ar brezel bras. Abalamour d'ezo, ar Frans he deus gallet harpa ouz he enebourien. Roit breman beleien evit difenn an Iliz, rak ezomm he deus.

Gouzout a rit; epad ar brezel ez eus marvet kalz beleien, kalz kloareged yaouank, hag e peb eskopti, abace ar brezel, ez eus nebeutoc'h a veleien eget araok, ha goulskoude muioc'h a labour zo d'ober.

N'e ket hepken evit hor bro ez eus ezomm beleien, met ive evit ar misionou, ar c'houentchou, ma kendalc'ho e pep lec'h an Iliz da vout

war araok ha d'ober vad d'an dud e pep giz.

C'hoant ho peus gouzout petra zonje, en eur vervel, ar veleien, ar gloareged a zo kouezet o tifenn ar Frans ? Selaouit : setu aman petra lavare unan anezo, nebeut amzer araok rei e huanad diveza. « Kinnig a ran va buhez evit an eskopti, evit ar veleien, evit ma savo re all da gemeret va flas. » Evelse o deus pedet ar re all ive. Evit adsevel ar vro eus ar stad truezus m'eo ket lakaet gant ar brezel, ober anezi krenv ha kaer a-nevez, eo ret kaout beleien, kalz beleien. Rei beleien d'an Iliz a zo senti ouz mouez Hor Zalver, a lavare : An eost a zo kaer, met bihan niver an eosterien.»

Peseurt labour kaeroc'h, lavarit d'in, eget prezeg ar wirionez, ar zantelez d'an dud, o distrei diouz an droug, diouz ar pec'hed, o frealzi en o foaniou ? Ha penaos tenna gwelloc'h bennoz Doue war eur familh ? O rei eur beleg d'an Iliz, ho peus perz er vad a raio, er pedennou, en oferennou a lavaro. Hor Zalver en deus diskleriet e roio e bae d'an hini e ginnigo eur banne dour yen d'ar paour en e hano. Petra ne raio ket d'an hini en dezo roet eur beleg d'an Iliz, d'an eneou ?

Kerent kristen, epad ar brezel, marteze, ho peus bet da c'houzanv, o veza n'oa ket a veleien awalc'h. E meur a barrez vras n'oa nemet eur beleg, ha c'hoaz koz peurlies, p'e gwir ar veleien yaouank a oa holl er brezel. Stank oa ar parrezioù bihan lezet hep beleg ebet. Person ar barrez tosta eo a ranké dont da zul da lavaret an oferenn, d'ober katekiz pa c'helle, da rei ar zakramanchou, da anterri ar re varo.

Gwelet ho peus pegen dies oa an dra-ze evidoc'h hag evit ar

beleg. Daoust d'e nerz-kalon ha d'e aked, n'eo ket gouest d'en em garga eus diou barrez. E pep parrez e tle beza eur beleg a lavaro an oferenn bemdez, a roio ar zakramanchou, a welo ar re glanv, a gelenno ar re vras hag ar re vihan, a gentelio ar re o dezo ezomm da gaout kuzul. Truezus eo stad eur barrez n'eus enni beleg ebet, ha goulskoude, e meur a lec'h e Frans, eman an traou evelse : eur beleg hepken evit diou, teir barrez !

Mat, m'ho peus c'hoant kaout beleien, roit beleien. Eus pelec'h e teuint, nemet eus ar familhou kristen, a zo enno krenv ar feiz, santel ha kalonek an dud ? Pep familh gristen a dle kemeret evit eun enor rei eur beleg d'an Iliz.

E kichen an dra-ze, an holl aluzennou all a zo nebeut a dra. Rak an Iliz, evel ma ouzoc'h, a c'hell beva e kreiz ar baourentez. Kaer e vo ober brezel d'ezi, laerez he holl madou, ne varvo ket, ma chom beleien da brezeg an Aviel. Met ma teufe. — Doue ra viro ! — ar veleien da vankout d'eomp, an Iliz buan a gollfe he nerz hag hor bro a gouezfe adarre dindan galloud an drouk-spered.

Ya, roit beleien. Hag e komzan ouz an holl familhou kristen, paour ha pinvidik. Holl o deus ezomm, da deurel evez ouz ar pez a skrivan aman, rak kalz traou a vefe da lavaret diwarbenn ar falskredennou a zo skignet e meur a familh gristen war gement-man.

Kerent zo hag a gred e vije eun dizenor evito gwelet o bugale o vont da veleien. — Diskenn a rafent eus o renk, emezo. Hirio ar veleien, a zo dister o stad, graet e vez fae warno gant an dud; n'e ket mui eur vicher beza beleg, evel ma lavare, n'eus ket pell, eur vamm da unan a c'houenne diganti petra rafe eus he mab. Hag ar vamm-ze a oa eus eur barrez brudet evit he feiz kristen.

Ober eus o bugale marc'hadourien, medesined, alvokaded, skri-vagnerien paet mat, setu petra glask ar gerent.

Ret eo kaout marc'hadourien, medesined, alvokaded, eur skri-vagner bennak ive, sklaer eo. Ret eo kaout, dreist holl, kalz labourerien douar, evit ma vezo bara da zebri, rak eus an douar e teu pep tra. An holl n'int ket galvet da vont da veleien, met eun nebeut hepken. Na gredit ket, avat, e tiskennfe eus e renk an hini a zo graet beleg. Sevel eo a ra, hag an hini en deus feiz a gompren pegen uhel eo karg ar beleg.

Daoust hag aon ho peus n'en defe ho mab re a boan, re a labour ? Ar zonz-ze ne dlefe ket dont da gerent kristen. Klevet am eus kerent kristen o lavaret evelhen : « Me fell d'in e ve eürus va bugale. Me am eus bet gwechall re a boan; ne fell ket d'in o defe va bugale poan evel don. » Beza eürus, war o meno, a zo kaout eur vuhez hep re a labour, re a boan-gorf, kaout peadra d'ober prejou mat, da brena kement a vez ezomm.

An eürusted, selaouit mat, ne vez ket kavet da brena er marc'had, ha neket e kreiz madou an douar eman ar vrasa eürusted met o karet hag o servicha Doue.

Ho pugale a vezo eürus, ma reont evelse. Mar dint beleien santel, bezit dinec'h, e vezint eürus, eürusoc'h eget ne c'hellit kompren.

Hag ho karet a raint ive, hag ho sikour dre o aliou, o-c'henteliou mat, ha dre o fedennou e tennint warnoc'h bennoz an Aotrou Doue.



Al Laoulanig hag ar Bleiz

Eul laoulanig ebarz ar c'hoad
 A oa o traskal mintin mat :
 Tek, tek, tek !
 Abalamour demdost d'e neiz
 E oa kousket eur pikol bleiz.
 Tek, tek, tek !

*
**

Hag e nije a vrank da vrank,
 Hag e tiplape stank ha stank,
 Tek, tek, tek !
 Ken na zistone gant e vouez
 Diouskouarn blevek al loen gouez.
 Tek, tek, tek !

*
**

« Aman avat, eme ar bleiz,
 « Ez eus tourni araok an deiz.
 Tek, tek, tek !
 « Pa ne davez ket, drasker fall,
 « Me ya da gousket d'eul lec'h all.
 Tek, tek, tek !

*
**

Al laoulanig evurus bras
 A greiz e galon a c'hoarzas :
 Tek, tek, tek !
 « Sefu 'ma savetêl va neiz :
 « C'houec'h eunig muioc'h 'vo e Breiz.
 Tek, tek, tek !


*
**

Egiz al laoulanig, mammou,
 Difennit ho pugaligou,
 Tek, tek, tek !
 Gant aon na vije gant ar bleiz
 En o c'halon taget ar feiz.
 Tek, tek, tek !

*
**

C'houi, bugale da Zant Fransez,
 Bezit ive holl war evez,
 Tek, tek, tek !
 Gant aon 'c'hellfe bleiz an ifern
 Kromma ho kein dindan e stern.
 Tek, tek, tek !

BASTIEN.



ILIZ ITRON-VARIA-AN-AELEZ PE AR BORSIONKUL

Lizer hon Tad Santel ar Pab Pi XI diwarbenn ar 700^{vet} bloavez goude maro Sant Fransez (Kendalc'h)

Enor rentet da S. Fransez goude e varo.

Ne vo eta den ebet souezet e vefe chomet fresk ha beo, goude seiz kant vloaz, ar brud eus an oberou mat diniver graet gant Sant Fransez. E vuhez hag e oberou, hervez komzou ar skrivagner dispar Dant, n'hellont ket beza meulet awalc'h gant mouezioù an dud, red e vije kaout mouezioù ar Sent hag an Elez, evit o meuli deread. A rumm da rumm, a-dreuz an amzerioù, an dud a zoug d'ezan eur respet souezus; e santelez dudiù a daol luff, neket hepken war ar bed katolik, met war e vro : drezan eo deut kêr Asiz da veza brudet dre ar bed-holl. Nebeut amzer goude e varo, karantez ar poblou kristen a savas, du-man du-hont, en e enor, ilizou dispar pennnet eus ar c'haera; an dud arroutet bras war o micher a zispakas o ijin da liva, war daolennou, pe da gizella, er c'hoad hag er vein, dremm hag oberou ar Sant. Da Santez-Mari-an-Elez, war ar blenn-se a belec'h Sant Fransez izel ha paour a zo savet pinvidik d'ar baradoz, d'e vez ive, toullet doun e menez Asiz, e teu tud a bep bro, unan hag unan, pe a vlokadou, evit enori servicher kalonek Hor Salver, ober vad d'o ene ha gwelout al labourioù her kaer graet gant micherourien ijinus. Evel hon eus lavaret, Dant Alighieri a ganas meuleudi Sant Fransez, en eun doare dispar. Abaoue, eleiz a dud desket, kouls er broioù all hag en Itali, o deus e veulet en o skridou.

Ar pezh a dleer da welout e Sant Fransez

En hon amzer-ni dreist-holl, eman daoulagad an dud desket trôet war Sant Fransez hag e oberou; kalz a leorioù kaer ha talvoudus a zo bet skrivet, e meur a yez, evit displega e vuhez. Rak-se, an darn-vuia eus tud hon amzer o deus eun istim vras evitan, met eun istim ha n'ema ket atao hervez ar wirionez.

Meur a hini a wel ennan eun den douget dre natur da lakaat e gwerzioù koant, evel gwêrz an Heol, sonjezonou e spered, pe c'hoantegezioù e galon, hag o deus dudi o lenn ar gwerzioù-se, savet pa ne oa c'hoaz nemet nevez ganet yez an Itali. Kalz a re all a gemer anezan evit eun den hag a gare meurbed an holl draou.

krouet, eun den karget e galon a levnez hag a zouster gant bras-der skedus an oabl steredennet, gant splander menezioù ha trao-niennou an Ombri, gant gened al loened, eun den, henvel ouz Adam araok er pec'hed e baradoz an douar, hag en doa galloud da lakaat al loened da senti ouz e gomz, evel pa vijent bet breudeur d'ezan. Darn all a veul e garantez evit e vamm-bro, abalamour war hon Itali, hag he deus bet an enor d'e luskellat, e skuilhas muioc'h a vadoberou eget war bro all ebet. Darn all c'hoaz a gan e veuleudi, dre ma kredont en doa eur garantez dispar evit an holl dud.

Kement-se holl a zo gwir; met an traou-se o deus nebeut a dalvoudegez, hag eo red o c'hompren ervat. Ar re a ro d'an traou-se ar renk kenta e buhez ar Sant, pe en em servich outi evit rei harp d'o fals-kredennou ha d'o zechou fall, a zistruj gwir dremm Fransez. Red eo gwelout sant Fransez gant an holl vertuzioù dispar en deus heuliet kalonek : ar gwir Sant Fransez eo an hini a rene eur vuhez paour ha kalet; an hini a brezege lezenn ar binijenn; an hini a boanié kement da wellaat an dud; an hini a dle ar bobl kristen neket hepken meuli, met kemer skouer warnan. Evel kanad da Roue bras an nenv, Fransez a glaskas ober sent gant an dud, sanka doue en o c'halon karantez ar groaz, ha neket hepken dougen anezo da garout ar bokedou, al laboused, an denved, ar pesked hag ar gedon. Ma seblant beza maget eur garantez tener evit ar grouadurien; ma ro d'ezo, memes d'ar re vihana, an hano a vreur pe a c'hoar, — hag ar garantez-se 'zo mat pa jom urzet, — n'o c'hare nemet abalamour da Zoue. « Gouzout a rae int bet eveltan krouet gant Doue » (S. Bonav.), hag enno egiz en eur melezour, e wele madelez e Grouer : rak « e peb lec'h, eme Selano, e heuilh e Vuia-Karet, aketus atao da zizoloi e roudou war an holl draou krouet ha d'ober ganto eur skeul evit sevel betek e drôn. »

A hent all, n'eo ket difennet d'an Italianed fougeal gant eun Italian hanvet, e ofis an Iliz, « Sklerijenn e vro ». N'eo ket difennet da vignoned ar bobl embann ar garantez en doa Fransez evit an holl dud ha dreist pep tra evit ar re baoura. Met ar re genta o deus da ziwall da gas re bell o c'harantez-bro ha d'ober gant ar Sant eur skouer hepken eus ar garantez-se : Fransez a zo bet katolik da genta, da lavaret eo eun den hag en deus karet an holl boblou e Doue hervez kelennadurez an Iliz. Ar re all a dle diwall d'e gemer evit eun den hag en deus o bleniet hag o harpet war hent o fals-kredennou : biskoaz n'eo bet en e spered ar sonj d'ober kement-all.

Gouzout a reomp goulskoude ez eus, etouez an dud ha ne welont ket Fransez penn da benn evel m'eman, meur a hini hag a labour kalonek d'ober gouelioù kaer evit e enori, en abeg d'ar seizvet kantved. Meuleudi d'ezo ! ha plijet gant Doue e teujent, gant ar gouelioù-se, da anaout Sant Fransez en e bez, evel eur servicher bras da Jezus-Krist, ha da c'hoantaat grasou uheloc'h, grasou a silvidigez !

Goulenit digant an Tad Theodor ROUSSEL, 28, Avenue de la Marne, Lorient.

C/c 46.28. Nantes.

Buhez burzudus eun douger-sammou MAZE TALBOT :
0 fr. 50 — 0 fr. 65 dre ar post.

An Eured Kristen (Kantig) : 22 real ar c'hant, dre ar post.

Kantigou nevez : SAKRAMANT AN AOTER. — JEZUS-KRIST ROUE. — An « DE PROFUNDIS », pedenn an Anaon. — Priz an tri asambles : 15 lur ar c'hant, dre ar post.

*

Levriou e galleg

LIBRAIRIE SAINT FRANÇOIS, 4, rue Cassette, PARIS (VI^e)

Manuel du Tiers-Ordre , par le P. EUGÈNE, capucin. — 4 volume relié, tranche rouge	10 fr.
Petit Manuel du Tiers-Ordre , par le P. EUGÈNE. — 4 volume relié, tranche rouge	4 fr.
Saint François d'Assise , par le P. LÉOPOLD, capucin. (40 ^e mille)	12 fr.
Histoire de la Fondation et de l'Evolution de l'Ordre des Frères Mineurs au XIII^e siècle , par le P. GRATIEN, F.M. Capucin. — 1 volume de 700 pages in-8 ^o . Illustrations hors texte	40 fr.
Saint François d'Assise, sa Personnalité, sa Spiritualité , par le P. GRATIEN	5 fr.
Saint François d'Assise et l'Influence sociale de l'Evangile , par le P. GRATIEN	2 fr.
Saint François d'Assise , par le P. CUTHBERT, capucin (2 ^e édition)	24 fr.
Histoire de Saint François d'Assise , par l'abbé LE MONNIER (7 ^e édition) 2 vol.	24 fr.
Saint François d'Assise, Patron des Jeunes Scouts catholiques , par le P. SIGISMOND, capucin	4 fr.
Leçons d'Histoire Franciscaine , par le P. UBALD, capucin	12 fr.
Courtes Méditations ascétiques pour tous les jours de l'année , par le P. JOSEPH DE DREUX, capucin.	9 fr.
Le Prêtre en retraite , par le P. ALEXIS, Capucin. .	10 fr.
Le Religieux en retraite , par le P. ALEXIS	10 fr.
Le Chrétien en retraite , par le P. ALEXIS	7 fr. 50
Sainte Claire d'Assise , par le P. LÉOPOLD	7 fr. 50
Sainte Elisabeth de Hongrie , par le P. LÉOPOLD. .	10 fr.
Sainte Marguerite de Cortone , par le P. LÉOPOLD. .	9 fr.
Un Converti de quinze ans . Frère Joseph de Pâlerme, novice capucin par le P. ROBERT	9 fr.

*

XXX PERC'HERINAJ TREDE-URZ SANT FRANSEZ

e Santez Anna Wened*(21 ha 22 a viz Gouere)**Breudeur ha C'hoarezéd eus an Drede-Urz*

Santez Anna Wened, her gouzout a rit mat, eo ar c'henta perc'herinaj eus hor bro: Di ez a ar Vretoned aliesha gwella da bedi Mamm ar Werc'hez ha d'en lakaat dindan he skoazell.

Breman 'z eus 30 vloaz, pa o deus bet c'hoant renerien an Drede-Urz da voda Breuriezou Breiz, o deus sonjet dioustu na oa lec'h ebet hag a blijfe kement d'ezo ha Santez Anna Wened. Bugale sant Fransez a gavje tro evel-se da vont da bedi e-harz treid Patronez Breiz-Izel hag er memes amzer d'en em unani evit enori o Zad, d'en em welout etrezo ha da welout ivez pegen niverus ez int en ho bro.

Abaoe m'eo bet savet ar c'henta perc'herinaj, e kresk atao muioc'h-mui niver ar bec'herined; er bloavez tremenet dreist-holl hon doa bet plijadur o welout pegement e oa deut eus eskoptiou Kemper ha Sant-Brieg. Er bloaz-man, fizians hon eus, e vezint niverusoc'h c'hoaz, hag evit-se e pedomp start ar re a zo e penn ar Breuriezou da gomz abret a-walc'h d'ar Vreudeur ha d'ar C'hoarezéd evit ma c'hellint d'ar mare renka pep tra evit o beaj.

Bugale sant Fransez, eus eskoptiou Kemper ha Sant-Brieg dreist-holl, bezit niverus e Santez-Anna d'an 21 ha 22 a viz Gouere. Na glaskit ket digareziou. Holl asambles d'ar perc'herinaj evit enori sant Fransez ha Patronez Breiz-Izel, evit en em anaout hag en em garet muioc'h-mui!

— Da sadorn, 21 a viz Gouere, da serr-noz, prosesion ar goulou, prezegenn evit digori ar Perc'herinaj.

Urz ar Perc'herinaj.

— E-pad an noz e vezo adoret ar Sakramant meulet ra vezo, graet prezegennou e galleg hag e brezoneg, kanet kantikou ha pedet.

Ar re n'o devezo ket gallet kovez en o farrezioù, a gavo kovezou-rien e Santez Anna.

(Taolit-vez: ar c'hovezourien brezonek en em zalc'ho er c'hadorioù a binijenn a zo adrenv ar gador-brezeg.

— Da c'hanter-noz, er c'hloastr, hent ar groaz e galleg; da eur eur eus ar mintin, hent ar groaz e brezoneg (hent ar groaz prezeget).

— D'ar sul, 22 a viz Gouere, oferennoù evit konna da 3, 5 ha 7 eur.

— Da 9 eur, oferenn ar Perc'herinaj gant eur prosesion a-raok, e « Park Santez Anna. »

— Da 10 eur hanter, ar re a gomz e galleg en em vodo e sal vras an teatr, e-tal Ti Nikolazig; ar re a gomz e brezoneg en em vodo e chapel ar Seminer-Bihan.

— Da 13 eur, bodadeg diweza en iliz evit kloza ar Perc'herinaj.


Klevit mat. — Pedi a reer ar Breuriezou da zigas ganto o banniélou. — Kavet e vezo kantikou ha metalennou an Drede-Urz da brena e stal Santez-Anna.

*Cum permissu Superiorum.**Le Gérant : G. LE BAYON.*

Moulerez AR BAYON-ROGER, 13, Tachenn Alsace-Lorraine, en Oriant.



*Ra vezo meulet Jezuz-Krist !
Bepred.*



Kenteliou Sant Fransez

Kelaouenn viziek gant Skeudennou

**TAOLENN AR MIZ**

Gouelioù ar miz.....	121
Sonjit ervat.....	122
Kelennadur diwar-ben Reolen an Trede-Urz.....	124
Santez Elisabet a Hongri.....	125
Sant Loeiz.....	127
Da Zantez Klara.....	129
Lourd hag ar garantez e kever Doue.....	132
Retred an Drede-Urz e Plabennek.....	133
Bleunioù Sant Fransez (XVI ^{et} Pennad).....	137
Lizer hon Tad Santel ar Pab Pi XI.....	140
D'ar mammou kristen.....	140



Rédaction et Administration

P. Théodore ROUSSEL

F.M. Capucin

28, Avenue de la Marne, LORIENT

C/c. : 46.28 NANTES

Priz : daou skoued

EOST

- 1 Merc'her . S. Per an Ereou.
DEN-EÛRUS PER JULIAN EYMARD, eus an Drede-Urz.
2 Yaou ITRON VARIA AN AÉLEZ. — PARDON BRAS ASIZ. — **Induljansou ar Borsionkul.**
3 Gwener Relegou S. Stefan, kenta merzer, adkavet.
4 Sadorn ... S. DOMINIG, kovez. — **I.P.**

- 5 Sul *Dekvet sul goude ar Pantekost.*
6 Lun HOR SALVER JEZUZ-KRIST WAR AR MENEZ-TABOR.
7 Meurz TUD-EÛRUS AGATAN HA KASIAN, merzerien kapusined. — **I.P.**
8 Merc'her ... S. Siriak hag e Genseurded, merzerien.
9 Yaou TUD-EÛRUS YANN A ALVERN HA VISANT AKILA eus ar genta Urz.
10 Gwener .. S. Laurans, merzer.
11 Sadorn ... PLAC'H EÛRUS LOEIZA A SAVOA, eus an eil Urz.

- 12 Sul *Unnekvet sul goude ar Pantekost.*
SANTEZ KLARA A ASIZ, gwerc'hez, he deus savet an eil Urz. — **I.P.** — **A.J.**
13 Lun S. YANN-MARI VIANNEY, kovez, eus an Drede-Urz.
14 Meurz DEN-EÛRUS SANCTES A URBINO eus ar genta Urz.
Vijil Gouel Maria Hanter-Eost (na yun na vijil).
15 Merc'her .. GOUEL MARIA HANTER-EOST. — **A.J.** — **I.P.**
16 Yaou S. Joakim, tad ar Werc'hez Vari.
17 Gwener ... S. Hiasinth, kovez.
18 Sadorn PLAC'H-EÛRUS PAOLA MONTALDI, eus an eil Urz.

- 19 Sul *Daouzekvet sul goude ar Pantekost.*
S. LOEIZ A DOULOZ, eskob eus ar genta Urz. — **I.P.**
20 Lun S. Bernez, abad ha Doktor.
21 Meurz Santez Janned-Fransez a Chantal, intañvez.
22 Merc'her .. Eizvet Gouel Maria Hanter-Eost. — **A.J.** — **I.P.** diwar-benn
7 LEVENEZ AR WERC'HEZ VARI.
23 Yaou S. Filip Beniti, kovez.
24 Gwener ... S. Berthele, abostol.
25 Sadorn ... S. LOEIZ, Roue Frans, Paeron ar Vreudeur eus an Drede-Urz.
— **A.J.** — **I.P.**

- 26 Sul *Trizekvet sul goude ar Pantekost.*
S. ROK, kovez, eus an Drede-Urz. — **I.P.**
27 Lun S. JOSEF KALAZANS, kovez, eus an Drede-Urz.
28 Meurz S. Aogustin, eskob ka doktor .
29 Merc'her .. S. Yann-Badezour dikennet.
30 Yaou Santez Roza a Lima, gwerc'hez.
31 Gwener ... S. Raimond Nonnat, kovez



Kenteliou

Sant Fransez

EOST 1928

Sonjit ervat

Eilvet gouenn ar Batez :

Ho Rouantelez deuet d'eomp

I. — SONJIT ERVAT : dre ar c'homzou-se : *ha Rouantelez deuet d'eomp*, e c'houlennomp ma teuio Doue da c'houarn ar bed dre e c'hras; ma teuio an holl dud da drei *kein d'an drouk-spered* evit en em rei da Zoue.

Taolit eur sell a druez war an niver bras a dud ha na sentont ket ouz Doue. Lenvit war an amzer ma oac'h ivez e-touez an dud-se, ha gwelit ha senti a rit mat bremañ ouz Doue.

II. — SONJIT ERVAT : evel ma lavar an darn vrasa eus Tadou an Iliz, Rouantelez Doue ne reno evit mat war an douar-man nemet da zeiz ar varn diweza.

Adalek an deiz-se droug ebet mui, pec'hed ebet ne vezo gwelet war an douar. An holl neuze a blego da Zoue, en Nenv dre garantez, en ifern dre justiz. Ar c'henta 'r gwella ma teuio an deiz benniget-se, ma sento an holl ouz Doue!

Daoust hag ho koustiansa a zo direbech a-walc'h evit c'hoantaat ma teufe an varn diweza ? Ret eo e vije, ha ma n'eman ket, lakit-hi ar c'henta 'r gwella er stad-se.

III. — SONJIT ERVAT : kenta tra a dle ar gristenien vat da c'houlenn dre ar c'homzou-se : *ho Rouantelez deuet d'eomp*, eo ma teuio d'eomp **Rouantelez an Nenv**, m'hor bezo perz e gloar ar baradoz, rak eno hepken eo e renomp gant Hor Salver Jezuz.

War an douar-man emoc'h en harlu (exil). Lakit doun en ho spered n'emoc'h ket er bed-man evit chom, ha na gavoc'h ar wir eürusted nemet er baradoz, e Rouantelez Doue.

Kelennadur diwar-benn Reolenn an Drede-Urz



*iskit holl ho Reolenn; bezit-hi bepret
dirak daoulagad ho spered; sonjit
enni; lennit-hi; grit ma vezo anave-
zet; diwallit d'he ankounac'haat
ha marvit ganti. »*

Sant Fransez a Asiz.

Ho tever kenta, Breudeur ha C'hoarezed ker, ez eo anaout mat ho Reolenn. Kavet e vez, siouaz meur a hini o tougen skapular sant Fransez ha n'ouzont nemet eul lodenn eus o deveriou dre n'o deus biskoaz lennet piz ar Reolenn pe glevet he displega reiz a-walc'h. N'oufen ket ho alia re da lenn gant ar brasa evez ar pennadou-skrid a gavfet aman peb miz war ar Reolenn-se he deus rôet d'an Iliz kement a sent hag a sentezed.

I

A-raok kemer ar skapular.

Eun dervez, goude beza pedet, goulennet sklerijenn ha klevet eur brezegenn diwar-benn an Drede-Urz, c'houi hoc'h eus lakaet en ho spered rei hoc'h ano d'ar Vreuriezh santel-se ker brudet ha skignet e pevar c'horn ar bed. Hepdale e vefet bugale da sant Fransez; petra d'ober ?

Hep ne ve gourc'hemenn ebet war an dra-man, e rafec'h mat, a-raok lidou ar gwiskamant, ober eur retred a zri deiz, zoken o terc'hel gant ho labour : mont d'an oferenn e-pad ar retred, tec'hout diouz trouz ar bed eus ho kwella, lenn eul levr mat bennag, ober eur govizion dispar, pedi gant ar garantez vrasoc'h ha lavarout d'Hor Salver gant sant Fransez : « O va Doue, piou oc'h-hu ha piou oun-me ? Me paour-kaez preny douar, ha C'houi, Krouer an Nenv hag an douar hag a fell d'eoc'h va gervel da dostaat ouzoc'h !

Pe lavarout d'ezan gant sant Thomas, Doktor : « Va Doue, c'houi am galv d'ho servija; roit d'in ar c'hras da anaout ho polontez hag an nerz d'he heulia betek va eur diweza. »

E-pad ho retred, e welfet en ho koustians eun doare ma hoc'h eus bevet betek vremen e-kenver Doue, e-kenver ho nesa hag en ho kenver hoc'h-unan. Gwelout a refot penaos kempenn ho puhez nevez, beva ebarz ar bed **beza eus ar bed**, klask hiviziken evel sant Fransez plijout da Zoue en eur gas da benn deveriou ar Reolenn ha deveriou ho stad.

II

Lidou ar gwiskamant

Setu deut, evit ho tegemerout, an deiz merket gant rener ar Vreuriezh hag ar re a zo e karg enni. Daoulina a rit dirak an aoter. « Petra a c'houlennit-hu ? a lavar d'eoc'h ar beleg. Ha

c'houi neuze da respont : « Va Zad, goulenn a ran gant doujans gwiskamant Trede-Urz a binijenn evit ober easoc'h va silvidigez. » Deo gratias ! Doue da veza meulet ! e kendalc'h ar beleg.

Mar n'eus ket graet a-raok, ar beleg a lavar aman pegen talvoudus ha peger santel ez eo an Drede-Urz.

Benniga a ra neuze ar skapular hag ar gordennig; da-c'houde e vez kanet ar *Veni Creator* ha rôet d'eoc'h gwiskamant sant Fransez.

Petra e verk ar skapular ? An diou vertuz a binijenn hag a izel-ded a galon bet ker karet gant hon Tad. Digas a ra c'hoaz da sonj a dle pep kristen en em wiska eus Hor Salver Jezuz-Krist, da laret eo, heulia e vertuziou hag e skouerioù.

Ar skapular lakaet war ho dioukoaz a verk ivez yeo (joug) ar Reolenn; yeo leun a enor, rak tennet ez oc'h breman diouz yeo ar bed; yeo skanv, rak nerzet e vefot gant grasou Doue.

Hag ar gordennig, petra e verk ? Merka a ra vertuz ar c'hlanded; e zaou bleg a zigas da sonj eus karantez Doue ha karantez an nesa; e zri skoulm a verk myster an Dreinded, an deir Urz savet gant sant Fransez, an deir vertuz a baourentez, a c'hlanded hag a sentidigez hag ivez al liamm lakaet en-dro d'Hor Salver e-pad e Basion.

E meur a lec'h, e vez rôet neuze levr ar Reolenn. C'houi a dle lenn alies ho reolenn, zoken bep miz, ha goulenn digant Doue ar c'hras d'he anaout mat ha d'he mirout betek ar maro. Lakaat a ra ar beleg etre ho douarn eur c'houlouenn venniget evit diskouez ez oc'h galvet da rei en-dro d'eoc'h sklerijenn ar vertuziou kristen dre ar vuhez nevez.

An deiz ma kemerit ar skapular, e tibabit ivez eun ano nevez, evit lakaat an amzer da zont diindan skoazel eur sant Patrom, pe eur santez Patronez.

C'houi a zo breman da sant Fransez, ha lod hoc'h eus en holl wiriou hag an holl induljansou an Drede-Urz.

III

Petra hoc'h eus breman da ober ?

Petra da ober goude beza bet degemeret ebarz ar Vreuriezh ? Sklaer eo ho tever : heulia mat ar Reolenn ha diwall da fall-galoni. Meur a dud o deus bet skapular sant Fransez ha n'int bet gwir vugale d'ezan. N'eo ket a-walc'h d'ar c'hristen kredi en Doue, red eo d'ezan mirout e c'hourc'hemennou.

N'eo ket a-walc'h ivez beza bet degemeret an Drede-Urz, red eo lakaat kalon vat da veva hervez he lezennou.

Livirit eta alies da Zoue : « O va Doue, galvet oun bet ganeoc'h da ren ar vuhez santel. Mil drugarez d'eoc'h. Me a fell d'in kerzat war roudou ho Mab, Salver ar bed. Kredi start a ran e vezin digollet hag a gavin zoken er bed-man kant evit unan. »

Eus lein an Nenv, Hor Salver benniget a lavaro d'eoc'h an hevelep komzou a glevas eun deiz santez Marc'harit a Gorton : « O wiska sae sant Fransez, te ac'h eus lakaet eul louzou a c'houez vat war va c'houlou, te ac'h eus va diskennet eus ar groaz.... Ra glasko an hini a fell d'ezan plijout d'in kerzat war roudou va mignon, Fransez, an den eürus ! »



Santez Elisabet a Hongri

Patronez ha skouer C'hoarezed an Drede-Urz




Burzud ar bleuniou roz.

Eun dervez goanv, edo santez Elisabet a Hongri o tiskenn d'eur gêriadenn tostik d'he maner, ha ganti bara hag a bep seurd traou mat evit ar beorien.

Ha setu en eun taol he fried dirazi : « Petra e tougit aze, emezan ? » Souezet bras, ar Santez a glaskas neuze kuzat eus he gwella an aluzen gaer gortozet gant he mignoned, an dud reuzeudik. Met hep rei amzer d'ezi, an duk Loeiz da zispaka he mantell, ha petra a wellas ? . . . Netra nemet roz ruz ha roz gwenn, hag a-us da benn Elisabet eur groaz lugernus.

Va C'hoarezed, beziñ maledezus e-kenver ar beorien. Hag anaout a rit-hu talvoudegez an aluzen ?

- 1.— An aluzen a zizamm diouz ar pec'hed, a lavare da Dobias an Arc'hael Rafael.
- 2.— An aluzen hon distag diouz madou ar bed a vir kement a dud d'ober o silvidigez.
- 3.— An aluzen a ra d'eomp gounit meritou evit ar baradoz. Hor Salver E-unan en deus diskleriet peger bras digoll en devezo en e rouantelez an hini a vezo bet karantezus e-kenver ar beorien : « Eur werennad dour roët d'ar paour en e sec'hed, emezan, ne chomo ket hep beza digollet. »
- 4.— An aluzen a ra dudi an Nenv ha hini an douar : en Nenv, e ra an aluzen plijadur da Zoue, d'an aelez ha d'ar sent; war an douar e ra vad d'ar paour ha d'an hini en deus her graet.
- 5.— An aluzen a laka Doue da hada e-leiz a vuzudou war ar bed. Lennit, mar kirit, buhez santez Elisabet a Hongri, hini santez Elisabet Bona, hini sant Marzin, hag all.



Pempet devez war-nugent a viz Eost

SANT LOEIZ

1215+1270

Roue Frans

Azeulomp Hon Salver Jezus o testi d'imp ne dleomp ket kaout-aon dirak ar re a c'hell laza ar c'horf, met kentoc'h dirak an hini a c'hell daoni korf hag ene en Ifern.

Ar menoz-se a oa doue e spered Blanche de Castille a lâre : « *Ma mab, ho karout a ran, hep mar ebet, kement ha ma c'hell eur vamm karout he bugel; koulskoude, gwel e vefe ganen mil gwec'h, ho kwelout o koutzan maro mik e-harz ma zreid, eget ho kwelout er pec'hed marvel.* »

Ha setu menoz-stur buhez sant Loëiz. Greomp, evel ar sant man, kalz muioc'h a stad ouz traou an nenv eget ouz traou an douar. Pledomp da gentan gant ezommou an ene ha goude gant ezommou ar c'horf. Evelse eman an urz aozet gant Doue.

Sant Loëiz a fell d'ezan kemer skouer diwar Sant Fransez, ha spered Sant Fransez a voe alc'houez e vuhez. Dre eno e tapas Sant Loëiz dastum kement a santelez ha blenia tud e vro en eun doare dispar.

I.— Eur Sant Bras

Sonj Doue ne dec'he ket diwar spered Sant Loëiz. Eur vamm santel en devoa bet ha diganti en doa desket bevan dindan sell an Aotrou. Pare e veze dalc'hmad da senti ouz mouez Doue.

Eur garantez vras en doa evit Jezus staget ouz ar groaz, ha kasoni e-leiz ouz ar pec'hed. En Trede Urz, Sant Fransez en doa klasket gwarez ha kennerz. Gwiskamant an Urz a veze gantan pa veze oc'h ambroug e soudarded. Enorusoc'h a gawe gwiskamant Sant Fransez eget limestra (pourpre) ar rouane.

Da hanternoz e save da lâroue an ofis gant ar veleien. Tud al lez a gawe e pade re bell e bedennou; hag e lâre neuze : « Nag eo souezus an dud; abeg a gavont ennon abalamour ma vez hir va fedennou, ha ne lavarfont netra ma kollfen ma amzer o e'hoari.

pe o kantreal pe o hemolc'hi (chaseal). » Met meizet en devoa ar pez a lavare ar c'hardinal Ksimenes : « Pedit zo ren. »

Bezan uvel (humble) ha karout ar bedenn ne oa ket a-walc'h evitan. Kastizan a rae e gorf ha yun striz epad an Azvent hag ar c'hoaraiz. D'al lun, d'ar merc'her, da wener ha da sadorn ne breje nemet eur wech. Kovez a rae bep gwener ha bep gwech, war e c'houlenn, e vez skourjezet gant e govezour. Pa ne veze ket skoët krenv awalc'h, e lâre skei krenvoc'h.

Pa sellomp ouz hon buhez e kavomp marteze ez omp chomet warlerc'h. Ne fell ket d'imp kastizan ar boan met dalc'hmatac'htec'homp dirak an disteran poan. O neuze, sonjomp alies e Sant Fransez hag e Sant Loeiz, da glask kerzout a dostoc'h war o roudou skouerius.

II.— Eur roué hep e bar

Evurus ar vro m'eman dorn he Roue e dorn Doue ! Setu aman eur skouer dispar evit renerien ar poblou.

Anavezout a ra Doue; fellout a ra d'ezan senti ouz Doue ha digant Doue e c'houlenn skoazell ha sklaerijenn.

Sklaerijennet gant ar Mestr ar roue santel a varn pep tra gant eur spered eün, reiz ha leal.

Gouzout a ra n'en deus galloud nemet dre ma eo bet rôet d'ezan gant Doue.. Hag e fell d'ezan ober gant e c'halloud evit astenn rouantelez an Aotrou.

Bet e skol an aviel o teski digant Jezus mestr ar garantez, kaout truez ouz engroez an dud reuzeudik, paour, dister ha klanv, Sant Loeiz a sav klanvdiou bras evit digemer an dud keiz. En dud-se e wel Jezus o c'houzanv. An dud tizet gant al lorgnez a zo evitan gwir vreudeur.

Rei a ra d'an holl ar frankiz da ober o dlead, o lemél digante, kement ha ma c'hell, ar frankiz da bec'hi. Eno eman an dalc'h, hag ar silvidigez; rak an traou mat hag an an traou fall ne dleont ket bezan lakaet en hevelep pal.

Evit ma c'hallfe an holl gristenien mont da zaoulinan e-harz bez hon Salver, e reas brezel d'ar Vulzumaned ; Ar Vulzumaned, o welout penaos e veve, a ranke anzav n'o devoa biskoaz gwelet kristen all ebet eveltan.

Sant Loeiz a varv evel Sant Fransez war an douar noaz. Lezel a ra d'e vab evel testamant, sentidigez ouz Pabed Rom, tadou an holl vroioù ha diwallerien ar roueed.

En eur gir, Doue a vinnigas labour Sant Loeiz. Eur roue bras e voe, dre ma oa dreist-holl eur sant bras.

Pedenn. — « O Doue, c'houi hag hoc'h eus graet da Sant Loeiz tremen eus rouantelez an douar da rouantelez an Nenv; grit, ni ho ped, ma c'hellfomp ni ive, war e bedenn ha dre e zellidou (mérites), ren da viken gant ho mab Jezus, Roue ar rouane. »

Dezo. — Kemer a rin skouer war Sant Loeiz, o labourat evit ma vo karet Jezuz-Krist gant an holl; ober a rin, par ma c'hellin, diouz E lakaat da roue en eneoù, en tiegeziou hag er broioù, em bro Vreiz dreist-holl.

Boked. — « Kentoc'h mervel eget bezan kablus eus eur pec'hed marvel. »

E.R.



Leandi Santez Klara

Santez Klara

Kambr-dibri eus leandi Santez Klara

Da Zantez Klara (12 Eost)

Piou oc'h-hu, plac'h yaouank pinvidik ha seder, A ya didrouz, dre guz, er-maez eus ho maner Hag a gerz, tiz warnoc'h, hed ha hed ar c'hleunioù. D'abardaez-noz ar zul, sulvez koant ar Bleunioù ?

— Me eo Klara vihan, Klara eus kêr Asiz. Mar 'z an didrouz, dre guz, warnon kement a diz, N'eo ket, evel darn all, evit klask plijadur. Met evit chom ato pell diouz pep breinadur..

*
**

Piou oc'h-hu, plac'h-yaouank, 'n eur chapel digouezet, Stouet ganeoc'h ho penn, evit beza touzet, Hag a c'hoanta lakaat, nann dilhad pinvidik, Met dilhad paour ha rust war ho korf kizidik ?


— Me eo Klara vihan, eus noblans kêr Asiz. A hoan ma 'z eo digor rozenn va yaouankiz, E ran goap ouz ar bed hag ouz e vraoigou, Hag e klaskan an hent 'vit sevel d'an nenvou.

*
**

Piou oc'h-hu, leanez, gwisket gant mezer rouz, Eur gordenn en-dro d'eoec'h, eur gouel war ho penn touz, Ho treid tener noaz-pilh, daoust d'an amzer garo, A bed war ho taoulin dirag eur penn maro ?

— Me eo Klara vihan, am eus, egiz Fransez, Dibabet, 'vit va lod, tenzor ar Baourentez, Ma c'hellin bale reiz war roudou va Zalver. Ha diskouez muioc'h-mui karantez 'n e genver.

*
**



A-RAOK REI D'EZI HE GWISKAMANT LEANEZ SANT FRANSEZ
A DROC'H HE BLEO DA SANTEZ KLARA

Piou oc'h-hu, leanez, a gousk war ar c'haled,
A zav beb hanter-noz gant ho leanezed,
A yun, à vroud ho korf gant reun eul loen mezus,
Hag a daoliou skourjez e gastiz truezus ?

— Me eo Klara vihan; egiz Sant Fransez c'hoaz,
N'anavezan netra nemet Jezus er groaz,
Ha ne fell d'in tanva war dachenn ar bed-man
Nemet an eürusted da c'houzany evitan.

**

Piou oc'h-hu, leanez, a varv drant ha laouen,
Eleiz a werc'hezad gant Mari 'n ho kichen,
Hag a zav pinvidik da vro al levenez,
Meulet hag enoret evel eur rouanez ?

— Me eo Klara vihan : echu eo va stourmad;
Mamm Jezus e-unan a zo deut d'am c'herc'hat.
Oh ! na dous eo mervel 'vit mont d'ar baradoz !
Breudeur, c'hoarezed ker, emoun ouz ho kortoz.

BASTIEN.



LOURD, katekiz beo

Lourd hag ar garantez e-kenver Doue.

An trede vertuz teologal hag an hini gaera anezo eo ar garantez. Bez' ez eo kurunenn ar re all : an neb a gar Doue e gwirionez, hennez an deus feiz hag esperans hag ar c'hontrol n'eo ket gwir rak bez e c'heller kredi hep karout. Pa c'houlenne doktored al lezenn digant Jezuz.

— « Pehini eo ar c'henta hag ar brasa eus ar gourc'hemen-nou ? »

— « Heman, a responte Jezuz d'ezo : « C'houi a garo an aotrou ho Toue eus hoc'h holl galon, eus hoc'h holl ene hag eus hoc'h holl nerz. » Setu aman, emezan c'hoaz, an eil gourc'hemenn hag a zo par d'an hini kenta : « C'houi a garo ho nesa evelloc'h hoc'h-unan. »

Ni 'gaozeo warc'hoaz eus ar garantez e kenver an nesa. Son-jomp hirio, ouz sklerijenn Lourd, er garantez e kenver Doue.

**

Ar werenn gwestlet, dindan an iliz-veur, d'ar vertuz a garantez, eo an hini ema warni taolenn an abostol sant Yann, a-uz d'an aoter savet en enor d'an avieler santel. Sant Yann a oa, hervez ar Skritur-Zakr, an diskib karet gant Jezuz : evel ma kare Jezuz sur awalc'h ivez sant Per hag an ebestel all, ar c'homzou-ze a lavar e gwirionez e kare Jezuz sant Yann muioc'h eget ne gare ar re all.

Perak nemet abalamour ma kave e kalon Yann muioc'h a garantez evitan eget e kalonou ar re all ? Doue a gar ac'hanomp hervez hor meritou : Jezuz a oa e gwirionez muia karet Yann hag abalamour da-se Yann a oa muia karet Jezuz.

Pa voe Jezuz war-nes mervel, pa voe red d'ezan dilezel e vamm, an hini en doa ar muia karet war an douar, Jezuz, a fizias anezi e sant Yann. E piou, a hent all, en dije fiziet anezi ? Ne oa eno nemet Yann a roi da Jezuz eun testeni nevez eus e garantez evitan; eur wech muioc'h, din e oa d'an eur-se da veza muia karet Jezuz : da wener ar groaz, d'an abardaez, e oa eta e ti Yann an daou grouadur o doa ar muia karet Jezuz var an douar : ar Werc'hez Vari hag an abostol Yann.

**

Eus he c'harantez virvidik evit Doue, ar Werc'hez gloriüs Vari he deus roet meur a desteni da Vernadett e-pad m'en em ziskoueze d'ezi e keo Masabiel. Hervez ar plac'h yaouank, pa lavare ar chapeled, an Intron na raë nemet selaou an « Ave Maria »; met pa zigoueze gant ar « Gloria Patri » an Intron hel lavare gant Bernadett en eur saludi gant karantez pep-hini eus tri ferson an Dreinded-Sakr. Meur a wech ivez ar bugel a welas anezi o sevel he daoulagad war-zu an Nenv hag en daoulagad-se e oa, n'eo ket resped hepken, met ivez karantez. Gwelout a reas an dra-se, dreist-holl, d'an eur ma plijas gant Mari rei hec'h ano d'an douar ha lavarout ar c'homzou a vezo dalc'het sonj anezo da viken : « *Me eo an hini a zo bet konsevet hep pec'hed.* »

Evelse ar Werc'hez santel a rôe d'eomp eur gentel : ar garantez a c'houlenn ar garantez. Madoberou Doue en hor c'henver a zo eun testeni eus e garantez evidomp : penaos e c'hellfemp respont a gement a garantez nemet dre hor c'harantez virvidik ? Hag en eur zigas da zonzj d'an dud ez eo an hini a zo bet konsevet hep pec'hed, ar Werc'hez gloriüs Vari a wel er c'hras-se eur merk dispart a garantez a-berz Doue, hag eus ar c'heo ma 'z eo diskenet ennan hi a gas etrezek Doue eun akt a garantez bero.

Bernadett a oa evelse en eur skol vat evit deski karout Doue. Histor he buhez hag an enoriou rôet d'ezi gant an Iliz a zesk d'eomp e lakeas ar c'henteliou-se da dalvezout. Rei a reas eun diverra eus he buhez pa lavaras, a-raok mervel, ar c'homzou-man hag a yeas down e kalon ar re o c'hlevas : « **Va Doue, me ho kar eus a greiz va c'halon gant va holl ene ha gant va holl nerz.** »

Hag evel ma rae, en eun doare ken dudius, sin ar groaz evel ar Werc'hez, Bernadett a zavas ivez, evel ar Werc'hez, he daoulagad etrezek an Nenv hag he sell hanter varo a darzas ennan evel tan he c'harantez.

**

Pegwir ar sonj eus ar vertuziou teologal en deus kaset ac'hanomp dindan an iliz-veur, chomomp eur pennad, a-raok mont er meaz, dirak skeudenn sant Per, mestr an ebestel; pokomp d'e droad gant ar c'hoant da c'hounit an induljanz a zo staget ouz ar pok devôt-se... Ha neuze selaouomp ar goulenn a reas Jezuz ouz sant Per, betek teir gwech, goude e rezureksion hag a-raok fiziout ennan, evit mat, gouarnamant an Iliz :

— « Per, va c'harout a rez-te ?... Va c'harout a rez-te ?... Va c'harout a rez-te ? »

Chanchit an ano, lakit hoc'h-hini e lec'h hini Per ha selaouit ar goulenn graet ouzoc'h gant Jezuz : « Va c'harout a rez-te ? »

Per a gredas en doa gwir da respont :

— « Aotrou, c'houi a oar pep tra : c'houi a oar e karan ac'hanoc'h ! »

Daoust ha pep-hini ac'hanomp a c'hellfe lavarout kement all ?... Red eo koulskoude e c'hellfemp hel lavarout ma fell d'eomp kaout ar baradoz, rak an holl draou hon eus d'ober evit e c'hounit a zo dastumet er garantez !

Daoust hag hel lavarout a c'hellomp ?... Marteze hor buhez

tremenet a vir ouzomp. Met, ma n'eo ket bet didamall, hini Per ken-nebeut : eun nebeut deveziou a-raok, eun nebeut sizunyeziou marteze, Per en doa nac'het e Vestr e-pad e Basion ha lavaret en eur doui ne anavezet ket Jezuz !... Met ar binijenn he doa skubet pep tra ; Jezuz a rôas d'ezan muioc'h eget e bardon, Jezuz a zal-c'has anezan er plas a enor en doa prometet d'ezan e gouarnamant e Iliz.

Ha c'houi ivez, mar hoc'h eus pec'het, selaouit ar pezh a lavar d'eoc'h Intron Varia Lourd evel da Vernadett : « **Pinienn !... Pinienn !...** » Bezit keuz d'ho pec'hejou, it da glask ar pardon anezo digant beleg Jezuz-Krist ha livirit da Zoue eus a greiz ho kalon : « **Va Doue, me ho kar eus va holl ene ha dreist pep tra !** »

SKOUER

Parcañz Jann Dibon (*pemp bloaz war-nugent*)

An dimezel Yann Dibon eus Romorantin (Loar ha Cher) skolierez en eur skol gristen e Bloa a dapas « pleureuji » d'an oad a driouac'h vloaz. Warlerc'h ar c'hlenved-se e chomas gouliou e pennou he skevent. E fin a bloaz 1918, he familh a lakeas ar glanvourez e ospital Varades, el Loar-Izela. Met eno ar c'hlenved hanvet e galleg « peritonite tuberculeuse » ne reas nemet kreski. Da viz kenver 1922 medisin an ospital a skrivas d'ar familh ne oa pare ebet da c'hortoz evit ar plac'h yaouank.

Jann Dibon, deuet ivez da anavezout he stad reuzeudik a reas, dre garantez evit Doue, ar sakrifiz eus he buhez. Prest atao da blega da volontez Doue Jann a lavare alies : « Va medisin a lavar d'in e c'hellan para... N'emoun ket nec'het gant an dra-se... Jezuz hepken a dle gouzout ar pezh a zo mat evidoun ! » Gouzanv a ra he foan gant habasket eun ael. Mar deus c'hoant da barea n'eo nemet evit ober plijadur d'he mamm a gav diaes ganti. Digemeret a ra an holl boaniou a galon vat hag an dra-se hep eur rak, emezi en eul lizer, « va c'horf a-bez a zo klanv. »

Hebdale ar c'hlenved a lak he c'horf da c'houeza hag an derzienn da sevel. Ar glanvourez kaez ne c'hell mui debri netra hep distaol.

D'ar mare-se, Jann a gavas eur plas e trêñ klanvourien pec'herinaj Naoned. Kuitat a reas Varades d'an 31 a viz gouere 1922, astennet var eur c'hravaz ha gwasket gant eur boan griz pa finve an distera. Met he nerz kalon a jomas ganti hag e souezas al leanez a oa d'he heulia. Ker fall e oa o tigouezout e Lourd d'ar c'henta a viz eost ma oa red d'ezi chom an devez kenta en ospital. Aon e oa da welet anezi o vervel.

Douget e voe koulskoude an eil devez a viz eost, goude kreiz-deiz, d'ar Grott ha d'ar pisinou. Wardro div-eur, e-pad ma soubet anezi er pisin, Jann a semplas en eur douch ouz an dour sklaset. Met santout a reas, en eur zont er meaz, e oa kalz gwelloc'h hag an intronezed a oa en dro d'ezi a ouele gant ar joa o welout koenv he c'hof o vont kuit dirak o daoulagad. Jann a finve he izili e giz ma kare hag ar plac'h yaouank a oa, eur pennad a-raok, astennet hanter-varo war he c'hravas, a valeas hep nec'hamant ebet betek buro ar vedisined.

Ar re-man, goude o enklask, a embannas kement-man : « An daou skevent a zo yac'h; an alan a zo mat; n'eus gouli ebet mui er c'hof; an dimezel Dibon a zo mat ar bed ganti; kaout a ra mat he boued, bale 'na dillo; en eur ger, ar plac'h yaouank a zo yac'h-pesk. Eun hevelep paredigez, deuet ken buan, a zo kontrol da lezennou ar vedisinerez. »

Jann Dibon a zo chomet yac'h abaoe. Skriva 'rae, eun abadenn goude beza distrôet d'ar ger : « Pare mat oun ! Bennoz da Zoue ! Ar pez a zo graet gant hor mamm eus an Nenv a zo graet mat ! »



Retred an Drede-Urz e Plabennek

Parrez Plabennek he deus brud ha n'eo ket hep abeg da veza marteze ar barrez wella eus eskopti Kemper ha Leon. Netra souezus ma kaver enni eur Vreuriez eus Trede-Urz sant Fransez. Savet er bloaz 1901, ar Vreuriez-man he deus bet he retred eus ar 16 d'an 21 a viz Even. Bet eo bet heuliet penn-da-benn gant an holl C'hoarezed — emaint 108 — nemet gant eur glanvourez bennak.

Urz ar retred a voe urz an holl retrejou : pedennou, kantikou ha prezegennou. Da 7 eur $\frac{1}{2}$, oferenn; da-c'houde diou brezegenn eus ar mintin. Da eun 1 eur $\frac{1}{2}$, chapeled; da-c'houde diou brezegenn eus an abardaez.

An Tad n'en deus bet nemet meuleudi da rei d'ar C'hoarezed, rak gwir c'hoant o deus holl da gerzout war roudou sant Fransez.

Ne vez ket kavet dre-holl Breuriezou ken niverus, ken unanet ha ken trôet da garout an Aotrou Doue.

A-raok kloza ar retred, o deus diou kemeret ar skapular ha pemp o deus graet profesion. Ar Renerez o veza aet davet Doue, ez eus bet graet ivez eur votadeg hag anvet eur C'huzul (Conseil) nevez.

Ar Vreuriez-man he deus eur renk a enor e-touez lennerien Kenteliou sant Fransez : 43 koumanant !

Tad F.



An nep na lamm gant kalz a herr
A c'hell koueza e kreiz ar ster :
An nep na glask er baradoz,
Nemet eun toull evit repoz,
Adrenv an nor eun toullig aez,
A zo e riskl da jom er-maez.

SEB.



Bleuniou Sant Fransez

XVIth PENNAD

(Kendalc'h)

Fransez o klevout ar c'homzou,
A deue eeün eus an Nenvou,
A lavaraz en eur sevel
Reut en e sav, a vouez uhel :
« Alo ! mat an traou, Breur Maze !
« Doue araok, ha ni goude ! »

Hag e tilennas dioustu da vont gantan en-hent,
Daou zen a zoujans Doue, daou zen hag a oa sent :
Unan anezo, Breur Maze,
Breur Æl Rieti, egile.

Gand eur barr levenez, o c'halop o virvi,
Hag int o zri, raktal, er-maez ar manati.
Chomont ket da sellout petore hent kemer ;
Hag a-dreuz hag a-hed, en o fenn, o rener
Ez erruont a-greiz-holl e-kichen eur c'hastell,
Kastell Savurniano, gand e douriou uhel.
A-boan degouezet eno, Fransez a 'n em laka
Da brezek d'an dijentil, kredit, diouz e wella,

War an dôenn a-us d'ezan
 Gwennilied o richanan.
 « Roit peoc'h en ano Doue,
 Laras d'ezo, Fransez, neuze. » —
 Ha ker buan ha larout : « Ya ! »
 E tav an evned da geiza (1)
 Hag e chomont hep finvadenn,
 Ken ma echu ar brezegenn.

Sant Fransez a brezegas en eun doare ker kaer
 Ma vennas tud ar c'hastell, raktal, kuitaat ar gêr;
 'N em dizober diouz o madou,
 Evit kerzout war e seuliou.

« Na vezit ket ker feulz, gortozit eur pennad
 « Ha me lavarô d'eoc'h abret pe diwezat
 « Petra ober, hervez Doue,
 « 'Vit silvidigez hoc'h ene. »

En degouez-se Fransez a lakas en e benn,
 Sevel an Drede Urz 'vit mad ar gristenien
 Hag e lavaras : « Kenavo ! »

Da dud vat Savurniano
 O c'halon ken entanet gand e brezegenn
 Ma oant frôet raktal da ober pinijenn.
 Hag ec'h eas d'ober eun dro,
 'Tre Bevagna ha Kanaio.

Evel-se e kerze
 E spered, gant Doue,
 Pa savas e sellou
 E-trezek an Nenvou,
 Ma welas 'n e gichen
 Teir pe beder gwezenn
 A evned
 Goloet.

Fransez chomet evel manet,
 'Laras, kentiz d'e vignoned :
 « Chomit ouz ma gortoz, eur pennadig, aman
 « Ma rin eun tamm prezek d'an evned bihan-man ».
 Hag o fostaat dousik ouz an evnedigou
 A oa dindan ar gwez, o tibab greunennou,
 En em lakaas Sant Fransez
 Da brezek gant gwir levenez.
 Ouz hen klevout diwar o brank,
 Teu an evned all stank-ha-stank.
 'Vit 'n em vodan
 E-dro d'ezan

Da selaou difinv-tre, penn-da-benn e gomzou,
 A rae, hervez doare, vad kaer d'o c'halonou.
 Echu d'ar brezegenn, e chomjont da c'hortoz,
 Araok kemer an tec'h, digantan e vennoz.
 D'e vreur Jakez Masa, 'lavaras goude-se,
 Dudiet e spered, evel-hen Breur Maze :

(1) Gazouiller.

« Touez e vreudeur, an evned, Fransez 'deue ac'h ae;
 « A roe d'ezo alazig gant lezennig e zae.
 « Hag e choment hep tarnijal
 « En-dro d'ezan da bipial. » —

Sede aman, war bouez nebeut, ar brezegenn, ar c'homzou
 A lavaras, e degouez-se, Fransez d'e evnedigou :
 Lapoused bihan koant, ma breudeur bihan kaez,
 « C'houi a dle d'ho krouer, a gredan, ober lez;
 « Gand anaoudegez vras, dre holl e peb amzer,
 « Kanan e veuleudi; hennez eo ho tever.

« Bet hoc'h eus digantan,
 « Donezon ar c'haeran :
 « Ha galloud, ha frankiz
 « En eur gemer ho nij
 « Da ober hent, gardiz,
 « D'al lec'h ganeoc'h ma plij.
 « Daou, tri wisk 'n deus laket,
 « War ho tammig kroc'hen,
 « D'eoc'h da c'houzanv aezet,
 « Tommder ha yenienn.

« En arc'h an Tad Noe
 « E kavas ho tud koz,
 « O gouenn 'vit ma padje,
 « Da c'hortoz, goudor kloz.

« Doue gant madelez,
 « En ho kever divent,
 « Bemdez d'eoc'h a bourvez
 « Aer vat 'vit ho skevent.

« Biskoaz n'hoc'h eus hadet
 « Eur c'hreunenn e douar;
 « Biskoaz n'hoc'h eus eostet,
 « Ha d'eoc'h boued diarvar.

« Evidoc'h ar stêriou,
 « Ha gwaziou ha stivel,
 « Dont a ret 'n o douriou
 « D'evan a-denn askell.

« Er menez, e draounienn,
 « E kavet, holl, dioustu
 « Pe gleuzenn, pe vodenn
 « Da gaout enno repu.

« War gorf ar gwez uhel,
 « E sav meur a skourig,
 « E-lec'h gand an avel
 « E luskell ho neizig,

« N'hoc'h eus desket nezan,
 « Na ken nebeut gwriat,
 « Ha d'eoc'h bras ha bihan,
 « E ro Doue dilhad.

« Kement all a c'hrasou.
 'Zo eur merk hep e bar,
 « Penaos, mestr an Nenvou
 « A-greiz kalon ho kar.

« O, ma breudeur bihan,
 « Bezit 'ta war evez;
 « Da Zoue, hep ehan,
 « Lavarit trugarez.

« Ha bep noz, bep mintin,
 « Kanit holl gant dudi
 « Dre ho moueziou sklintin
 « D'ho krouer, meuleudi. »

O klevout Sant Fransez, prezeger helavar,
 Digor holl-ar begig, reut mat war o diouhar,
 O fenn savet en aer, distenn o dioueskell,
 'Vel da gemer o nij, da vont gant an avel,
 Sede al lapoused, gant doujans, o soublan.
 Holl war-eun-dro, o fenn, d'an douar dirazan.
 Hag int da richanan; eur merk sklêr, diarvar
 En doa o c'halonig eur blijadur dispar,
 O kompren e gomzou. Sant Fransze, prezeger,
 Na golle ket eta, a-dra-sur, e amzer .
 Ha dirak e evned, a bep gouenn ,a bep liou,
 Darn o flun marêllet a-gever diou-ha-diou
 Ez oa kel laouenn all Sant Fransez, ma tride
 E galon, o welout gant pebez karante,

Ez oa, gand an evnedigou,
 Komprenet kerkouls e gomzou.

En e estlamm marzus penaos ne ganje ket
 Ha meuleudi, ha gloar Doue, krouer ar bed !
 Echu d'e brezegenn, e laras d'ezo c'hoaz
 En eur ober warno, gouestadik, sin-ar-Groaz :


« It, ma evned bihan,
 « En ho c'hent adarre,
 « Da glask ho tammig boued. » —
 Hag int holl a-unvan
 Eürus evit doare,
 Ho c'halon leun a c'hred,
 Ha mont a-denn askell.
 Da nij, gand an avel,
 En eur geizan, laouen,
 Raktal, o c'hanaouenn.

Ar groaz graet gand ar Sant evid o c'has arak,
 'Verkas d'ezo o hent; e-trezek ar C'hornog

Ha war-du ar Reter, e trezek ar C'hreiste,
 War-du an Hanter-Noz, en eur bomm-nij, neuze,
 Hag e peder bandenn
 Reizet mat, ha kempenn,
 Sede an holl evned,
 Er pellder kuit tec'het.

Na peger kaer burzud ! Merkout 'rae, diarvar,
 Al labour a raje dre-holl war an douar,
 Sant Fransez, e venec'h 'vit mad an ineou,
 O ren ar gristenien e trezek an Nenvou.
 Evel m'en doa Fransez, embanner Hon Salver,
 Prezeget d'an evned gant kement a veoder,
 Graet warno sin-ar-Groaz d'o c'has, piou a oar ped ?
 E ker predig amzer da bevar c'horn ar bed,
 Evel-se a-dra-sur, bugale Sant Fransez
 Henvel ouz an evned, a bep tra dibourvez,
 A en em lez da vont 'vel ma plij gant Doue,
 Hen hepken ouz o ren, ha bemnoz ha bemde,
 E skedje, dre o nerz, a-us d'an holl boblou,
 Lezenn an Aviel, kroaz Jezus Hon Aotrou.

PAOTR JULUEN.



ILIZ ITRON-VARIA-AN-AELEZ PE AR BORSIONKUL

Lizer hon Tad Santel ar Pab Pi XI

diwarbenn ar 700^{vet} bloavez goude maro Sant Fransez

(Kendalc'h)

Goueliou ar seizvet kantved.

Plijadur vras hon deus, Breudeur muia-karet, o welout en em glev an dud vat, koulz etouez ar bobl hag etouez an dud a iliz, evit enori Sant Fransez, dre voueliou kaer, epad ar seizvet kantved goude e varo. Gwelet e vo traou kaer dreits-holl er broiou en deus kement brudet dre e vuhez, e santelez hag e vürzudou skedus. Gwelout a reomp a spered hag evel dirak hon daoulagad eleiz a gristenien o tont da gêr Asiz, o pede 'barz ilizou bro c'hlas an Ombri, o pignat war meneier sonn an Alvern ha war torgennou santel traonienn Rieti. Goude beza saludet gant respet ar c'horn-douar-se, e lec'h ma seblant Fransez beva c'hoaz ha gervel an dud da heulia e vertuziou, n'hellint ket distrei d'o bro, hep kaout

donnoc'h en o spered kenteliou ar Sant. Rak, evel ma lavar Leon XIII, « setu aman petra dleer da sonjal diwarbenn an enoriou rentet da Sant Fransez : plijout a raint d'an hini a veulont, ma reont vad d'ar re o c'hinnig. Ra glasko an dud beza henvel eun tammig ouz an hini a gavont ken din da veza meulet, abalamour d'e vertuziou dispar ! ra zeuint da wellaat o buhez, o kemer skouer warnan ! setu aze frouez saourus ha padus. » (Lizer : *Auspicato*, 1882).

Lavaret e vo marteze en deus ezomm ar bed hirio da gaout eun eil Sant Fransez, evit rei d'ezan buhez kristen; met, ma teufe an dud da gemer Sant Fransez, a wir galon, evit inestr-rener o feiz hag o c'houstians; ma teufent da heulia ar skoueriou en deus rôet, hen hag a zo bet « Melezour ar santelez, hent al lealded, reolenn ar furnez », daoust hag an dra-se ne vo ket awalc'h evit yac'haat hon amzer ha moug e dechou fall ?

Kentel d'an Tri Urz

Bugale Sant Fransez eus an tri Urz, bugale hag a zo ken niverus, a dle da genta bale striz war roudou kaer o Zad hag o Lezennour. An tri Urz-se, skignet dre ar bed-holl, — evel ma skrive Gregor IX d'al leanez santez Agnez, merc'h roue ar Bohem, — a rent bemdez hag e meur a zoare gloar d'an Holl-C'halloudeg. » (Lizer : *Conditoris*, 1238).

Meuli kalz a reomp menec'h an Urz kenta, ar re holl a zo bugale da Fransez, abalamour, e kreiz ar brezelioù hag al laeronsiou mezus, n'o deus graet, evel an aour, nemet gwellaat muioc'h-mui o buhez. Ra zeuio skouer o finijenn hag o izelded da damall rust c'hoantegeziou direiz ar c'horf hag ourgouilh ar spered ken stank en amzer vremen ! O dever eo digas sonj d'o nesa e tle heulia lezennou an Aviel. Aesoc'h e raint kement-se, ma heuliont piz o-unan Reolenn santel o Urz, reolenn benniget hanvet gant o Zad « leor ar vuhez, esperans ar silvidigez, kalon an Aviel, hent ar santelez, alc'houez ar baradoz, emgleo sinet etre Doue hag an den, evit rei da heman an eürusted peurbadus. » (*Selano*).

Ra blijo gant an Tad Sant Fransez, eus lein an nenvou, rei skoazel bepred d'e vugale niverus, o c'hennerza gant gwin ar garantez, ma zeuint holl da gaout « ar memes kalon hag ar memes ene » ha da labourat nerzus evit santelaat ar bobl kristen !

An eil Urz, brudet meurbed dre santelez Klara, he deus gwer-c'hezed hag a ren eur vuhez henvel ouz hini an êlez.

Red eo d'al leanezed-se kendalc'h da veza evel lili e liorz an Aotrou Doue, kendalc'h da skuilh o c'houez-vat ha da blijout d'o Fried, o virout o ene gwenn-kann egiz an erc'h.

Pedi a dleont evit ma zeuio kals muioc'h a bec'herien da c'houlenn pardon digant madelez Hor Salver Jezus ha ma zeuio kalon Hor Mamm Santel an Iliz da zridal gant al levenez, o welout ar vugale dianket-se o tistrei war hent ar silvidigez.

Evit echui, e lavaromp d'an Dredeidi, ken d'ar re a vev e kouenchou ha d'ar re a vev e kreiz ar bed, kemer poan ive da lakaat ar bobl kristen da heulia gwelloc'h kenteliou an Aviel. Tredeidi an amzer genta a labour evel ebstel, ha setu perak ar Pab Gre-

gor IX o meulas : « C'houi, emezan, zo soudarded da Jezus-Krist ha Makabeed nevez. » En hon amzer, e c'hellont ober kement all a vad, ha marteze muioc'h, pegwir ez int niverusoc'h, gant ma vo direbech o buhez.

Ar Pabed Leon XIII ha Beneat XV a lavare da eskibien ar bed-holl labourat kals da sevel an Drede-Urz en o eskoptiou; ha ni, Breudeur Eskibien, ni a c'houlenn diganeoc'h ar memes tra. C'hoant hon deus d'o kwelout o rei skor d'an Drede-Urz, o teski d'ho pobl, — pe drezoc'h hoc'h unan pe dre veleien hag a brezeg mat, — petra eo an Urz-se graet evit ar baotred hag ar merc'hed a vev e kreiz ar bed, pegen aes eo mont ebarz ha heulia e Reolenn santel, pegement a induljansou hag a c'hrasou a zo da c'hounit; en eur ger, deskit d'an dud an holl vad a zeu da bep-hini ha d'ar bobl a-bez eus an Drede-Urz. Grit d'ar re n'emaint ket c'hoaz er Vreuriezh kaer-se en em lakaat enni; ra zeuio zoken ar re n'o d'eus ket c'hoaz an oad da rei o hano da vont enni, evit en em gustumi adalek o bugaleach da blega d'al lezenn santel-se.

* * *

Seblant a zo, hervez an traou eürus a dremen breman, e fell da Zoue lakaat hon amzer a Bab da zougen ive frouez talvoudus evit brasa mad an Iliz katolik. Gant laouenedigez e welomp o tostaat ar gouelioù kaer a vo graet, er bloaz man, evit enori Sant Fransez, eur Sant hag en deus epad e vuhez harpet ha startaet Iliz an Aotrou Doue; hon eürusted a zo seul-vrasoc'h ma omp bet boazet yaouankik-flamm da enori ha da bedi Sant Fransez evel hon Difen-nour ha ma omp deut da veza bugel d'ezan, o kemer gwiskamant an Drede-Urz. Ra blijo gantan, er seizvet kantved-man warlerc'h e varo santel, tenna kement a c'hrasou, dre e bedennoù, war ar bed kristen, ma chomo ar bloaz man brudet da viken e istor an Iliz.

Evit tenna warnoc'h madelezoù an nenv hag evel eun testeni eus hor c'harantez a dad, ni a ro d'eoc'h a greiz kalon, en Hor Zalver Jezus-Krist, hor bennoz a Bab, d'eoc'h-c'houi, Breudeur Eskibien, d'ho peleien ha d'ho pobl.

Skrivet e Rom, e kichen iliz-veur Sant Per, d'an 30 a viz ebrel, 1926, ar bempet bloavezh abaoe ma 'z omp Pab.

PI XI.



D'ar mammou kristen



Doùe en deus ho selaouet, mamm gristen. Eman ho mab war an hent da vout da veleg. Eur bloaz en deus tremenet er c'hloerdi bihan, ha mat eo bet da labourat, da bedi ha da zenti. E vistri n'o deus nemet vad da lavaret diwar e benn.

Met na gredit ket, mamm gristen, eo echu ho labour breman ha n'ho peus mui netra d'ober. Epad an ehan-skol ho mab a zistroio d'ar gêr, hag epad hir amzer c'houi eo a vo karget anezan. Er c'hloerdi, ar veleien a ra skol d'ho mab, o deus poaniet gantan, roet d'ezan pep seurt kenteliou mat, met n'e ket heb aon hag enkreuz e wel ar vistro amzer an ehan-skol o tont. Nag a hini a zo bet kollet epad an amzer-ze ! Evel laboused, bet torret d'ezo o askell, e tistroont d'ar c'hloerdi, dinerzet; n'o deus mui a blijadur o labourat, o pedi; o spered a red du-man, du hont; en o c'halon pep seurt ioulou fall a zo o virvi. Ha distrei a raint adarre war an hent mat ? Marteze, met n'eo ket sur.

Diwallit, difennit mat ho pugale epad an ehan-skol. Evel gwechall, epad m'edont bihan, c'houi a veilho adarre bemdez warno. Gouzout a rit pegement a zroug a zo er bed en deiz hirio, pegement a riskl a zo e pep lec'h evit eneoù ar vugale hag an dud yaouank.

O diwallit eta ouz ar c'hamaraded fall : « Lavar d'in piou a zaremprededez, ha me a lavaro d'it piou out. » Ar re a oa gwechall mignoned ho mab, ar re a zo bet er skol gantan, a zo eus e oad, petra int deuet da veza ? Mar dint chomet fur, santel, lezit ho mab da vout ganto. Met, mar dint lezirek d'ober o deverioù kristen, ma vezont klevet awechou a lavaret komzou dizereat, difennit ouz ho mab mont ganto.

Evesait ouz al levriou a lenno ho mab, ha ma n'ouzoc'h ket hoc'h-unan pe vat pe fall eo al levriou, goulennit digant ho pe-leien. Gant al levriou fall, gant ar c'hamaraded fall eo e vez kollet an darn vrasa eus ar vugale hag an dud yaouank.

Da zul, c'houi a zalc'ho ho mab en ho kichen. Mont a ray d'an oferenn-bred, d'ar gousperou, met ne bigno ket war e varc'h-houarn da redet pell diouz ar gêr, d'al lec'h ma 'z eus c'hoarioù divalo. E blas n'eman ket e kreiz trouz ar bed.

Lavarit d'ezan mont alies da govez, da gommunia. Ha n'ho pezet ket aon da gomz d'ezan evel gwechall, da zisplega dirazan peger kaer eo karg ar beleg ha pegen eürus e vezoc'h pa vo beleget ho mab.

Ha dreist-holl, kennerzit anezan. Ezomm o deus ar vugale, an dud yaouank da veza harpet, kennerzet alies. Lavarit d'ho mab : « Dalc'h mat, na goll ket fizians; tenn eo beza er skol epad keit amzer, pell diouz ar gerent, met ret eo; n'hellez ket, e giz all, kaout an deskadurez a zo ezomm. — Kinnig da boan da Zoue; kement a c'houzanvi a galon vat a vo paet d'it gant Doue. Evelse, o poania hag o labourat, eo e teuer da veza tud a benn, tud krenv, hag ar beleg a dle beza eun den a benn, pegwir eo karget da ren ar re all. »

Goulennit digant an Tad Theodor ROUSSEL, 28, Avenue de la Marne, Lorient.

C/c 46.28. Nantes.

Buhez burzudus eun douger-sammou MAZE TALBOT :
0 fr. 50 — 0 fr. 65 dre ar post.


An Eured Kristen (*Kantig*) : 22 real ar c'hant, dre ar post.

Kantigou nevez : SAKRAMANT AN AOTER. — JEZUZ-KRIST ROUE.
— An « DE PROFUNDIS », pedenn an Anaon. — Priz an tri asambles : 15 lur ar c'hant, dre ar post.

*

Levriou e galleg

LIBRAIRIE SAINT FRANÇOIS, 4, rue Cassette, PARIS (VI ^e)	
Mânuel du Tiers-Ordre , par le P. EUGÈNE, capucin. — 1 volume relié, tranche rouge.....	10 fr.
Petit Manuel du Tiers-Ordre , par le P. EUGÈNE. — 1 volume relié, tranche rouge.....	4 fr.
Saint François d'Assise , par le P. LÉOPOLD, capucin. (40 ^e mille)	12 fr.
Histoire de la Fondation et de l'Evolution de l'Ordre des Frères Mineurs au XIII^e siècle , par le P. GRATIEN, F.M. Capucin. — 1 volume de 700 pages in-8°. Illustrations hors-texte.....	40 fr.
Saint François d'Assise, sa Personnalité, sa Spiritualité , par le P. GRATIEN.....	5 fr.
Saint François d'Assise et l'Influence sociale de l'Évangile , par le P. GRATIEN.....	2 fr.
Saint François d'Assise , par le P. CUTHBERT, capucin (2 ^e édition)	24 fr.
Histoire de Saint François d'Assise , par l'abbé LE MONNIER (7 ^e édition) 2 vol.....	24 fr.
Saint François d'Assise, Patron des Jeunes Scouts catholiques , par le P. SIGISMOND, capucin.....	4 fr.
Leçons d'Histoire Franciscaine , par le P. UBALD, capucin	12 fr.
Courtes Méditations ascétiques pour tous les jours de l'année , par le P. JOSEPH DE DREUX, capucin.....	9 fr.
Le Prêtre en retraite , par le P. ALEXIS, Capucin..	10 fr.
Le Religieux en retraite , par le P. ALEXIS, Capucin	10 fr.
Le Chrétien en retraite , par le P. ALEXIS.....	7 fr. 50
Sainte Claire d'Assise , par le P. LÉOPOLD.....	7 fr. 50
Sainte Elisabeth de Hongrie , par le P. LÉOPOLD..	10 fr.
Sainte Marguerite de Cortone , par le P. LÉOPOLD,	9 fr.
Un converti de quinze ans , Frère Joseph de Palerme, novice capucin, par le P. ROBERT.....	9 fr.



Cum permissu Superiorum.


Le Gérant : G. LE BAYON.

Moulez AR BAYON-ROGER, 13, Tachenn Alsace-Lorraine, en Oriant.



Ra vezo meulet Jezuz-Krist !

Bepred.



Kenteliou Sant Fransez

Kelaouenn vizek gant Skeudennou



TAOLENN AR MIZ

Goueliou ar miz	141
Sonjit ervat	142
Bennoz an Tad Melkior a Benisa	143
Kelennadur diwar-benn an Drede-Urz	145
Gouliou sant Fransez	147
Ar vugale a zo enno danvez eur beleg	149
Santez Elizabeth a Hongri	150
Lourd hag ar garantez e-kenver an nesa	153
Bleuniou sant Fransez (XVII th Pennad)	155
Du-man ha du-hont	155
Pirc'hirinaj an Drede-Urz e Santez-Anna-Wened	



Rédaction et Administration

P. Théodore ROUSSEL

F.M. Capucin

28, Avenue de la Marne, LORIENT

C/c. : 46.28 NANTES

Priz : daou skoued

GWENGOLO

1 Sadorn ... DEN-EÛRUS BERNARD A OFFIDA, kapusin. — I.P.

2 Sul *Pevarzekvet sul goude ar Pantekost.*

AN DEN-EÛRUS APOLLINER MOREL, merzer, kapusin.

3 Lun Tud EÛRUS YANN HA PËR, merzerien eus an Drede-Urz. — I.P.

4 Meurz ... SANTEZ ROSA A VITERB, gwer'chez eus an Drede-Urz. — I.P.

5 Merc'her ... DEN-EÛRUS JENNIL, merzer eus ar genta Urz.

6 Yaou TUD-EÛRUS LIBERAT, TIMOTHE ha PEREGRIN eus ar genta Urz.

7 Gwener ... Ofis eus an deiz.

8 Sadorn ... DONEDIGÉZ AR WERC'HEZ VARI. — A.J. — I.P.

9 Sul *Pemzekvet sul goude ar Pantekost.*

PLAC'H EÛRUS SERAFINA SPORZA, intanvez eus an eil Urz.

10 Lun S. Nikolas a Dolentino, kovez.

11 Meurz ... S.S. Prot ha Yasint, merzerien.

12 Merc'her ... Gouel ano santel MARI.

13 Yaou S. FRANSEZ A GALDEROLA, kovez. eus ar genta Urz.

14 Gwener ... Gouel ar Groaz savet.

15 Sadorn ... SEIZ GLAC'HAR AR WERC'HEZ GLORIUS VARI.

16 Sul *Chouezekvet sul goude ar Pantekost.*

17 Lun GOULIOU HON TAD S. FRANSEZ. — A.J. — I.P.

18 Meurz ... S. JOSEF A GUPERTINO, kovez. eus ar genta Urz. — I.P.

19 Merc'her ... *Pevare amzer (Daouzek deiziou).* — S. Janvier hag e Genseurted, merzerien.

20 Yaou S. Eustaj hag e Genseurted, merzerien.

21 Gwener ... *Pevare amzer (Daouzek deiziou).* S. Vaze, abostol hag Avieler.

22 Sadorn ... *Pevare amzer (Daouzek deiziou).* S. Thomas a Gernevez-eskob.

23 Sul *Seitekvet sul goude ar Pantekost.*

24 Lun S. PASIFIK, kovez. eus ar Genta Urz. — I.P.

25 Meurz ... Ofis eus an deiz.

26 Merc'her ... S.S. Syprian ha Justina, merzerien.

27 Yaou S. ELZEAR, kovez. eus an Drede-Urz. — I.P.

28 Gwener ... DEN EÛRUS BERNARDIN A FELTR, kovez. eus ar genta Urz.

29 Sadorn ... S. MIKAEL, ARCH'HAEL. — I.P.

30 Sul *Triouec'hvet sul goude ar Pantekost.*

S. Jerom, Doktor eus an Iliz.



GWENGOLO 1928

Sonjit ervat

Diwar-benn eil goulenn ar Bater :

Ho Rouantelez deuet d'eomp

I. — Sonjit ervat : dre ar c'homzouse Hor Salver Jezuz a zesk d'eomp goulenn ma reno Doue war an douar dre e c'hras; goulenn ma vezo Doue ana-vezet hag azeulet gant an holl, ha ma teuy an holl da drei kein d'ar pec'hed.


Taolit eur sell a druez war gement all a dud ha na sentont ket ouz Doue. Daoust ha c'houi hoc'h-unan n'oc'h ket bet eus an dud-se ? Goulennit eta pardon digant Doue ha gwelit ha c'houi a zo hirio start en e lezenn.

II. — Sonjit ervat : evel ma lavar d'eomp Tadou an Iliz, rouantelez Doue ne skedo evit mat war an douar nemet da zeiz ar varn diweza. Adalek an deiz-se pec'hed ebed mui ne vezo graet; an holl a sento ouz Doue, er baradoz dre garantez, en ifern dre justis. Goulennit, evel ma lavar d'eomp an Iliz, ma skedo an deiz-se ar c'henta-gwella.

Daoust ha direbec'h a-walc'h eo ho koustians evit c'hoantaat gwelout an deiz-se o tont ? Ma n'eo ket, Hor Salver a lavar d'eoc'h he lakat.

III. — Sonjit ervat : kenta tra a c'houlennomp dre ar c'homzouse : ho rouantelez deuet d'eomp, eo ma teuy d'eomp rouantelez gloar Doue, rak o welout Doue en e c'hloar er baradoz eo e kavomp ar wir-eurusted, hag eno hepken.

War an douar-man ez oc'h dalc'het pell diouz Doue hag emoc'h en harlu. Lakit ar wirionez-se doum en ho spered ha neuze en em zistago ho kalon diouz traou an douar evit trei war-du ar baradoz.



ASIZ

Bennoz an Tad Melkior a Benisa Penn-Rener Urz ar Gapusined

An Tad MELKIOR A BENISA, Penn-Rener Urz ar Gapusined, deut da welout menec'h kouent an Oriant, en deus c'hoantaet gwelout ivez an holl Dredeidi (Tertiaires) eus kêr ha tro-war-dro.

O galvet en deus d'ober o bodadeg viziiek dindan e renadur, hag en deus lavaret d'ezo eun nebeudig komzou evel Tad ha Rener an Urz.

Evel Tad en deus diskleriet d'ezo pegel laouen e oa d'en em gaout e-touez e Vugale ken aketus da heulia o reolenn ha da senti ouz an Tad santel ar Pab.

Evel Rener bras an Urz en deus meulet ar wazed hag an dud yaouank a zoug skapular sant Fransez : « N'oc'h ket niverus, emezan, met, evel m'en deus lavaret d'in an Tad santel, gwelloc'h eo kaout nebeut a Dredeidi, gant ma vint fur ha santel, eget eun niver bras hag a vefe klouar ha lezirek. »

D'an holl en deus rôet e vennoz. Bez' en deus bet sonj neket hepken eus ar re a oa bodet er chapel, met ivez eus ar re a oa pell dioutan, ha setu perak e kas e vennoz, a lennoc'h aman warlerc'h, da holl Dredeidi Breiz.

Trugarez a-greiz kalon d'an Tad Melkior. Ra blijo gant sant Fransez rei d'ezan skoazell ha goulenn evitan ar grasou en deus ezomm evit ren hervez Doue eur garg ker ponner.

« Eürts bras omp bet da venniga hirio Tredeidi an Oriant bodet eün evit hon digemer en o c'hêr. »

« Met ne fell ket d'eomp ankounac'haat an holl Dredeidi eus parrezioù, Breiz a zo pell ac'hann. Kas a reomp hor gwella bennoziou d'ezo, da gellabouwerien ha da lennerien an diou gellaouenn : « Trivet Urh sant Franséz » ha « Kenteliou sant Fransez ». »

« Ni hag a zalc'h e penn an Urz plas sant Fransez, ni hag a gar eveltan kement hini a zoug e wiskamant, ni a c'houlenn dre ar vennoz-se ma kresko en ho kalonoù holl vertuzioù an Aviel bet heuliet ker mat gantan a-hed e vuhez. »

E bedi a reomp da rei d'eoc'h matoc'h-mat a galon da skigna e spered dre ar bed. »

« Goulenn a reomp erfin m'en em rôoc'h atao matoc'h-mat da labour ho silvidigez ha ma kresko e pep doare ar vad a c'hellit ober dre ho skridoù, ho komzou hag ho skouerioù mat. »

Eus kouent an Oriant, 5 a viz eost 1928,



Kelennadur diwar-benn an Drede-Urz

Aliou evit ar bloaz kenta

Breudeur ha C'hoarezed ker,

C'houi a zoug breman ar skapular hag ar gordennig. Eman digor eur vuhez nevez dirazoc'h. An Aotrou Doue en deus bet ar vadelez d'ho kemerout en e servij. Livirit eta d'ezan : « O va Doue, me a zo d'eoc'h ; fiziaans am eus, dre sikour ho kras, da ober ar pezh a c'houlennit. »

A dra sur, da stourm ho pezo er bloavezh-man : da stourm evit beza fur, karantezus hag izel a galon, da stourm evit pellaat diouz ar bed, e blijadurioù hag e ebatou.

Met e-kichen ar boan, e vezo ivez eur c'hras krenv a-walc'h evit trec'hi war an enebour touet, an diaoul.

I°) Klask a ray marteze an drouk-spered ho yennaat e-kenver an Drede-Urz, o rei d'eoc'h da gredi n'hoc'h eus netra da c'hounit enni evit ho silvidigez.

Grit d'ezan skouarn vouzar, heuilhit betek an distera gourc'hemenn eus ho Reolenn, ha grit zoken muioc'h, mar gellit hep nozout da zeveuriou ho stad. Livirit d'Hor Salver : « Ho karout hag ho servicha a fell d'in neket evit kaout frealzidigez d'am ene, met evit diskouez d'eoc'h va bolontez vat. »

Lennit gant evez buhez hon Tad sant Fransez, ha goulennit digantan ho nerza en ho menoz da garout gwelloc'h an Aotrou Doue. Ma talc'hit mat da gaout disfiziaans diouzoc'h, da bedi ha da heulia ar Reolenn, e pellaio hep-dale hoc'h enebour, ha roit ho pezo da Zoue eun testeni dispar eus ho karantez.

II°) — Marteze ivez e teuio an drouk-spered d'ho tougen da damall hep abeg ar Breudeur hag ar C'hoarezed all.

Met ma varnit an nesa, e kouezot er pec'hed, kondañet gant Hor Salver Jezuz-Krist : « Na varnit ket, emezan, ha ne vezoc'h ket barnet. Perak e welit-hu eur blouzenn e lagad ho preur ha ne wellit-hu ket an treust a zo en ho lagad d'eoc'h-hu ? »

M'o deus ar re-all eur si bennak, daoust ha direbech oc'h-hu dirak an dud ha dirak Doue ? Chomit eta izel a galon. Serrit ho taoulagad war dechou ho nesa hag digorit-i frank war ho pe-c'hejou hoc'h-unan.

N'hoq'h eus skouer all ebet da heulia nemet sant Loeiz, c'houi, va Breudeur, ha santez Elizabet, c'houi, va C'hoarezed, klaskit



eta kerzat war o roudou, rak barnet e vezoc'h hervez an doare ma ho pezo heuliet o skoueriou.

III°) Marteze c'hoaz e klasko an drouk-spered ober d'eoc'h fall-galoni. O rei hoc'h ano d'an Drede-Urz, e kave d'eoc'h ho pije atao ho kalon leun a beoc'h ha dizoursi bras. Siouaz ! eun dervez, dre ma ho poa lakaet re a fizians ennoc'h, ez oc'h kouezet, ha breman e kavit re ziaes adkrogi bemdez da vrezeli enep ardou an diaoul.

Fazia a rit. N'eo ket en eun dervez e vezoc'h tud santel; labour ar silvidigez, ne vern e pe stad e vezoc'h, a zo eul labour hag a bad 'hed ar vuhez. « An neb a grog en alar, eme Hor Salver ha war e lerc'h sant Fransez, hag a zeu war e giz, ne zigouezo biken e rouantelez Doue. »

Hini ha hini e vez dizouaret al louzou fall. N'eo ket en eun taol, met tamm ha tamm, e teuoc'h a-benn eus oh techou. Ma kouezet, adsavit buan ha war-raok atao :

« Perak emoun-me manac'h ? » a lavare sant Bernez. Livirit c'houi : « Perak emoun-me en Drede-Urz ? Evit dougen va c'hroaz ha kerzat warlerc'h sant Fransez ha gounit goude ar vuhez-man eur gurunenn a c'hloar. »

Fall-galoni a reer n'eo ket hepken dre ma hon eus da stourm evit mirout karantez Doue en hor c'halon, met ivez dre ma hon eus a bep seurd poaniou ha trubuilhou da c'houzanv.

Ar poaniou, setu aze hor bara pemdeziek. Ar sent n'int ket espernet muioc'h eget ar gristenien all. Selaouit an den santel Job o lavarout : « Me a zo skuiz gant ar vuhez ». Selaouit klemmou an Abostol sant Paol : « Paour-kaez den ma 'z oun, ne ran ket ar vad a garan ober hag ober a ran an droug a zisplij d'in. N'em eus nemet eur c'hoant : gwelout va c'horf o vont d'ar bez evit beza unanet gant va Salver Jezuz. » Pelloc'h e klevomp c'hoaz an Abostol o lavarout : « E pep tu d'in ne welan nemet anken ha trubuilhou. »

Mab Doue E-unan, daoust ha n'en deus ket bet eur c'halir c'houero da eva ? E-kenver poaniou e Basion hag e varo, hor trubuilhou d'eomp-ni n'int netra !

Breudeur ha C'hoarezed hag a rit ho ho kammejou kenta en Drede-Urz, kemerit kalon.

Bet hoc'h eus digant Hor Salver ar c'hras-d'e heulia dre an hent striz, hent ar groaz, na droit ket kein d'ezan o kemerout adarre plegou fall ar bed.

Kemerit kalon, rak ne vezo kurunet eun deiz nemet ar re o devezo dalc'het mat betek ar penn.

Kemerit kalon, rak ne welit-hu ket e-leiz a eneou, en em goll bemdez ? Bezit truez ouz ar bec'herien !

Bralla a ra ar bed dindan ar bec'h eus torfejou an dud :

« Bevit em c'harantez, a lavar d'eoc'h Hor Salver. » Ya, chomit gant ar mestr divin; chomit gant e vignon sant Fransez.

Mnoz. — « E-kreiz ho poaniou a spered, ne vern eus pe lec'h e tewont, bezit disfizians eus ho nerz. Met taolit ho taoulagad war ar groaz ha kredit start eman eno ar silvidigez. Likit ho fizians en Hor Salver ha na fall-galonit ket. » (Sant Josef a Gupertino, eus ar genta Urz).



Seitekvet devez
a viz Gwengolo

Gouliou Sant Fransez

Azeulomp Doue o lakaat e Vab da c'houzanv betek ar groaz, dre garantez evit an den. Pebez testi a garantez a ro d'imp Jezus. N'eus nemet gouliou war e gorf santel. Dre e zaouarn hag e dreid, ez eo staget ouz ar groaz, hag en e gostez e c'heller gwelout eun trouc'h down. Dre ar groaz eo en deus trec'het Jezus. Ar boan a zo bet trec'h d'ar pec'hed.

Dre vezan henvel ouz Jezus e tle ar c'hristen bezan trec'h er vuhez-man ha ren er bed all. Ar wirionez-se a weler sklaer en Aviel : komzou ar Mestr a zo fraez. Gouliou burzudus Sant Fransez a laka ar wirionez-se splan dirak hon daoulagad.

* * *

I. — Penaos e c'hoarvezas ar burzud.

Er bloavez 1224 e oa. Daou vloaz goude, e nije ene Sant Fransez d'ar baradoz.

En em dennet e oa ar Sant war venez Alvern, evit yun epad daou-ugent devez, en enor d'an Aotrou Sant Mikael.

Eun devez, tra ma teue goulou-deiz, Fransez a oa o pedi war diribin ar menez. A daol trumm sede eun ael o tiskenn eus barr an Nenv. Hag e welas sant Fransez gant an Ael c'houec'h askell ken skedus hag an tan.

An ael a nijas betek ennan hag a chomas dirazan, dibrad en aer. Fransez neuze a welas an ael staget ouz ar groaz. Diou askell a save eeun-us d'ar penn; diou all a oa astennet evit, nijal; hag an diou all a c'holoë ar c'horf. Strafulhet-holl e voe sant Fransez gant ar weledigez-se. Al levenez hag ar glac'har a deue, bep eil da gargan e galon; levenez o vezan ma oa e Zoue dirak e zaoulagad; glac'har dre ma wele skeudenn Hon Salver staget ouz ar groaz.

An hini a baras dirak e zaoulagad, a sklaerijennas e spered. Hag e komprenas neuze e tlee mignon ar C'hrist dont da vezan

henvel ouz Jezus, n'eo ket dre verzerenti e gorf, met dre dan ar garantez.

Goude bezan kaozeet ouz ar Sant evel ma komzer gant eur mignon, an ael a bignas en nenv, tro ma oa entanet souezus kalon Fransez. Neuze eo e teuas en e zaouarn, en e dreid hag en e galon, pemp gouli henvel ouz ar re a oa o paouez gwelout. E zaouarn hag e dreid a oa evel pa vijent bet treuzet gant tachou bras, teo ha du o fennou, kammet o begou. Gouli e galon a oa ledan ha digor, hag a wade alies.

Fransez a ziskennas diwar ar menez, gouliou Jezus-Krist moulet d'ezan, nann war yaen pe war gwad, met war e gorf, gant biz an Doue beo. Klask a rae kuz ar burzud graet en e genver; derc'hel e zaouarn goloët, ha dougen bôteier. Met Doue a felle d'ezan e ouefe an dud. Nerz souezus ar gouliou a voe diskouezet dre vurzudou sklaer. E-leiz eus menec'h Sant Fransez, meur a gardinal, hag ar pab Alexandr IV, a douas bezan gwelet gouliou ar sant epad e vuhez.

Pa oa war ar varv-skaon, ouspenn hanter-hant lean, santez Klara, hag he leanezed, hag eur bobl tud o deus gallet tostaat outo o daouarn hag o muzellou. Gouli e gostez, epad e vuhez, n'halled ket hen gwelout nemet dre laer; met anat awalc'h e oa, diouz ar gwad a veze war dilhad ar sant pa roë anezo da walc'hi. D'e varv, an holl a c'hallas gwelout gouli ar galon, evel ar pevar all, ha pokat d'ezan gant doujans.

*
*
II. — Kelennadurez.

A-us d'ar bed e sked lintrus Kroaz Hon Salver. Karet ha douget ez eo ar groaz gant ar gristenien. Rak bez' ez eo arouez santel ar C'hrist-Roue; bez' ez eo ar benveg ma en deus graet Jezus gantan evit hon diframman eus etre skilfou an diaoul.

Hent ar groaz a oa evit an Aotrou hent, ar boan; evit an dud holl e oa hent ar vuhez.

Dre hent ar groaz e ranker tremen evit mont d'ar baradoz. Hent ar plijaduriou n'eo ket hent an eürusted; hent an ifern eo hennez.

Klevomp Hon Salver o lavarout : « Neb a venn dont war ma lerc'h, ra en em ankounac'haio, ra zougo e groaz. »

N'eus den ebet ha na gavfe e groaz war an douar-man. Ar roue koulz hag ar pab; an den gouiziek koulz hag an den dizek; ar pinvidik koulz hag ar paour a gav ar groaz war o hent, ha pep den a zo graet e hini d'ezan, diouz m'eo kap da zougen.

Dougomp gant nerz-kalon samm al labour, ar boan-spered pe ar boan-galon, samm an enkreuz, samm ar c'hlenvedou.

Evel Jezus, warlerc'h Jezus, dougomp hon c'hroaz; arabad eo he stlejan; arabad eo he zrouc'han. Unanomp alies hon foaniou gant poaniou hon Salver.

Dougomp hon c'hroaz uhel kuit a ardou nag a glemmou. Seul vui e vezo douget soun ha uhel, seul skanvoc'h e vezo.

Trugarekaomp Jezus da vezan desket d'imp talvoudegez ar boan dre e gomzou, dre e vuhez, ha dre burzud gouliou sant Fransez.


Eun eil Jezus-Krist e tle bezan pep kristen. Met daoust ha karout o reomp hon c'hroaz evel ma kare e hini ? Daoust ha ne glas-komp ket en em zizamman diouti ? Daoust ha n'en em glem-momp ket war zigarez ma en em gavomp sammetoc'h eget hon nesan ?

Ma oa ar groaz alc'houez ar baradoz, etre daouarn Hon Aotrou, ar groaz, etre daouarn pep-hini ac'hanomp a c'hall bezan skeul ar baradoz

Pedenn. — O Jezus hon Aotrou, evit mirout na zalc'hfe an dud da yenaat en ho kenver; evit bevaat en hon c'halonou tan ho karantez, c'houi hoc'h eus moulet ho kouliou sakr e korf sant Fransez, grit ni ho ped, ma c'hallimp, gant skoazell e zellidou (mérites) hag e bedennou, dougen hon c'hroaz evel m'eo dleet, hag ober pinijennou talvoudus.

Dezo. — Klask a rin en em zistagan muian m'hallin diouz ma zraou hag en em ankounac'haat me ma-unan, rak nep a goll e groaz, a goll e gurunenn.

Boked. — « Ne c'hoantaan en em veuli nemet e kroaz hon Aotrou; drezi, ar bed a zo bet staget ouz ar groaz evidon ha me evit ar bed; rak gouliou Jezus a zougan war ma c'horf. » (S. Paol).
E.R.



Ar vugale a zo enno danvez eur beleg



AOTROU person, a lavare eur wech eun itron vadelezus, n'em eus ket a chans. Setu aze adarre eun all eus ar re am oa kaset d'ar c'hloerdi o tont var e giz hag o lavaret ne fell ket d'ezan mont da veleg. Ar pempvet eo a gollan evelse, an eil goude egile. Ne gasin mui hini ebet. Ne dalv ket ar boan. Koll a ran va amzer ha va arc'hant. » — « Itroun, kemeret a ran perz en ho poan, glac'haret oun evel doc'h, met n'oun ket re souezet, rak marteze n'ho poa ket dibabet mat awalc'h. » — Hiviziken, ne glaskin mui hini ebet, p'e gwir n'hellan ket o c'has da benn. » — « Selaout. Na dit ket da gredi e c'heller sevel beleien evel ma saver soudarded. Lod a zo soudarded mat, lod soudarded fall, gwir eo, met holl int soudarded. Dalc'het e vezont er c'hazarn, ha da fin o amzer soudard hepken e vezont kaset d'ar gêr. Met, evit kaout beleien, eo dis-henvel. Ar re holl a vez kaset d'ar skol, d'ar c'hloerdi, n'eus ket enno danvez eur beleg. Ret eo gwelet petra dalvezont da labourat, da zenti, da bedi, hag ar re vat hepken a vez kemeret er c'hloerdi bras, ar re o deus c'hoant da labourat evit gloar Doue, evit silvidigez an eneoù, ar re a ouezo bale war

« roudou Hor Salver, dougen o c'hroaz, ren eur vuhez santel. »
 — « Met, aotrou person, pa vezont er skol gant beleien, me gav d'in e c'heller euna ar vugale, tenna eus o c'halon ar plegou fall, hag o lakaat holl e stad vat da vont d'ar c'hloerdi bras. »

« Siouaz ! eme an aotrou person, n'heller ket ober eus an holl vugale ar pez a c'hoantaer. Lod a gerz eun ha brao dre an hent diskouezet d'ezo, a zo eur blijadur o c'heleñn, rak m'o deus kalon vat, m'int ive bugale a benn, a zalc'h start d'o menziou. — Met bez ez eus re all n'int ket henvel, a zo a-wechou mat da labourat, da zenti, hag a-wechou dizentus, lezirek ; a-wechou troet ouz Doue, a-wechou ouz plijadureziou ar bed. Ha p'o deus peure'hraet o studi, e lec'h goulenn mont d'ar c'hloerdi bras, eo gwelloc'h ganto klask eur garg all bennak. N'heller kas den d'ar c'hloerdi en desped d'ezan. An den yaouank a dle mont a ioul vat, ha ma n'en deus ket a c'hoant da vont da veleg, ra gemero eun hent all.

Lod n'o deus ket a nerz, kalon awalc'h, n'ouzont ket en em c'houarn, a dro evel an avel. Penaos, ma n'ouzont ket reiza o buhez o-unan, e c'hellint hentcha ar re all, o c'heleñn, o gouarn ? Ar beleg a dle beza sklerijenn ar bed.

Lod n'o deus ket a yec'hed awalc'h. Karg ar beleg a c'houlenn eur yec'hed krenv, hag an dud yaouank klanvidik a zo gwelloc'h d'ezo chom var o c'hiz, rak n'hellint ket harpa marteze er c'hloerdi bras, ha diwezafoc'h ne vezint ket gouest d'ober al labour goulennet diganto.

Lod o deus diskouezet, epad m'emaint er skolaj pe er c'hloerdi bihan, int re zinerz da stourm ouz an droug, ouz ar pec'hed, n'o deus poaniet tamm ebet da zic'hrienna an techou fall eus o c'halon. Ar re-ze, ha goude m'o defe eur spered kaer, deskadurez vras, ne dleont ket beza digemeret er c'hloerdi bras, n'eus ket enno danvez eur beleg. »

— Lavarit d'in neuze, Aotrou person, petra am eus d'ober. Marteze e vijé da zibaba ar vugale a zo da gas d'ar c'hloerdi bihan d'ober o studi. »

« P'e gwir ho peus lavaret da genta, e c'hellan lavaret var ho lerc'h. Ya, evelse eo e telit ober. C'houi a c'hell komz d'ar veleien eus ar vugale a anavezit, lavaret petra ho peus gwelet, klevet, sikour ar beleg da zibaba. Met lezit anezan da lavaret ar ger diveza. Ezomm zo eus beleien, kalz beleien, met ezomm zo, dreist-holl eus beleien santel a glask nann o aes, o mad o-unan, met silvidigez an eneo ha gloar Doue hepken. El lec'h ma vezo beleien santel, ez aio atao mat an traou, an eneo a gresko e karantez Doue, an drouk-spered a vezo disteraet e c'hal-loud, an Iliz a vezo startaet he gwrizioù.



Santez Elizabet a Hongri

Patronez ha skouer C'hoarezed an Drede-Urz



Santez Elizabet e ra aluzen

Santez Elizabet a voe les-hanvet an Itron vat pe Mestrez ar beorien, rak hi he doa eur galon madeleuzus ha rei a rae hep sellout.

E-pad eur gernez vras kouezet war ar vro hag he doe padet hir amzer, e vage bemdeiz ouspenn 900 paour. Eun dervez ma voe bet skarz et an ti, ha ma na chome mui ganti eur gwenneg nag eun tamm bara, e werzas santez Elizabet he bizou aour hag an holl draou a briz eus he zi, gwerza a reas betek he c'havell graet gant arc'hant.

Mont a ra hec'h-unan da welout an dud klanv evit ober war o zro hep sellout ouz o stad truek, ha pleal gant o ezommou.

C'hoarezed an Drede-Urz, kemerit skouer war santez Elizabet, bezit evelti eur galon karantezus e-kenver ar

beorien. Koulskoude en eur ober an aluzen, e c'houlenn an Aotrou Doue ma vez graet :

1°) Da genta, gant eur galon izel, rak n'eo ket brao ober vad evit beza enoret gant an dud ; grit vad en dro d'eoc'h evit beza enoret gant ho Tad eus an Nenv ha gounit da Zoue kalon an holl.

2°) D'an eil gant eur galon garantezus. Lavarout a rae d'e vab an den santel Tobias : « Mar hoc'h eus kalz a vadou, roit hep sellout re dost ; mar hoc'h eus nebeut, hep rei kalz a dra, hoc'h aluzen a blijjo da Zoue. »

3°) D'an trivet, gant ar galon prim ha laouen. Perak gortoz warc'hoaz evit ober ar pez a c'hellit ober hirio ? Rei buan ha founnus, a lavare hon tud koz, a zo rei diou wech.

4°) D'ar bevarvet, en eur rei an aluzen, ra vezo gwelet al levez war ho tremm (visage) ; roit a galon vat gant komzou flour ha karantezus. An aluzen roet en desped d'eomp a zo eun aluzen didalvez.

5°) D'ar pempet, grit aluzen hep skuiza. Keit ha ma vezo gwelet dienez e-touez an dud, ra vezo kavet ivez kalonou truezus ha madeleuzus.



LOURD, katekiz beo !

TIGENTVET DEVEZ

Lourd hag ar garantez e-kenver an nesa.

« Ar gourc'hemenn a c'houlenn diganeomp karout hon nesa, a lavar d'eomp Hor Salver, a zo henvel ouz an hini a c'houlenn diganeomp karout Doue. Kement-se a ra d'eomp lavaret en hon akt a garantez : « **Va Doue... me a gar va nesa evel doun va-unan dre garantez evidoc'h.** »

N'eo ket a-walc'h eta, evit dont a-benn eus dever ar garantez, sikour an nesa en e ezommou, dre ma 'z eo teneraet hor c'halon gant e zienez : an dra-se a zo mat, met an pezh a zo kristen, an pezh a daly evit ar baradoz, eo karout ha sikour an nesa dre ma kar Doue anezan, dre ma fell da Zoue e karfemp anezan, dre ma 'z eo maro Jezuz-Krist evitan evel evidomp, dre ma 'z omp eta e vreudeur ha galvet, evel breudeur, da veva an eil e-kichen egile er baradoz.

E gwirionez, hor c'harantez evit Doue eo en em ziskouez en hor c'harantez evit hon nesa. An neb a gred d'ezan karout Doue ha na gar ket e nesa, hennaez a fazi : hennaez ne gar ket Doue, rak « *an eil gourc'hemenn a zo par d'an hini kenta* ». An neb a gar Doue e gwirionez eo an hini a deujo, goude beza lavaret da Zoue e kar anezan, d'hen diskouez o karout e nesa.

C'hoant hoc'h eus da welout penaos en em gemmesk ha penaos en em ziskouez an eil dre eben an diou garantez-se ? . . . Pegwir emomp e Lourd da vihana dre sonj ha dre c'hoant, pignomp betek pempet taolenn hent ar groaz. Setu aman eur Yuzeo, Simon a Siren, o tont da sikour eur c'hondaonet d'ar maro da zougen e groaz ; a dra sur, pedet eo bet d'hen ober gant ar soudarded, met hen ober a ra a galon vat, rak an drez a bar war a zremm. Hogen, petra c'hoarvez ? Ar pezh a gav d'ezan na ra nemet evit eun den, hen ober a ra e gwirionez er memes amzer evit Mab Doue.

Savomp uheloc'h c'hoaz war an Espelug betek ar c'houec'hvet stasion : Veronig, eur vaouez devot, leun a drez ouz paoniou Jezuz, a deu, a-touez an dud betek ar c'hondaonet hag a ro d'ezan eun tamm lienn da zec'ha e vizaj. Piou e serviche evel-se, an den pe Zoue ? An eil hag egile : **Karout a rae Doue e Jezuz.**

Bez' ez eus e Lourd meur a Simon a Siren ha meur a Veronig, ha n'eo ket e skeudennou hepken met e kig hag eskern : beo int

ha labourat a reont. . . . Piou int ? An dud, gwazed ha merc'hed, a entent ouz ar glanvourien. O leoriou a zo leun a gentelioù karantezus.

Lenn a reomp enno ar gentel-man : « An neb a fell d'ezan entent ouz ar glanvourien a dle gouzant, hep en em glemm, ar yenienn hag an dommder, an heol hag ar glo, an naon hag ar sec'hed. . . . Gouzout a dle tremen dre ruiou kêr gant e garri-gell hep ober poan d'e glanvourien. . . . Selaou a dle gant pasianted o goulennoù hag o c'hlemmoù. . . . O dougen a dle, pa vez ret, gant ar vrasa dousder etre e ziwrec'h, gant aon d'o bounta ha d'o steki ouz eun dra bennak. . . . Ret eo d'ezan, pa vez kaset an dud vac'hagnet d'ar pisinou, beza gouest, hep koll e benn, da glevout o hirvoudou, da welout o gouliou heugus, da santout o flêr, da ziwiska o dilhad ha da ziskenn o c'horfou paour en dour burzudus en eur bedi. »

Sonjit e vez goulennet an oberou karantezus-se digant gwazed boazet peurvuia ouz aezamanchou ar vuhez, digant tud pinvidik hag a c'hellfe beza d'ar mare-se, o kemerout a flijadur war ribl ar mor, digant merc'hed hag a zo alies itronezed vras ebarz ar bed.

Ar glanvourien a wel ar garantez-se hag a gav enni o c'henta frealzidigez. Eun devez, eur vaouez koz a nao vloaz ha tri-ugent hag a oa seizet, a gavas ar pare. Ar medecin Boisari a c'houlenn diganti hag eürus eo : — « Oh ! ya, emezi, eürus oun da veza pare, gwir eo, met eürusoc'h oun c'hoaz da veza deuet da Lourd : aman an traou a zo ken kaer ! . . . *Aman an dud a zo ken mat ! . . .* »

Eus o c'hostez, an dud a entent ouz ar glanvourien, a wel er re-man burzudou a garantez. Eul leanez seizet, a-raok diskenn er pisin, a lavare d'ar merc'hed a oa en-dro d'ezhi :

— « Pedit mat evidoun, n'eo ket evit ma vezin pare, met evit ma roin nebeutoc'h a boan d'al leanezed all. »

Eur bugel ivez a-raok beza diskennet en dour a bede evel-hen : — « Va Doue, va lezit evel m'emoun, met grit eur c'hristen eus va zad ! »

Eur c'hlanvour yaouank, o velout en e-gichen eur glanvourez hag a gave falloc'h egetan, a lavare : — « Aotrou, va fareit. . . N'eo ket me, met houman ! »

Eur medecin katolik, klany e-unan, o veza kaset eur glanvourez da Lourd, e bede evel-hen : « — Va Doue, ma hoc'h eus unan ac'hanomp da barea, pareit ar vamm a familh. . . » Eun nebeut deveziou goude, d'ar memes eur, ar medecin a varve hag ar glanvourez, e Lourd, a baree en eun taol. — Ar gomz-man lavaret gant eun test a gement a vuzudou a zo gwir : « *Lourd eo ar brasa skol a garantez a zo bet gwelet biskoaz war an douar !* »

Penaos ne vefe ket, pa vez graet eno pep tra dindan skoazell an Itron-Varia.

SKOUER

Karantez ha pareans Janed Molin, eus Dijon.

War-lerc'h eun derzienn bet e penn ar bloavezh 1916, Janed

Molin a oa diaes d'ezi bale. Bet he doa e-pad an derzienn-se kalz a c'horiou en hec'h izili. He c'hlenved a chanchas doare e-pad an amzer a dremenas e menezioù Moirmont, er Suiz, hag en eun ospital, e Lozann.

Distrôet d'he familh, e Dijon, da viz Here 1917, ar plac'h yaouank a seblante beza yac'h a-walc'h : koulskoude ar boan-gein a groge enni eur wech an amzer.

Pemp bloaz goude, ar c'hlenved a greske betek dinerza he divisker. Pa valec e sante poan en he livenn-gein, en he c'hroazlez hag en he diouc'har. Hep dale ne c'hellas mui chom en he sav. Ret e voe d'ezi chom en he gwele gant ar c'hlenved anvet e galleg « mal de Pott » eur c'hlenved hag a laka an den da veza tort.

Daou vedisin galvet war he zro, unan anezo an aotrou Tasin, medisin e « Beaune » he lakeas en eur c'houriz-plastr. Evel-se eo e tigouezas e Lourd d'ar c'henta a viz Eost 1922.

Kondaonet evel-se da chom gourvezet en he c'houriz kalet, prizonet en eur c'hached-kravaz graet eviti, Janed Molin a c'houzanvas poaniou kriz e-pad he beaj hag e-pad ar pemp devez kenta a dremenas e Lourd.

He gwele a oa e « sal » Janed a Ark, en ospital Itron Varia Lourd. E-kreiz ar feiz vero hag ar garantez kristen a liamm an holl glanvourien e Lourd, Janed, en desped d'he foaniou, a gave brao he flanedenn e-skoaz hini ar glanvourien all a oa en-dro d'ezi, hag a bede kalonek evito.

En he c'hichen e oa eur wreg yaouank nevez-dimezet prest da vervel ha nouennet d'ar sul vintin, c'houec'h a viz Eost. Leun a druez outi hag ouz he fried ankeniet, Janed a ginnigas da Zoue ar sakrifis eus he fareans hec'h-unan, hag a c'houlennas start digant Itron Varia-Lourd pareans ar wreg yaouank, ha pa vije ret d'ezi hec'h-unan, e-pad miziou ha bloaveziou hir, chom hep finval en he c'hached a boan.

Ar sakrifis-se graet a volentez vat, evel ma ra kalz a glanvourien e Lourd evit ar re a zo gwasoc'h doaniet, ar sakrifis-se a dlie dougen frouez; Itron-Varia-Lourd a zo falvezet ganti rei eun digoll eus eun hevelep akt a garantez : ar wreg yaouank a wellas betek beza krenv a-walc'h da zistrei d'ar ger.

Ar memes devez, war blasenn ar Rozera, pa deuas ar Sakramant betek enni. Janed Molin a santas eun dra bennak o tridal en he divesker hag he foan o koueza. Ne gredas ket koulskoude, gant aon da fazia hec'h-unan ha da drompla ar re all lavarout ger ebet en deiz-se diwar-benn he fareans. Goulenn a reas antronoz, d'al lun 7 a viz Eost, beza kaset da vureo ar vedisined ha beza tennet diouz he c'horzenn.

Setu aman ar pezh o deus skrivet ar vedisined goude o enklask : « N'eus takad kizidik ebet el livenn-gein nag er c'hostennou.

Eur gleizenn, test eus ar gouliou, a chom er groazlez. Ar glanvourez a c'hell trei ha distrei, sevel ha chom en he sav e-giz ma kar. He bale a zo henvel ouz hini eun den chomet pell amzer gourvezet. E gwirionez, n'eus mui merk eus klenved ebet enni. Yac'h eo penn-kil-ha-troad. Ar baredigez-se o veza detuet en eun taol ne c'hell ket beza laketa war gont an natur ! »



Bleunioù Sant Fransez

XVIIth PENNAD

*Aman e welimp disklêriet
Penaos eur manac'h bihan,
A welas, hag hen sebezet,
Aele ha sent a-unan*

*Gant Jezus, e vamm ar Werc'hez,
O tivizout gant Breur Fransez,
E benn a sant o skedi,
Epad ma oa o pedi.*

Eur bugelig bihan, dinamm e peb doare,
'Vel eur vleunenn lili, gwenn, gwenn-kann e ine,
A yeas da vanac'h, en amzer Sant Fransez,
En eur manatiig kel leun a zienez,
Ma n'o doa ken ennan ar venac'h da c'hourve
'Met daou pe dri blankenn; sede evit gwelê.

Er manati-se, sant Fransez
'Oa en em gavet, eun devez;
Hag e yeas war e wele,
Evel ma oa boazet bemde,
Eur wech kanet ar « C'hamplidou »
Ma 'n em roje d'e bedennou,
An noz, he mantell astennet,
Hag e vreudeur pell 'zo kousket.
Evit tomman e santelez
Ouz gred santelez Sant Fransez,
Gwelout penaos e tremene
E amzer, en noz, pa save,

Ar manac'h yaouank, dilu mat,
 'Vennas spian neuziou e dad.
 Evit gallout dihun e-kouls,
 Evit gouzout a-grenn pegouls
 Eus e wele,
 Ar Sant 'saoje,

E yeas, goustadik, da gouskat 'n e gichen,
 Ha braoik e gordenn 'stagas ouz e gordenn;
 Ha graet e daol ganfard gantan,
 Den na welas ster anezan.

Kousket e holl vreudeur, ha krok da ziroc'hal
 Sant Fransez a savas, kuit da chom da c'hedal.
 E gordenn 'oa skoulmet, buan he diskoulmas.
 Ar manac'hig bihan hep dihun a chomas,
 Ar sant a ya d'ar c'hoad, da larout e bedenn,
 En eun tamm logellig toet gant mil brochenn.

Eur pennadig amzer goude,
 Ar paotr dihunet a save,
 E gordenn a oa distaget
 Hag ar Sant kuit a oa tec'het.
 Ker buan ha lavarout : « Ya ! »
 Da glask e dad, kentiz ec'h a.
 Dor vihan ar c'hoad
 A oa digor mat.

Na mar, na marteze, er c'hoad 'oa 'n em dennet
 Sant Fransez da bedi, evit bezan aezet.
 Hag ar manac'h bihan, da c'hounit a veg-troad.
 E-kreiz ar c'hoad, bremaik, e kavo sur e dad.

P'en em gavas en e gichen,
 Ez oa ar Sant gand e bedenn.
 N'ez oa ket e-unan;
 Na kaerat a veulgan !
 Ha moueziou ! ha moueziou !
 Ganto eur bern kaoziou
 E-dro d'e ziouskouarn,
 E laka e zaouarn.
 Ha furch-difurch a sell,
 Gand aked ha gant poell.
 Sede eur sklêrijenn
 Evel eur gurunenn,

O skedi, lintrus kaer, e-dro da Sant Fransez,
 En he c'hreiz, Mab Doue ha Mari ar Werc'hez
 Ganto Yann-Badezour, Yann an Avielour,
 Ouz o ambroug ive, ha kever-ouz-kever,
 Ne oar den, nann, ped ael, kaer pe gaeroc'h gwisket
 Da gomz gant Sant Fransez, eus an Nenv diskennet.
 Ouz o gwelout, ar manac'h, da semplan a zeuas.
 Eur fallaenn... hag e gorf d'an douar a gouezas.

Echu 'oa d'ar Weledigez...
 D'ar gêr e tistroe Fransez,


Pa roas eun taol-beg, ha pa stokas e droad,
 Ouz korf ar manac'hig astennet difinv mat.
 Sede kalon Sant Fransez
 O frailhan gand an druez.

Hag hen da sevel e vabig, ha d'hen dougen war e vrec'h.
 'Vit samman eun oan dianket, gwir bastor na sant ket bec'h.
 « Hag ec'h eus, me Fransez, gwelet
 « E-dro d'in 'ta, ma mignonned !
 « Ac'hanta, ma mabig kaez,
 « War se sioulik, sioulik bez,
 « Keit ma blijjo gant Doue,
 « Ma lezel c'hoaz e buhe. »

Adalek an deiz-se, mab bihan Sant Fransez
 C'hae war greski bemdez, bemdez, e santelez.
 Hag e garantez 'vid e dau,
 War-eun-dro ganti war wellaat.
 Gwelout 'reor diwezatoe'h,
 Ne vo ket manac'h santeloc'h.

Ha maro sant Fransez, hag e gorf douaret,
 'Lavaras ar paotrig, dinec'h d'e geneiled,
 Gweledigez ker kaer ar c'hoad...
 Ya ! Ya ! eur sant ez oa o zad.

PAOTR JULUEN.



Du-man ha du-hont

Eskibien nevez Kapusin. — An Tad santel ar Pab Pi XI a zo
 o paouez sevel da garg a eskob :
 An Tad Ektor, eus ar Veljig, eskob Lahor (Indez).
 An Tad Gui-Benead, eus ar Vavier, eskob an Arokania (Amerig-
 Izela).
 An Tad Bernardin, eus ar Sisil, eskob Lipari.

**

Beleien nevez. — E-touez an Tadou Kapusin nevez beleget en
 Iliz-Veur Naoned gant an Aotrou Le Fer de la Motte ez eus daou
 eus hor c'henvroiz : an Tad Herry a Gemperle hag an Tad Ignas
 a Bont-n-Abbad. Hor gwella gourc'hemennou d'an eil ha d'egile.

**

Oferenn genta. — An Tad Ignas en deus kanet e oferenn genta e
 Pont-n-Abbad d'ar sul 12 Eost.

E genvroiz o deus bet an eurvat da welout ar pezh na vez gwelet
 kouls lavarout biskoaz, zoken er gwella parrezioù : Ar beleg
 nevez a oa en-dro d'ezan, oc'h ober avielér hag abostoler daou

vreur d'ezan, unan eus Urz ar Fransezidi (Franciscains), unan all eus Breuriez ar Spered Santel, o servicha d'ezan an oferenn tri breur d'ezan, a zo oc'h ober o studi e Kloerdi-Bihan Angers. Eur breur all en deus c'hoaz en Urz ar Jezuited, met n'en deus ket gellet dont da gemerout perz er gouel kaer-man. Ma en dije gellet dont, e vije bet 7 breur asambles ouz an aoter pe endro d'ezan !

Ar familh Février he deus rôet c'hoaz d'an Aotrou Doue diou leanez, unan en urz an Aogustined, eben e Breuriez ar Retred.

Goude an Aviel en deus an Tad Yvon, Gward Kapsined an Oriant, graet eur brezegenn gaer meurbet. Diskouezet en deus d'ar bobl pegen uhel eo karg ar beleg... brasoc'h eo ar beleg eget an ael, evel ma lavare sant Fransez, rak ober a ra ar pez na ra ket an ael, konsakri horf ha gwad Hor Salver... Hen eo a sav war-du an Ao. Doue an osti eman dindani Jezuz e-unan, Hen eo a ra d'an eneoù pigna war-du an Nenv dre ar Sakramanchou, e skoueriou hag e gomzou.

An Tad en deus klozet e brezegenn gant eun nebeut aliou rôet d'ar beleg yaouank diwar-benn an nerz-kalon a vo ret d'ezan evit sklerijenna ha savetei an eneoù, rak ne vez gounezet eneoù da Zoue nemet o c'houzanv... evel H.S. Jezuz-Krist e-unan. Evit beza kalonek e servich an Ao-Doue, an Tad Ignas n'en deus nemet kemerout skouer war e dad hag e vreudeur, a zo chomet du-se war dachenn ar brezel evit savetei o bro, ha war e vamm, he deus savet ker mat eun tiegez a 14 krouadur.

Goude beza tremenet eun nebeut mizou en Irland evit deski ar Saozneg (anglais), an Tad Ignas a yelo d'ar misionou er Radjpoutana (Indez). Eno eo galvet da ziframma an eneoù diouz krabanou an diaoul evit o rei da Zoue.

Hor gwell gourc'hemennou d'ezan ha d'e familh.


*
—————

LABOUR HOR MISIONERIEN

—————

Ploneour-Menez. — Mision eus ar 20 a viz Gwengolo d'ar 7 a viz Here, gant an Tadou Barnabe, Fulgans, Eujen.

Ploudalmezo. — Retred ar baotred yaouank ha kendalc'h (congrès) an Unvaniez Katolik (27-30 Gwengolo), gant an Tad Ivon.



Pirc'hirinaj an Drede-Urz e Santez-Anna-Wened

Gwechall-goz e veze lavaret e tremene ar Vretoned e kement lec'h a dremene an heol. An heol e-unan ne vir ket outo da vont en hent, pa vez ar mare da ziskouez o c'harantez da Zoue pe da unan eus e sent. Gwelet hon eus kement-se e pirc'hirinaj an Drede-Urz e Santez-Anna, d'an 21 hag an 22 a viz gouere diweza.

Daoust d'an amzer domm ha d'an dispignou bras, n'eo ket unan, met diou, pemp, dek hag ouspenn a oa deut eus al lodenn vrasa eus ar Breuriezou. Bez 'ez eus eur Vreuriez a oa anezi diou war-nugent e Santez-Anna. Hervez eur beleg a voe breman 'zo pevar bloaz e pirc'hirinaj an Drede-Urz, niverusoc'h e oa ar Vreudeur hag ar C'hoarezed er bloaz-man.

A dra-sur, meur a hini o dije gellet dont hag a zo chomet er gêr. Renerien ha renerezed ar Breuriezou a dlefe en em glevout evit kas da vihana diou pe deir C'hoar da gemer perz er vodadenn-se ker brao da welout.

Meuleudi d'ar C'hoarezed deut a-bell evel ar re Wipavaz, Montroulez, Enez Sun, Pont-Kroaz ha Goudilin.

Mil trugarez ivez da Aotrou Rener, Breuriez Kemper. Digaset en deus ar bloaz-man da Santez-Anna eun tregont bennak a grennbaothr hag a grennblac'h a zoug kordennig sant Fransez; n'emaint ket c'hoaz en Drede-Urz, emaint hepken war an hent, rak adalek vremen int kenteliet war ar vertuziou a ray anezo gwir vugale da sant Fransez.

Eul lodenn vrasa eus ar prezegennou a zo bet graet e galleg hag e brezoneg Gwened. Met evit ar bloaz a zeu, ez eo hor menoz rei da C'hoarezed Kemper ha Treger kement a brezegennou evel d'ar re-all.

Goulnnet eo bet digant an holl bire'hirened ha pirc'hirinezed beza aketus da heulia o reolenn, rei skoazell d'o beleien ha labourat evel hon Tad sant Fransez da c'hounit eneoù da Zoue. Kredi a reomp o deus kuitaet iliz-veur Santez-Anna gant grasou nevez, o c'halonou entanet a garantez ha leun a anaoudegez vat e-kenver Hor Salver benniget hag e servicher sant Fransez.

Tad F.

*
—————


Goulnnet digant an Tad Theodor ROUSSEL, 28, Avenue de la Marne, Lorient.

C/c 46.28. Nantes.

Buhez burzudus eun douger-sammou MAZE TALBOT :
0 fr. 50 — 0 fr. 65 dre ar post.

An Eured Kristen (Kantig) : 22 real ar c'hant, dre ar post.

Kantigou nevez : SAKRAMANT AN AOTER. — JEZUZ-KRIST ROUE.
— An « DE PROFUNDIS », pedenn an Anaon. — Priz an tri asambles : 15 lur ar c'hant, dre ar post.



Cum permissu Superiorum.

Le Gérant : G. LE BAYON.

Moulez AR BAYON-ROGER, 13, Tachenn Alsace-Lorraine, en Oriant.



Ra vezo meulet Jezuz-Krist !

Bepred.



Kenteliou Sant Fransez

Kelaouenn vizek gant Skeudennou



TAOLENN AR MIZ

Goueliou ar miz.....	157
Sonjit ervat.....	158
Gouel ar C'hurunennou	159
Kelennadur diwar-benn an Drede-Urz. — Ar vreuriez	161
Lourd hag ar respet da Zoue.....	164
Sitrouilhez an Den-Eürus Diego.....	165
An holl gristenien a dle sikour sevet beleien.....	167
Bleuniou Sant Fransez (XVIII ^{et} Pennad).....	169
Santez Elizabeth a Hongri.....	170
An Tadou Kapusined.....	171
Kelou eus ar Breuriezou.....	172
Labour hor Misionerien.....	172
Pedomp evit hon Anaon	172



Rédaction et Administration

P. Théodore ROUSSEL

F.M. Caspucin

28, Avenue de la Marne, LORIENT

C/c. : 46.28 NANTES

Priz : daou skoued

MIZ HERE

- 1 Lun S. YANN A ZUKLA, kovez eus ar genta Urz.
 2 Meurz Gouel an Aelez mat.
 3 Merc'her .. *Vijil hon Tad S. Fransez.* — (Yun ha vijil evit ar Vreudeur hag ar C'hoarezed eus an Drede-Urz).
 PLAC'H EÜRUS FELISIA MEDA, eus an eil Urz.
 DEN EÜRUS CHARLEZ BLEIZ, duk Breiz, eus an Drede-Urz.
 4 Yaou HON TAD SANT FRANSEZ. — A.J. — I.P.
 5 Gwener ... GOÜEL ANAON TEIR URZ SANT FRANSEZ. — I.P.
 6 Sadorn ... SANTEZ MARI-FRANSEZ PEMP GOULI HOR SALVER, gwerc'hez eus an Drede-Urz. — I.P.

- 7 Sul *Naoñteket sul goude ar Pantekost.*
 GOUEL BRAS AR ROZERA.
 8 Lun SANTEZ BERCH'ED, intañvez eus an Drede-Urz.
 9 Meurz S. Denis hag e Genseurted, merzerien.
 10 Merc'her .. S. DANIEL hag e GENSEURTED, merzerien eus ar Genta Urz.—I.P.
 11 Yaou Eizved hon Tad S. Fransez. — I.P.
 12 Gwener .. S. SERAFIN A VONTEGRANARO, kapusin. — I.P.
 13 Sadorn ... S. Edouard, roue.

- 14 Sul *Ugentvet sul goude ar Pantekost.*
 15 Lun Santez Teresa, gwerc'hez.
 16 Meurz Ofis eus an deiz.
 17 Merc'her .. Santez Hedwij, intañvez.
 18 Yaou S. Lukas, Avielar.
 19 Gwener ... S. PER ALKANTARA, kovez. eus ar genta Urz. — I.P.
 20 Sadorn .. S. Yann a Genti, kovez.

- 21 Sul *Unanvet war-nugent sul goude ar Pantekost.*
 DEN EÜRUS JAK A STREPA, eskob eus ar genta Urz.
 22 Lun S. Rafael, Arc'hael.
 23 Meurz Ofis eus an deiz.
 24 Merc'her.. Ofis eus an deiz.
 25 Yaou S.S. Krisant ha Dari, merzerien.
 26 Gwener .. DEN EÜRUS BONAVANTURA POTENZA, eus ar genta Urz. — I.P.
 27 Sadorn ... Vijil S.S. Simon ha Jud.

- 28 Sul *Eilvet sul war-nugent goude ar Pantekost.*
 GOUEL JEZUZ-KRIST-ROUE.
 29 Lun S.S. Simon ha Jud, ebestel.
 30 Meurz DEN-EÜRUS ANJ AKRI, Kapusin. — I.P.
 31 Merc'her.. TUD-EÜRUS KRISTOF A GAHORS ha THOMAS A FLORANS, eus ar genta Urz. — I.P.



HERE 1928

Sonjit ervat

Diwar-benn trede goulenn ar Batez.
 Ho polontez bezet graet war an douar evel en Nenv

I.— Sonjit ervat : Doue eo ar wir furnez; kement a c'hoanta a zo atao mat, ha kement a zo enep e volontez, a zo atao fall. Goulennit eta ma vezo atao graet bolontez an Aotrou Doue.

Petra eo ho polontez-c'houi e-kenver hini an Aotrou Doue ? Petra eo ho skiant d'eoc'h-c'houi e-kenver hini

an Aotrou Doue ? Doue eo an Hini na c'hell ket en em faziã. Mar doc'h fur, c'houi a c'houlenno atao ma vezo graet bolontez Doue.

II. — Sonjit ervat : bolontez Doue en em astenn war gement a zo. Kement a zo, Doue eo en deus o c'hrouet, hag evit pep-hini anezo e c'hoanta ar pez a zo ar gwella evito. Goulenn eta ma teuy bolontez Doue, a zo goulenn evit pep-hini ac'hanomp ar pez a zo ar gwella evitomp.

En em lakit holl eta etre daouarn an Aotrou Doue, rak kement a zigouez ganeoc'h, dre volontez Doue eo e tigouez, hag evit ho prasa mad eo.

II. — Sonjit ervat : dre ar c'homzou-se : « War an douar evel en Nenv » e c'houlennit senti ouz Doue war an douar, evel ma sent outan an aelez er baradoz. An aelez, dre garantez evit Doue, a deu da chom, unan e-kichen pep-hini ac'hanomp, evit hon diwall diouz an droug.

Ober bolontez Doue dre gomzou ha dre oberou, gouzanv a galon vat kement a zigouez ganeomp, abalamour m'eo e volontez, setu eno ar c'hras a dleomp da c'houlenn digantan.

GOUEL AR C'HURUNENNOU

d'an dervez diweza eus mision ar vugale.

4

Sabad, Gwerc'hez, Mamm hag Itron !
 Me a ro d'eoc'h va c'hurunenn;
 Me 'ro ganti d'eoc'h va c'halon,
 'Vit ho karout da virviken,
 Ave, Mamm ar wella !
 Ave, o Maria !

Techou diroll kounnaret
 A verv, siouaz ! ennomp,
 Ha na glaskont, Mamm garet,
 Nemet koll ac'hanomp.
 Hor sikourit d'o zrec'hi,
 D'o chadenna nerzus,
 Ha ni 'gerzo hep pec'hi
 Dindan sellou Jezuz.

1

N'omp ken nemet bugale
 Dinerz e-kreiz ar bed;
 Ni vo kollet hep-dale,
 Ma n'hon diwallit ket;
 Enebourien niverus
 A stourm bemdez ouzomp;
 Difennourez galloudus,
 Skoazellit ac'hanomp.

Evel ho Mabig-Jezuz
 E fell d'eomp chom atô
 Dinamm, leal ha sentus
 Betek eur ar maro....
 Tadig, mammig ken tener,
 Sec'hit ho taoulagad :
 Ni 'vo bepred 'n ho kenver
 Bugale dous ha mat.

5

2

Evel eur bleiz divouedet,
 Satan a zeu, a ya,
 E c'henou kriz astennet,
 Atô prest d'hon taga.
 Biken ne c'hellimp trec'hi
 Eun enebour ken têt,
 Ma ne harpit, o Mari !
 Ho pugale dister.

D'hon tadou ha d'hor mammou,
 Da holl dud ar barrez,
 Roit eleiz a c'hrasou,
 O Mamm ar Vadelez !
 Grit ma teuo pep pec'her
 D'ober e vision,
 Da gaout Jezuz, e Salver,
 Evit goulenn pardon.

6


3

Ar bed 'zo 'giz eul lagenn
 Leun a fallagriez;
 'N em virout diouz e vouilhenn
 A zo meurbet diês.
 Difennit ho pugale
 Enep e skoueriou fall,
 Ma c'hellimp, korf hag ene,
 Chom glan ha didamall.

Selaouit piz, Mamm santel,
 Hor pedenn druezus :
 Kuzit dindan ho mantell
 Ho pugale doujus;
 Renit hon holl gammejou
 Hed-ha-hed hor buhez,
 Betek dor aour an Nenvou,
 Dor ar wir levenez.

7

BASTIEN.



Kelennadur diwar-benn an Drede-Urz

AR VREURIEZ



Gwelet hon eus, Breudeur ha C'hoarezed ker, ar pezh a zo da ober a-raok gwiska skapular sant Fransez ha penaos e tleer tremen ar bloaz kenta en Drede-Urz.

Er miziou a zeu, e tisplegimp, pennad ha pennad, an deveriou merket er Reolenn. Evit hirio, greomp eur sell war ar Vreuriezh hec'hanan ha war ar c'hustumou a vez miret enni.

Eur vreuriezh eus an Drede-Urz a zo eur strollad tud eus eun hevelep parrez, bodet evit heulia etrezo ar Reolenn savet gant sant Fransez, evit senti ouz an hevelep renerien hag en em gavout en hevelep bodadegoù.

Ar Vreuriezh a rank beza savet hervez reolennou an Iliz, gant asant an Aotrou 'n Eskob ha hini rener en Urz kenta.

Adalek m'eo bet savet ar Vreuriezh, e chom dindan renadur Tadou an Urz kenta, da lavaret eo, ar re-man ha re-man hepken o deus gwir da zont d'he gwelout.

Bodadeg ar miz. — Bep miz e tle ar re a zo er Vreuriezh, en eun voda, d'an deiz merket gant ar rener, peurvua d'ar sul.

E lec'h ma c'heller hen ober, e vez lavaret eul lodenn eus an ofis; da-c'houde, ar pedennou evit digeri ar vodadeg hag eur ganaouenn bennak en enor da sant Fransez, pe da santez Elizabet, pe zoken d'ar Werc'hez.

Ar beleg a ra neuze e brezegenn; rei a ra e aliou, an Absolveñn jeneral, m' eman an amzer, lavarout a ra ar pedennou diweza hag an denzoriadez (trésorière) a zastum ar skodennoù (cotisations), mar dint da veza rôet.

An dever da zont d'ar vodadeg. — Pa ne vez ket gwir abeg, e tle an holl dont da vodadeg ar miz. Mat eo da unan eus ar re a zo e karg, merka bep gwech anioù ar re a zo eno hag anioù ar re n'emaint ket. Mankout eur wech n'eo ket eun dra c'hrevus, met eun dever eo da skandalat ar re a zo re lezirek, ha ma ne reont van ebet ouz ar rebechoù, eo dao o c'has kuit eus ar Vreuriezh.

Pedi a-reer ar Breudeur hag ar C'hoarezed da devel (se taire) war an aliou rôet d'ezo ha war ar pezh a vezer kustum da ober e-kerz ar vodadegoù. An dud hep spered mat, a lavar an Abostol

sant Paol, n'int ket evit meiza (comprendre) an traou santel. Perak rei tu d'an dud fall d'ober goap ouzoc'h ? Ha c'hoant hoc'h eus da rei da anaout an Drede-Urz ? Grit kement-se dreist-holl dre ho vertuziou ha dre ho puhez fur.

Doare da saludi. — Pa zeuit d'an iliz, e'houi a lavaro ar c'homzou desket d'imp gant hon Tad sant Fransez : « Ni hoc'h ador, o Aotrou meurbet santel Jezuz-Krist, aman hag en holl ilizou eus an douar, ha ni ho trugareka da veza savetaet ar bed dre ho kroaz santel. »

Etrezoc'h e tleit en em saludi en doare-man : « Ra vo meulet Hor Salver Jezuz-Krist ! » Ar respont eo : « Bepred ».

Ar gwiskamant. — E meur a lec'h, er c'hêriou dreist-holl, e toug ar Vreudeur hag ar C'hoarezed, e-pad ar vodadeg, ar gwiskamant bras; ar Vreudeur : ar sae hag ar gordenn; ar C'hoarezed : ar sae, ar gordenn; ar gouel hag ar groaz. A-dra-sur, kement-se n'eo ket gourc'hemennet. Mat eo koulskoude, d'ar merc'hed, pa vez ar vodadeg, dougen ar groaz a-ziavaez, war ar bruched.

Patrom ar miz — Bep miz e ro Rener ar Vreuriezh da bep-hini eun daolenn vihan eus ar sant pe eus ar santez a dleont pedi bemdez. Aliet e vezer da gominunia da zeiz gouel ar Patrom, evit ar Vreuriezh.

Skodenn (cotisation). — Eur wech er bloaz pe bep miz, evel ma vez c'hoant, e ro ar Vreudeur hag ar C'hoarezed o skodenn, evit dispignou ar Vreuriezh : aluzennou, profou, oferennoù evit an anaon, kelaouennou ha leoriou, hag all.

Confiteor. — Rei a reer ali da lakaat er Gonfiteor, goude ar gerioù : d'an Ebestel sant Per ha sant Paol, ar c'homzou-man : ha d'hon Tad sant Fransez.

Evit an anaon. — Pa varv unan bennak eus ar Vreuriezh, e vez kinniget eun ofereñ evit e ene. Goulenn a reer ivez lavarout eur chapeled ha kominunia eur wech evitan. Alia a reer c'hoaz ar Vreudeur hag ar C'hoarezed da ober evitan hent ar groaz, staget outan kement a induljansou.


Patroned an Drede-Urz. — Ar Werc'hez konsevet dinamm, 8 a viz Kerzu; sant Fransez, 4 a viz Here; santez Klara, 12 a viz Eost; sant Loeiz, roue Frans, 25 a viz Eost; santez Elizabet, 19 a viz Du.

Oberou mat ar Vreuriezh. — Pedi start a reer ar Vreudeur hag ar C'hoarezed da rei eus o gwella skoazell da oberou mat o farrez : kempenn an iliz, ar chapelioù; ober katekiz d'ar vugale; gwelout ar glanvoudien; labourat evit ar visionerien.

Menez. Sellit piz ha heuliet mat hoc'h eus betek-vreman ho reolenn ha kustumou santel ho Preuriezh. Goulennet pardon evit ar mankou hoc'h eus bet.

Sonjit ervat. — « En em lakeomp breman da ober ar vad, rak betek-aman n'hon eus ket graet kalz a dra. »

(S. Fransez).



LOURD, katekiz beo !

Lourd hag ar respet da Zoue.

Evel m'hor boa gwelet dec'h, ar gwella doare d'ober hon deverioù e-kenver hon nesa eo ober da genta hon deverioù e-kenver Doue. Hen diskouezet hon eus evit ar pezh a sell ouz ar garantez. Met bez' hon eus e-kenver hon nesa, n'eo ket hepken deverioù ar garantez, met ivez deverioù a lealded. E sikour en e zienez a zo beza karan-tezus, met paea d'ezan ar pezh a dleomp, respeti e vrud-vat, e zavvez, e vertuz, e wir da glevout ar wirionez, an dra-se a zo beza leal.

Hogen, evel ma teskomp karout hon nesa o karout Doue, evel-se ober e-kenver Doue hon deverioù a lealded a zesk d'eomp beza leal e-kenver an dud.

Rak-se, pegwir ne c'hellomp ket a-raok fin ar miz ober eur sell war an holl deverioù a lealded hon eus e-kenver Doue : ma ouezomp dont a-benn ouz ar re-man, ar re-se a deui da heul, evel ar ster diouz an eienenn.

*
**

Ni a dle, n'eo ket hepken kredi ha kaout fizians e Doue, n'eo ket hepken e garet, met ret eo d'eomp rei d'ezan eun enor anvet adorasion.

Petra eo an adorasion?... Gouzout a reomp petra eo ar respet; gouzout a reomp e tleomp seul-vuioc'h a respet d'eun den ha ma 'z eo santeloc'h ha pinvidikoc'h a vertuzioù. Hogen, adori Doue eo e respeti... Met e respeti evel ma tle beza respetet, da lavaret eo, kalz muioc'h eget an holl grouadurien; respeti Doue eo rei d'ezan al lec'h kenta en hor spered hag en hor c'halou... en eur sonjal ez eus etre al lec'h kenta hag an eil (an hini a roimp d'ar Werc'hez glorius Vari) eun islonk divent.

*
**

An dra-se c'hoaz n'eo ket a-walc'h. E penn e c'hourc'hemennou, Doue en deus niveret hon tri dever en e genver : lakaet e c'hellont beza o-zri dindan ar ger-man : « Ar respet », met pep-hini anezo a c'houlenn diganeomp respeti Doue en eun doare dishenvel. Ar c'henta gourc'hemenn a lavar d'eomp respeti Doue e-unan; hennez eo, hel lavaret hon eus, dever an adorasion; an eil a lavar d'eomp respeti an ano santel a Zoue; an trede a lavar d'eomp respeti an devez santel en deus Doue dalc'het evitan.

Lavaret hon eus ar pezh a oa ret diwar-benn an adorasion. Evit ar gourc'hemenn a c'houlenn diganeomp respeti ano Doue, daoust

ha n'eo ket miret e Lourd gwelloc'h eget e nep lec'h all eus ar bed ? War dachenn ar pirc'hirinaj, piou en deus klevet bis-koaz ano santel Doue sakreet ? Adalek an devez m'en em ziskouezas ar Werc'hez, eo bet ar blasfem taolet da-viken er-maez. diouz Lourd ha taolet er-maez gant Bernadet hec'h-unan. Setu aman penaos.

Pa fellas da Vernadet tremen dreist ar waz, evel ma oa-hi klanv ha yen an dour, he c'hoar vihan, Mari, en em ginnigas d'he dougen war he c'hein :

« — Nann, eme Vernadett, te a zo re vihan, te am daolfe en dour. Met te, Janed, ne c'hellfes ket va lakaat war da ziouskoaz ?

— Nann, a respontas Janed Abadi, en eur vlassfemi.

— Ah ! eme ker buan Bernadet, ma fell d'it blasfemi, kea d'hen ober d'eul lec'h all.

— Ha perak n'her grafen ket aman evel e lec'h all ?

— Gouzout a rez ez eo fall, gwelloc'h e rafes pedi an Aotrou Doue.

— Te 'zo diot, a lavaras Janed, da zougen a rin koulskoude m'ac'h eus c'hoant ?

— Nann, a grennas Bernadet : pegwir e vlassfemez evel-se, ne fell ket d'in; ar wech diweza eo d'eomp da vont a-unan. Mari, difenn a ran ouzit mont ganti. »

Komzou fraez ha kaer, komzou hag a lakeas marteze an Itron-Varia da zont eun abadenn goude-se da welout Bernadet....

**

Ar leou graet ha sevenet a zo eun enor rôtet da ano santel Doue. Ne vez graet le nemet da Zoue hepken. Chomet eo en ho spered ar sonj eus an hini graet, e-pad ar brezel bras, gant holl eskibien ar Frans, da vont goude an trec'h e pirc'hirinaj a drugarez da Lourd e penn o zud fidel. Ar bromesa-se a zo bet anvet gant an dud. « le eskibien da Itron-Varia-Lourd ». Ar c'homzouse, evit beza gwir, a dle beza komprenet evel-hen : « **le graet da Zoue** gant hon aotrounez eskibien, **en enor da Itron-Varia Lourd...** »

Al le-se en deus hastet an trec'h. Santez Janed a Ark hel lavare dija : *An dud eo a stourm, met Doue eo a ro an trec'h.* » Ar pez a oa gwir d'a hemzekvet kantved a zo gwir c'hoaz d'an ugentvet : a-dra sur, hor soudarded ha soudarded ar hroïou a oa a-du ganeomp, o deus stourmet kalonek, henchet mat gant ar re a oa en o fenn. Met evel m'hel lavare ar Marechal Foch, Doue eo en deus rôtet an trec'h; hag an trec'h-se, Doue en deus e rôtet d'eomp dre Itron-Varia Lourd. Er penn kenta eus ar brezel, eur blasfem enep ar Werc'hez en doa tregernet en tu all d'ar Rhin : ar Werc'hez venniget, kenta patronez ar Frans, he deus respontet d'ar blasfem-se.

Mat e raent eta an dud fidel a deue goude ar brezel, da heul o eskibien, da seveni al le graet en o ano ha da drugarekaat Itron-Varia-Lourd eus ar sikour rôtet ganti d'ar Frans er gwel eus an trec'h !....

N'eo ket ano Doue hepken eo a dleomp da respeti, met ivez e zevez santel. A dra-sur, an holl derveziou a zo da Zoue, met gouzout a ra e tleomp o implija el labour, ha dre-se ne c'houlenn

diganeomp en deveziou-se nemet eur pennadig amzer. Met dalc'het en deus evitan ar sul; ar sul eo e zevez ha ni a dle e respeti hag e santelaat.

E Lourd an holl deveziou a zo deveziou an Aotrou Doue hag ar birc'hirined o santela dre galz a bedennou hir, dre an oferenn-bred ha dre ar gousperou war gan, dre ar prezegennou selaouet gant evez. Ar sul koulskoude n'eo ket henvel ouz an deveziou all, dre ma teu, an deiz-se, muioc'h a birc'hirined diouz ar maeziou tro-war dro da glevout an oferenn, da gomunia ha da dremen devez an Aotrou Doue e-kichen ar Werc'hez venniget, ar pez a ro d'ezo evel an tanva eus an Nenvou e lec'h ma vint e-harz treid ar Werc'hez gloriou Vari, dirak Doue.

SKOUER

Paredigez an Tad Salvator, kapusin

An Tad Salvator, er bed Taburel, eus bro Domfront, en doa echuet e studi latin war an diwezat. Santout a rae e oa galvet da veza lean; met nec'het c'hoaz d'e zaou bloaz ha tregont, ne felle ket d'ezan en em rei evit atao, ha da c'hortoz anavezout gwelloc'h menoz Doue ez eas da vestr-skol.

Prepari a ra e-unan an ekzamin anvet e galleg « baccalauréat » ha setu hen anvet da vestr-studi e skolaj Arjantan. An ekzamin anvet e galleg « licence » a zigor dirazan, da-c'houde, dorion skolaj Rollin e lec'h ma chom dek vloaz d'ober skol ser prepari an ekzamin anvet e galleg « agregasion ». Gant labourat a-walc'h, eur mestr-skol bihan diwar ar maez a oa deuet da veza rejant en eur skolaj bras e Pariz.

Ar rejant yaouank a oa devot kenan d'ar Werc'hez gloriou Vari; hi eo he doa dalc'het ennan ar sonj da vont da vanac'h hag ar voazamant d'ober e zeveriou a gristen. Erfin, goude beza en em glevet gant Gward an Tadou kapusined. Taburel a reas eur retred ar Mans hag a chomas eno.

Er bloavez 1898, an Tad Salvator a echue e studi war ar skianchou sakr, pa voe karget eus ar re glanv, dreist-holl, eus eur Breur klanv a skevent. Bez' e voe aketus d'e louzaoui e-pad pevar miz. Met tapout a reas ar c'hlenved e-unan. Eun nebeut miziou a-raok maro ar Breur, an Tad en em skuize buan, a basae, a grene gant an derzienn diouz ar pardaez hag a c'houeze e-pad an noz. E skevent dehou a oa taget. Leun a nerz-kalon ha kennerzet gant ar c'hoant da veza beleget da viz Mezeven — ar pez a voe graet — ar manac'h yaouank a stourme ar gwella ma c'helle ouz e glenved, ha setu hen laket e penn skolaj Dinard.

Eno, d'ar 15 a viz Kenver 1899, an derzienn e strilhas en eun doare iskiz. Klenved e skevent a waseas war-lerc'h hag a ziskennas izeloc'h da viz Ebrel.

Hep-dale, ar c'hlanvour a oa dinerzet. An derzienn a save atao hag ar boan a greske en e stomog. Medisined ar Mans galvet war e dro, ne gredent ket digeri anezan en abeg da stad fall e skevent.

Neuze an Tad Gward, o welout e oa kollët ar manac'h, a reas le d'e gas da Lourd, ma c'hellje herzel ouz ar veaj. Met ret

e oa gortoz eur bloaz. — « Kredi 'ra d'in e vefen pareet, ma 'z afen da Lourd, a lavare an Tad Salvator, met arabat d'in sonjal e kement-se !... Ober a ran ar sakrifiz eus va buhez !... Va zad, ho dieren a ran a galon vat diouz ar bromesa hoc'h eus graet. » Ar c'hlanvour a yê bemdez war falla; n'en doa mui nerz ebet, e stomog ne zalc'he mui netra. Eun devez e fisteurelas an hostiv santel war al lienenn sakr.

Da viz Ebrel 1900, ar Tad Gward a layaras d'an Tad Salvator : « Kousto pe gousto, ez eoc'h a-benn an hanv da Lourd. »

— A-benn an hanv, va zad, e vezin marvet !

— Graet em eus eul le; ret eo d'eomp e seveni. Mont a reoc'h eta ha goulenn a reoc'h digant Doue beza pareet. Na c'houlennit ket mirout ho klenved, met pedit evit ho paredigez.

— Hen ober a rin, va zad. »

D'ar 15 a viz Mezeven, an Tad Salvator, treut evel eus spez ha maro e zaoulagad, a ziskenn e gar Lourd, douget gant daou eus e genvreudeur. Kaset eo war-eeun d'ar C'beo e lec'h ma chom diou eur da bedi a-raok diskenn en dour burzudus. An Tad a gin-nig moug; c'hopal a ra diou pe deir gwech hag en eun taol setu hen en e sav. N'en deus poan ebet e nep lec'h. Finval a ra e giz ma kar; pare eo !

A-raok distrei d'e gouent, an Tad Salvator a ya d'en em ziskouez d'e vedisined : ar re-man a chom sabatuet hag unan anezo a lavar ne c'hell dont eun hevelep distro d'ar yec'hed nemet a-berz Doue.

Eur miz goude-se an Tad Salvator a c'helle skriva : « Abaoe m'oun deut diouz Lourd ez oun ponneraet eus a seitek lur, hag an holl a chom souezet o welout peger buan eo deut va nerz en-dro ! »

Pareans an Tad Salvator a zo bet embannet evel mirakl dre urz an Aotrou Dubourg, arc'heskob Roazon, d'ar c'henta a viz Gouere 1908.



Sitrouilhez an Den-Eürus Diego a Gadix

An Den-Eürus Diego a Gadix, misioner kapusin a yae, eun dervez, da brezek d'eur gêr vihan, anvet Gausin.

War e hent e gavas eun den o ren eur mul karget a dorziou-bara. An Tad e saludas hag a c'houlennas digantan :

« Petra a zougit aze ?

— Sitrouilhez, eme ar muleter.

— Mat... Doue d'o benniga ! »

Digouezet en e di, ar paotr e ziskargas ar samm a oa war gein e loen. Siouaz ! ebarz ar sîer, ne oa mui bara, met sitrouilhez, henvel mat ouz torziou-bara.

Piou a chomas bamet ?... Ar muleter, hag en doa bet c'hoant d'ober goap ouz ar misioner.

Diskleria a reas an dro c'hoarvezet gantan, ha barnerien ar vro a gemeras e holl sitrouilhez.

Hadet e voe o greun; ar re-man a savas hag a zougas frouez. Galvet e voent diwar neuze **Sitrouilhez an Tad Diego**.

Kavet e vez c'hoaz e bro ar Spagn eus an sitrouilhez-se, henveltre ouz an dorziou-bara a veze graet d'ar mare ma tremenas ar burzud.

An holl gristenien a dle sikour sevel beleien



Hor Zalver, gwechall, p'en em lakeas da brezek an Aviel, a c'halvas da zont d'e heul tud paour ha dister, pesketaerien kalz anezo : Per hag Andre, Yann ha Jakez, daouzek abostol. An ebestel a zentas ouz galv ar Mestr, a zilezas o rouejou ha kement o doa, evit mont gantan, klevet e geennadurez, gwelet e oberou. Hag, a-raok kuitaat ar bed evit distrei d'e Dad, Jezus a rôas d'ezo e c'halloud, o c'hargas da zerc'hel e blas war an douar, da brezeg, da vadezi, da lavaret an oferenn, da bardoni ar pec'hejou.

Ne vezint ket lezet gant o nerz o-unan. Jezus a jomo ganto, a zigaso ive d'ezo ar Spered-Santel d'o sklerijenna ha d'o c'hennerza.

An Ebestel, goude reseo ar Spered Santel, a zo aet heb aon ebet dre ar bed holl da brezeg Aviel Jezus-Krist, ha buan an Iliz a zo bet skignet e pep lec'h, rak an Ebestel o deus, d'o zro, klasket re all d'ober o labour, graet eskibien ha beleien, hag abaoe 1900 vloaz an Iliz ne ehan d'en em astenn dre ar bed.

Ret eo, evit senti ouz mouez Jezus-Krist. « It, emezan, dre ar bed holl, prezegit an Aviel da gement zo. » Ne dleer ket ehana, met mont atao war a-raok, prezeg, rei da glevet a pep lec'h kelennadurez an Aviel, skuilh war an dud ar grasou gounezet gant Jezus-Krist.

Evit-se ez eus ezomm hag e vezo ato ezomm eus beleien, kalz beleien. Ne dleomp ket lezel da vervel an Iliz en hor bro; met he derc'hel yac'h ha krenv ha kaer, ma kendalc'ho d'ober vad d'an eneo.

E pelec'h e vezo kavet bugale ha tud yaouank da vont da veleien ? Er familhou kristen, el lec'h m'eo Doue enoret ha ser-vichet, el lec'h ma vez sentet ouz e lezenn.

Ar gerent a zo e gwirionez kristen, a gompren mat o deveriou e-kenver Doue hag a lavar d'ezan gant ar vrasa feiz : « D'eoc'h eo hor bugale; ma rit d'eomp an enor d'o dibaba evit beza ho peleien, ni a vezo eürus bras. »

Met er familhou kristen e vez alies, dre c'hras Doue, kalz bugale. Hag ar vugale-ze, kaset d'ar skolioù kristen bep gwech ma c'heller, a goust ker rei deskadurez d'ezo. Ar gerent, n'e ket bolonto vat a vank d'ezo, met n'hellont ket ato paea ar skolaj evito epad c'houec'h, seiz vloaz, ha da-c'houde paea adarre, pa vez o bugale er c'hloerdi bras. Nag a bet gwech am eus klevet traou evel ar reman : « Me a vije laouen o welet va mab o vont da veleg; ha va mab ne c'houlenn ket gwelloc'h. Rei a c'hellfen bep bloaz 500, 600 lur evitan, met n'hellan ket mont pelloc'h, n'oun ket gouest; bugale am eus c'hoaz da skolia, da vaga, da wiska. Kaer am eus labourat, n'hellan ket gounit a-walc'h da baea 1500 lur, 2000 lur ar bloaz er skolaj. »

Ha n'eo ket eun druez dilezel evel-se bugale eus ar re wella, eus eur familh gristen, bugale o deus spered, furnez, ioul da baea 1500 lur, 2000 lur ar bloaz er skolaj. »

Ret eo gellout kemeret ar vugale-ze, ret eo sikour ar gerent, evit n'o dezo bet re vras bec'h da zougen, re a zispignou d'ober.

Hiviziken, an holl her goar, eo ker ar bara, ker beva, ker al levriou er skol, ker pep tra, hag ar skoliou kristen ne resevont gwenneg ebet digant ar c'houarnamant. N'hellont ket mont en dro heb arc'hant, goulskoude. Rod eur vilin, evit trei, a rank kaout dour. Eur skol gristen, evit maga ar vugale, pae ar vistri, paea an tailhou, kempenn an ti, an toennou bep an amzer, a rank ive kaout peadra. N'o deus ket a leve. Ar re o doa eun tamm leve bennak gwechall, o deus gwelet laerez al leve-ze diganto dre lezenn an Disparti 1905.

Penaos e c'hello padout ar skoliou a zo karget da zével beleien ? Dre aluzennoù ar gristenien vat.

E kalz eskoptiou, ez eus graet eur Vreuriezh da zikour sevel beleien. E eskopti Kemper, ar Vreuriezh-se, a zo galvet Breuriezh Sant Korantin ha sant Pol, hag an aotrou 'n eskob a garfe e vefe reizet evel Breuriezh ar Feiz. Abaoe pell amzer en hor bro e vez rôet aluzennoù kaer da Vreuriezh ar Feiz.

Breuriezh sant Korantin ha sant Pol a zo henvel onz Breuriezh ar Feiz. Aluzennoù Breuriezh ar Feiz a vez ingalet etre ar visionerien, d'o zikour da zével ilizou, skoliou, ospitaliou.

Aluzennoù Breuriezh sant Korantin ha sant Pol a zo ive ingalet etre ar skolachou a zav beleien.

Ezomm a zo da zikour ar visionerien a zo en Azi, en Afrik hag e lec'h all, evit ma kresko dre ar bed niver ar gristenien, m'en em astenno rouantelezh Jezus-Krist.

Met ezomm zo ive da zerc'hel ar feiz start, en hor bro, da gaout beleien evit ar parrezioù, beleien evit ar skoliou, ma vezo ar vugale savet e doujans Doue, ma vo an dud yaouank dalc'het war an hent mat ha pellaet diouz an droug, ma kendalc'ho hor bro da gas enou santel d'ar Baradoz.

Ra vo eta an dud brokus da rei o aluzen da Vreuriezh sant Korantin ha sant Pol. Ha n'e ket eur gwenneg, daou wenneg eo a zo da rei, met muioc'h. Hiviziken e ranker komprenn ne dalv mui ugent real ar pezh a dalveze gwechall. Ugent real gwechall a dalveze muioc'h eget ugent lur hirio.

Hag evit gellout rei brasoc'h aluzen, penaos en em gemeret ? N'eo ket diaes — N'eus nemet ober nebeutoc'h a zispignou, a zispignou n'int ket ret. Piou ne c'hell ket espern, o prena nebeutoc'h a vutun, o chom hep prena eun dra n'oa ezomm ebet da gaout.

Espern gwenneg hirio, gwenneg warc'hoaz, dioueret traou n'int ket ret, hag a-nebeudou e vez lakeet a gostez dek lur, ugent lur hag ospenn. hag e c'heller rei eun aluzen kaer d'eur Vreuriezh a zo ezomm bras anezi hag a rajo kalz vad d'hor bro.

N'ho pezo morse keuz da veza graet aluzenou bras. An aluzenou-ze a vezo ho pinvidigez da zeiz ar varn. Anaout a rit komzou Hor Salver : « Eürus an dud trugarezus, rak d'o zro e kavint trugarez. »



Bleuniou Sant Fransez

XVIII^{et} PENNAD

*Pemp mil a genwreudeur,
'N o fenn, 'vel rener, Sant Fransez,
En eur vodadeg-veur,
E kêr Maria-an-Aelez.*

Gwir servijer Jezus, an Aotrou Sant Fransez,
A lakas en e benn degemenn, eun devez,
Da holl vreudeur e Urz kuitaat o manati,
En eur vodadeg-veur evit 'n em unani.

E kêr Maria-an-Aelez,
Leun o c'halon a levenez,
Ouspenn pemp mil a bep bro
A deuas d'ober eun dro.

Sant Dominig savet gantan Urz kaer ar Brezegerien,
Eun Urz a rene, kalonek, evit mad ar bobl kristen,
A oa oc'h ober hent eus ar Bourgogn da Rom,
Gant seiz eus e vreudeur, pa vennas ive chom
E bodadeg kêr-Maria,
Eur pennadig da ziskuiza.

Ar c'hardinal Ugolin, mignon bras sant Fransez,
'Lavaras d'ezan heman 'vije pab, eun devez,
'Deuas di, kerkouls all, d'ober eur weladenn,
Eürus d'ober eno, eun tammig spanañ.

Kuitaat gantan Perouzia
(Ar Pab eno neuze a oa)

Evit dont da Asiz, e tiskenne bemdez,
Da welout manati Maria-an-Aelez.

Laket e veze da ganan, gwechou an oferenn-bred,
Ha pa 'n em lake da brezek, teodet gwelloc'h ne oa ket.
Gant pebez laouenedigez, ne dride ket e galon,
O c'hallout tremen e amzer, ker brao all gand e vignon !

E skeud ar santelez,
E par al levenez,

O welout ar venec'h hed-ha-hed ar blenenn,
En-dro d'ar manati, hag int seder, laouen,
Azezet holl war ar c'hlazenn, ha renket a strolladou
A-glei daou-ugent anezo, hag a-zehou, en amc'houlou,
Pevar-ugent ha betek kant, o c'halon hag o spered
Ganto e-trezek an Nenvou 'n eur gaer a bedenn trôet,

O daoulagad beuzet en eur mór a zaerou,
Hag a wir garantez e berv oc'h ineou;

O welout 'n em vodet, ya, kement-all a dud,
Ker sioul ha ken didrouz, evel ma vijent mut,
Tud hag a seblante pleustri hent ar furnez
Kerkoulz hag e Nenvou, ar sent hag an Aelez;
O welout tud ker santel, o c'heuilh eur reolenn
Ker strik all ha ker jurdik, enni peb gourc'hemenn,
E chomas ar C'hardinal a-grenn ken estlammet,
Hag e galon en e greiz, a joa ken entanet,
Ma ne oa ket evit herzel da skuilh daerou,
Ma lavaras dioustu stouket en e gomzou :
« Ya, aman en em gav, hirie, e gwirione,
« Ha kamp, ha soudarded, Jezus-Krist Hon Roue. »
E-touez kement a dud, o fenn 'n o fichourell,
Ne glevet ket a fars, na mui a fentigell.
N'o doa ket, gwir, ken sonj nemet ouz ar bedenn
Pe ouz o breviel, o amzer 'vit tremen.
O fec'hejou lakae o c'halon da frailhan,
Ha da frailhan kement, ma renkent holl gouelan,
Gouelan d'o-fec'hejou, da re o mignoned,
D'o ine da vezan, e Nenv, eun deiz, salvet.


Er blenenn 'oa enni ar menec'h 'n em vodet,
Henvel ouz eur C'had-lann (1) peurlenn a soudarded,
Ne weled ken tro-zro nemet an dinellou,
Darn tóet gant klouedou glas, darn all gant pallennou,
Ha renket a rummadou, hervez ar rann-vroioù
O doa ar Breudeur enno, sávet manatiou.
Ha sede d'ar Vodadeg-Veur, an ano dispar rôet :
Kuzul « AR C'HLOEDOU-PALLENNOU » gant ar venec'h plezennet.

(Da genderc'hel).



(1) Champ de bataille.

Santez Elizabet a Hongri Patronez ha skouer C'hoarezed an Drede-Urz



D'ar Yaou Gamblid e vode santez Elizabet 12 paour klanv-bras, tud lor eul lodenn anezo. Gwelc'hi a rae o zreid, pokat a rae d'ezo, ha da-c'houde e rôe d'an dud reuzeudik-se dilhad ha bara.

Ober a rae kement-se gant eur galon izel, o kemer skouer war Hor Salver Jezuz-Krist, gwelc'het gantan treid e Ebestel, d'ar Yaou Gamblid.

E-pad ar sizun santel e taole a gostez he gwiskamanchou a rouanez, ha gwisket dister, e yae e-touez ar bobl, evit gwelout ar ilizou. Ober a rae kement-all, pa zigoueze ar rogasionou, ha da Wener ar Groaz en em lakae e-kreiz ar beorien, evit klevout ar brezegenn, hag en em wiska a rae gant ar vantell digaset d'ezhi gant sant Fransez.

**

Tud an Drede-Urz, goulenn a ra diganeoc'h ar reolenn hoc'h eus kemeret, teurel a gostez an dilhad re gaer, hag en em wiska hervez ho stad a vuhez.

1°) Dougit warnoc'h eta dilhad dister, evel m'eo dereat d'ar wir kristenien, breudeur d'eun Doue marvet war ar Groaz : « Marteze, eme sant Alar d'ar rouanez Bathlid, n'oc'h ket gwisket re gaer evit eur rouanez, evit eur gristenez ez oc'h re lugernus. »

2°) En em wiskit en eun doare dereat gant aoun da gousi (corrompre) kalon ar re-all; diwallit ivez da veza divalo en ho kwiskamant, o tougen dilhad pilhaouek ha lous.

3°) Evit gouzout penaos en em wiska, na sellit ket ouz an dud divergont, sellit kentoc'h ouz an dud fur ha poellek.


4°) D'an diweza, perak ne espernfec'h ket eur gwenneg ben-nak evit ober aluzen, kentoc'h eget dispign arc'hant bras oc'h en em wiska re vrao ?





An Tadou Kapusined

1528-1928



An drede a viz Gouere 1528, an Tad santel ar *Pab Kleman VII*, dre e lizer-meur *Religionis Zelus*, a rôas galloud d'eur strollad Breudeur-Vihan da sevel eun Urz nevez striz ha pini-jennus hanvet da-c'houde *Urz ar Gabusined*.

Ar Gabusined a ziskenn eus sant Fransez a Asiz kerkoulz hag ar Vreudeur-Vihan all; hen eo o zad hag int a zo gwir vugale d'ezan, evel m'he deus diskleriet meur a wech an Iliz santel.

Setu breman 400 vloaz ma klaskont, evel an daou skourr all eus Urz sant Fransez, kerzat piz war roudou o zad.

Souezet bras e vefe hol lennerien ma lezfemp da dremen ar pevare-kanvet-se hep lavarout eur ger bennak diwar-benn o istor.

O veza n'eo ket mat d'ar gristenien, ha ne-beutoc'h c'hoaz d'ar venec'h, en em veuli o-unan, ec'h embannfomp aman eur pennad-skrid tennet eus ar gazetenn *Osservatore Romano*, kazetenn na vez skrivet enni nemet ar pez a zo kavet mat gant an Tad santel ar Pab.

« An Tadou Kapusined, a lavar an *Osservatore Romano*, o deus douget ebarz an Iliz frouez dispar; goude 400 vloaz, emaint ker beo ha biskoaz ha n'o deus nemet mignonned e-touez ar gristenien. Eur gerig berr hepken war o buhez ha war o labouriou.

Rôet o deus d'an Iliz pemp sant : S. Felis a Gantalis, s. Serafin, s. Laurans a Vrind, s. Josef a Leonisa, s. Fidel a Sigmaringen.

Ouspenn, dek Den Eürus : an Dud Eüru, Benead a Urbino, Apolliner a Vosat, Agatanj a Vandom, Kasian a Naoned, Bernez a Gorleone, Bernez a Offida, Ael Akri, Krispin a Viterb, Felis a Nikosi, Diego a Gadix ha milierou all a servicherien Doue.

E-touez ar Gardinaled brudet eus an Urz, e kaver ar Gardinaled Casini, Mikara, Massaia ha Vivès y Tutç.

Evel kannaded ar Pab e-kichen ar Rouanez hag an Impalaered, ar re anavezetoc'h eo : sant Laurans a Vrind, an Tad Mark a Aviano hag an Tad Josef a Dremlay.

E-touez an theolojianeled eo niverus an Tadou o deus lezet war o lerc'h skridou talvoudus, evel an Tadou Ambroaz a Lombez, Yvon a Bariz, Bernardin a Bikigny, Thomas a Charm, Albert a Vulzano, Marzin a Gochem, Loeiz a Arjantan ha kalz re-all.

Evit ar pez a sell skianchou ar bed, meur a hini anezo a zo bet brudet en o amzer, evel an Tad Ael a Bariz, eul louzaouer burzudus, an Tad Krystostom a Jy, an Tad Yvon a Bariz.

Piou n'en deus klevet komz eus ar garantez diskouezet gant ar Gapusined d'an dud taget gant ar vosenn e Milan hag e Marseil, hag eus o nerz-kalon, pa vije an tan-gwall e Pariz ?

Piou n'anavez ket, da vihana dre an ano, an Tad Maze, savetaet gantan enezenn Erin (Irland), o pellaat e genvroiz eus an evachou krenv ?

En deiz hirio eman ar Gapusined war-dro 11.200 hag en o zouez e welomp 30 Eskob pe Arc'heskob.

Emaint 1200 er misionou estren; fiziet ez eus enno 106.000.000 a dud divadez da c'houmit da Zoue. Klevet hoc'h eus, lennerien mat, 106.000.000 pagan da sklerijenna war ar relijion gristen ! Bez' o deus misionou en *Amerig Izel* : er Chili, er Bresil, en Ekuator, e Haïti hag all.

En *Afrig* : en Abysini, en Erythre, e Djibouti, en Oubanghi, en Ezennou Seychelles, e Dar-es-Salam (bro Zanzibar).

En *Asi* : e Syri, en Arabi, en Agra, Lahor, Ajmer, Simla, Allahabad, Kang-su, en enezenneu Philippin hag e Goa.

En *Oseani* : e Borneo ha Padam. »

Ouspenn, misionou all e Konstantinopl, Smyrn, Bulgari hag er Suiz.

Setu aze eun diverra eus labour ar Gapusined abaoe 400 vloaz.

Ra blijo gant sant Fransez benniga e Vugale ha kreski o niver evit gloar Doue ha silvidigez an eneoù !

Tad F.



Kelou eus ar Breüriezou

Plouye. — E-pad ar mision bras rôet e parrez Plouye breman 'z eus triouec'h miz, eun nebeudig a dud volontez vat a rôas o ano d'an Drede-Urz.

Ar Vreuriez a zo bet savet evit mat d'an 8 a viz Eost diweza. A dra-sur, disterik eo c'hoaz. Met an Ebestel ne oant nemet daouzek, pa 'z int aet da brezek an Aviel dre ar bed. Piou a c'hellfe kouskloude niveri an eneoù gounezet ganto d'Hor Salver ?

Ar Vreuriez, renet mat evel ma 'z eo, a yelo war gresk, ha skoueriou kristen ar re a zo enni, a zigaso d'ezi, gant bennoz Doue, kalz kristenien all.

Plonevez-ar-Faou. — An Tad Fuljans a zo tremenet dre ar barrez evit gwelout Breuriez an Drede-Urz savet daou vloaz 'zo, ar Vreuriez-man a ya endro eus ar gwella : ugent C'hoar o deus graet profesion, ha daouzek all o deus kemeret nevez 'zo skapular sant Fransez. Bep miz e teuer aketus d'ar vodadeg, evel m'eo gourc'hemennet gant ar Reolenn.

Evit anaout gwelloc'h o deveriou, ar c'hoarezed a fell d'ezo kaout eur retred evito- o-unan.



Labour hor Misionerien

Pedit kolonek evit ar misionou ha reirejou prezeget gant hon Tadou. Goulennit ma tougint frouez puilh evit gloar Doue ha silvidigez an eneoù :

Kast (*Eskopti Kemper*). — Mision, eus ar 11 d'an 28 a viz Here, gant an Tadou Barnabe, Fuljans hag Eujen.

Piélo (*eskopti Sant-Brieg*). — Admision, eus ar 7 d'ar 14 a viz Here, gant an Tad Kasian.

Ar Leslay (*eskopti Sant-Brieg*). — Mision, eus ar 17 a viz Here d'ar 1 a viz Du, gant an Tad Salvator.

Lantig (*eskopti Sant-Brieg*). — Admision, eus an 21 d'an 28 a viz Here, gant an Tadou Kasian ha Yann-Vadezour.

Borc'h-Kintin (*eskopti Sant-Brieg*). — Adorasion, eus an 28 a viz Here d'ar 1 a viz Du, gant an Tad Kourantin.

Trekuidel (*eskopti Sant-Brieg*). — Adorasion, eus an 28 a viz Here d'ar 1 a viz Du, gant an Tad Kasian.

Pouldergat (*eskopti Sant-Brieg*). — Adorasion, eus an 29 a viz Here d'ar 1 a viz Du, gant an Tad Barnabe.

RETREJOU :

e skolaj Sant Loeiz (*an Oriant*), gant an Tad Adrian.

e skolaj Lesneven, gant an Tad Theodor.

e skolaj Sant Erwan (*Kemper*), gant an Tad Ivon.

e skol gristen Lambezelleg, gant an Tad Kaourantin.

e skol Sant Gabriel (*Pont 'n Abbad*), gant an Tad Theodor.

e parrez Sant Melan (*Montroulez*), gant an Tad Ivon.

e parrez Santez Anna a Arvor, en Oriant (evit ar baotred yaouank), gant an Tad Theodor.

e skol Santez Mari (*Likès*), Kemper, gant an Tad Kaourantin.

e parrez Pleyben (*eskopti Kemper*), (evit ar baotred yaouank), gant an Tad Theodor.


RETREJOU TREDE-URZ :

e Gwened, evit ar wazed, gant an Tad Loeiz-Mari.

e Kemper, evit ar vugale a zoug kordennig sant Fransez, (16-20 Gwengolo) gant an Tad Kaourantin.

BREURIEZ NEVEZ :

D'ar 27 a viz Gwengolo, en eskopti Kemper ez eus bet savet eur Vreuriezh eus an Drede-Urz evit ar veleien.



PEDOMP EVIT HON ANAON

Versailh. — BREUR SOSTEN, kapusin, eus Lokmene (*Eskopti Gwened*), marvet d'an 21 a viz Eost, d'an oad a 52 vloaz. Hor gwella gourc'hemennou a genganv d'e familh ha dreist-holl d'e vreudeur, ar Breur Veran, misioner er Radjpoutana (Indez), hag an Aotrou Bouhellek, kure e parrez Kaudan, e-kichen kêr an Oriant.

GOULENNET DIGANT

an Tad Theodor ROUSSEL, 28, Avenue de la Marne, Lorient.
C/c 46.28, Nantes.

Buhez burzudus eun douger-sammou MAZE TALBOT :
0 fr. 50 — 0 fr. 65 dre ar post.

An Eured Kristen (*Kantig*) : 22 real ar c'hant, dre ar post.

Kantigou nevez : SAKRAMANT AN AOTER. — JEZUZ-KRIST ROUE.
— An « DE PROFUNDIS », pedenn an Anaon. — Priz an tri asambles : 15 lur ar c'hant, dre ar post.

Manuel du Tiers-Ordre de Saint François, par le P. EUGÈNE D'OISY *franco* 11 fr.

Petit Manuel du Tiers-Ordre, par le P. Eug. d'OISY 4 fr. 45

La Parfaite Tertiaire de Saint François, par une Maîtresse des novices..... 10 fr.

Saint François d'Assise, par le P. LÉOPOLD DE CHÉRANCÉ 13 fr. 00

Saint François d'Assise, par le P. LÉOPOLD; petite édition illustrée..... 2 fr. 25

Qu'est-ce que le Tiers-Ordre? par le P. EUGÈNE... 0 fr. 45

Pourquoi entrer dans le Tiers-Ordre? par le P. EUGÈNE 0 fr. 45

Gloires et Bienfaits du Tiers-Ordre, par le P. EUGÈNE 0 fr. 75

La Vie Chrétienne intégrale par le Tiers-Ordre Franciscain, par P. JEAN DE LA CROIX 0 fr. 75

Le Tiers-Ordre et le Prêtre, par le P. AIMÉ..... 0 fr. 75

Vie de Saint Yves de Bretagne, prêtre du Tiers-Ordre, par l'abbé ESNAULT 0 fr. 75

Pratique des trois Vertus Séraphiques de Pauvreté, d'Humilité et de Mortification, (pour les prêtres tertiaires), par l'abbé ESNAULT..... 3 fr. 65

Capucins Missionnaires. (Missions Françaises). Très nombreuses Illustrations..... 6 fr. 50

Capucins Français, par le P. EUGÈNE DE SAINT-CHAMOND 2 fr. 75

Ma Vocation, par le P.A. de M..... 2 fr. 70

René Blériot, Frère Eleuthère capucin, par le P. PAULIN 4 fr. 50

LEVRIOU NEVEZ E GALLEG.

P. TÉQUI, *libraire-éditeur*, 82, rue Bonaparte, Paris VI^e

Mgr LAVEILLE. — **Une petite fleur écossaise**, émule de Ste Thérèse de l'Enfant-Jésus : Marguerite SINCLAIR — Prix 8 fr. ; franco..... 8 fr. 75

P. GILOTEAUX. — **La Société des Nations. Patriotisme et Internationalisme.** — Ouvrage in-12 de 288 pages. Prix : 10 fr. ; franco..... 10 fr. 75

A. LUGAN, Missionnaire diocésain d'Albi. — **Un grand évêque français réalisateur**, Mgr Gibier. — Brochure in-8°. Prix 3 fr. 50



Cum permissu Superiorum.

Le Gérant : G. LE BAYON.

Moulez AR BAYON-ROGER, 13, Tachenn Alsace-Lorraine, en Oriant.



Ra. vezo meulet Jezuz-Krist !

Bepred.



Kenteliou Sant Fransez

Kelaouenn vizek gant Skeudennou



TAOLENN AR MIZ

Goueliou ar miz	173
Sonjit ervat	174
Gouel an Holl Sent	176
Santez Elizabet hag eun den lor	177
Kelennadur diwar-benn an Drede-Urz	179
Santez Elizabet, Patronez an Drede-Urz	182
Beleien d'an iliz	184
Lourd hag an enor dleet da Zoue	187
Bleuniou sant Fransez. — XVIII ^o Pennad	188
Labour hor misionerien	188



Rédaction et Administration

P. Théodore ROUSSEL

F.M. Capucin

28, Avenue de la Marne, LORIENT

C/c. : 46.28 NANTES

Priz : daou skoued

MIZ DU

- 1 Yaou GOUEL AN HOLL SENT. — A.J.
- 2 Gwener GOUEL AN ANAON. — I.P. da c'hounit evit an Anaon, abaoe dec'h da greistez betek hanter-noz hirio, kel lies gwech ma 'z eer d'an Iliz.
- 3 Sadorn ... DEN-EÛRUS RENIER, kofes. eus ar genta Urz.

- 4 Sul *Trivet sul war-nugent goude ar Pantekost.*
- 5 Lun Gouel ar Relegou Santel miret en hon ilizou.
- 7 Merc'her . PLAC'H-EÛRUS MARC'HARIT A LOREN, intañvez eus an eil Urz.
- 6 Meurz ... PLAC'H-EÛRUS HELENA, gwerc'hez eus an eil Urz.
- 8 Yaou Eizvet gouel an Holl Sent.
- 9 Gwener .. Dedi Iliz vras Sant Salver e Rom.
- 10 Sadorn ... S. Andre Avellino, beleg ha manac'h.

- 11 Sul *Pevarvet war-nugent sul goude ar Pantekost.*
- 12 Lun DEN-EÛRUS GABRIEL FERRETTI, kofes. eus ar genta Urz.
- 13 Meurz S. DIDAS, kofes. eus ar genta Urz.
- 14 Merc'her . S. Josafat, eskob ha merzer. — I.P.
- 15 Yaou Santez Jertruda, gwerc'hez.
- 16 Gwener .. SANTEZ AGNES A ASIZ, gwerc'hez eus an eil Urz. — I.P.
- 17 Sadorn .. PLAC'H-EÛRUS SALOME, gwerc'hez eus an eil Urz.

- 18 Sul *Pempvet sul war-nugent goude ar Pantekost.*
Gouel ilizou s. Per ha s. Paol, e Rom.
- 19 Lun SANTEZ ELIZABET A HONGRI, intañvez, Patronez C'hoarezed an Drede-Urz. — A.J. — I.P.
- 20 Meurz S. Felis a Valois, kofes.
- 21 Merc'her . GOUEL MARI KINNIGET EN TEMPL. — A.J.
- 22 Yaou Santez Sesilia, gwerc'hez ha merzerez.
- 23 Gwener .. S. Klemant I, pab ha merzer.
- 24 Sadorn ... S. Yann ar Groaz, kofes.

- 25 Sul *C'houec'hvet sul war-nugent goude ar Pantekost.*
Santez Katilin, gwerc'hez eus an Drede-Urz
PLAC'H-EÛRUS ELIZABET AR VAT, gwerc'hez eus an Drede-Urz.
- 26 Lun S. LEONARD A BORZ-MAURIS, kofes. eus ar genta Urz. — I.P.
- 27 Meurz DEN-EÛRUS BERNARDIN A FOSSA, kofes. eus ar genta Urz.
- 28 Merc'her . S. JAKES, kofes. eus ar genta Urz. — I.P.
- 29 Yaou HOLL SENT EUS TEIR URZ S. FRANSEZ. — I.P.
(I.P. all, o renevezi ar Brofesion).
- 30 Gwener .. S. Andre, abostol.



MIZ DU 1928

Sonjit ervat

Diwar-benn pevar goulenn ar Batez.

« *Roit d'eomp hizio hor bara pemdezlek* »

I. — SONJIT ERVAT : dre ar goulenn-se e tiskouezomp eman **hou holl fizians** e madelez Doue. Goulenn a reomp digantan eun tamm bara, rak hep e sikour, n'hellfe den her rei d'eomp. Anzav a reomp eo digant Doue e teu kement vad a deu d'eomp.


Lavarit eta da Zoue : « O va Doue, d'eoc'h omp holl ; diganeoc'h eo e teu d'eomp pep tra, hep doc'h n'omp netra. »

II. — SONJIT ERVAT : Doue a lavar d'eomp goulenn **bara eun dervez hepken**. Na c'houlennit nemet ar pezh ho peus ezommi. Na selaouit ket tud ar bed na mouez an drouk-spered hag a lavar d'eoc'h dal-c'hnat : dastumit, dastumit atao muioc'h-mui.

Mar doc'h gwir vugale da Zoue, na lakit ket diaes ho spered gant madou ar bed. Espernit ar pezh a zo ret, netra nemet ar pezh a zo ret.

III. — SONJIT ERVAT : Ouspenn bara ar c'horf, Doue a zesk d'eomp ivez goulenn **bara an ene**, bara an aelez, a gavomp e Sakramant an Aoter. Er bara-se eman Jezuz e-unan. Ar bara-se eo a ro d'eomp ar wir vuhez a bado da viken.

Bemdez, gant hast ha gant feiz, goulennit digant Doue ar bara-se. Bemdez, pe da vihana alies, magit gantan hoc'h ene, hag hoc'h ene, bemdez sikouret ha maget gant Doue, a deui da veza krenvoc'h-krenva, kaeroc'h-kaera.



Gouel an Holl Sent

Gouel an Holl Sent, unan eus ar pevar gouel miret eus ar bloaz, a zo gouel an holl an dud salvet, gouel ar re a zo er baradoz, ha zoken gouel ar vugale vihan marvet gant sae wenn o badiziant.

Bez' ez eus Sent hag a zo anavezet, hag a zo lakaet war an aoteriou, evel ar Werc'hez Glorius Vari, sant Jozef, sant Per, sant Fransez hag e-leiz ar re all. Ar re-man o deus o gouel eun deiz bennak eus ar bloaz, ha lod anezo o deus daou pe dri gouel.

Bez' ez eus Sent all ha na dint ket anavezet war an douar. Emaint er baradoz, met n'ouzomp ket hag int a zo eno. Eun niver eus ar re-man a zo kalz brasoc'h eget an niver eus ar re anavezet. Ouz ar re-man dreist pep tra e sell komzou sant Yann Avielier : « Me a welas eur bobl tud, ha kement a oa anezo ma n'helle den o niveri. » Bez' ez eus anezo a hep bro, a hep oad, a hep stad. Ne vern piou oc'h, e c'hellit kredi hoc'h eus kerent, mignonet, amezeien e-touez ar Sent-man.

En deiz-man, e fell d'Hor Mamm Santel an Iliz enori ar Sent anavezet ha ganto ar re n'o deus gouel ebet.

*
**

Ar Sent a zo eürus er baradoz : « Eürus, o va Doue, ar re a chom en ho ti ! » Int a wel Doue, evel m'eman, hag o welout anezan, o c'halon a zo karget a levnez. Int a ev evel eur mor a blijadur. N'eus mui evito na droug na poan ebet : « An Aotrou Doue en deus sec'het o daerou, ha n'eus mui evito na maro, na kanvou, na daerou, na trubuilhou; an holl draou-se a zo tremenet. »

Ker bras eo eürusted ar Sent ma n'hellomp ket her c'homprenn war an douar : « Lagad mab-den n'en deus ket gwelet, e ziouskouarn n'o deus ket klevet, e galon n'he deus ket tanvaet ar pez en deus an Aotrou Doue kinniget d'ar re E gar. »

Hag an eürusted-se a bado da viken.

Piou eta ne c'hoantafe ket mont d'ar baradoz ? Piou ne labourfe ket eus e holl nerz evit gounit ar vuhez eternal ? Piou ne lavarfe ket evel sant Paol : « Hast em eus da vervel evit beza gant Jezuz-Krist ? »

Eürus eo an holl Sent er baradoz. Koulskoude eürusoc'h ha uheloc'h eo lod anezo eget ar re all : peb unan hervez e oberou, pep unan hervez e verit : « E ti ma Zad eme Hor Salver, ez eus meur a lec'h. » Labouromp eta, nann hepken evit gounit ar baradoz, met c'hoaz evit gounit eul lec'h uhel, eul lec'h kaer e ti an Aotrou Doue.

*
**

Ar Sent a zo hor patroned, hon alvokaded, hon difennourien

dirak Doue; pedi a reont evidomp, hag an Aotrou Doue, leun a garantez evito, a selaou o fedennou.

Selaou a ra Doue pedennou an dud a zo o veva war an douar. Setu aze eun dra a welomp splann an Aviel : « Jezuz, Mab da Zavid, ho pet truez ouzomp », a lavare eun dal a Jeriko; hag Hor Salver en doa rôet d'ezan ar gweled. — Jezuz Mestr, ho pet truez ouzin », a lavare an dek den lor. — « It hag en em ziskouezet d'ar veleien », eme Jezuz, hag en eur vont, e voent holl gwelaet (*Luc. 17*).

« Va Doue, pardonit d'in, rak pec'her oun », a lavare an toucher-droejou, en eur skei war boull e galon; hag an den-man a yas d'ar gêr pardonet (*Luc. 18*).

Mar selaou an Aotrou Doue pedennou ar paour kaez a zo c'hoaz war an douar, kerkoulz ha gwelloc'h e selaou re ar Sent ar baradoz.

Lavarout a rae an den ganet dall : « Ne selaou ket Doue ar bec'herien » (*Joa 9.31*). — Hep mar, an Aotrou Doue a selaou ar bec'herien a bed a wir galon. Pegement anezo o deus goulennet ha bet digantan glac'har ha pardon ! « Mestr, ho pet sonj ouzin, pa vezot en ho rouantelez. — Hirio e vezi ganin em baradoz. » Setu penaos e voe selaouet al laer mat, hag a oa eur pec'her bras neuze.

An Aotrou Doue a selaou eta ar bec'herien. Ni a gred koulskoude ez int selaouet nebeutoc'h, pa 'z int staget a galon ouz ar pec'hed, ha pa fell d'ezo derc'hel da bec'hi.

Met n'eo ket ar pec'hed a vir ouz ar Sent da veza selaouet. Er baradoz n'eus pec'hed ebet, pur ha santel eo an eneo eürus.

Pedomp ar Sent. Sellit pegement ez int pedet gant Hor Mamm santel an Iliz. Nag a oueliou, nag a litanioù savet ganti pe kavet mat evit o enori hag o fedi !

Pedomp ar Sent en hon ezommou. Int a bedo evidomp hag an Aotrou Doue, ar vammenn eus an holl vadou, a selaouo o fedennou hag a rôio d'imp sikour.

Eun dra all hon eus da ober : kerzat war roudou ar Sent, pel-laot diouz an droug hag ober ar vad evelto evit mont eun deiz ganto d'ar baradoz : « Va heuilhit, evel ma heuilhan Jezuz-Krist », a lavare Sant Paol. Setu ivez ar pez a lavar d'imp ar sent eus lein an Nenv.

Evelto, bezimp paour a spered, paour a galon, distag eus madou an douar, ha d'imp e vo rouantelez an Nenv.

Evelto, bezimp dous a galon, ha ni hon devezo an douar, douar ar re veo, da lavarout eo ar baradoz.

Evelto, bezomp c'hoant ha sec'hed eus ar justiz, eus ar mad, eus ar santelez, ha ni hon devezo hon gwalc'h.

Evelto, bezomp madelezus; truezus eus ar paour, eus ar re zoa-niet, ha ni a gavo truez ivez.

Evelto, bezomp pur a galon, ha ni a welo Doue.


Evelto, en em lezomp da veza gwall-gaset evit ar justiz, evit ar santelez, ha d'imp e vezo rouantelez an Nenv.

En eur ger, bevomp evel ma veve ar Sent, ha ni a vezo eürus evel ar Sent : « Eürus ar re a chom en ho ti, o va Doue ! »



Santez Elizabet a Hongri

Patronez ha skouer C'hoarezed an Drede-Urz



Santez Elizabet hag eun den lor.

E-touez ar beorien hag a zeue d'he maner da glask an aluzen, santez Elizabet he doe taolet pled d'eur paotr yaouank gwisket fall, e gorf goloet gant eun druskenn karget a lin (pus) brein, klenved al lorgnez.

E vleo a oa lous, e ziou jod hag e vuzellou krignet gant ar c'hlenved, en eur ger, eun den donjerus e oa, hag an holl a bellae dioutan gant aon da zastum ar c'hlenved stagus-se.

En eur welout eur stad ker reuzeudik, e rannas kalon ar Santez; biskoaz n'he doa kavet war he hent eun dristidigez ken euzus ha ker bras. Hi hec'h-unan a fellas d'ezhi ober war-dro ar paour-kaez d'en gloazet ha burtellet (tourmenté) gant an droug; lakaat a ra dour da domma ha gwale'hi a ra gouliou an den lor.

**

Ar pec'hed, setu aze ivez lorgnez an ene.

1°) Pellañt eta diouz ar pec'hed, penn-abeg da boaniou ha da varo Hor Salver, ar pec'hed milliget hag a skarz diouz ar galon ar vuhez a santelez, en eul lakaat an ene e stad risklus da goueza en ifern.

2°) Pellañt diouz kement tra a c'hellfe ho tougen d'ar pec'hed : « An neb a gar an droug, a vezo diskaret gantan. » Lavarout a ra sant Bernardin a Sien : « En em lakaat er riskl da goueza er pec'hed ha chom koulskoude hep koueza ennan a zo diaesoc'h kant gwech eget n'eo adrei ar vuhez d'eun den marvet; ober a ra Doue burzudou, met nann henez. »

3°) C'houi eta hag a wel pegen euzus eo stad a bec'hed, pedit kalz evit teneraat kalonou ar berc'herien hag o c'hounit da Zoue.

*

Kelennadur diwar-benn an Drede-Urz

AR VREURIEZ

KENTA LODENN

PENNAD I. — N'heller ket digemer en Drede-Urz an neb n'en deus ket pevarzek vloaz peurechuet-

Evel ma welit, n'eo ket ret beza oajet ha koz evit beza digemeret an Drede-Urz; a-walc'h eo kaout pevarzek vloaz peurechuet. E gwirionez, ne zigemerer ket kalz ar re yaouank; n'ouzont ket c'hoaz ervat petra a reont. Met petra a wir da zigemer ar re o deus seitek ha triouac'h vloaz, pa weler ez int trôet war ar furnez ? « Perak, eme an Tad santel ar Pab Benead XV (1921) ne rofe ket an holl gristenien fur, ha zoken an dud yaouank, o ano d'an Drede-Urz ? »

A dra sur, ar re yaouank, muioc'h eget ar re goz, o deus ezomm eus an Drede-Urz, evit en em zifenn ouz enebourien o silvidigez : an techou fall ha skoueriou milliget ar bed; en Drede-Urz e reont muioc'h a vad en-dro d'ezo, brasoc'h e vez o c'harantez evit an Aotrou Doue.

Santez Roza a Viterb n'he doa nemet nao bloaz, pa voe digemeret en Drede-Urz. Santez Elizabet a Hongri n'he doa nemet seitek vloaz, hervez ma lenner en hec'h istor.

Mar deo mat mont abret en Drede-Urz, eo ret koulskoude goulenn a-raok ali ar beleg gant aon da lakaat re a fizians en hon nerz hon-unan.



Ret eo beza den a skouer vat, karout ar peoc'h.

Evel-se dor an Drede-Urz a zo serret ouz an everien, an dud diroll, an dud a vuhez fall, an dud divergont, ar re a gar an trouz, ar pennou kalet. An Drede-Urz a zo eun hent d'ar baradoz; an dud fall ne vint ket digemeret enni. « An dud fall, eme sant Paol, n'o do ket perz e rouantelez Doue ». (I Cor. VI, 9).

Bez' ez eus ivez tud a renk uhela hag eus ar santela ha n'eo ket digoret evito dor an Drede-Urz, evel ar venec'h hag al leanezed, Gwechall e touge lod anezo skapular sant Fransez. Ar Pab Leon XIII en deus difennet her rei hiviziken d'an dud a heuilh eur reolenn all. « Ar venec'h hag al leanezed, eme ar Pab, o deus eur reolenn strisoc'h ha santeloc'h eget hini an Drede-Urz; n'o deus eta ezomm ebet eus houman. »

Ar valeien, int, a c'hell beza digemeret en Drede-Urz hag eun dra vat a reont oc'h en em lakaat enni. Netra aesoc'h evito, peogwir n'o deus pedenn ebet da lavarout; o breviel a servij d'ezo da ofis.

Abaoe 700 vloaz m'eo savet an Drede-Urz, milierou ha milierou a veleien, a eskibien, hep komz eus an Tadou santel a Pabed, o deus douget skapular ha kordennig sant Fransez. E-touez ar re vrudeta eus hon amzer, e kavomp Dom Bosko, An Aotronez Dupanloup, Freppel, d'Hulst, Baudrillart; ar gardinaled Pi, Mercier, Charrost; beleien all lakaet war an aoteriou evel an Den-Eürus Eymard, an Den-Eürus Garricoitz, sant Vianney, person Ars, hag all.

An dud a renk izel, ar beorien zoken, a c'hell beza digemeret en Drede-Urz gant na deufent ket hepken e sell da gaout an aluzen. Mat eo, a dra-sur, ha ret eo rei an aluzen d'Ar re baoura eus ar Vreudeur hag ar C'hoarezed dreist pep tra p'emaint klav (Eil lodenn, pennad XII); met c'hoaz eur wec'h, n'eo ket savet an Drede-Urz gant sant Fransez evit kaout madou ar bed, savet eo bet, avat, evit gounit ar baradoz.

A-hend-all, dor an Drede-Urz a zo digoret d'an holl gristenien, gwazed ha merc'hed, d'an dud dimezet koulz ha d'an dud yaou-ank. Daou bried e oa an daou genta digemeret gant sant Fransez : an Den Eürus Lukezius hag e wreg Bonadona.

Graet eo eta an Drede-Urz evit kristenien vat ar bed. Ha pa gomzan eus a gristenien vat, ne gomzan ket eus ar sent nag eus an dud n'o deus si ebet; nann, komz a ran eus an dud a fell d'ezo mirout al lezenn gristen hag en em santelaat a zeiz da zeiz, na pa gouezfent a-wechou er pec'hed dre sempladurez.

Beza start er feiz katolik ha beza sentus ouz an Iliz santel lia ouz ar Pab.

Ezomm ebet da lavarout e tle ar re a fell d'ezo beza bugale da sant Fransez, beza da genta bugale doujus d'an Iliz ha d'ar Pab. « Eur feiz wirion, eun doujans dispar ha divrall da Iliz Rom, setu aze, eme ar Pab Pi X, ar pez a c'houlenner a-raok pep tra digant ar re a zoug skapular an Drede-Urz » (8 Gwengolo 1912). Sant Fransez en deus savet teir Urz, met o-zeir, gant bennoz an Tad santel ar Pab.

Abaoe 700 vloaz, menezh ar genta Urz, leanezed an eil Urz. Breudeur ha C'hoarezed an Drede-Urz o deus atao bet ar vrasa garantez evit Pastor kenta an Iliz. « E kement lec'h e kavomp bugale sant Fransez, eme eur skrivagner, o gwelomp bepred doujus d'ar Pab. »

En hon amzer, siouaz ! e kred meur a gristen dizenti ouz an hini a zalc'h plas Hor Salver Jezuz-Krist, ouz an Aotronez Eskibien ha beleien. Dor an Drede-Urz n'eo ket digor d'an dud-se.

Ar re a fell d'ezo en em santelaat o heulia an deirvet Reolenn savet gant sant Fransez, a dle kaout dirak o spered komzou ar Mestr d'e ziskibien : « Neb ho selaou, am selaou me va-unan; neb ho t'spriz, am dispriz me va-unan »

Breudeur ha C'hoarezed an Drede-Urz a gredo eta ar pez a zo kredet en Iliz; int a zoujo gant levezenez d'ar Pab, d'an eskibien ha d'ar veleien; ha mar vez ret, war-lerc'h kant ha kant merzer eus an deir Urz, int a yelo betek skuilh o gwad evit o feiz.



*Naontekvet devez
a viz Du*

**Santez Elizabet a Hongri
Patronez an Drede-Urz
(1207 + 1231)**

Santelez an dud a ro d'imp eun damskeud eus santelez Doue. Azeulomp eta Doue, perc'henn ar santelez, Hen hag a deu anezan pep tra vat a gaver er bed. Goulennomp digantan m'hon devo nerz-kalon awalc'h da glask kaout lod en e vuhez; m'hon devo youl (volonté) awalc'h da glask lakaat hon buhez hen-veloc'h ouz buhez ar sent, skouer hon hini.

Arabat kredi e ve ret-holl, evit tizout ar santelez, en em bellaat a-grenn eus an dud a vev e kreiz ar bed. Nann, n'eus nemet lemm buhez ar sent hag e kavor (kavfer) e-touez an dud santel tud hag o deus bevet e-touez o c'herent hag o c'henvroiz. Dre ober eur sell war vuhez santez Elizabeth a Hongri, e welimp sklaer n'hon eus ket ezomm dilezel hon stad a vuhez evit bezan sent.

Gwelout a raïmp ar Santez oc'h en em virout diouz hoalerez (séduction) ar binvidigez hag o c'houzanv gant kalz a nerz-kalon poaniou a bep seurt.

I

Santez Elizabeth o trec'hi war hoalerez ar binvidigez

Evel hon Tad sant Fransez, santez Elizabeth he devoa eur garantez tener evit Jezus-Krist, adaleg he bugaleaj. N'helle ket distagan he daoulagad a-ziwar an Arnel Sakr. Astenn a rae he daouarn bihan war-du ar Mestr. Pa veze serret dor ar chapel, e selle dre doull an alc'houez.

Pa deue en iliz da zaoulinan dirak ar groaz, e leme diwar he fenn he c'hurunenn aour. D'an dud a gave abeg war ze : « Penaos e c'hellin me, emezi, dirak ma Salver kurunet gant spenn, mirout war ma fenn eur gurunenn aour ha perlez ? »

He fried, Loeiz, dug Thurenj, a oa e gwirionez eur prinz kristen. Karout a rae ar reizted (Justice). Pellaat a réas diouz e lez ha terri eus o c'hargou ar re a waske ar bobl hag oa kalet ouz ar beorien. Elizabeth hag hen en em gare hervez Doue hag en em roë an dorn evit kerzout primoc'h war hent ar santelez.

Plijout da Zoue e oa c'hoant bras an Santez. Sevel a rae da hanter-nnoz evit kemer lod e pedenn an iliz, pedi ha kastizan he c'horf. Dindan he dilhad kaer, e touge bepred eur gouriz reun; bep gwener, ha bemdeiz epad ar c'hoaraiz, e lakaë he skourjezan.

Bras e oa he c'harantez evit ar beorien. An dud reuzeudik a veze ar gwellan arru ganti. D'ar Yaou-Gamblid, e vode daouzek paour klanv-bras. Gwalc'hi a rae o zreid, ha pokat d'ezo, ha rei d'an dud keiz dilhad ha bara.

Da weener ar Groaz, ez ae, gwisket paour, d'en em lakaat e kreiz ar beorien evit klevout ar brezegenn.

E-pad eur gernez vras hag a badas hir amzer, e vage bemdeiz ouspenn 900 paour. Eun dervez ma voe bet skarzet an ti, ha ma ne chome mui ganti eur gwenneg nag eun tamm bara, e werzas he bizou aour hag an holl draou a-briz eus he zi, en o zouez he c'havell graet gant arc'hant.

Mont a rae hec'h unan da welout an dud klanv evit ober war o zro hep sellout ouz o stad truëk, ha plëal gant o ezommoù.

An dud lor (kakous) a gare, dreist an holl dud reuzeudik all. O vezan kavet unan gant ar c'hlenved-se, hag a save ar galon outan, e kemeras anezan en he c'hastell, e troc'has e vleo evit louzaoui e benn, gant kement a garantez ha ma vije bet mab d'ezi.

He fried a drugarekaë an Aotrou Doue da vezan roet d'ezan eur wreg seurt da Elizabeth. Laouen bras e veze o welout e wreg oc'h ober an aluzon. Gwelet en devoa *burzud ar bleuñioù* roz a gavas e mantell Elizabeth elec'h ar bara hag ar c'big a oa ganti evit ar beorien. E-kreiz ar goany edod neuze koulskoude.

Pa deue tud da lavarout d'ezan : « An dugez ho kaso da baour, » ar prinz a eilgerie (répondait) : « Lezit hi da ober he fenn; hec'h aluzonou a denno bennoz Doue warnomp. »

Karout a rin ma nesan, o ma Jezus. Klask a rin kerzout war roudou santez Elizabeth, pegwir hoc'h eus lavaret eo ar garantez e kenver an nesan gwellan arouez (signe) ar gristenien.

II

Santez Elizabeth e-kreiz he foaniou

Mouez Sant Bernard he devoa galvet poblou ha rouane da vont da ziframman al Lec'hioù santel a-dre daouarn digristen.

Hag ar bobl hag ar rouëd hag an duget a gerze etresek ar Reter, etresek ar Sav-Heol.

Pried Elizabeth en em rôas kroazour. Eur rann-galon e voe ar c'himiad. Fréalzet e oa ar santez koulskoude o c'houzout e labour e Loeiz evit Jezus.

Allas ! prestig goude e teuas d'ezi eur c'helou fromus. Marvet e oa he fried araok tizout an Douar-Santel.

War e dremenvan, Loeiz a gargas ar re a oa war e dro da gas e gomzou hag e gimiadou diwezan d'an dugez vat.

Da-heul ar gwall darvoud-man e teuas reou-all da gouezan war ar brinsez reuzeudik.

Adal ma tegouezas e Turenj ar c'helou eus maro an dug, e voe stlapet Elizabeth er-maez eus he c'hastell gant he breudeur-kaer gwarizius.

Hi, merc'h eur roue ha pried eun dug, a voe gwelet neuze hep eun ti paour zoken d'en em waskedi enep holl drougou ar goany. Gwelet e voe o tiskenn da Eisenach, eur c'hrouadur daou viz, ar yaouankan eus he bugale, ganti war he brec'h, hag an tri all o tont war-lerc'h, gwellan m'hellent krog an eil en egile. Ker Eisenac'h, da vihanan, hi hag a oa bet gronnet gant madoberou ar brinsez he dlefe bezan degemeret an dugez argaset, ha bezan roet d'ezi peadra da drec'hi war ar yenion hag an naon. Nann, Doue ne aotreas ket.

Pep dor a gavas serret ha pep kalon ivez, rak den ne gredas rei degemer d'ezi en e di, gant aon rak breudeur-kaer Elizabeth, deut da vezan ar vistri nevez; hag urzou striz o devoa embannet. Ne oa ket brao disenti outo. Ar c'halonou a voe sklaset gant an aon; ha skubet gant an ankounac'h envor ar madoberou niverus.

Santez Elizabeth he devoa lakaet he ano e Trede-Urz Sant Fransez. Deut e oa eviti an eur da gemer skouer diwar Tad an Urz.

Ebestel Jezus a voe frealzet war Venez Thabor; ar menez kalvar a weljont goude. Mar e fell d'imp bezan sent, bezomp e gortoz da vezan sammet gant kroazioù, kroazioù pounner, niverus. Gouzant evit Jezus, o vezan m'en deus Jezus dibabet ar boan evit e lod, setu an hent an ãeunan evit sevel betek Doue. Netra blijusoc'h eget karout Jezus, en eur c'houzant evitan hag e iliz.

Ha karout a ran me ar groaz ? Allas, aon am eus rak ar boan; rak ar yun; ne ran ket ma labour a stad evel ma tleje bezan graet.


O, pedomp santez Elizabeth ha goulennomp diganti nerz-kalon !


Pedenn. — « O Doue, c'houi hag hoc'h eus truez ouzimp, sklærijennit speredou ho pugale. Selaout pedennou santez Elisabeth, ha grit ma vimp dizeblant ouz plijadurioù touellus ar bed-man ha ma c'hellimp dre-ze tanvaat levenez frealzus an Nenv. »

— **Dezo.** — Dougen a rin gant nerz-kalon ha levenez ar groaz a fello da Zoue lakaat war ma diouskoaz.

— **Boked.** — « Santez vat goulennit ma vo gwalc'het hon encoù, ha teurvezit hon ambroug betek ar Baradoz. »

E.R.





Beleien d'an Iliz



N dra-man a dremene en eur barrez eus a greisteiz ar Frans. Ar c'hleier a zone glaz, rak ar barrez a oa e kaon; an aotrou person a oa maro. Holl dud ar barrez a oa diredet d'an iliz evit an anteramant; labourerien douar, deuet eus a bell, o lezel gant ar re goz ar garg eus ar vugale hag eus al loened.

Epad an ofiz, lidet gant aotrou person ar c'hanton, an holl a zo o spered o sonjal en hini maro. Lod a zene d'o spered ar gwirioneziou en doa prezeget d'ezo alies : « Ne gasimp ganeomp d'an Nenv nemet ar pez hor bezo roet. » — « Eun dra hepken a zo ret; savetei an ene. » Re all, enkrezet, a c'houlenne outo o-unan piou a chellfe derc'hel e blas; re all, enkrezet muioc'h c'hoaz, o doa aon na vije digaset d'ezo beleg all ebet, rak n'oa ket awalc'h a veleien en eskopti. Met chom hep beleg, nann ! Re druezus e vije an dra-se.

Hag an dud a zelle ouz eun den yaouank a oa er penn uhela eus an Iliz, en e zav e kichen e vamm.

An den yaouank-ze, Herri e hano, a oa bet kaset gant an Aotrou person d'ar C'hloerdi bihan, hag edo o vont da echui e studi. Met siouaz ! Brall a rae eur pennad a oa. Goude beza bet, er penn kenta, laouen bras hag eürus o sonjal e vije beleg eun deiz, oa deuet, abaoe bloaz, da veza dishenvel diouz kentoc'h. Eul lagad a droe ouz ar bed hag e blijadureziou, n'en doa mui plijadur, evel gwechall, o tont d'ar presbital, da gomz gant an Aotrou person. N'en doa ket c'hoaz lavaret e troe kein d'ar c'hloerdi bras, rak ne felle ket d'ezan ober re a boan d'e berson, d'e vadoberour.

Met breman, p'eo maro, Herri a zo libr. Ne vo den d'ober rebechou d'ezan. Mont a c'hello, evel ar re all, e kreiz trouz ar bed, tanva e lod eus plijadureziou an douar. Warc'hoaz e lavar d'e vamm, rak n'en deus ket kredet lavaret c'hoaz, hag ez aio da glask digeri hent evit en em gaout ive eun tu bennak evel ar re all.

Ar person kanton a gendalc'h gant an oferenn. Lennet en deus an Aviel, hag e tro ouz an dud a zo bodet en iliz. Goude beza graet, gant eur vouez glac'haret, meuleudi ar beleg maro, e kemer eun tamm ehan; tenval eo e benn, anat eo en deus traou poanius da lavaret d'ar barresioniz. Hag e gwirionez, traou poanius oant : « Eus a berz an aotrou 'n eskob am eus da lavaret d'eoc'h ne vo ket gallet rei d'eoc'h hiviziken eur beleg all da jom aman en ho parrez. N'eus ket a veleien awalc'h en eskopti. Me a vo aman betek warc'hoaz. Da zeiz eur e lavar an oferenn, ha da c'houde ne c'hello ket mui ar Zakramant beza dalc'het en hoc'h iliz. »

Ha pa vije bet lavaret d'ezo oant koundaonet d'ar maro, an dud n'o dije ket bet muioc'h a boan hag a spont. « An oferenn ziweza ! » An holl a lenve en iliz,, Beleg ebet mui ! Ha pa vo re glanv ? E vo ranket mont a-bell da glask eur beleg ! Da zul ne vo mui klevet mouez ar c'hleier... Ne vo mui beleg ebet en o c'hichen, d'o c'helenn, d'o frealzi, d'ober katekiz d'ar vugale ! Ha n'eo ket eun druez ! Perak n'eus ket muioc'h a veleien ?

Hag a-hont, demdost d'an aoter, Herri, an hini a oa bremaik o sevel e benn, a zo breman stouet, ha daelou a skuilh ive evel ar re all, ha muioc'h marteze, rak kompren a ra gwelloc'h stad truezus ar barrez, sellet a ra ouz taol ar gommunion. Rouez e vo hiviziken ar re a c'hello azeza outi eur wech bennak. Sellet a ra ouz ar gador-govez. Goullo e vo ato, hag ar bec'herien n'hellint ket dont da walc'hi o eneo e dour ar binijenn. Sellet a ra ouz ar gador-brezeg : mouez ebet hiviziken da gomz d'an dud eus an Aviel, da lavaret d'ezo evit petra emaint war an douar-man. An noz, an denvalijenn a gouezo war ar vro, hag a-benn dek vloaz aman, petra e vo an dud ? Henvel awalc'h ouz tud gouez an Afrik, rak ar re n'eman ket doujans Doue en o c'halon, a ziskenn izel, izel, siouaz ! ha buan c'hoaz.

Herri a zo skoet e galon. Sonjal a ra ennan e-unan ! Ha ma rafe an holl dud yaouank evel ma ran ? Ma 'z afent holl war o c'hiz ? Oh ! petra a c'hoarvezfe ! N'oun nemet eun digalon. Ne zonzan nemet ennon va-unan, em flijadur, tamm ebet er re all. Edon o vont da drei kein d'an Iliz am galve, da drei kein da Zoue a c'hoantae va c'haout evit e veleg. Nann, na rin ket eun dra ken divalo. Er bed-man, e tle beza tud da zervicha ar re all, d'ober vad d'ezo e pep giz. Me a vo unan eus ar re-ze. Ne vezin mui en etremar. Adaleg hirio eo roet va ger. Me a vo beleg, hag evel Hor Salver, me a boanio da brezeg an Aviel, da frealzi an dud paour, an dud klavy, an dud glac'haret; me a labouro d'en em zizober eus va flegou fall, da greski e santelez bemdez, evit beza eur beleg hervez kalon Jezuz. — Oh ! va Doue, roit d'in ho kras, va diwallit ha va harpit ! »

Echu an anteramant. Laket eo korf ar beleg en douar e kreiz e barresioniz. An dud a zistro d'ar ger, tenval o fenn. Herri a zo e-unan gant e vamm. Houman, o welet he mab trist, a lavar d'ezan : « Poan e peus. Herriz ? » — « Nann, mamm, eürus un. Breman e welan sklaer ez eus ezomm beleien, hag ho mab, gant sikour gras Doue, a vo beleg. » Ar vamm ne respontas ger, met an daelou, daelou a joa, a gargas he daoulagad.



LOURD, katekiz beo !

EIL DEVEZ WAR-NUGENT

Lourd hag an enor dleet da Zoue



EP pedenn, pep sonj eus ar spered, pep c'hoant eus ar galon savet war-du Doue, pep sin ar groaz graet warnomp hon-unan, en eur ger, pep merk a garantez, n'eus forz peger kuzet e vefe, a zo eun *enor* rôet da Zoue.

Lod a gred d'ezo ez eo a-walc'h enori Doue ha goulenn digantan e c'hrasou, pep-hini evitan e-unan, dre sonjou e spered ha dre venoziou e galon. Fazia a reont ; an den n'eo ket graet evit chom e-unan; bez' en deus eur familh hag ar familh-se a die, hi ivez, enori Doue; beva

a ra e-touez an dud all en eun emgleo hag a dle ivez eun enor da Zoue.

An enor dleet da Zoue ne dle ket eta beza rôet d'ezan gant an den, o veva e-unan hepken, met ivez, da zeveziou ha da euriou a zo, gant an dud o veva a-unan. An Iliz santel he deus sonjet e kement-se : hor pedi a ra ha roi a ra urz d'eomp d'en em voda da zeveziou ha da euriou merket ganti, e ilizou pe chapelioù pourchaset ganti, evit pedi e-kevret, evit kemer perz e-kevret e sakrifiz santel an oferenn, evit kana gant ar memes mouez meuleudiou an Aotrou Doue, evit klevout er memes amzer komzou Doue.

Oc'h ober an dra-se, an Iliz a ra bolontez Hor Salver Jezuz-Krist hag a denn warnomp e c'hrasou, rak Jezuz en deus lavaret : « El lec'h ma vo daou pe dri bodet em ano, me a vo en o zouez. » Petra 'vo eta, ma vezomp bodet; n'eo mui daou pe dri, met kant ha mil !

An Iliz he deus sonjet ivez en doare da bedi en ilizou. Pa beder, pep-hini en e du, e c'heller dibab e-touez pedennou an Iliz ar re a blij ar muia, met pa beder a-unan gant ar re-all, an holl a dle lavarout an hevelep pedennou.

An Iliz he deus laketa urz evel-se e pedennou ha lidou sakrifiz santel an oferenn, e pedennou ha lidou ar sakramanchou, e pedennou ha lidou savet evit kreski devosion, feiz, karantez, kontrision an dud fidel.

Erfin, an dud fidel ne c'hellont en em voda evit pedi a-unan nemet e tiez hag a vo din da veza, war eun dro, o ziez ha tiez an Doue a zo enno o chom; an tiez-se eo an ilizou hag ar cha-

pelioù benniget pe gonsakret, e lec'h ma vez kinniget sakrifiz santel an oferenn.

E Lourd, evel e lec'h all, he deus an Iliz reizet ar pedennou hag al lidou graet e-kevret. E penn al lidou graet en ilizou, e kaver atao an dour benniget. An dour a vez benniget gant an Iliz evit hor sikour da gas diwar hon tro an diaoul, a zo atao, hervez komzou sant Per, « o troi hag o tistroi en-dro d'eomp, evel eul leon kounnaret o klask e breiz da lonka. » An Iliz a lak an dour-se dindan hon daouarn. E gaout a reomp e toull doriou an ilizou, evit ma kemerimp anezan da gas kuit diouz hor spered ar sonjou ha n'eman ket o flas e ti an Aotrou Doue. E gas a c'hellomp ganeomp betek hon tiez evit en em servicha dioutan d'ober sin ar groaz en eur sevel hag en eur vont da gousket.

Mat, e Keo Lourd, lid an dour benniget a zo bet graet evit ar wech kenta gant Bernadet hec'h-unan. Setu aman pevaré.

D'an 11 a viz C'houevrer 1858, goude beza klevet Bernadet o konta he doa gwelet eun Itron vurzudus, meur a hini a voe nec'het, o klask gouzout a belec'h e teue an Itron-se, a-berz Doue pe a-berz an diaoul ? Petra a reas Bernadet ? Bernadet, o-raok distrei antronoz d'ar c'heo, a yeas da gerc'hat dour benniget d'an Iliz. P'en em ziskouezas an Itron wenn evit an eil gwech, ar bugel a dennas he bured diouz he godel, a dosteas ouz ar roc'h hag a stlapas var-du an Itron gaer an dour benniget, a gouzas berad ha berad d'an douar diwar skourrou ar roz-ki. Lavarout a-rae en hevelep amzer : « Ma teuit a-berz Doue, komzit. »

Met an Itron, hep kaozeal, a vouse'hoarze hag a salude... ar pezh n'en deus graet morse an diaoul, pa 'z eus bet strinket dour benniget outan !

Eun nebeud deveziou diwezatoc'h, an Itron a enore hec'h-unan an urz laketa gant an Iliz en he fedennou hag en he lidou, en eul lavarout da Vernadet : « It da lavarout d'ar veleien e tle beza savet aman eur chapel... Me a fell d'in e teufer aman e proesion.

Ar chapel, da lavarout eo, eul lec'h evit enori Doue; ar proesion, da lavarout eo, unan eus al lidou pourchaset ha reizet gant an Iliz. Arabat beza souezet o welout kement a chapelioù kaer e Lourd; arabat beza souezet kennebeut dirak ar proesionou kaer graet eno goude kreiz-deiz en enor d'ar sakramant meulet ra vezo ! ha diouz an noz en enor d'an Itron Varia : an eil hag eben ne reont nemet seveni ar goulenn graet gant ar Werc'hez ouz Bernadet.

War-lerc'h an enor rôet da Zoue, eman an enor rôet d'ar sent, mignonned Doue. Komzet hon eus dija diwar-benn an enoriou rôet e Lourd d'ar Werc'hez glorius Vari, da sant Jozef, da sant Per, da sant Yann. Ret e vefe c'hoaz gervel ar sent eman o skeudenn en-dro da leurenn ar Rozera, e-tal an deleziou pe en ilizou. E Lourd ez eus urz en holl enoriou-se : dreist en enor d'ar sent, dreist an enor d'ar Werc'hez glorius Vari, eman an enor da Zoue, eienenn pep santelez !

SKOUER

An dimezell Selestin Brun, eus Betting, e -kichen Sant-Avoid (Mozel)

Selstin Brun a oa toc'hor a-walc'h e-pad he yaouankiz. Dont a rae d'ezi aties klenvejou hag a veze tamallet d'ar remm.

Ret e vo d'ezi kouiskoude labourat start e-pad ar brezel evit derc'hel en tiegez plas he breudeur aet d'an arme, hag al labour he skuizas kalz. Da viz Ebrel 1919, an derzienn a zigasas poan d'ezi etre he diouskoaz hag en he dargreiz. Chom a ra daou-bleget. Da viz Gwengolo war-lerc'h, ar plac'h yaouank a zo kaset da Leysin, er Suis, e lec'h ma chom betek fin miz meur 1920. Distrôet d'ar gêr hep beza gwellaet, Selestin a zo laket en ospital Forbak, e lec'h ne wella ket kennebeut, en desped d'an holl louzeier. En em lakaat a ra da basaat : an derzienn, ar c'houezennnoz, an heug, ar boan-benn a ya atao war gresk, ha setu hi kaset da Arjel e-kichen Bezanson, da ospital ar medisin Bon.

Adalek an devez-se, ar paourkaez plac'h n'he deus ket kuitaet he gwele. Teir zizun goude beza digouezet en ospital, ar boan-benn a zo skrijus hag ar stomog a zistaol kement e ginniger d'ezan. War-dro ar 15 a viz Du, ar glanvourez n'eo ket evit padout gant ar boan. Sempla a ra, trevari a ra bep an amzer. Ret e oa e vije taget hec'h empenn. An holl vedisined galvet war he zro her c'hred hag a lavar n'eus da c'hortoz nemet ar maro hep-dale.

Selestin Brun a zigouez e Lourd gant pirc'hirined Bezanson d'ar 6 a viz Gwengolo 1922. Bez' he deus tregont fallaenn a-hed an hent. Diskennet eo e Lourd, hep na ouezas, ha chom a ra evel-se daou zevez hep kaout he spered mat. Soubet diou wech er pisinou, ne ra nemet sempla, heugi ha distaol.

D'an 8 a viz Gwengolo, goude kreiz-deiz, edod o lakat kravaz an dimezell Brun war blasenn ar Rozera evit prosesion ar Sakramant. Hanter kant mil pirc'hirin, evit senti ouz an urz rôet gant ar Werc'hez da Vernadet : « Me 'fell d'in e teufer aman e prosesion », hanter kant mil pirc'hirin, unanet er memes feiz e Doue, a gane meuleudi ar C'hrist dre ma tremene en o zouez, evel ma kerze gwechall var henchou ar Jude.

Pa welas ar Sakramant meulet ra vezo ! eus an Aoter o tont etrezek enni, Selestin a lavaras d'he moereb daoulinet en he c'hichen : « Tintin, ped mat, poent eo ! » hag e semplas eur wech muioc'h. E-pad ma rôe Jezuz e vennoz d'ezi, ar glanvourez, hep gouzout petra a rae, a save war he c'hravaz 'hag a goueze endro, evel maro. Hag en eun taol e teue d'ezi he spered mat; digeri a reas he daoulagad, evel pa vije o tihuna, ha lavarout a reas d'he moereb, goustadik : « Tintin, pare oun ! » Graet e oa ar burzud.

Pemzek deiz goude beza distrôet da Arjel, Selestin Brun en em lakeas hec'h-unan en hent war-du ti he zud, el Lorren, hag a deuas a benn eus ar veaj hir ha skuizus. Antronoz e oa krog el labour da c'houec'h eur diouz ar mintin e ti he c'herent.

Selestin Brun a zo chomet yac'h abaoe. Ar C'hrist en deus diskouezet en he c'henver e vez e-touez an dud en em vod evit e bedi.

Bleuniou Sant Fransez

XVIII^o PENNAD

(Kendalc'h)

War an douar noaz e kouske an darnvuian anezo;
Eun nebeudig, ar re gosan, dindano eun tamm kolo,
Eur maen yen, eun dornad keuneud, ha netra ken da blueg,
Ouz o gwele paour, koulskoude, e oant holl, sur mat, lorc'hek.
Eun doare ker pinijennus d'ezo d'en em gastizan
A rae d'an dud a-dost, a-bell, o c'harout hag o doujan.
Hag ar vrud eus o santelez, 'yac kement gand an avel
Ma teued eus Perouzia, ar Pab eno, e gastell,
Hag eus ar gêriadennou a-hed traonienn Spoleta,
A hep korn, a bep tiegez, da blenn Kêr-Varia.

Sede o tont, war o c'hezeg, o harnezioù o luc'han,
Gwiskaet kaer, hag int Aotrounez, tudjentil 'vid ar muian;
Bez 'ez eus konted, baroned, ambrouget gant marc'heien,
Kardinaled eus an Iliz, en o c'hichen eskibien;
Sede, breman, an Abaded, o c'hougoul rust e zanvez,
War o lerc'h kalz a gloareged, enno stad ha levenez.
Biskoaz, nann, ne voe bet gwelet, menec'h kement, unanet
'N eur vodadeg ker douëus, savet war an Izelded.
Hag e teued a bep rann-vro, henvel ouz pirc'hirined,
Da vanati Kêr-Varia, gand ranellder degaset.
Met pa welet Fransez, o mestr, gand e c'hened ker santel,
Savet 'vel dre vurzud gantan, eus kreiz eur bed ker diboaell,
Eun Urz ker kaer a venec'h, a vije en em gollet
Kalz anezo e dizursou, 'vid o lakaat, ken aezet,
Da heuilh, seder, ar Pastor Mat, Jezus-Krist Mab Doue,
An holl, a dride o c'halon, a wir garantez, neuze.

Eur wech graet ar Vodadeg-Veur,
Tad ha Rener an holl Vreudeur,
Sant Fransez, e tan e ine,
Leun e galon a levene,
A gomzas eus an Aviel,
Gant sikour ar Spered-Santel,
Dirak e holl venec'h laouen
O klevout eur seurt prezegenn.
Sede aman ar c'homzou dispar,
A zistagas 'ta, ken helavar :
« Rôet hon eus hor ger da Zoue,
« E labourimp 'vitan, noz-ha-de.
« Met Doue, e-unan, en deus d'imp lavaret,
« E vezo c'hoaz kalz mui larkoc'h, en hon andreu.
« Dale'homp eta start d'hon menoz,
« Ha dellèzomp kaout e vennoz.
« Plijadur ar bed-man, na ra nemet tremen,
« Ha poaniou an ifern a bado da-viken. »

Gant komzou ker kalonek, ar venec'h entanet,
 Evit ar sentidigez 'voe abred kennerzet;
 O c'harantez 'vid an Iliz, a yae kouls all war greski.
 Evel breudeur en em garent. Hag int trôet da bedi.
 Gant kalz muioc'h a galon, evid ar bec'herien.
 Ha ma renkont, gwech pe wech, dre ar pikou tremen

A-neuze e vezint barrek
 Da en em diskouez kalonek.
 Hag en o c'halon, a-vreman
 E teuy peb vertuz da vleunian.
 Pa vezo mat ganto ar bed,
 E c'houezint erbedi diouz red.

D'ar gwir furnez e talc'hint, da glanded o ine,
 Hag e revint e peoc'h a-unan gant Doue.
 E peoc'h kouls all gand o nesan,
 Evel-se e klaskint bevan;
 Da gas an erv da benn, goude,
 Peoc'h Doue 'n o c'halon ive.

Ha neuze, e c'hallint kaout eur gwir garantez
 E-kenver o Itron, Itron ar Baourentez.

Fransez, diwar e vuzellou,

A gouezas c'hoaz eur seurt komzou :

- « Gand eur garantez wirion, 'vid ar sentidigez,
- « Pa 'z oc'h unanet aman, e-kreiz al levenez,
- « E c'hourc'hemennan d'eoc'h holl, c'hoaz, bevan dizourisi,
- « Kuit da vezan ken nec'het gant petra da zibri.
- « Dre glask re, madou ar bed-man
- « 'Teuer da goll ar peb gwellan.
- « En em lakit hepken, m'hoc'h asped, da bedi,
- « Kanit gloar da Zoue, ha d'ezan meuleudi,
- « Hag e teuy, eus lein an Nenvou,
- « D'ho skoazella 'n hoc'h ezommou;
- « Bepred, kredit, Doue an Tad
- « A vo evidoc'h eun tad mat. »

(Da genderc'het).

*

Labour hor Misionerien

Pedit kalonek evit ar misionou ha retrejou prezeget gant hon
 Tadou. Goutennit ma tougint frouez puilh evit gloar Doue ha
 silvidigez an eneou :

MISIONOU :

Kommana. — Mision, eus ar 7 d'ar 25 a viz Du, gant an
 Tadou Barnabe, Fuljans hag Eujen.

RETREJOU :

Gouareg. — E kouent an Aogustinadezed (Augustines), eus ar
 17 d'an 20 a viz Du, gant an Tad Korantin.

An Oriant. — E kouent C'hoarezed Bihan ar re baour (Petites
 Soeurs des Pauvres), eus an 29 a viz Du d'an 8 a viz Kerzu, gant
 an Tad Loeiz-Mari.

GOULENNET DIGANT

an Tad Theodor ROUSSEL, 28, Avenue de la Marne, Lorient.
 C/c 46.28. Nantes.

Buhez burzudus eun douger-sammou MAZE TALBOT :
 0 fr. 50 — 0 fr. 65 dre ar post.

An Eured Kristen (*Kantig*) : 22 real ar c'hant, dre ar post.

Kantigou nevez : SAKRAMANT AN AOTER. — JEZUZ-KRIST ROUE.
 — An « DE PROFUNDIS », pedenn an Anaon. — Priz an tri
 assembles : 15 lur ar c'hant, dre ar post.

Manuel du Tiers-Ordre de Saint François , par le	<i>franco</i>
P. EUGÈNE D'OISY	41 fr.
Petit Manuel du Tiers-Ordre , par le P. Eug. d'OISY	4 fr. 45
La Parfaite Tertiaire de Saint François , par une	
Maitresse des novices	10 fr.
Saint François d'Assise , par le P. LÉOPOLD DE	
CHÉRANCÉ	13 fr. 00
Saint François d'Assise , par le P. LÉOPOLD; petite	
édition illustrée	2 fr. 25
Qu'est-ce que le Tiers-Ordre? par le P. EUGÈNE	0 fr. 45
Pourquoi entrer dans le Tiers-Ordre? par le P. EU-	
GÈNE	0 fr. 45
Gloires et Bienfaits du Tiers-Ordre , par le P. EU-	
GÈNE	0 fr. 45
Conditions d'efficacité du Tiers-Ordre , par E. BENOIT	0 fr. 45
La Visite canonique des Fraternités , par le P.	
AIMÉ	0 fr. 65
Sanctus Franciscus, sacerdotum servus	0 fr. 50
La Vie Chrétienne intégrale par le Tiers-Ordre	
Franciscain , par P. JEAN DE LA CROIX	0 fr. 65
Le Tiers-Ordre et le Prêtre , par le P. AIMÉ	0 fr. 65
Vie de Saint Yves de Bretagne, prêtre du Tiers-	
Ordre , par l'abbé ESNAULT	0 fr. 75
Pratique des trois Vertus Séraphiques de Pauvreté,	
d'Humilité et de Mortification , (pour les prêtres	
tertiaires), par l'abbé ESNAULT	3 fr. 65
Capucins Missionnaires. (Missions Françaises).	
Très nombreuses Illustrations	6 fr. 50
Capucins Français , par le P. EUGÈNE DE SAINT-	
CHAMOND	2 fr. 75
Ma Vocation , par le P.A. de M.	2 fr. 70
René Blériot, Frère Eleuthère capucin , par le P.	
PAULIN	4 fr. 50



Cum permissu Superiorum.

Le Gérant : G. LE BAYON.

Moulez AR BAYON-ROGER, 13, Tachenn Alsace-Lorraine, en Oriant.

Ra vezo meulet Jezuz-Krist !

Bepred.



Kenteliou Sant Fransez

Kelaouenn vizek gant Skeudennou



TAOLENN AR MIZ

Gouelioù ar miz.....	
D'hol lennerien.....	189
Mamm Santez Tereza ar mabig Jezuz.....	190
Kelennadur diwar-benn an Drede-Urz.....	191
Sonjit. ervat.....	192
Santez Elizabet a Hongri. — Burzud an den lovr.....	193
An « Dies iræ ».....	194
Gouel ar Werc'hez krouet dinamm.....	195
Keleier.....	197
Lourd hag an umilite hag ar glanded.....	198
Bleuniou Sant Fransez (XVIII ^e Pennad).....	201
Ar Vreuriezh da zikour sevel beleien.....	203
Labour hor Misionerien.....	204
Taolenn ar bloaz 1928.....	205
Taolit evez.....	207

Rédaction et Administration

P. Théodore ROUSSEL

F.M. Capucin

28, Avenue de la Marne, LORIENT

C/c. : 46.28 NANTES

Priz : daou skoued

P. LOUIS MARIE

brezoneg yac'h. N'eo ket ret beza eus an Drede-Urz evit lenn ar « C'henteliou »; pep kristen pe gristenez a gavo enno kalz a draou mat da anaout ha da ober evit en em santelaat.

Ha breman petra da ober ?

Deuet eo ar mare da zigas ar c'houmananchou evit ar bloaz 1929. Daoust d'ar paper da veza ker, daoust da zispignou ar vouladur, ne vo ket kresket priz ar gelaouenn : **daou skoed ar bloaz** eta pep kounanant.

Ar gwella doare hag an hini a goust an nebeuta da zigas an arc'hant, eo ar « **Mandat-carte rose (Chèque Postal)** ».

Ne goust nemet **eiz gwenneg**, n'eus forz pegement a vez kaset. Goulenn digant ar bureo-post pe digant ar « facteur » petra a zo da skriva warnan. Na c'hortozit ket gouelioù an Nedeleg hag an deiz kenta eus ar bloaz; re a bres labour a vez neuze er bureo-post.

Adres : **P. Théodore ROUSSEL, 28, Avenue de la Marne, Lorient. — C/c. Nantes 46.28**

Fizians hon eus e chomo ganeomp evit 1929 holl lennerien 1928 hag hon do ouspenn eun niver bras ar re nevez.

Eun nebeut niverennoù hon eus c'hoaz a bep miz eus an daou vloaz 1927 ha 1928. Alia a reomp hol lennerien nevez d'o c'houlenn holl; evit 2 skoed hepken e c'hellint kaout pep bloaveziad.

Trugarez eur wech c'hoaz d'an holl, ken skrivagnerien ken lennerien, hag holl d'al labour evit skigna muioc'h-mui « **Kenteliou Sant Fransez** ».

AR RENER.



Mamm santez Tereza ar mabig Jezuz

A-bell 'zo n'oa ket bet gwelet sant pe santez ken enoret ha santez Tereza ar Mabig Jezuz. Brudet eo hec'h ano dre ar bed holl; kaout a reer he skeudennou en holl ilizou. Met bez' ez eus eun dra ha n'eo ket anavezet hag a ra mil plijadur da vugale sant Fransez : he mamm a oa eus an Drede-Urz.

Setu aman ar pezh a lavar Leoni, leanez e Kaen, ha c'hoar da santez Tereza :

« Hor Mamm a yae bemdez d'an oferenn genta. Evel ma oa « eus an Drede-Urz, e heulie ar Reolenn gant ar brasa aked. « Kaout a rae an tu d'ober meur a binijenn, ha dreist-holl pa veze « o tibri. Mont a rae alies da zaoulina ouz an Daol-Sakr. Mat « e oa evit he bugale, met deski a rae d'ezo, a-raok pep tra, ar « vertuziou kristen. »

Ma 'z eo bet santez Tereza ar Mabig Jezuz didrouk evel eur bugel, entanet a garantez evit Doue evel eun ael, n'ankounac'hait ket, lennerien ger, e voe he mamm eus an Drede-Urz.



KOUMENT HA KRAOU GRECHIO

**Kelennadur diwar-benn an Drede-Urz
AR VREURIEZ**

EIL PENNAD

Ar gwragez dimezet n'hellont ket beza digemeret en Drede-Urz, hep gouiziegez hag asant o fried, nemet ma ve kavet mat a-wechou ober a-hend-all, gant ali an tad kofesour.



Ar vaouez a zo dindan galloud he goaz, ha setu perak eo dao d'ezi kaout asant he fried evit mont en Drede-Urz. **C'houi a vo dindan galloud ho koaz, hag hen a vo ho mestr**, a lavar an Aotrou Doue da Eva goude he fec'hed (*Gen. III, 16*). Ar vaouez, a dra-sur, ne dle ket dilezel labour ha bugale war zigarez he deus pedennoù da lavarout pe eman ar mare da vont d'eur vodadeg bennak. Da genta deveriou ar stad, ha da-c'houde an devoisionou.

...Nemet ma ve kavet mat a-wechou ober a-hend-all gant ali an tad kofesour.

Dre ma 'z eus en hon amzer kalz gwazed hep feiz na lezenn, dre na zouger mui ar skapular a-ziavaez, dre m'eo berr pedennoù ar Reolenn; ha ne harz tamm ebet an Drede-Urz da virout holl deveriou a stad ha ma sikour kentoc'h d'o-heulia ervat, e c'heller a-wechou digemer eur vaouez en Drede-Urz hep asant he fried, dreist pep tra, ma ne fell ket d'ezan he gwelout e breuriez ebet.

Ar gwragez dimezet n'hellont ket beza digemeret hep gouiziegez o fried. Met netra ne vir d'o digemer gant o asant. Santez Elizabet a Hongri, santez Elizabet a Bortugal, santez Delfina a veve gant o fried, daoust d'ezo da heulia Reolenn an Drede-Urz. Mamm ha pried Loeiz XIV a voe o-diu eus an Drede-Urz hag e penn breuriez ar C'hoarezed e Pariz. Gouzout a ra an holl eo niverus breman e kêr ha war ar maez ar gwragez a zoug skapular sant Fransez. Mont en Drede-Urz ha ehom hep dimezi a zo mat. Gwelloc'h eo ar stad a werc'hted eget stad ar briedelez. *An hini a zimez e verc'h, a ra mat, eme sant*

Paol; an hini n'he dimez ket, a ra gwelloc'h (I Cor. VII. 38). Met n'it ket da serra ouz an dud dimezet, gwazed pe verc'hed, dor an Drede-Urz, na lamit ket ganto he madou bras, rak evito ivez eo bet savet.

Na vezit na re striz na re laosk evit digemer an dud dimezet en Drede-Urz. Na sellit ket ouz ar renk nag ouz an danvez :

Gwelloc'h karantez 'leiz an dorn

Eget aour melen 'leiz ar forn.

Tud a renk izel kerkouls ha tud a renk uhel a c'hell rei o ano d'an Drede-Urz, gant ma vint fur ha c'hoant gwirion d'ezo da greski e santelez.

Unan eus deveriou brasa ar vamm, ar brasa kentoc'h, eo sevel mat he bugale, lakaat en o sperejou ar c'hredennou kristen hag en o c'halonou karantez an Aotrou Doue. Nag a c'hrasou a gaver e Reolenn an Drede-Urz evit ober al labour-se ! Lakit eta en em gav er Vreuriezh santel-se, nann unan na diou vamm gristen, met ugent, daou-ugent eus an hevelep parrez, setu al lodenn vrasa eus ar vugale savet mat. Klask a reer breman sevel e pep parrez breuriezh ar mammou kristen. Netra gwelloc'h ; ra roio ar mammou o ano da Drede-Urz sant Fransez, ha setu aze eur vreuriezh mammou kristen eus ar re wella.



Sonjit ervat

Diwar-benn ar pempet goulen eus ar Bater :

Pardonit d'eomp hon ofansour, evel ma pardonomp d'ar re o deus hon offanset.

I. — SONJIT ERVAT : ni holl a zo pec'herien, holl hon eus dle da baeñ da justiz Doue. Met piou eo a baeñ hon dle, peogwir n'eman ket e galloud an den hen ober ? Doue, ha Doue hepken, eo a c'hell pardoni d'eomp hon offansou, evel ma pedomp anezan da ober dre ar goulen-se eus ar Bater.

II. — SONJIT ERVAT : goulen a reomp digant Doue ar pardon eus hor pec'hejou, rak ar pec'hed eo ar brasa droug a c'hell digouezout warnomp. Eur pec'her n'eman ket e stad da bedi. Penaos e kredfe lavarout da Zoue : roit d'eomp hor bara pemdeziek, ho rouantelez deuet d'eomp, ho polontez bezet graet ?

Gwelit peger bras droug eo ar pec'hed ha goulenit pardon eus ho pec'hejou gant fizians, rak an Hini a lavar d'eoc'h goulen pardon, a ziskouez en deus c'hoant d'ho pardoni.

III. — SONJIT ERVAT : Doue ne c'houlenn ket gwelloc'h eget ho pardoni, met gant ma pardonoc'h ivez d'ho nesa. Doue a ra d'eomp ar pezh a reomp d'ar re-all. Ma pardonit, Doue ivez ho pardono.

Evel ma welit, ho silvidigez a zo en ho kalloud. Diwallit mat dreist-holl, ma ne fell ket d'eoc'h pardoni d'ar re-all, da c'houlenn digant Doue ober evidoc'h evel ma rit d'ho nesa, chom hep ho pardoni.

Santez Elizabet a Hongri Patronez ha skouer C'hoarezed an Drede-Urz



Eun dervez e voe digaset eun den lor da gastell santez Elizabet. Ar brinsez vadelezeus a wele has hag a netaas d'ezan e c'houliou. Gwelloc'h c'hoaz : ker bras truez he doe outan m'hel lakeas en he gwele.

Konnaret o welout kement-se, he mamm a redas da gavout he mab, an dug Loeiz, hag a lavaras d'ezan : « Sell, emezi, an dra euzus graet gant da bried Elizabet, lakaat tud lor ez kwele ! a-dra-sur, e fell d'ez rei d'it klenved al lorgnez evit kas ac'hanout da vered. »

An dug Loeiz trubuilhet ha strafuilhet, e galon o lammout en e greiz, a yeas eun d'e wele. Sevel a reas al linseliou. Met o burzud ! e-lec'h eun den lor, ne was nemet Jezuz krusifiet.

En eur zistrei neuze davet e bried santel, e lavaras d'ez : « Dalc'hit, mar kirit, da lakaat tud evel hennez en hor gwele. Gwaz d'an neb ho miro d'ober traou ker karantezus ha ker kristen ! »



Breudeur ha C'hoarezed an Drede-Urz, grit oberou a garantez rak « eürus, eme Hor Salver, an dud o deus truez ouz an nesa. »

1) « Gouelit, eme sant Paol, gant ar re a skuilh daërou », da lavarout eo, kemerit truez ouz an dud glac'haret hag ankeniet, ha selaouit ouz Jezuz, pa lavare ar c'homzou-man : « Truez an eus ouz ar bobl. »

2) N'en em ziskouezit ket rust e-kenver an dud gloazet ha poaniet.

3) Deskit dougen gant kalon an diaesamant a reont d'eoc'h ha n'em em glemmit ket eus ar boan a gemerit ganto.

4) Gwelloc'h eo mont da ginnig sikour d'ezo eget o lezel da zont da c'houlenn sikour diganeoc'h.

5) Bezit sonj, dreist-holl, da nerza an dud kaez-se, o komz d'ezo eus karantez an Aotrou Doue.

An "Dies iræ"

trôet e brezoneg

War don : *Piou lavarô pebez glac'har !*

1
Ô deiz spontus ! deiz a gonnar !
Ma vo devet bro an Douar,
Vel ma lavar, leun a sklerded,
Skridou gwirion ar Brofeted.

2
Pebez spouron en em gavo,
Dre ar bed holl, d'an eur c'haro,
Ma vo demdost ar Barner striz,
E pep kalon, da furchal piz !

3
Son an drompilh a zihuno,
En o beziou, ar re varo,
Hag an holl dud a ranko mont
Dirag an tron, da renta kont.

4
An Ankou kriz, an traou krouet
A vo meurbet sabatuët,
Pa savo beo pep den, allas !
Evit respont d'ar Barner bras.

5
Eur pikol leor vo digaset,
Eur pikol leor vo digoret,
Skrivet ennan kement zo red,
Vit ma vezo barnet ar bed.

6
Hag ar Barner pa 'c'h azezo,
Pep tra kuzet a ziskuilho;
Ne vezo ket eur falloni
Hag a c'hello chom hep kasti.

7
Neuze, pec'her, petra larin ?
D'am skoazella piou a c'halvin ?
Pa n'hello ket chom hep krena
Memes an den ar zantela !

8
Roue a c'hloar galloudus-holl,
C'houi hag a saly, hep tamm digoll,
Rôit d'in-me silvidigez,
O feunteun builh ar vadelez !

9
Ho pezet sonj, Jezuz, — c'houi oar,
Oc'h bet vidoun, war an douar;
N'am c'hollit ket, Mestr truezus,
Pa zigoro an deiz spontus.

10
O vont d'am c'hlask, oc'h 'n em skui-
Hag azeza hoc'h eus ranket; [zet
Vit va frena, oc'h bet er groaz :
N'hellit ket koll poaniou ken bras.

11
Barner leal, spont ar pec'her,
Pardounit d'in. o va Salver,
Arôg an deiz ma vo rentet
Da bep hini, diouz m'en do grêt.

12
D'ar Vadalen c'houi bardonas,
Pedenn al laer c'houi selaouas :
Rak-se, d'am zro, me a esper
Ho po truez ouzin pec'her.

13
Va fedennou zo didalvez,
Met c'houi zo leun a vadelez;
Grit, me ho ped, o va Jezus,
Na zevin ket an tan padus.

14
Grit ma vezin gand an denved,
N'am meskit ket gand ar bouc'hed;
Grit ma c'hellin, o Pastor mat,
Er c'hostez dehou, en em lakaat !

15
Pa vo barnet an dud direiz
Ha d'an tan ruz stlapet da breiz,
Neuze, galvit ho pugel kêz
Gand an holl sent hag an êlez.

16
Va zal a-stok ouz an douar,
Ha va c'halon leun a c'hlac'har,
O, me ho ped, 'n eur vouela druz,
Grit ma c'hellin mervel eürus !

17
O deiz daelou, deiz c'houero-du,
Ma tle sevel, eus e ludu,
Vit mont d'ar Varn, an den pec'her !
Espernit-hen, o va Salver !

18
Jezus, Aotrou leun a druez,
Reit hep dale, d'an Anaon kêz,
Peoc'h ha diskui, vel ma c'hortoz,
E kreiz dudi ar baradoz ! —

Amen.
BASTIEN.



*Eizvet devez
a viz Kerzu*

Gouel ar Werc'hez krouët dinamm

Azeulomp Doue an Tad o tibab mamm
e vab. Nag e tlee-beza glan a bep pe-
c'hed ar hini a dlee genel eur Mab hag
a vefe Salver ar bed, hag a drec'hfe
war ar pec'hed ! — Azeulomp eil per-
son an Drinded, deut da gemer eur
c'horf, frouez binniget korf eur wer-
c'hez.

Azeulomp ar Spered Santel, pried glan
ar Werc'hez dinamm, o sklaerijenni Jo-
zeb, tad mager mab Doue.

Prederiomp war grouidigez dinamm ar Werc'hez;
sellomp pegen devot eo Urz sant Fransez d'ar Wer-
c'hez krouët hep pec'hed, ha gwelomp ar pez-hon
eus graet evit he enori.

I

Krouidigez dinamm ar Werc'hez Vari

Kement den a deu war an douar, a ve labezet e ene
gant pec'hed an tad kenta Adam.

Ar Werc'hez a dlee beza Mamm Doue, na oa ket graet al
lezenn-ze eviti; genel a réas hep pec'hed ebet war he ene.
Glan e voe adalek penn kenta he buhez.

Ret eo da bep kristen kredi an dra-ze.

« Hi a flastro d'it da benn » eme Doue d'an naer goude pec'hed
Adam hag Eva.

Ene ar vaouez bet dibabet da veza mamm ar Salver, ne dleë,
da vare ebet, nag e stumm ebet, beza dindan galloud an diaoul,
fad ar pec'her.

Ar re all a vo dantet gant an naer villiget, met mamm Doue ne
vo ket.

E pajennou diweza ar Viñi, Sant Yann a zenevell (raconte)
engannou ha stourmou Satan hag a ziskouez Mari trec'h d'ezan :
« Eur burzud bras a zo bet gwelet en neny; eur plac'h gwisket gant
bannou skedus an heol; al loar dindan he zreid; ha war he fenn
eur gurunenn a zaouzek steredenn.

Hogen sede eun aerouant bras, hag ouz e heulh erevent (dra-

gons) a vil vern, o sevel da lonka ar bugel. Met Doue a ziwall ar vaouez m'en devoa an aerouant droug outi. Neuze e tisonkas an aerouant eur bern loustoni, met an douar a zigoras hag a lonkas al loustoniou, hag ar vaouez a nijas d'ar gouelec'h (désert).

E penn kenta hag e penn diweza al Levr santel, e levr ar c'henelvez (genèse) hag en Apocalips, e kavomp meneg eus ar vaouez santel a voe trec'h d'an diaoul; er penn kenta, eman evel eul luc'hedenn a c'hoanag (espérance), hag er penn diweza, evel eun arouez (signe) a drec'h.

II

Devosion Urz sant Fransez da Vari krouët dinamm.

Hervez sant Bonaventura, hon tad saut Fransez, hag en devoa diazezet e urz en iliz Itron-Varia an Aelez (Sainte-Marie des Anges), hag a varvas eno, a c'houre'hemennas e vefe lavaret, bep sadorn, eun oferenn gant lid bras en enor d'ar Werc'hez krouët dinamm. Sellout a rae eta evel degemeret en e urz, menoz ar gristenien diwarbenn krouidigez dinamm ar Werc'hez Mari.

Miret eo bet dalc'hmat kelennadurez sant Fransez. Mibien sant Fransez a embannas gant gred (zèle), er skoliou uhel hag en ilizou, e oa bet konsevet hep pec'hed Mamm hor Salver Jezus.

Pa voe diskleriet an dra-ze gant Pi IX evel gwirionez ret da gredi, e voe laouenn an holl gristenien.

Evurus e voe ivez, na petra 'ta, bugale sant Fransez, pa ginigas mistri bras an Urz liliennou d'ar Werc'hez e testeni a wir garantez.

III

Petra am eus graet, me, da enori ar Werc'hez krouët dinamm.

Daoust hag he fedet am eus gant fizians, evel ma gwir vamm an Nenv ? An Urz mac'h oun me ennan, a zo gwestlet d'ez. Ma mamm eo; hag eman er baradoz e kichen he Mab. Ha pedi a ra eno, hag he fedenn a vez selaouët dalc'hmat gant Jezus. Gouzout a ran kement-se ha ne bedan ket awalc'h ma mamm.

Daoust ha kemer a ran plijadur oc'h embann gloar Mari ? Neb a gano meulodiou ar Werc'hez n'ay ket da goll. O ya ! labourat a rin eus ma gwella da lakaat an holl d'anavezout ha da garout ar vamm vat-se.

Danevell. — Duns Skot, douëniour (théologien) brudet eus Urh sant Fransez, a brezege dek vloaz, oa diwarbenn ar Werc'hez krouët dinamm, e skol-veur Oxford; ma veze graet anezan Doktor Maria. Galvet e voe da Baris, da ziskleria e geennadurez dirak daou c'hant doktor, bras o gouiziegezh ha bras o brud.

Hag e réas Duns Skot ar bedenn-man d'ar Werc'hez : « Teurvezit ma lezel d'ho tifenn ha rei d'in nerz d'hen ober ervat. »

An delwenn (statue) ma oa o pedi dirazi a blegas he fenn evit diskouez e oa selaouët e c'houlenn. Diwar an deiz-se penn an delwenn a chomas peget.

Pa deuas e dro da gaozeal, Duns Skot a zispennas daou c'hant lavarenn ar re a oa dirazan, gant harp ar skritur sakr, diskleriaduriou ar c'honsilou ha testeni an Tadou. Ma chomas boemet an

doktored all. Neuze e tisleugas e geennadurez diwarbenn dinammded ar Werc'hez, en eun doare ken fraez ma ne gavas nikun netra da respont.

Kannaded ar Pab a lavaras e oa gantan ar wirionez.

Evit tec'hel dirak meuleudiou ar selaouerien, ar manac'h izelek (humble) a yeas d'e gambrig.

Pedenn. — Doue, c'houi hag hoc'h eus graet d'ar Werc'hez beza hep pec'hed abaoe penn kenta he buhez, evit m'en defe ho Mab ur Vamm glan awalc'h dioutan; c'houi hag hoc'h eus en abeg d'an dellidou (mérites) a dleë ho Mab gounit dre e varo — miret an Itron Varia diouz an distera saotradur, roit d'imp, war bedenn hor Mamm garet ar c'hras da vont davedoc'h, gwale'het hon ene a bep pec'hed.

Dezo. — Lavarout a rin alies ar bedenn-man : « O Mari konsevet hep pec'hed, pedit evidomp-ni hag en em erbed ouzoc'h. » evit gounit an induljansou. Klask a rin lakaat an dud a vo war o zremenvan da lavarout ar c'homzou-se

Boked. — « Neb a embanno klod (gloire) ar Werc'hez en devezo ar vuhez peurbadus. »

E.R.



KELEIER

An Tad Mari-Anton, kapusin, misioner dispar, marvet e Toulouse er bloaz 1907, en deus rôet kement a desteni eus e c'halloud dirak Doue, ma labourer a-vreman d'e lakaat war roll ar Sent.

**

Breur Konrad a Bfarzham, eus Kapsined Bavier, marvet e-giz eur sant, a zo bet diskleriet Den-enorus d'ar 14 a viz Eost, gant an Tad santel ar Pab Pi XI. Kredi a reer e vo lakaet hep-dale war an Aoteriou.

**

Marc'harit Sinkler, eus Urz santez Klara, marvet d'he 25 vloaz, Ganet e kêr Edinbourg (Bro-Skos), eus kerent paour a vadou santez Tereza ar Mabig Jezuz.

Ganet e kêr Edinbourg (Bro-Skos), eus kerent paour a vadou ar bed, Marc'harit he deus gounezet he bara evel micherouez betek an oad a 23 bloaz, ma yeas d'ar gouent. He buhez a voe henvel ouz hini pep plac'h yaouank kristen. N'he deus graet burzud ebet; met unanet e veze atao a spered hag a galon gant an Aotrou Doue. Ha setu abaoe he maro, milierou ha milierou a dud eus a bep bro a ziskleri o deus bet grasou dre he sikour. Bez' e vo, hep mar, eun deiz e-touez ar Sentezed eus an eil Urz.



LOURD, katekiz beo !

TREDE DEVEZ WAR-NUGENT

Lourd hag an umilite hag ar glanded

Rôet hon eus eun taol-lagad war ar vertuziou a zo ret da gaout evit ober hon deveriou e-kêver Doue, ar vertuziou-se a vez anvet « **teologal** », da lavarout eo, **divin**. Bez' ez eus vertuziou all ha n'int ket divin dre natur, met dre an doare ma lak ar c'hristen anezo en e galon hag en e oberou.

Mari he deus bet an holl vertuziou-se en eun doare dispar; n'omp ket eta evit lezel da dremen he miz hep henvel, da vihana, unan bennak anezo, nag hep sonjal enno ouz sklêrienn Lourd.

**

Setu aman, mar kirit, **an umilite**. E Lourd e vez kanet ar « *Magnificat* » alies. Hogen, an holl gristenien her goar, ar c'hantig-se a zo bet savet ha kanet evit ar wech kenta gant ar Werc'hez glorius Vari, pa 'z eas da welout he c'hiniterv Elizabet, mamm sant Yann Vadezour. Bez' ez eo eur c'han a drugarez. Mari a drugareka Doue ennan da veza ha dibabet e-touez an holl gwrazez; met perak ez eo bet choazet war he meno ? Abalamour d'he meritou hec'h-unan ? Ah ! nann, pell ac'hano : he « *izelded* », emezi, eo he deus tennet warni sellou an Aotrou Doue « *sevet ar re a zo izel* », ha « *skuilha e vadoberou war an dud o deus naon*. »

a blij d'ezan
war an dud o deus naon. »

Hed-ha-hed he buhez, ni a wel Mari umbl evel-se. Nag a vammou all en he lec'h o dije klasket en em sevel e spered tud o amzer, m'en dije o mab, evel Jezuz, pareet tud klanv ha resusitet tud varo ! Pell ac'hano, Mari a chom kuzet zoken e-pad m'eman he Mab divin o prezek e Aviel. Hag heman a seblant ober pep tra evit derc'hel e vamm er stad-se a blij kement d'ezan; pa gomz outi pe anezi, n'eo ket evit he sevel dreist ar re all; ar c'hontrol an hini eo : « Perak e klaskit ac'hanon ? Petra fell d'eoc'h da gaout diganen ? va eur n'eo ket deuet c'hoaz.... Maouez, setu aze ho mab. » Ar c'homzou-ze, lavaret gant Jezuz d'e vamm, a seblant beza rust eun tammik.

Evel he Mab, Mari ne sell gant plijadur nemet ouz an dud umbl. Perak he deus hi dibabet Bernadet ? Dre ma oa houman eur bugel umbl, diwezat evit he oad, eus eur ouenn dud paour,

dereat en he dilhad hag en he c'hiziou. Ma ne vije ket bet ken umbl ha ma oa, Bernadet n'he dije ket sentet ouz Mari, evit pellaat diouti, diwar an devez-kenta, dispriz ha goaperez an dud.

Bernadet a chomas umbl atao. Pa veze goulennet diganti goude m'he doa gwelet ar Werc'hez, lakaat he donn war traou devot evit o santelaat, ar bugel a responte en eur vouse'hoarzin : « Me n'ouzon ket benniga. »

Meur a hini, en he lec'h, a vije bet chomet e Lourd evit gwelout hag evit beza gwelet : *evit gwelout ar burzudou graet gant Mari* — hag « *evit beza gwelet* » : touellet gant an dud d'en em ziskouez ha da genta donezonou kaer an Nenvou evel traou graet ganto, pa n'oant nemet graet evito !

Netra ne lavar d'eomp e oa bet touellet Bernadet evel-se. Ma oa bet touellet, he merit a zo bras da veza trec'het an dentasion, ha da veza goulennet lakaat hec'h umilite e goudor eur gouent.

An umilite a zo hepred enoret e Lourd. Komzet hon eus eus karantez ar re a entent ouz ar glanvourien : ret eo d'eomp ivez meuli o umilite. Merit a zo, red eo hen anzav, merit a zo o servicha ar re all, — o ankouaat ez oar boazet da c'houre'hemenn evit en em lakaat da senti — o chom hep gouzout e' oad servichet dec'h evit en em lakaat da zervicha hirio.

Hogen, kement-se a vez gwelet bemdeiz e Lourd. Ar c'hlanvour, an den mac'hagnet, n'eus forz peger paour e vefent, o deus gwir da veza servichet gant ar re o deus kemeret ar garg anezo. Ar re-man marteze a zo eus eun diegez enoret, pinvidik, brudet : aman an dra-se a chom kuzet hag an dud-se a zigouez ganto servicha o servicherien.

**

Eur vertuz all, hag a blijas da Vari e Bernadet e voe **glanded he c'halon**. « *Eurus ar re o deus eur galon c'hlan, rak gwelout a raint Doue*. » Ar Werc'hez glorius Vari a rôas d'ar bugel devot evel eun tanva eus an eürusted-se : Bernadet ne die gwelout Doue nemet er baradoz, gwelet a reas Mari war an douar.

Glanded Bernadett he doa talvezet d'ezi da welout Mari; Mari, d'he zro, a ziuallas glanded Bernadet. Goude beza gwelet eur vaouez eus an Nenv, penaos he dije gallet Bernadet saotri he daoulagad gant krouadurien an douar ?... Penaos he dije gallet ranna he c'halon etre traou ar bed all ha traou ar bed-man ?... Biskoaz n'eus bet kaoz ebet ganti da zimezi. Den ne voe souezet eta o welout anezi o kuitaat ar bed evit en em rei a-bez da Zoue ha da Vari : « **Eurus ar c'halonou glan !** »

An diou vertuz-se, an umilite ha glanded ar galon, a die beza vertuziou an hill gristenien. Den ebet ne yelo d'ar baradoz hep ar vertuziou-se. Goulennomp anezo digant Doue, dre Itron Varia Lourd.

**

SKOUER

C'hoar sant Fransez eus Urz leanezed sant Fransez eus Monpezat (Lot-et-Garonne), superiores ospital Tournon en Ajene.

D'ar sadorn, 13 a viz Gwengolo 1924, al leanez sant Fransez a zo bet pareet e Lourd eus klenved ar skevent hag al livenn-gein. A dra-sur, al leanez he doa lakaet he fizians en. Hini a zo galvet Esperans an dud en disesper. Met, a-boan ma oa digouezet e Lourd, a-boan m'he doa lezet he daoulagad da bara war skeudenn wenn an Itron Varia, ma na sonjas mui nemet plega da volontez Doue, kemerout pasianted ha beza umbl. — « Ar pezh a garfot, evel a garfot, o va Doue ! »

Pa welas e oa pare, Ch'hoar sant Fransez ne ouie ket penaos diskouez hec'h anaoudegez vat evit eur c'hras ker kaer. Chom a rae umbl ha modest. He sioulder a skede muioc'h, dre ma tiskoueze an diou leanez a oa ganti eul levenez hep he far. Evel ma c'houlenned diganti hag esperans he doa da barea, C'hoar sant Fransez a respontas : « Da genta, n'em boa c'hoant ebet da c'houlenn va fareans, dre ma n'oan ket din eus eun hevelep gras, hag e plegen da volontez Doue. Met war-lerc'h an urz bet digant va superiores, me am eus pedet a greiz kalon ! »

Setu aman penaos eo bet selaouet pedenn servicherez Doue. C'hoar sant Fransez a oa bet atao yac'h betek miz mae 1923, pa santas poan en he livenn-gein. Hep-dale, medisin ar gouent hag an Aotrou Rudell, medisin e Ajen, a welas e oa krignet he c'hostennou hag a lakeas anezi en eur gorzenn-plastr, e lec'h ma chomas hep finval e-pad eur bloaz. En despet da gement-se, ar boan ne goueze ket.

Da viz mae 1924, ar skevent ne laboure ket mat : ar glanvourez a basae, a dufe gwad, a grene gant an derzienn hag a c'houeze diouz an noz. Red e oa, daou viz goude, tenna anezi er-maez eus ar plastr. Diwar neuze ar paourkaez leanez a yeas bemdeiz falloc'h-falla, ha d'an 12 a viz gwengolo, ar medisin Molineri a lavaras zoken da ziou leanez all e oa prest o superiores da vervel.

Reuzeudik e oa eta stad ar C'hoar sant Fransez pa zigouezas e Lourd d'ar yaou 11 a viz gwengolo 1924. He foan a oa skrijus e-pad an daou zvez kenta. Sempla 'reas zoken er pisin. Er c'hontrol, d'ar sadorn 13 a viz gwengolo, diouz ar mintin, al leanez a sant, a-vech diskennet en dour, a c'hell finval hec'h izili evel ma kar, dont hec'h-unan er-maez eus ar pisin, en em wiska hep an distera poan. Koulskoude, gant aoun da lakaat ar re all da sellout outi, C'hoar sant Fransez ne lavar netra hag a lez dougen anezi war he c'hravaz eus ar pisin d'ar c'heo hag eus ar c'heo d'an ospital e lec'h m'he 'n em laka da vale hep diaezamant ebet.

Antronoz, ar vedisined bodet er « bureo » o deus gallet gwelout na oa merk a glenved ebet mui nag en he livenn-gein nag en he skevent. Al leanez a oa bet eta pareet en eun taol. D'ar 5 a viz Genver 1925, ar medisin Molineri a c'helle lavarout, goude beza gwelet anezi, he doa gounezet friouac'h lur en eur ober pevar miz. A dra-sur, eun hevelep paredigez n'eo ket deuet diwar louzeier an douar.

F.G.



ASIZ — ILIZ SANT FRANSEZ

Bleuniou Sant Fransez

XVIII^o PENNAD

(Kendalc'h)

An holl venec'h, gant levenez,
Degemeraz urz sant Fransez.
Evid o c'halonou, breman, pebez dudi !
Gantan, o daoulagad a zo 'vel o virvi.
Hag ar sant a davas, echu d'e brezegenn,
Hag ar menec'h, raktal, 'n em roas d'ar bedenn.
Sant Dominig en doa klevet
Ar pezh a voe gourc'hemennet.
Hervez ar menoz a oa e hini,
Ez oa Sant Fransez aet re bell ganti ;
N'ez oa ket evit kompren, penaos 'c'halle beva
Eun niver ker bras a dud, hep gounit o bara.
Met Jezus ar Pastor Mat, Hon Salver bemiget,
Evit rei d'imp da anaout penaos e holl zenved,
E taol warno evez,
Ha bemnoz, ha bemdez ;
Evit rei d'imp c'hoaz holl, eun desteni dispar
'Eo karet dreist gantan ar paour war an douar,
E lakas raktal da sevel, e kalon Perouziiz,
Tud Spoleta ha Foligno, tud Spello hag Asiziz,
E kalon ar re 'oa o ehom, pelloc'hik eun tamm war-dro,
Ar c'hoant bras da zegas d'ar venec'h, en em vodet a bell bro,
Kement tra o doa ezomm d'ober o c'hesteurenn,
Daoust ma 'z oant 'n o faourentez dinec'h mat ha laouen
Hag ez oa gwelet, abred, hed-ha-hed an hentou,
Tud gant kezeg, ejened, o tont a-strolladou,
Leun o c'hirri a vara, a win, fourmaj ha fao ;
D'ar venec'h, 'vel ma larent, ez oa red ober brao,
Red 'oa sikour 'n o ezommou,
Peorien Jezus-Krist An Aotrou,

Ne oa ket awalc'h d'ezo,
 Nann, degas ar bevans ganto,
 E tegasjont, da heul, ha taoliou, ha podou,
 Hag hanafiou, ha gwir, ha listri ha pladou,
 Traou holl, ha n'o doa ket
 Evit fichan o boued.
 Ar re 'zegase ar muian,
 En em gave an eürusan.
 An noblans o unan, marc'heien, baroned,
 Tudjentil a bep gouenn, eno en em gavet,
 'Vit tremen o amzer,
 'Vel paotred dibreder,
 A en em lake holl gant prez,
 Da serviji ar venec'h kaez.
 An izelegez a galon
 A dosta mignon eus mignon.
 Dirak kement a vadelez,
 O welout gant pebez evez,
 'Roe dorn an Aotrou Doue,
 Da Sant Fransez, d'e vugale,
 Sant Dominig a asantas en doa barnet re vuan,
 O varn renerez Sant Fransez, an urz roet e unan.
 Hag hen d'e gaout, ha daoulinan,
 A-vec'h 'n em gavet dirazan.
 Ha sede ma ansav, dirök e peb doare
 Ar pec'hed a samme eun tamm re e ine.
 « Ya ! ya ! an Aotrou Doue, bepred madelezus
 « E-kenver ho pügale ker paour, ken truezus,
 « A laka kalz a bred,
 « Ha me ne ouien ket.
 Hag adalek hirio, e fell d'in rei ma gér,
 Moarvat e vo dre heg, ma ne vez ket dre gaer,
 « Me a wisko mantell
 « Ar Baourentez santel.
 « Hag en ano Doue, malloz d'am bugale,
 « Warlerc'h madou ar bed, ma talc'hont da vale. »
 Ha Dominig da dec'hout, gant joa ha levenez
 Pa en doa gallet pouezan santelez sant Fransez.
 O welout, kerkouls all, gant pegement a stad,
 Ouspenn pomb mil manac'h sentus mat ouz o zad,
 A ziskoueze o c'harantez
 Da Itroun vras ar Baourentez,
 'Oa ket da larout nann, war dud ker reizet mat,
 E pare, anat ez oa, galloud Doue an Tad;
 Ha kement, ma tiwane, dre holl war o seuliou,
 Oberou a garantez, trec'h d'ar c'haeran bleuniou.

A-gever an deizioù ze, e voe c'hoaz disklêriet,
 A-berz an Aotrou Doue, da Fransez dudiet,
 E touge kalz a vreudeur, rig, war o c'hroc'henn noaz,
 Gouriz-reun, chadenn-houarn, a ve oant ket hep gloaz.

Eun doare ker kriz all da ober pinijenn,
 'Oa eun harz evit kalz da 'n em rei d'ar bedenn.
 Daoust d'ezo da gaout mil boan, evit chom en o sa,
 Ar maro n'o zage ket, hag e kavent c'hoaz da.
 Daoubennet o welout 'vel se, e vugale
 En em gastizan re, e laras dizale :

« Ar re ac'haboc'h a zoug gouriz-reun pe chadenn,
 « Me o fed, 'n ano Doue, ha n'eo ket eur froudenn,
 « Da gaout ar vadelez, d'o lemell, a-vreman,
 « Ha d'o zegas dioustu, dirazoun-me, aman. »
 War an taol, ouz o zad, ar venec'h a sentas
 Ha ker huan ha tra, dirazan a vernias,
 Betek pomb kant gouriz, ne oar den ped chadenn,
 Kignet holl dindano, korf ha kig ha kroc'henn...
 « N'aïnt ket ac'haleñ, eme Fransez, neuze,
 « Nemet d'ober pilhou ez afeñt marteze. »

Echu d'ar vodadeg, ar venec'h kennerzet,
 Ha war o deveriou, gand o zad kelennet,
 Ma chomjent a-neuze hep kouezan ar pec'hed
 Daoust da ardou ar bed, da re an drouk-spered,
 Fransez d'e vugale, eun tamm a-raok serr-noz.
 Kent larout, kenavo, a roas e vennoz.
 Frealzet holl ganti ha gant bennoz Doue,
 A joa, a levenez e tride o ine
 Pa gweitajont o zad, evit mont war-eun-dro
 Da selvel ineou, pephini-en e vro.

PAOTR JULUEN.

Ar Vreuriezh da zikour sevel beleien



En deiz all an aotrou person, goude e oferenn, a
 c'halvas d'ar zekreteri unan eus itronezed vat ar
 barrez hag a lavaras d'ez : « Adarre ez an da c'houl-
 lenn diganeoc'h labourat evit eur Vreuriezh nevez !
 — « Penaos, aotrou person, ha n'eus ket awalc'h a
 Vreurieziou c'hoaz ? Emer bemdez o c'houlenn ar-
 c'hant diganeomp : Breuriezh ar Feiz, Breuriezh ar
 vugale vihan, kest evit an dra-man, kest evit an dra-
 hont, n'eus fin ebet. Me a roio d'eooc'h va aluzen,
 aotrou person, bep tro ma c'houlennoc'h, met ne din
 ket da gestal evit eur Vreuriezh nevez, rak aon am
 eus na vefen ket digemeret mat gant tud ar barrez. »
 — « Ne ket me am eus savet ar Vreuriezh, eme an
 aotrou person, an aotrou 'n eskob eo, ha ret eo
 senti outan. Selaouit mat : ar Vreuriezh-man a zo
 ken talvoudus hag hini Breuriezh ar Feiz, pegwir
 e talvezo da zikour sevel beleien en hor bro. Gou-
 zout a rit, n'eus ket a veleien awalc'h en hor bro,
 ha ret eo sevel, hag evit-se ez eus ezomm kalz ar-
 c'hant. Ar skolioù a goust ker, ha ni a rank en em
 denna hon-unan, n'hon eus gwenneg ebet da c'hedal
 digant ar gouarnamant. Ar vugale o deus ioul da

vont da veleien, a zeu alies eur familhou paour ha dister, hag o c'herent n'o deus ket peadra awalc'h evit paea ar skol evito. Da biou da baea, nemet d'ar re a c'hoanta kaout beleien ? Gouzout a ran, kalet eo an dra-man, hag ar gristenien a bae kement a dailhou, a dlefe kaout d'o bugale skoliou a vefe sikouret gant arc'hant ar vro, arc'hant an holl. Met da c'hedal ma vo selaouet o c'hlemmou, e rankont, ousspenn paea ar skoliou dizoue, paea c'hoaz o-unan ar skoliou kristen, ha dreist-holl ar skoliou a vez enno prepalet ar vugale da vont da veleien. »

— « Kompren a ran, aotrou person, met ha padout a c'helimp ? »

— « Ya, padout a c'helloc'h, rak ar garantez a zo ijinus. Nag a zispignou foll a vez graet bemdez ! Nag a draou a brener, n'eus ezomm ebet anezo ! Ar gristenien a glask, e gwirionez, mad an Iliz, a gavo an tu da rei eun aluzen gaer bep tro ma vo goulennet diganto. Lod a ziouero an dra-man, lod a ziouero an dra-ze; ar plac'h yaouank a breno dilhad nevez eun tammig disteroc'h, a zalc'ho pelloc'h ar re goz; ar vugale a breno nebeutoc'h a vadigou; ar wazed a zispigno eun tammig nebeutoc'h e butun pe e banneou, hag evelse an holl o devezo peadra da rei aluzen. Hag hevelep aluzenou eo ar re wella, o veza ma kousront eun tammig, ma c'houlennont eun tamm pinijenn. »

« Aotrou person, n'heller ket harpa ouzoc'h; ya, gwir a lavarit; ma karte ar gristenien rei d'an Iliz an arc'hant a zispignont, en eun doare diskiant, pegement a vad a vije gelllet ober ! Mat, mont a rin adarre da astenn va dourn en eur rei da gompren d'an dud eo ret sikour sevel beleien. »

Hag ez eas, hag e tisplegas ker brao an traou ma tastumas arc'hant e-leiz. E pep ti e voe digemeret mat.

J. U.

Labour hor Misionerien

Pedit kalonek evit ar misionou ha retrejou prezeget gant hon Tadou. Goulennit ma tougint frouez puilh evit gloar Doue ha silvidigez an eneoù :

MISIONOU :

Hengoat (eskopti Sant-Brieg). — Mision eus ar 6 d'an 23 a viz Du, gant an Tadou Ivon ha Fulgans.

Kohineag (eskopti Sant-Brieg). — Mision gant an Tad Kasian.

RETREJOU :

Sant-Visant-war-Oust (eskopti Guened). — Retred merc'hed yaouank (4-8 Du), gant an Tad Theodor.

Goayen. — Retred merc'hed yaouank (5-8 Du), gant an Tad Korantin.

TAOLENN

ar bloaz 1928

Kelennadurez kristen

Ano Santel Jezuz.....	2
Gouel an Holl Sent.....	174
Sonjit ervat:	
Trede malloz Hor Salver.....	4
Pevara malloz Hor Salver.....	27
Pempet malloz Hor Salver.....	35
C'houec'hvet malloz Hor Salver.....	49
Seizvet malloz Hor Salver.....	65
Eisvet malloz Hor Salver.....	81
Goulennou ar Bater	
Hoc'h ano bezet santifet.....	101
Ho Rouantez deuet d'eomp.....	121
Ho polontez bezet graet war an douar evel en Nenv.....	157
Roit d'eomp hizio hor bara pemdeziek.....	173
Prdonit d'eomp hon offansou, evel ma pardonomp d'ar re o deus hon offanset.....	192

Lourd, katekiz beo :

Lourd hag hor Mamm Santel an Iliz.....	13
Lourd ha merkou ar wir Iliz.....	30
Lourd hag ar vuhez eternal.....	45
Lourd ha gloar ar Werc'hez glorius Vari en Nenv.....	61
Lourd ha servicha Doue.....	77
Lourd hag ar vertuz a Feiz.....	96
Lourd hag ar vertuz a Esperans.....	109
Lourd hag ar garantez e-kenver Doue.....	129
Lourd hag ar garantez e kenver an nesa.....	150
Lourd hag ar respet da Zoue.....	161
Lourd hag an enor dleet da Zoue.....	184
Lourd hag an umilite hag ar glanded.....	198

Da vugale Vreiz.....	93
Da gerent kristen Breiz.....	116
D'ar mammou kristen.....	140
Ar vugale a zo enno danvez eur beleg.....	147
An holl gristenien a dle sikour sevel beleien.....	165
Beleien d'an Iliz.....	182
Ar Vreuriezh da Zikour sevel beleien.....	203

Sant Fransez

Lizer hon Tad Santel ar Pab Pi XI diwar-benn ar 700 th bloavezh goude maro S. Fransez.....	72-88-119-137
Buhez sant Fransez.....	5-20-36-51-70-86-105
Gouliou sant Fransez.....	145

Hor Sent

Santez Marc'harit a Gortone.....	44
Santez Koletta a Gorbi.....	33
Sant Benead-Jozeb Labre.....	58
Sant Anton a Badou.....	83
Sant Bonaventura.....	107
Sant Loeiz.....	125
Santez Elizabet, Patronez an Drede-Urz.....	179
— — a lenn al Leoriou Santel.....	87
— — a laka he c'hurunenn a Dukez ouz treid ar Groaz.....	104
— — Burzud ar bleuniou roz.....	124
— — a ro aluzen.....	149
— — o welc'hi treid ar beorien.....	169
— — hag eun den lor.....	176
— — Burzud an den lor.....	193

Trede-Urz

Daoust ha red eo mont en Drede-Urz evit beza salvet.....	23
Oc'h heulia Reolenn an Drede-Urz, e teuer da veza gwir gristen.....	41
Penaos renevezi ar vuhez kristen en eur barrez.....	102
Kelennadur diwar-benn Reolen an Drede-Urz 122-143-159-177-191	
XXX ^e Perc'herinaj Trede-Urz sant Fransez e Santez Anna Wened (<i>war ar golo Niv. 19 hag 20</i>).	

Gwerziou ha kantikou

Bleuniou Sant Fransez :	
XII ^{et} Pennad, 8. — XIII ^{et} Pennad, 25-38. — XIV ^{et} Pennad, 56.	
— XV ^{et} Pennad, 74-82. — XVI ^{et} Pennad, 113-133. — XVII ^{et} Pennad, 153. — XVIII ^{et} Pennad, 167-187-201	
Bloavez mat !.....	4
Poultr ha ludu.....	22
Brezel d'an alkool milliget.....	66
Salud, Mari !.....	85
War sao Breiziz.....	91
Al Laoulanig hag ar Bleiz.....	118
Da Zantez Klara.....	127
Gouel ar c'hurunennou.....	158
An « Dies iræ ».....	194

A bep seurd

Arna ar Sant.....	68
Asiz. — Sacro Convento.....	53
An Tadou Kapusined.....	170
Beleien nevez.....	155
Bennoz an Tad Melkior a Benissa.....	142
Brezel d'an alkool milliget.....	11-28
Buhez S. Fransez diskouezet e sinema.....	60
Den yaouank souezus.....	99


Eskibien nevez Kapusin.....	155
Eun emgann etre Doue hag an diaoul.....	44
Eur pezh-labour dispar kinniget d'an Tad Santel ar Pab....	100
Eus skouer.... eus ar Japon.....	16
<i>Eus ar misionou</i>	60
Gouel en enor da santez Marc'harid a Gorton.....	60
Mexig.....	57
Oferenn genta.....	155
Penaos e tremen an pab Pi X e zervez.....	60
Sitrouilhez an Den-Eürus Diego.....	164
Keleier.....	197

Kelou eus ar Breuriezou

Goudilin, 50. — Gwiskriff, 21. — Gwipavas, 50. — Moelan, 50.	
— Plabennek, 95, 132. — Planiel, 50. — Ploare, 80. — Ploezal, 50. — Plonevez-ar-Faou, 171. — Plouye, 171. — Pont-Kroaz, 90. — Tredarzek, 50.	
Mennoziou.....	10-40-132
Labour hor misionerien.....	16-19-48-80-156-172-188-204
Aluzenou.....	43-95

Hon Anaon

En Tad Eujen a Oisy, 92. — Enez-Sun, 95. — Boulvriak, 48. — Locquole, 16. — Gwipavas, 64. — Plabennek, 64. — Plouhineg, 64. — Versailh, 172.	
--	--



Taolit evez

An neb a zigemer an niverenn genta, a ziskouez dre eno eman e sell da baea evit ar bloaz a-bez. Ma vefe unan bennak ha na fellfe ket d'ezan paea evit ar bloaz 1929 a-bez, n'en deus eta nemet kas endro niverenn miz Genver, o skriva war an adres ar ger-man : REFUSÉ.

BUHEZ

Sant Fransez a Asiz

Savet gant en Ao. MADEC

Aluzener e Kerinou-Lambezelleg

Reizet, evit an doare-skriva, diouz aliou

Breuriez-veur ar brezoneg,

gant eun Tad eus Urz sant Fransez

SKEUDENNOU KAER HA NIVERUS

Da zont er-maez war-dro gouel Nedeleg

Diwar-vreman e c'heller goulenn al leorman
digant

en Tad Theodore ROUSSEL

28, Avenue de la Marne, LORIENT (Morbihan)

Chèques Postaux : Nantes 46-28


PRIZ : 7 lur (dre ar post)

GOULENNET DIGANT
an Tad Theodor ROUSSEL, 28, Avenue de la Marne, Lorient.
C/c 46.28, Nantes.

Buhez burzudus eun douger-sammou MAZE TALBOT :
0 fr. 50 — 0 fr. 65 dre ar post.

An Eured Kristen (*Kantig*) : 22 real ar c'hant, dre ar post.
Kantigou nevez : SAKRAMANT AN AOTER. — JEZUZ-KRIST ROUE.
— An « DE PROFUNDIS », pedenn an Anaon. — Priz an tri
asambles : 15 lur ar c'hant, dre ar post.

Manuel du Tiers-Ordre de Saint François, par le P. EUGÈNE D'OISY	11 fr.
Petit Manuel du Tiers-Ordre, par le P. Eug. d'Oisy	4 fr. 45
La Parfaite Tertiaire de Saint François, par une Maîtresse des novices	10 fr.
Saint François d'Assise, par le P. LÉOPOLD DE CHÉRANCÉ	13 fr. 00
Saint François d'Assise, par le P. LÉOPOLD; petite édition illustrée	2 fr. 25
Qu'est-ce que le Tiers-Ordre? par le P. EUGÈNE GÈNE	0 fr. 45
Pourquoi entrer dans le Tiers-Ordre? par le P. EU- GÈNE	0 fr. 45
Gloires et Bienfaits du Tiers-Ordre, par le P. EU- GÈNE	0 fr. 45
Conditions d'efficacité du Tiers-Ordre, par E. BENOIT	0 fr. 45
La Visite canonique des Fraternités, par le P. AIMÉ	0 fr. 65
Sanctus Franciscus, sacerdotum servus	0 fr. 50
La Vie Chrétienne intégrale par le Tiers-Ordre Franciscain, par P. JEAN DE LA CROIX	0 fr. 65
Le Tiers-Ordre et le Prêtre, par le P. AIMÉ	0 fr. 65
Vie de Saint Yves de Bretagne, prêtre du Tiers- Ordre, par l'abbé ESNAULT	0 fr. 75
Pratique des trois Vertus Séraphiques de Pauvreté, d'Humilité et de Mortification, (pour les prêtres tertiaires), par l'abbé ESNAULT	3 fr. 65
Capucins Missionnaires. (Missions Françaises). Très nombreuses Illustrations	6 fr. 50
Capucins Français, par le P. EUGÈNE DE SAINT- CHAMOND	2 fr. 75
Ma Vocation, par le P.A. de M.	2 fr. 70
René Blériot, Frère Eleuthère capucin, par le P. PAULIN	4 fr. 50



Cum permissu Superiorum.

Le Gérant : G. LE BAYON.

Moulez AR BAYON-ROGER, 13, Tachenn Alsace-Lorraine, en Orient.